

Jezevou Christophe. Gwiniventer 1864 – Plouarzel 1953. Beleg.

Or bro e-pad ar Revolusion : bet embannet e 1915.

Modernnaet eo bet an doare-skriva. Ober a ra, evel meur a skrivagner all, gand “vije“ e-leh “veze“. Ober a ra gand “e zo“ e-leh “ez eus“. Ar ger “gouarnamant “ a zo gourel pe gwregel. Ober a ra Jezevou gand an daou stumm, memez e frazennou tost an eil diouz eben. Evid an derez uhelloc'h pe an hini uehlla e ra aliez evel e galleg. Anad eo e ouie gwelloc'h ar galleg eged ar brezoneg. Ober a ra gand ar ger “aumonier“. Lakaet em-eus “aluzenner“

A-eneb “Constitution Civile du Clergé“ (d’an 12 a viz Gouere 1790) e oa Jezevou hag an darn-vrasa euz beleien amzer an “Dispah“. Selled outi war “Google“. Dindan e oa eun afer arhant. Amzer “La Terreur“ e oa.

Sur a-walh e oa Jezevou a-eneb lezennou 1905.

Notenn gand Lukian Raoul (Geriadur ar skrivagnerien ha yezhourien (Al Liamm) : “Al levr-se : istor *Hor bro e pad ar Revolusion*. Al levr-se a voe kinniget d’ar veleien o-doa skoazellet anezhañ da sevel ur skol gristen hag ur presbital en e barrez“.

Moulet fall eo al leor orin. Alese diêz eo lenn geriou ‘zo.

Kinniget d’an Aotrounez

Y.-M. TREGUER, kure e Plobanalec ;

H. HEMERY, kure e Locmélar.- ;

J. GUIRRIEC, person Plozévet.

S. BRETON, kure e Braspartz ;

F. TANNEAU, kure e Pleiben .

P. LE LEC, kure e Guitevede ;

Y. LE LEC, kure e Milizac ;

dre anaoudegez vad, evid ar skor o-deus roet da zevel eur Skol gristen hag eun ti da loja ar veleien, e Plobanalec.

Taolenn

I

Ar stad ma oa Bro-Hall a-raog ar Revolution. – Ar gannaded galvet da Bariz. – Freuz ha dispah en “Assemblée nationale”.

II

Labourou an Assemblée Nationale – Gwirioù an noblañs kaset da netra – Madou an Iliz laeret, al lezenn eneb ar houentchou.

III

Rannadur nevez ar vro. – Penaoz ‘oa gouarnet peb lodenn. – Al lezenn evid distaga Iliz Bro-Hall deuz ar Pab. – Gouelioù lakaet e Pariz hag er parrezioù en enor d’al lezennou nevez.

IV

Eskob Kemper ha gouelioù ar bevarzeg a viz Gouere. – Eur banniel degaset deuz Pariz da Kemper. – Al lezenn eneb an Iliz kaset d’an aotrou de Saint-Luc. – Lizer an eskob eneb al Lezenn. – Maro an aotrou de Saint-Luc. – E lizer sinet gand ar veleien deuet d’an interamant.

V

Ar chalonied a zibab deg chaloni evid gouarn eskopti Kemper e-leh an eskob maro. – Ar votadeg deiziadet evid choaz eun eskob da eskopti Kemer. – Lizer ar re a oa karget da ouarn an eskopti, d’an elektourien. – Lizer beleien eskopti Leon. – Lizer eskob Leon da zistrict Montroulez diwar-benn al lezennou nevez.

VI

Ar votadeg e katedral Kemper. – Dizurz ha roulerez en iliz. – Expilly a zo anvet da Eskob da ziv eur goude hanternoz. – E lizer d’an Departamant. – Te Deum e Brest hag e Kemperle. – Petra ‘oa Expilly.

VII

Ar veleien gwallgaset. – An Assemblée nationale a laka e ranko ar veleien plega d’al lezennou. – A veleien hag al lezenn nevez.

VIII

Lezenn ar seiz warn-ugent a viz Du hag ar gristenien.

IX

Al lezenn evid lemel o farrez digand ar veleien ha n’o-doa ket touet. Ar henta eleksion evid choaz beleien iñtru. Eskob Kastell o tehed da Vro-Zaoz.

X

Expilly, oh êsa kaoud beleien da lakaad e pep parrez. – Penaoz ‘oa degemeret ar veleien o-doa touet gand an dud fidel. – O zrubuillou er parrezioù.

XI

Expilly eskomuniet. En em veñji a ra en eur lakaad dougen gwall lezennou eneb ar veleien. District Brest hag hini Montroulez eneb al lezennou-ze. Al lezenn evid serra ar chapeliou. Al lezenn evid kas ar veleien da Vrest.

XII

Klask war ar veleien. – E pe hiz en em guzont.- O anken hag o foan. – E pe hiz e tiwalled anezo. – Ar veleien genta taolet er prizon. – O stal druezuz. – Ar frankiz roet dezo. – Penaoz ‘oant digollet deuz o foan.

XIII

An Assemblée législative. Freuz ha dispah er parrezion gwasoh eged biskoaz. Ar veleien touerien a-o flata o hamaraded. Ar veleien vad taolet, en-dro, er prizon. O stad e Kastell-Paol. Lezenn an harlu.

XIV

Ar veleien da gas da Waien ‘oa taolet war eul lestr a reed an “Alexandre “ anezañ. Eet deuz Brest d’ar zul, eh errujont e penn o beaj, d’al lun, da unneg eur deuz an noz. C’hwezeg ‘oant.

XV

Labourou diweza al Législative eneb ar Relijion.- Ar houentchou lakaet e gwerz ; ar Roue taolet er prizon ; ar veleien lazet e Pariz ; Ar Goñvañsion.

XVI

*Kouentchou ar Finistère da vare ar Revolution.
Penzeg oa bet diskaret.*

XVII

Ar veleien e kouent Kerfot

XVIII

Roue Bro-Hall lakaet d’ar maro. – Brest e kañv.

XIX

Paotred ar Menez hag ar “Gironded“ – Gouarnourien ar Finistère en em zav a-eneb ar Goñvañsion. – Oll int taolet er prizon. – Landerne kêrbenn an Departamant.

XX

Freuz er Finistère. – Lanniliz, Plougerne ha Kastell war zao. – Emgann Kergidu.

XXI

Pennou ar veleien lakaete gwerz. – Al lezenn eneb ar re a guz beleien. – Freuz dre ar parrezion. – Al lezenn evid diskuill mignoned ar veleien hag an noblañsou. – Ar veleien e Kastell an Taro.

XXII

Lezennou divarn. Ar veleien vad kondaonet d’ar maro. Ar veleien fall dizenoret. Anoiou nevez roet d’ar miziu, d’ar hêriou. Goueliou an Dekad. Gouel ar Rezon vad. Daou gristen kaloneg.

XXIII

An “tribunal révolutionnaire“ e Brest. – Ar veleien hag an dud all barnet gantañ d’ar maro. – Maro gouarnourien ar Finistère.

XXIV

Beleien gillotinet e Kemper hag e Lezneven. Maro an dimezell de Saint Luc.

XXV

Ar veleien e Landerne. Beleien prizon Landerne kaset da Rochefort. Stad ar veleien e Rochefort, er Guyenne, e Cayenne. Beleien maro e Rochefort pe war-dro.

XXVI

Relijion ebed mui. Ar veleien iñtru kinniget e prov d’ar gouarnamant. Divenn da verka ar zul dre zon ar hleier. Leh ar veleien vad roet d’ar vistri-skol, en ilizou.

XXVII

Gouel an hini ‘zo dreist pep tra. Maro Robespierre.

XXVIII

Lezenn al Liberte o komañs c’hweza. – An ilizou, ar presbitaliou, feurmet pe gwerzet d’ar re a lakae ar priz hirra. – Ar prizoniou digoret. – An ilizou feurmet gand kristenien, roet d’ar veleien vad.- Ar vistri-skol droug-kontant. – Diou feson merket d’ar veleien evid toui.

XXIX

Klemmou a bep tu o tond d’ar houarnamant a-eneb ar veleien vad. – Lezenn ar c’hweh warn-ugent a viz Even greet gand Guezno, Guerneur ha Bruc.- Ar Goñvañsion, a-raog mond kuit, a deu da renevezi an oll lezennou fall ’eneb ar veleien vad.

XXX

Ar Horv “législatif“. – an “Directoire“. – Ar veleien vad lakaet d’ar maro dre eur hillotin seh hag a oa ker sur deuz he zaol, evel ‘oa an hini all.

XXXI

Ruillou ar Chouanted er Finistère.

XXXII

Eun eskob nevez anvet e Kemper. – Petra ‘oa Audrein. – Ar Chouanted. – Ar peoh o tond a-nebeudou. –Maro Audrein.

XXXIII

Ar veleien er broiou estren. – Bro-Hall digor pelloh. – Ar parrezioù o tegemer o beleien.

XXXIV

Ar parrezioù o-doa bet o beleien da genta. – Trubuillou an Eskob nevez.

I

Ar stad ma oa Bro-Hall a-raog ar Revolution. – Ar gannaded galvet da Bariz. – Freuz ha dispah en “Assemblée nationale”.

Pa deuas ar Revolution, Bro-Hall ‘oa kristen¹ abaoe trizeg-kant vloaz dija.

Mez, eun tri-ugent vloaz bennag a oa, skrivganerien divergont² a skrive leoriou eneb ar Relijion. Hag ar Feiz a deue a nebeud da nebeud, da vihannaad er halonou.

Tri rumm tud ‘oa, d’ar mare-ze, en or bro : ar veleien³, an noblañs, hag ar bobl.

An noblañsou o-doa digand ar Roue ar hargou uhella⁴ en e rouantelez.

Ar bobl ‘oa ar vourhizien hag al labourerien : etre o daouarn edo an oll labourou hag an oll kenwerziou.

Mez ar renk kenta, evelkent, ‘oa d’ar veleien. Kalz ‘oa anezo. Dre ar vro e kaved eur bern ilizou ha chapeliou. Peb iliz ha pep chapel, koulz lavared, he-doa he beleien. Ouspenn-ze, kouentchou e-leiz ‘oa ivez. Enno, daoust ma’z oa eun tamm rabat abaoe eun nebeud bloaveziou, e chome c’hoaz, en eur gonta ar veneh hag ar seurezed, war-dro eun tri-ugent mil bennag.

Madou an Iliz a oa braz. Hervez lod, an drederenn deuz douar Bro-Hall ‘oa d’an Iliz. Mez pa vo lavaret ar wirionez, leveou an Iliz ne dalvezent ket ouspenn pevar-ugent milion.

Evelkent, da heul kement-se, an Iliz a helle c’hoaz sevel an deog war pep parrez.

Sant Paol, en unan euz e liziri, en-doa lavaret e tlee ar gristenien maga ar re ‘gelenne anezo. Ha Roue or bro, Charlemagne, en-doa, gwechall, douget eul lezenn evid ma teuje pep parrez da rei an deog d’ar veleien a gemerje preder diouti.

An deog, n’oa ket evel ma lavarar, a-wechou, an degved deuz an traou a vije en eun tiegez, da vloaz ne oa nemed an driwehved. Ne vije savet, peurliesha, nemed diwar an ed. E meur a leh, koulskoude, ‘oa douget, ivez, war ar Fouenan, al lin hag an anevaled. Dre ar vro a-bez, an deog a dalveze eur pevar-ugent milion bennag.

Madou an Iliz ne oant ket laeret ganti. Biskoaz, zoken, danvez ne deuas dre hent eunnoh. An dud, en eur vervel, a leze eun ti, eur park evid pedi Doue evito, evid ober euvrou mad, goude o maro. Madou an Iliz, hag ind-i hepken, a zo bet, pell amzer, oh harpa deuz dispignou ar skoliou hag an ospitaliou, e Bro-Hall. Mez deuz ar madou-ze, kalz tud ‘oa jalouz⁵.

An noblañs, da genta. Kaoud a reent ar veneh hag ar veleien re binvidig⁶, d’o doare.

Ar bobl, ivez, a grie eneb dezo⁷ : al labourer-douar a gave diêz, bep tro ma wele dond da zevel an deog d’e di.

E-touez ar veleien, zoken, meur a hini a lavare traou. Rag danvez an Iliz a yee, an darn-vuia, gand an eskibien ha leaned vraz ar houentchou. Gand an amzer, ‘oa en em zilet ar hiz fall da rei da eun eskob pe da eur manah, oll leve eun eskopti pe eur gouent, a-wechou zoken, leveou diou pe deir hag ouspenn. Ar re-ze o-dije, evel se, miluriou leve. Mond a reent, ganto, da veva da Bariz pe da eul leh all, ha stok-varhad, e paent meneh ha beleien da bedi Doue ha

¹ Bro-Hall ‘oa kristen : **notenn gand “Embann an Hirwaz”** : pa oa deut da veza kristen, e oe merzeriet ar re o-doa choazet ar relijion nevez, ha lezet a-gostez Jupiter, hag e se. Etre ar gristenien e oe brezeliou spontuz : ar gatoliked a lazaz ar brotestanted. Henri IV a oe lazet pa oa bet protestant, hag en abeg d’an “Edit de Nantes”, 1590. Distrujet e oe an “Edit”-ze gand Loeiz XIV e 1685, hag e lakaas laza ar brotestanted, dreist-oll ‘barz ar Cévennes. Bremañ e vez gwelet ar brezel etre ar re o-deus eur relijion bennag, hag ar re o-defe eur relijion all.

² divergont : **notenn gand “Embann an Hirwaz”** : Piou ‘oa ar re divergonta ? Pe ar veleien, a felle dezo beza mistri war ar bobl, pe ar re a felle dezo ma vefe roet he frankiz d’ar bobl ?

³ ar veleien : **notenn gand “Embann an Hirwaz”** : = a-du e oant gand an noblañs a-eneb d’ar bobl.

⁴ An noblañs o-doa digand ar Roue ar hargou uhella : **notenn gand “Embann an Hirwaz”** : hag ar bobl a oa merzeriet gand an noblañs hag ar veleien.

⁵ kalz tud ‘oa jalouz : **notenn gand “Embann an Hirwaz”** : Hag ar gwir a oa ganto ?

⁶ Kaoud a reent ar veneh hag ar veleien re binvidig : **notenn gand “Embann an Hirwaz”** : gwir e oa evito oll.

⁷ Ar bobl, ivez, a grie eneb dezo : **notenn gand “Embann an Hirwaz”** : ganti e oa ar wirionez.

da ober euvrou mad. Hag ar veleien-ze, a gave dizoare beza paeet ken dister ha gweled madou an Iliz o vond er-mêz deuz ar vro, he-doa roet anezo.

Berraad a ran ar gont. Rag ne fell ket din lavared deuz an amzer goz nemed ar pezh a zo red evid rei da entent an amzer nevez a oa o vond da zegouezoud.

Roue Bro-Hall, d'ar mare-ze, 'oa Louis XVI. Gervel a reas da Bariz tud deuz pevar horn ar vro, tud deuz peb renk ha pep stad. Kemenn a reas ober eun enklask e pep karter evid gweled ar pezh a houlenne an dud digand ar houarnamant ha lakaad, er giz-se, an traou da vond gwelloc'h.

Bourhizien ha labourerien Bro-Hall a gasas pemp kant eiz ha pevar-ugent kannad da Bariz. An noblañs hag ar veleien a gasas, etre o-daou rumm, pemp kant tri-ugent.

E-touez ar gannaded-ze edo an Aotrou de Lessègue de Rozaven, person priol Plogonneg, an Aotrou Guino, person Eliant hag an Aotrou Laedon de Keromen, person Gourin, dibabet gand beleien eskopti Kemper. Parreziou eskopti Leon, goude beza mouzet da genta, a roas goude-ze, e miz Eost, o moueziou d'an Aotrou Expilly, person Sant-Martin Montroulez ha d'an Aotrou Verguet, priol abati ar Releg, e Plouneour-Menez.

D'ar bemzeg a viz Mae 1789, e tegouezas an darnvuia deuz ar Gannaded e Versailles.

Ar Roue a dride e galon. Esperañs en-doa e vije greet labour vad evid kas traou ar vro war wellaad.

Mez en dro genta, diohtu, e savas tousmarh. An noblañs hag ar veleien a houlenne ma rafe beb rumm e labour disparti. Er giz-se, kerkoulz, 'oa bet beteg neuze, pa veze kannaded ar vro e Pariz.

Deuz o hostez, evelkent, ar vourhizien hag al labourerien a lavare : « Oll om kannaded ar vro, oll e tleom ober on labourou kevred. »

En eur labourad asamblez o-doa an espereñs da weled meur a wech, an darn-vuia deuz ar Gannaded touellet gand komzou helavar o alvokaded⁸.

An noblañs hag ar veleien a enebas da genta. Mez a-barz pell, eun nebeud personed a en em lakaas a-du gand ar bobl. Ha d'ar seiz warn-ugent a viz Even, an oll Gannaded a en em zastumas, asamblez, hag a gemeras an ano a "Assemblée Nationale".

II

Labourou an Assemblée Nationale – Gwirioù an noblañs kaset da netra – Madou an Iliz laeret, al lezenn eneb ar houentchou.

E-touez ar goulennou deuet deuz pep korn Bro-Hall d'ar Gannaded, ez oa kalz a-eneb an noblañs.

Lod abalamour, e gwirionez, a zalhe, stard, da wirioù, a-wechou kaled, bet roet d'o zudou koz, en amzer gwechall.

An Iliz hag ar houentchou a ree, aliez, ar memez tra.

Ouspenn-ze, an noblañs hag an Iliz, war bouez eur milionou bennag roet d'ar gouarnamant, n'o-doa da baea nemed nebeud taillou. Al lodenn vrasa deuz ar hargou a goueze war ar vourhizien hag al labourerien. Hag ar re-mañ a houlenne beza dizammet.

D'ar goulenn-ze, ez ee da veza sevenet a-barz pell. Rag an traou, er vro, a yee war o hemend-all. Ar Barizianed o-doa kemeret ha dismantret ar Bastille, eur hastell koz hag a oa deuet da veza eur prizon, e kêr Pariz.

An dud diwar ar mêz a lavare : « Peogwir ar Barizianed o-deus taolet d'an traoñ o hastell, ni a hell ivez, dismantri ar hestell a zo en-dro deom. »

Mar deo gwir, zoken, dre Vro-Hall a-bez, 'oa kontet d'ar bobl e felle d'ar Roue e vije gwallgased an noblañs.

⁸ o alvokaded : **notenn el lero orin** : Constitution civile du Clergé.

Hag o gwallgas a reed, avad. Ha da heul e kouezas beh, ivez, war an dud pinvidig. Gwech amañ, gwech a-hont, e veze gwelet ar maneriu hag ar houentchou o flammina. O madou a veze laeret. Hag en aon na deujent en-dro da houlenn ar madou-ze, o faperiu a veze devet.

Evel-se e c'hoarvezas e parrez Speied. Eno, e maner Boisgarin 'oa, d'ar mare-ze, o chom an Itron de Roquefeuil. Dezi 'oa a leve 'gozig oll douarou ar barrez hag ar parrezioù tro-war-dro.

Eur zulvez e Gwengolo, oll dud ar menez a yeas d'he maner da houlenn diganti paperiu ha leveou. Nah a reas anezo. Neuze oa kroget enni dizamant : taolet en eur gardenn en-dro d'he hroazleh hag 'oa diskennet er puñs.

Pa oa en dour beteg he hanter, 'oa goulennet outi hag hi a rofe he faperiu. – Nann, a respontas. Hag e oa diskennet beteg he diskoaz. – Rei a rafoh ho paperou ? – Nann. Hag 'oa diskennet beteg he elgez. Rei a rafoh anezo, bremañ ? – Nann. Neuze eo diskennet beteg he genou. An dour a dourlonke e toull he gouzoug. Hanter veuzet dija, 'oa tennet er-mêz. Ha gand aon da veza lazeta, e roas alhwez an armel hag a oa he faperou enni. Ar paperou-ze 'oa devet, er porz, dirazi. Hag an dud a zañse hag a gane dre ma tevent.

Kannaded an « Assemblée Nationale » 'oa spouronet. Dre bres e rajont eul lezenn evid gourhemenn d'an dud chom heb ober freuz ebed. Ar veleien 'oa karget da embann al lezenn-ze, dre ar parrezioù.

Mez ar gwir abeg ma kemere an traou eur pleg ken fall, eo ma o-devoa an dud kasoni deuz gwirioù an noblañs. Hag an oll a zoñje 'oa deuet ar mare da deuler d'an traoñ ar gwirioù-ze.

Ar bevar deuz ar miz Eost e oa.

Deuz an noz, kannaded an « Assemblée Nationale » a oa en em gavet asamblez.

Ha sada ma oa gwelet, o sevel en e zav, eun den yaouank hag a zouge unan euz anoiou kaerra Bro-Hall. De Nouailles a reed anezañ. « On lezennou, a lavaras, ne lakaint ket ar peoh da zond, ma ne zilezom ket or gwirioù. » Hag e kinnigas diazeza an taillou war an oll, hervez ar binvidigez, ha teuler d'an traoñ an oll aneriu a ranke ar bobl ober evid an noblañs.

Eur bern kannaded all, o weled an Aotrou braz oh ober eur seurt kinnig, a zavas d'o zro, aliez daou, tri asamblez, evid kinnig gwirioù da gas da netra. An eskibien a reas evel ar re all. Eskob Chartres a houlennas ma vije taolet d'an traoñ ar gwir a oa da chaseal evid an noblañs hepken : « A ! mad, a lavaras neuze, an duk de Châtelet, me 'zo o vond da gemer ivez, eun dra bennag diwar-goust an eskob-se. » Hag e houlennas teuler d'an traoñ an deog.

Hag a-benn ma oa tremenet an noz, ne jome mui 'gozig netra deuz renkamantchou koz or bro.

D'an devez war-lerh, meur a hini a oa mezeg deuz ar pez o-devoa greet. Lod a venne dond war o hiz. Mez re ziwevad 'oa. An dour en-doa torret ar rañvell : ruill a ranke, n'oa harz ebed mui.

D'an deg a viz Eost 'oa bet menneg, adarre, deuz an deog. Lavaret 'oa da genta na vije lezet da goueza nemed roet e vije evitañ eun digoll bennag. Kalz tabut 'oa diwar e benn. Mez pelloh ar veleien a welas 'oant o vond da veza trehet, hag eskob Pariz a lavaras : « Lezel a reom an deog. Fiziañs on-deus e teuo ar houarnamant d'on lakaad e par da brezeg an aviel, da ober ofisou an Iliz, en eur feson deread, ha da zikour ar beorien ! »

Gand an Iliz e chome c'hoaz he leveou.

Mez abaoe eur pennad, ar ministr, Necker, ne ouie kalz penaoz sevel an arhant en-doa ezomm. An taillou koz 'oa bet diskaret. Ne oa tamm soñjet lakaad re all en o leh. Ar houarnamant n'he-doa gwenneg.

Ha kannaded an « Assemblée Nationale » da ober eul lezenn evid merka d'an dud, rei er bloaz-se, ar pevarved euz o leve d'ar gouarnamant.

An dra-ze 'oa d'ar bevar warn-ugent a Wengolo. Daou zevet goude, 'oa goulennet arrebeuri aour hag arhant an ilizou, hag eskob Pariz, gand aon gweled o hemer en desped d'o ferhenn, a ginnigas anezo, diohtu. Lakaet 'oa c'hoaz goude, ma teuje pep tiegez da rei an

traou aour hag arhant a oa ennañ. Dond a reas forzig loaïou, fourcheteziou, bizaouedou. Mez an toull ne stanke ket : chom a ree, atao, ar ministr dindan ar beh : ne hellfe ket paea dre ma'z ee.

Neuze 'oe lakaet e helle ar gouarnamant kemered e prest, tregont milion, kinniget 'oa triweh real dre gant d'ar re a roje arhant. Mez koulz lavared den n'en-doa fiziañs er gouarnamant. A-veh ma kavas daou vilion.

Hag an oll a zoñje na dleed dirouestla ar gudenn nemed en eur gemered madou an Iliz.

Hag e oa gwelet eun eskob o sevel er gador-brezeg. Lavared a reas, da genta, ar pez he-doa greet ar houarnamant evid kaoud arhant. « Kement-se, emezañ, ne deo talvezet da netra ». Ha war digarez kaozeal goude-ze, diwar-benn pinvidigez or bro ha gweled e peleh frega evid kaoud ar somm a oa ezomm, e teuas da lavared eur ger diwar-benn danvez an ilizou. Ar houarnamant, emezañ, a hellfe kemer ar madou-ze, gand ma roio pae d'ar veleien ha ma lakaio ober ar pedennou merket.

O weled eun eskob oh ober eur seurt kinnig, an dud fall 'oa en Assemblée nationale a dride o halonou gand joa. D'an drizeg a viz Here, e houlennt voti, diohtu, al lezenn evid lakaad⁹ d'ar houarnamant madou an ilizou. Mez evel ma oa kalz o tivenn ar madou-ze, e lakajont gortoz diwezatoh.

Diwar neuze, avad, ar Gannaded 'oa eneb ar veleien en Assemblée nationale, a lakaas tud fall Pariz ha kêr Versailles da ober hu warno ha war ar re a oa troet ganto.

D'an devez merket evid voti al lezenn, an dud fall, o labourad, a grie gwasoh-gwaz. Meur a hini ne gredjont ket mond da voti. Hag er giz-se 'oa gellet dougen pelloh al lezenn a lakae etre daouarn ar houarnamant madou an ilizou. (Daou a viz Du 1789).

Mez gwasoh 'oa da zegouezoud.

Ar veneh hag al leanezed eo bleuniou an Iliz. Bez ez int, er memez amzer, eun harp deuz ar gwella evid ar Relijion. Hogen, d'ar seiteg a viz Kerdu 1789, eur hannad, Treilhad e ano, en-doa lavaret an oll kouentchou. « Ar hoentchou, emezañ, a zo prizoniou. N'eus enno manah na seurez ha na garfe dond a-nevez er bed ? Mez sklavourien int deuz ar veuiou o-deus greet¹⁰. »

Ar maleuruz ! ne ouie ket ne deer da vanah pe da leanez nemed evid gelloud kerzed eürusoh war hent ar vuhez ha tizoud eeunnoh ar baradoz.

Ar gannaded fall a gendalhas da grial eneb veuiou ar veneh hag al leanezed. Ha d'an trizeg a viz C'hwevrer 1790, an Assemblée nationale a reas eul lezenn evdi kas d'an traoñ an oll gouentchou.

D'an ugent a viz Meurz, Teilhard a lakaas voti e vije greet an invañtour er houentchou gwazed gand ar hoñseil munusipal. Ouspenn-ze, ar hoñseil munusipal 'oa karget da houlen digand peb manah e oad ha da houlen digantañ, ivez, petra 'gare ar gwella, chom er gouent pe mond er-mêz.

Dre Vro-Hall a-bez, dorjoug ar houentchou a oe digoret. En eskopti Kemper, hag e leh all ivez, kalzig menh a yeas er bed.

Kerkoulz, an Assemblée nationale, d'an ugent a viz C'hwevrer, he-doa greet eul lezenn evid merka ar baeamant da rei d'ar re o-doa nahet o veuiou. Lakaet 'oa seiz kant lur da beb manah, beteg hanter-kant vloaz ; eiz kant lur goude deg vloaz ha tri-ugent.

Ar veneh 'oa chomet fidel 'oa lezet, evid eur pennad c'hoaz, da veva asamblez. Mez meur a hini a rankas cheñch kouent, rag ne oa mui dalhet, evid peb urz, nemed eur gouent beb depratamant.

Al leanezed, avad, 'oa lezet da veva er houentchou ma edont. Hag evid ar mare, n'oa klasket trabas ebed deuz ar seurezed a ree skol pe a dreberie deuz ar re glañv.

III

⁹ lakaad : ger er skrid orin ? rei.

¹⁰ ar veuiou o-deus greet : **notenn el leor orin** : Constitution civile du clergé.

Rannadur nevez ar vro. – Penaoz ‘oa gouarnet peb lodenn. – Al lezenn evid distaga Iliz Bro-Hall deuz ar Pab. – Goueliou lakaet e Pariz hag er parrezioù en enor d’al lezennou nevez.

Ar revolucionerien ‘oa en Assemblée nationale, hag e felle dezo diskar kement tra a oa e Bro-Hall¹¹, a lakaas en o fenn ranna ar vro e lodennou nevez.

Beteg neuze, ‘oa lodennou braz anvet “Provinces“. D’ar bevarzeg a viz Du 1789, al lodennou-ze a oa taolet d’an traoñ. En o leh, ‘oa lakaet tri departamant ha pevar-ugent. Pep departamant ‘oa lodennet e lodennou all bihannoh anvet “districts“, ha pep district ‘oa rannet e parrezioù. Er Finistère ‘oa nao district : Brest, Kerhaez, Landerne, Lezven, Montroulez, Pont-e-Kroaz, Kemper, Kemperle ha Kastellin.

An dud, e pep parrez, oa daou rumm anezo. Lod, ar re a roe e taillou talvoudegez tri devez labour, ‘oa anvet, “citoyens actifs“, tud o labourad. Ar re all, ‘oa anvet “citoyens non actifs“, tud ha na labourent ket.

Hogen al labour ‘oa karget ar sitoayaned “actifs“ da ober, ‘oa voti. Dibab a reent, evel-se, e pep parrez, eun deged dre gant “citoyens actifs“. Ar re-ze d’o zro en em zastume, asamblez, evid dibab an deputed, koñsaill an district ha koñsaill an departamant.

Pep departamant ‘oa gouarnet gand eur hoñsaill, anvet ar hoñsaill “général“. Er hoñsaill-ze ‘oa c’hweh den ha tregont. Ouspenn-ze, unan, anvet “Procureur général syndic“ ‘oa karget da lakaad an dud da blega da lezennou ar hoñsaill général.

Ar re a oa e hoñsaill-ze, a en em vode beb ar mare, e kêrbenn an departamant. Mez en o zouez e tibabent eiz den. An eiz den-ze a ree ar pez a anved Directoire an departamant. Beza o-doa, tost da vad, ar memez galloud hag hirio, ar Prefed.

Peb district, d’e dro, en-doa eur hoñsaill. Er hoñsaill-ze ‘oa daouzeg den. Ouspenn en-doa, ivez, eur procureur syndic hag eun directoire. Mez e Directoire an district n’oa nemed pevar den.

E pep parrez ‘oa soudarded hag a reed anezo “ar Garde nationale“ ‘Gozig oll ‘oant tud fall. Aliez a-walh ar reuz a zegoueze er parrezioù a veze greet ganto. Meur a wech int bet e penn ar vandenn a ree brezel d’ar manerioù ha d’ar re binvidig, brezel greet, a lavare Mirabeau, gand ar re n’o-doa netra d’ar re o-doa eun tammig danvez bennag.

Mez ar mell diêsa deu ar jadenn a chome c’hoaz da ober.

Dija kannaded an Assemblée nationale o-doa laeret madou an Iliz, dija ivez o-doa pilet ar houentchou en eur zivenn ober veu. C’hoant o-doa da gas da netra ar renkamant a oa en Iliz Bro-Hall ha d’hen distaga diouz ar Pab.

Evid gwir, abeg ne vanke ket. Eur hiz fall a oa en em zilet en Iliz, en or bro. Trement ‘oa an amzer ma lavared : Iliz Bro-Hall n’he-deus ket ezomm a wad uhel mez a vertuzioù. Abaoe kant vloaz, den ne helle beza eskob ma ne vije a ouenn an noblañs. Hag ar veleien, ar halz anezo, a en em glemme. Goulenn a reent ma vije lakaet da eskibien ar veleien ar muia gouizieg hag ar muia santel, heb derhel kont ebed deuz o lignez. Unanou bennag, zoken, a houlenne voti evid dibab an eskibien.

Evito o-unan, re a veleien a houlenne beza anvet da berson goude pemp bloaz belegiaj da vihanna. Goulenn a reent, ivez, ma vije roet pae dezo gand ar gouarnamant.

An Assemblée nationale a gave dezi ‘oa karget da lakaad urz e pep tra. Ha war digarez taoler kuit ar plegou fall, e kargas eun nebeud kannaded da ober eul lezenn evid an dud a Iliz. Hogozig oll ar re-ze ‘oa tud digristen. En o zouez, evelkent, ‘oa eur beleg bennag, mez e vije bet gwelloh na vijent ket bet eno. O oll bolontez a lakaent da ober ar pez a rekete an dud fall. Expilly, person Montroulez, ‘oa deuz ar re-ze.

¹¹ diskar kement tra a oa e Bro-Hall : **notenn gand Embann an Hirwaz** : n’eo ket gwir. Ne felle dezo nemed diskar ar pez a oa a-eneb ar bobl.

Goude beza poaniet a-walh, setu amañ an darn vrasa deuz al lezenn a lakajont da voti d'an daouzeg a viz Gouere 1790 :

Ne vo mui, e Bro-Hall, nemed deg arheskob.

An eskibien hag ar re a zo e penn peb district a en em gleve evid diverka, a-nevez, ar parreziou.

Ar parreziou n'o-devezo ket tri hard leo a dro a vo diskaret, diskaret ivez ar parreziou ne vezint ket tri hard leo deuz eur barrez all.

An iliz katedral a vo parrez. Ar parreziou all en-dro dezi, er memez kêr, a vo staget outi, ma ve kavet mad. An eskob a vo person ar barrez-se. Ar veleien all a vo gantañ a vezo e gureed. C'hwezeg kure a vo en ilizou katedral hag o-deus deg mil den stag diouto.

Beza e vezo eur seminer evid skolia ar gloer yaouank. Ar seminer-ze a vo tosta ma vo gelllet da di an Eskob.

Beleien ar seminer ha beleien an iliz katedral a vo koñsaill an Eskob. Morse ne hello ober netra heb o ali, evid gouarnamant e eskopti.

Er hêriou ha ne vo ket enno ouspenn c'hweh mil den, ne vezo nemed eur barrez.

Diwar an devez ma vo embannet al lezenn-mañ ne vo mui, e Bro-Hall, nag abad, na priol evid ar houentchou, na chalonied, na zoken beleien stag ouz ar parreziou evid diservija overennou evid an anaon (chapellenies).

Diwar an devez ma vo embannet al lezennou-mañ, ne vo mui nemed eleksionou evid dibab an eskibien hag ar bersoned.

Evid envel eun eskob e vezo greet evel ma reer evid envel unan deuz koñsaillerien an Departamant. Kerkent ha ma klevo ar Prokureur syndik e vanko eun eskob en Departamant, hel lavaro da Brokureur an district. Hemañ a gemenno d'ar re 'oa bet er wech diweza oh envel koñsaillerien an Departamant. Lavared a raio dezo, ivez, e peleh hag e pe vare, en em gaoud evid dibab eun eskob nevez.

Evid gelloud beza anvet da eskob e vo red beza bet e-pad pemzeg vloaz, da nebeuta, person pe gure en eskopti.

An eleksion evid dibab eun eskob, na hello beza greet nemed da eun devez sul, en iliz vrasa deuz kêrbenn an Departamant. An oll elektourien a deuio d'an overenn.

An eskibien hag a zo, dre al lezenn-mañ, lamet diganto o eskopti, a hello beza choazet evid eun eskopti all.

Prezidant an dud galvet da voti, goude ma vo kontet o moueziou, a lavaro a vouez uhel, dirag an oll, ano an hini a vo bet lakaet da eskob. Eun overenn war gan a vezo lavaret diohtu, goude.

Ar Prezidant, ivez, a skrivo d'ar Roue evid kas dezañ ano an Eskob nevez ha lavared e pe giz e vo bet tremenet an eleksionou.

An hini a vo bet, evel-se, lakaet da eskob, a ranko mond a-barz miz goude, da gaoud e arheskob evid her pedi da zakri anezañ.

Digand ar Pab, an eskob nevez ne houlennno galloud ebed. Mez skriva a raio dezañ, koulskoude, peogwir eñ a zo e penn an Iliz.

An Eskob nevez a vo sakret gand e arheskob, en e iliz katedral. Mez ma ne hell an arheskob sakri anezañ, e vo sakret gand ar hosa eskob deuz an arheskopti. Evid e zikour, e vezo an daou eskob deuz an eskoptiou tosta. Ar sakr a vezo greet, d'ar zul, dirag an dud hag ar veleien.

A-raog beza sakret, a hini a vo bet choazet da eskob a ranko toui, dirag renourien an Departamant, ar veleien hag an dud bodet en-dro dezañ, da veilla mad war gristenien e eskopti, da veza fidel, atao, d'e vro, d'al lezenn ha d'ar Roue ha da lakaad mired, dre e oll eskopti, al lezenn greet gand an "Assemblée nationale".

An eskob a hello choaz, en e eskopti, vikeled e iliz katedral. Mez ne hello, morse, kemer nemed ar veleien a vo bet, da nebeuta, deg vloaz o tizervija parreziou.

Ar bersoned a vo dija en iliz katedral pe er parrezioù staget outi dre al lezenn-mañ, a vezo war o goulenn lakaet da vikeled d'an Eskob.

Evid lakaad personed er parrezioù, e vezo, ivez, greet eleksionou.

An eleksionou evid envel ar bersoned a vezo greet beb gwech ma vo unanet Assemblée an district.

Abalamour da ze, ar mêt a ranko skriva d'an district bep tro ma vanko eur person en e barrez.

Beza 'vo greet, ken aliez ha ma vo person da envel : eur votadeg evid pep person.

Pep hini deuz ar re a yelo da voti a ranko, a-raog, tui rei e vouez d'an hini a gavo ar muia din. Divenn ivez da werza e vouez nag evid arhant nag evid netra all.

An eleksionou evid choaz ar bersoned a vezo greet, en iliz an District, da zul goude overenn ar barrez. Ar re 'vo galvet da voti a ranko mond d'an overenn-ze.

Pa vo echu an eleksionou, e vezo roet da anaoud anioù ar veleien a vo bet anvet, ha goude, diohtu, e vezo eun overenn war an ton braz, dirag an dud hag ar veleien.

Evid beza anvet da berson e vezo red beza bet o servija eur barrez, pe eun ospital, pe eur gouent, da vihana e-pad pemp bloaz.

Evelkent, ar bersoned a vo bet kemeret o farrez da staga deuz eur barrez all, a hello beza anvet a-raog pemp bloaz.

Ar bersoned a hello choaz o hureed. Mez ne hellint kemer den ebed da gure, nemed beza e ve bet beleget pe kemeret en eskopti gand an eskob.

An hini 'vo bet anvet da berson a yelo da gaoud e eskob gand eur paper hag a ziskouezo e vo bet choazet. An eskob, goude ze, a roio dezañ galloud war e barrez.

An eskob a hello egzamina ar beleg bet anvet da berson, evid gweled ha gouizieg a-walh eo. Ma n'her hav ket gouizieg a-walh, e ranko lavared abalamour da betra. Hag an eil hag egile anezo a hello mond dirag ar varnerien ma n'en em glevont ket.

Ar bersoned, en devez ma vezint tronet, a ranko, en o farrez, dirag an oll, dreist-oll dirag ar mêt hag e goñsaill, a-raog an overenn-bred, tui sentidigez d'al lezenn.

Eur haier a vo e peb iliz evid merka al le greet evel-se. Dre al le-ze eo e vezo tronet ar person.

*

Setu aze e berr gomzou, al lezenn 'oa greet eneb ar veleien. Expilly, person Sant-Martin Montroulez, 'oa karget da zisplega al lezenn-ze, dirag ar gannaded. Dija, 'oa troet fall. Setu amañ penaoz e renkas e gomzou bilimuz : « Mall eo, emezañ, diwrizienna deuz or bro ar skwer fall-ze da weled eur relijion diazezet war ar baourentez hag he-deus ministred pinvidig-meur. Ar Relijion en em gavo kalz gwelloc'h dre ar jeñchamant he-deus greet ar houarnamant. N'en em lezom ket, eta, da veza diarbennet gand ar re a lavar eo ar madou-ze d'an Iliz. Ha mar dint d'an Iliz, n'int ket gounezet ganti, mez roet dezi gand ar vro. Hag ar vro, abalamour da ze, e helle o hemered, en-dro, pa o have mad. War a leverer, ar pezh a zo diêsa da renka a vo ar baemant da rei d'an eskibien. Me 'oar, an eskibien a gavo kalz alvokaded, mez beleien ar parrezioù, avad, ne gavint den d'o divenn. Tregont mil lur a ve kalzig da rei d'eun eskob. Lavaret e vo en-deus kalz dispign. Hag ar bersoned, 'ta ? Ar re-ze, ivez, o-deus da ober dispignou kalz brasoc'h eged an eskibien, ma vijent da vihana lakaet e kemm gand ar pezig o-deus beteg-henn. Beza emaint atao e ti ar beorien hag an dud valeuruz... »

Pelloh al lezenn 'oa douget evel-henn :

1. Eskob Pariz en-devezo daouzeg mil lur ha tri-ugent.
2. An Eskibien all o-devezo daouzeg mil hag an hanter deuz ar pezh a reent, ousspenn, beteg henn. Evelkent ne hellint kaoud, morse ousspenn tregont mil lur.
3. Paeamant vikeled an Eskob a vo daou vil lur.

4. Da bersoned ar hêriou braz e vezo roet pevar mil lur ; c’hweh mil lur d’ar re a vo e Pariz. Ar bersoned er parrezioù diwar ar mêz o-devezo daouzeg kant lur.
5. Ar gureed a vezo paeet hervez ar barrez ma vezint. Mez ne hellint, morse, kaoud nebeutoh eged seiz kant lur.

Al lezenn-ze, kroget enni e miz Even, ‘oa peurachuet d’ar bevar warn-ugent a viz Eost 1790.

Evel a weler, n’oa ket paeet fall ar veleien. Rag mil lur d’ar mare-ze a dalveze tri bremañ ! Mez ar Revolutionerien a lakae priz mad. C’hoant o-doa da douella an dud a Iliz ha da lakaad anezo da drei ganto.

Mez al lezenn ‘oant o paouez ober ‘oa gwall-fall evid an dra-ze. Kas a ree da netra an urz lakaet gand Jezuz-Krist en e Iliz. Hag ar galloud o-deus ar veleien a deu deuz Jezuz-Krist d’ar Pab ; deuz ar Pab, ha dre ar Pab hepken, e teu d’an eskibien, ha dre an Eskibien d’ar veleien all.

Mez al lezenn nevez a zivenne goulenn netra digand ar Pab. Beleg ebed, abalamour da ze, ne helle plega dezi.

Koulskoude, laouen-braz deuz al labour o-devoa greet, kannaded an Assemblée nationale a lakaas ober, dre oll, gouelioù kaer en enor d’al lezennou nevez.

Ar bevarzeg a viz Gouere ‘oa merket evid kement-se.

Soudarded deuz pevar horn Bro-Hall ‘oa galvet da Bariz. En eun dachenn vraz e-keñver kêr ‘oa savet eun aoter. War an aoter ‘oa lavaret an overenn. Ha warni, ivez, ar zoudarded hag ar re all, a douas sentidigez d’al lezennou ma oad o paouez ober.

E pep kêr ‘oa gourhemennet ober ar memez tra.

Mez ne heller overenna war eun dachenn, heb goulenn digand an aotrou ‘n Eskob.

Kêr Vrest a falvezas ganti ober evel Pariz. Ar re ‘oa en he fenn a skrivas, eta, da eskob Leon, an aotrou De la Marche. Setu amañ al lizer ‘oa diskrivet dezo.

Aotrounez,

Lakaet em-eus, atao, va bolontez vad, da ober plijadur da gêr Vrest ha d’ar re a zo en he fenn, pa ‘m-eus gellet hen ober, hervez va houstiañs.

Gwir eo, aotreet ‘m-oa ar pezh a houlennit pa oa bet tronet e kêr ar re a zo o ouarn anezi. Mez abaoe an amzer-ze, an traou en or bro, o-deus kemeret eur stumm all.

Mignon on d’al Liberte kement ha n’eus forz piou. Mez hirio, e welan ar re a zo e penn ar vro, o lakaad an dorn war an Iliz heb derhel kont ebed deuz ar Pab ; o gweled a ran o terri an eskibien, ar bersoned hag o lakaad ivez, anezo en Eskoptiou hag er parrezioù. Hag an oll draou-ze greet en ano lezennou ar vro.

Ma ne vije bet greet ar gouel a houlennit, nemed evid unani ar zoudarded etrezo, evid o lakaad e par da zivenn gwelloc’h ar peoh, ar frankiz, an dud ha madou ; ma ne vije greet ar gouelioù-ze nemed evid lakaad ar garantez da greski e-touez tud ar vro, e karjen beza gellet mond va-unan da gement kêr a zo em eskopti evid beza en o fenn.

Mez ar gouelioù-ze, siwaz ! a zo greet evid toui sentidigez da eul lezenn hag a zo eneb ar relijion, hag a daol d’an traoñ ar renkament lakaet enni gand or Zalver Jezuz-Krist e-unan.

Lavared e a ran deoh, groñs, ne hellan kemered perzh ebed er zentidigez a vo touet d’al lezennou-ze.

N’ho-pefe nemed dismegañs evidon mar deufen evid plijoud deoh da vresa va houstiañs a-zindan va zreid.

Ha goude ma ne vijen ket bet bleinet da ober va dever dre respet evid Doue em-bije kavet peadra da jom war ar roudenn vad, er c’hoant em-eus da veza, atao, prizet ganeoh.

Jean-François
Eskob Leon

Louis XVI ne grede ket da genta kaoud mad an traou a oa bet greet. Mez pelloh, aliet fall hag enkrezet oll, e lakaas e ano evid embann al lezennou nevez.

Mez an eskibien, 'gozig oll, a skrive d'ar Pab evid goulenn digantañ penaoz en em gemer. Diskuill a reent ar falloni a gavent el lezennou.

Berardier, eur beleg deuz eskopti Kemper o chom e Pariz, a ziskoueze dre skridou pegement 'oa al lezenn greet eneb beo d'ar feiz kristen. Hag a zevez da zevez, en eur gazetenn anvet *L'Ami du Roy*. Royou, eur beleg deuz Pont 'n Abad, o rejanti en eur skol deuz Pariz, a ziskuille d'an oll an traou fall 'oa greet gand an Assemblée nationale.

Mez kement-se ne vire ket deuz ar Revolutionerien da vond atao war a-raog.

Da viz Here e hourhemennjont d'ar veneh 'oa chomet er houentchou, ober eleksionou en o houent, dirag ar mêt pe eur hoñsailler, evid choaz an tad superior hag an tad a gargfent deuz an dispignou... (économiste).

Evid al leanezed e hourhemenned ar memez tra. Ha da bep hini anezo, - e-leh o madou laeret, - 'oa lakaet rei seiz kant lur. Evelkent ar seurezed a ree kevrediou ar gouent – sœurs converses – ne oa lakaet rei dezo nemed pevar hant hanter kant lur.

IV

Eskob Kemper ha goueliou ar bevarzeg a viz Gouere. – Eur banniel degaset deuz Pariz da Gemper. – Al lezenn eneb an Iliz kaset d’an aotrou de Saint-Luc. – Lizer an eskob eneb al Lezenn. – Maro an aotrou de Saint-Luc. – E lizer sinet gand ar veleien deuet d’an interamant.

An eskibien n’o-doa nemed eur feson da enebi ouz al lezenn greet ‘eneb an Iliz : chom hep plega dezi.

Oll eh en em gemerjont evel-se. An eskibien ‘oa bet diskaret o eskopti a gendalhe da ober e-giz ma ne oa ket cheñchet netra.

Eun artikl deuz al lezenn, greet d’an daouzeg a viz Gouere, a verke ne hellje eskob, na person, na kure, kaoud tamm pae heb beza touet senti ouz al lezenn-ze.

Eun nebeud, goude, e miz Eost, soudarded hag ‘oa bet e Pariz evid gouel ar bevarzeg a viz Gouere, a zeue en-dro, ha ganto ‘oa eur banniel evid departamant ar Finistère.

Kerkent ha ‘ma degouzet ar helou, lod deuz koñsaillerien an departamant a deuas de bedi an eskob da vond d’an iliz katedral da gana an Te Deum. Mignoned a lavaras dezañ ‘oa gwelloc’h mond gand aon na zegouezfe gantañ eun droug bennag. – « Nann, emezañ, n’eo ket mad din mond, ne din ket ».

D’an deiz ma tegased ar banniel, soudarded Kemper, koñsaill an Departamant, hini an district hag hini ar barrez, a yeas d’e ziambroug war an hent, a-barz degouezoud e kêr. Oll e prosesion, ez afont d’an iliz katedral. Eno daou veleg ‘oa degouezet dija.

Mez a-veh ma oa an oll dud en iliz, ‘oa klevet eun trouz hag eun dourni spontuz : -« Hag an eskob, a lavared, hag an eskob ? e peleh eo chomet an eskob ? Amañ e rank dond beo pe varo. »

Pemp pe c’hweh soudard deuz ar Garde nationale a yeas beteg ennañ. –« Mantruz eo, a lavaront dezañ, ne ve ket an Eskob e penn tud e Eskopti en eun dro evel houmañ. »

-« Muioh mantruz eo, da vihanna, a respontas an aotrou de Saint-Luc, gweled ahanoh o kredi e hellit ober katekiz da eun eskob. »

- « Bremaig e teuio ar re a zo en iliz du-ze, oll en ho palez, amañ, hag e vezoh gwallgaset. »

- « Evel a girint, eme c’hoaz an eskob. Mez e-giz em-eus soñjet e vezo greet. Netra n’am lakaio da jeñch froudenn. »

Kerkoulz, den ne deuas da glask trabas ebed mui ouz an eskob kaloneg. Hag er gatedral, an Te Deum ‘oa kanet gand an daou veleg aonig on-deus dija lavaret.

D’an tri warn-ugent a viz Gwengolo, an aotrou de Saint-Luc a gouezas klañv. D’ar c’hweh warn-ugent, e mare teir eur, e teuer da zegas beteg ennañ, a-berz an departamant, al lezenn eneb an Iliz.

An aotrou ‘n Eskob a skrivas eul lizer evid respont ha lavared d’an Departamant ar pez a zoñje diwar-benn al lezenn-ze. Mez Doue ne roas ket amzer dezañ da gas e lizer. Ar maro a zegouezas gantañ d’an dregont a Wengolo.

Goude an interamant, ar chalonied hag ar veleien ‘oa bet deuet da renta d’o eskob an deveriou diweza, a zisklêrias ne anavezfent eskob all ebed evid eskob Kemper, nemed an hini a deufe a-berz ar Pab. Setu amañ al lizer a gasfont evid an dra-ze d’an Departamant.

« Aotrounez, - goude beza lakaet er bez, pastor on eskopti, hag en-deus e-pad e vuhez roet en-dro dezañ a bep seurt skweriou mad, e teuom da lavared deoh ar pez a zoñje diwar-benn an traou a dremen en on amzer.

Lavaret en-deus, a-raog mervel, e kemere evel eun den deuet a-eneb peb gwir, ar beleg a vije lakaet da eskob e Kemper en e leh, ma vije lakaet en doare merket gand ar Houarnamant.

Ni oll a oar en-deus rezon. Hag an enor on-deus da zisklêria deoh hini ahanom ne zento deuz an eskob a vo lakaet e Kemper, ma ne deu a-berz ar Pab.

Ho pedi a reom, eta, da jom heb ober eleksionou evid dibab on eskob. Rag eun eskob lakaet, evel se, ne hellfe den kaoud, dre e zaouarn, galloud ebed war an eneou.

Beza on-defe, c'hoaz, meur a dra da lavared. Mez merket int e lizer an aotrou de Sint-Luc. Eveltañ e soñjom diwar-benn an traou a lavar. Eñ n'en-deus ket sinet e lizer. Ar maro a zo deuet re drumm.

Hogen setu amañ ar pezh en-doa ar muia pouez e lizer an aotrou de Sain-Luc :

« Ni, eskob Kemper, on-deus lennet al lezenn greet gand an Assemblée nationale. Klañv evel ma'z om ne garfem ket mond dirag Doue, heb beza komzet eneb al lezenn-ze. Rag diskar a ra an urz lakaet gand Jezuz-Krist en e Iliz ha laerez a ra ar madou lakaet dezi etre he daouarn evid mezur he ministred, kempenn an ilizou ha maga ar beorien.

... Disklêria a reom ma ve red evid derhel d'or pae, ober al le a zo gourhemennet gand al lezenn-ze, n'her grafom ket. Morse, ne hellom ober ar bromesa da zenti deuz eul lezenn hag a ziskar, e Bro-Hall, ar relijion gatolik a zo bet beteg-henn, kemeret evid ar relijion wirion abalamour, er-mêz diouti, den ne hell beza salvet.

... Eul lezenn hag a fell dezi terri galloud an Eskibien war ar veleien hag an dud fidel, eul lezenn hag a deu da derri an ereou etre daou halloud greet evid en em glevet ; eul lezenn hag a zivenn ober veu, en eun amzer evel hemañ, hag enni an dud o-deus c'hoant da zelher da gened o eneou a dle kaoud frankiz da vond da veva en eur gouent ; eul lezenn hag a denn digand an eskob e goñsaill ; eul lezenn hag en em gemer ouz kalz tud all hag a dorr an emgleoioù ar muia sakr... al lezenn-ze na hellom e neb feson, toui plega dezi.

... Goulenn a reom ma vo galvet oll eskibien Bro-Hall da en em unani en ur hoñsaill evid gweled petra da ober en amzer amjestr-mañ ; goulenn a reom ma vo pedet ar Pab da gaoud mad ar pezh o-devezo greet an eskibien, rag ar Pab, hepken, a hell barn ar pezh a zo mad evid ar relijion hag an Iliz. »

Da heul al lizer-ze kement beleg a oa deuet d'an interamant o-doa lakaet o ano.

V

Ar chalonied a zibab deg chaloni evid gouarn eskopti Kemper e-leh an eskob maro. – Ar votadeg deiziadet evid choaz eun eskob da eskopti Kemer. – Lizer ar re a oa karget da ouarn an eskopti, d'an elektourien. – Lizer beleien eskopti Leon. – Lizer eskob Leon da zistrict Montroulez diwar-benn al lezennou nevez.

Daou zevez a-raog maro an aotrou de Saint-Luc, koñsaillerien an district a deuas da gaoud ar chalonied hag a hourhemennas dezo chom heb en em gaoud mui kevred evid pedi.

Kerkoulz, ar gatedral 'oa lamet diganto ha roet da zaou berson deuz kêr hag o-doa touet sentidigez d'al lezennou.

Teir zizun war-lerh, ar chalonied a deuas, koulskoude, a-benn d'en em voda. Ha peogwir e welent an traou o vond kement war fall evid ar relijion, eh anvont deg vikel-vraz da ouarn an eskopti e-leh an eskob maro.

Peurlies, pa varv eun eskob, ne vez lakaet en e leh netra nemed eur vikel vraz evid gouarn an eskopti. Mez abalamour ma welent ar goabrenn zu war an amzer da zond, ar chalonied ne gavjont ket e vije bet re deuz a zeg. Da vihanna, er giz-se, pa vije maro unan, pe ma teuo eun all rankoud mond kuit pe beza taolet er prizon, e vije kavet unan pe unan c'hoaz evid derhel da ober e labour.

Setu amañ an deg 'oa bet anvet evel-se : An aotrounez Descognets, de Larchantel koz, de Larchantel yaouank, de Langon, Thiberge, de Mauduit, person Plovan, de la Marche, eskob Leon ha Le Mintier, eskob Landreger.

Mez, diwezatah, ar Pab ne gavas ket mad ar pezh o-doa greet chaloned Kemper. An aotrou de Larchantel, hepken, 'oa karget gantañ, da ouarn an eskopti. Dezañ 'oa roet galloud eun eskob d'an 23 a viz Gouere 1791.

Koulskoude, an dud 'oa galvet da vond da voti evid lakaad eun eskob e Kemper. Al lizer degaset deuz Pariz, a-berz an Assemblée nationale, evid merka kement-se, 'oa warnañ ano Expilly. Ar votadeg 'oa deiziadet evid ar henta a viz Du.

Ar vikeled 'oa lakaet gand ar chaloned hag a ouarne, c'hoaz, eskopti Kemper, a skrivas eul lizer hag her hasas d'ar re 'oa galvet da vond da rei o mouez. C'hoant o-doa da sklêrijenna o Feiz. Merka a reont dezo o dever : « Lavared a reom deoh, emezo, en ano Doue, en ano Jezuz-Krist, pastor hag eskob on eneo, en ano ar pezh ho-peus, en ano an Iliz katolik hag oh he bugale, en ano ar vro hag a garom eveldeh, da jom heb dond da voti. Arabad deoh êsa rei da iliz Kemper, eun eskob ha n'he-devezo ket afer anezañ. Dija ho peleien o-deus lavaret deoh ne hellent tamm, e koustiañs, plega d'eun eskob anvet evel-se. Ne reoh ket, emichañs, ar skouarn vouzar deuz ar re a zo karget d'ho kas d'ar baradoz. Na dit ket, eta, da voti. Rei a hellit ho mouez er votadeg a vez greet evid choaz tud ar houarnamant. Mez ne hellit ober tamm ar memez tra, pa vez keal da choaz tud evid gouarn an Iliz. »

An eskob a dlee beza anvet e Kemper evid ar Finistère a-bez. Evel-se, eskob Kastell a dlee beza diskaret. Ha paotred Leon koulz ha gwazed Kerne 'oa galvet da zond da voti evid dibab eun eskob nevez.

Mez beleien Leon a gelennas o farrezianiz. Kas a rejont eul lizer, d'an 2 a viz Here, d'an dud 'oa galvet da vond da voti : « Ni, beleien eskopti Leon, a lavare dezo, o veza klevet eo merket an devez evid envel, dre votadeg, eskob ar Finistère, ni a ro da houzoud d'an oll ne fell ket deom, a briz ebed, e ve lakaet en unan, eskopti Leon hag eskopti Kerne, heb aotre ar Pab. Abalamour da ze e vezim, atao, a-eneb an eleksionou a vo greet evid kement-se, e Kemper. »

E traoñ al lizer-ze ema anoiou beleien eskopti Leon, oll koulz lavared.

D'ar bemzeg a viz Du, beleien Leon a roas da anaoud d'o eskob al lizer o-doa skrivet d'ar re a oa galvet da vond da voti.

An aotrou de la Marche a respontas dezo evid diskouez e anaoudegez vad hag e laouenidigez.

Eun nebeud deveziou a-raog, d'an 13 a viz Here, en-doa kaset eul lizer da zistrict Montroulez hag a verke sklêr ar pezh a zoñje, e-unan, diwar-benn ar votadeg hag al lezennoù nevez.

District Montroulez en-doa skrivet dezañ. War al lizer, an adres 'oa lakaet er mod-mañ : « District Montroulez, d'an aotrou de la Marche a zo bet eskob e Leon. » Diskriva a reas dezo : « Degemeret e zo¹² amañ, eun tamm paper. Lakaet ez eo warnañ ano eun de la Marche bennag hag a zo bet eskob Leon : me a zo, atao, eskob Leon. Abalamour da ze e kasan anezañ deoh en-dro. Ma ho-peus c'hoant e tegouezfe ganen, c'hwi a lakaio mad an adres. »

En-dro din e zo¹³ tud hag a lavar, eo evid rei din da anaoud al lezennoù nevez. Dalhit hen, neuze. Rag eskob on ha n'eus gouarnamant ebed hag a hellfe, heb ar Pab, lamed diganen ar garg-se. An Assemblée nationale a lavar deoh, n'eus eskob ebed ken e Leon. Mez daoust hag an Assemblée-ze a hell lamad diganen eur galloud ha n'am-eus bet nemed digand ar Pab ? Kaoud a ra deoh, e gwirionez, en-deus kemeret bremañ Jezuz-Krist an Assemblée nationale evid gouarn e Iliz ? Daoust ha dezi on-deus lavaret : « Ar pezh a liamfoh, war an douar, a vo liamet en Neñv ; ar pezh a ziliamfoh a vo diliamet. Ha soñjal a reoh n'ho-pezo eskob ebed mui, mar plij d'an Assemblée nationale ?

Gouzoud a ran emaoñ o vond da voti, e Kemper, evid choaz eun eskob. Mez piou a roio dezañ e halloud a eskob ? An Assemblée nationale a raio al lezennoù a garo. Beza e zo¹⁴

¹² e zo amañ : ez eus amañ.

¹³ e zo : ez eus.

¹⁴ e zo : ez eus.

traou ha warno oll galloud an dud hag an ivern zoken, na hellont netra. Ar galloud war an eneou a deu digand Doue, dre an Tad Santel ar Pab, ha nann dre an Asemblée nationale. »

Mez dre o hostez, ivez, tud ar gouarnamant a gasas paperou d'an elektourien. Lavared a reent da bep hini anezo : « Deuet eo ar mare da derri al liamm en-deus lakaet an Iliz war da chouk. Daoust ha na out ket libr ? Arabad selaou mui mouez ar veleien a vir ouzit da weled sklêr. »

Koñsaill an Departamant d'e dro, en-doa aon na vije ket deuet tud a-walh da voti. Abalamour da ze, d'an nao a viz Here, e lakaas e vije roet hanter-kant skoed da gement hini a deuje da Gemper da rei e vouez d'an eskob nevez.

VI

Ar votadeg e katedral Kemper. – Dizurz ha roulerrez en iliz. – Expilly a zo anvet da Eskob da ziv eur goude hanternoz. – E lizer d'an Departamant. – Te Deum e Brest hag e Kemperlé. – Petra 'oa Expilly.

An dud galvet da rei o mouez evid dibab eun eskob a zegouezas niveruz e Kemper d'an unan ha tregont a viz Here 1791. Deuz ar mintin 'oa.

Da nav eur 'oa kanet an overenn er Gatedral. Goude an overenn 'oa kanet ar *Veni Creator* hag 'oa votet evid lakaad eur prezidant.

An aotrou Goret, person Gwitalmeze, en-doa daou hant hag eur vouez, war bevar hant.

Jannou, person Loperhed, 'oa anvet da zekretour.

Ne oa mui greet netra en devez-se.

Mez d'an deiz war-lerh, da eiz eur diou ar mintin, 'oa votet, adarre, evid gweled piou da lakaad da ziwall ar pod.

Tri 'oa anvet. Mez en o zouez 'oa eur beleg ha na felle ket dezañ toui e giz ma oa merket. Kerkent e savas warnañ ar hri hag an dalahao¹⁵. En e leh 'oa anvet eun all.

Goude 'oa votet evid lakaad eun eskob. Ar pod 'oa war an aoter vraz.

En daou du d'an iliz, er heuriou bihan, 'oa veltajou eau de vie. An elektourien, ar beizanted, dreist-oll, a vije lakaet da eva evid rei dezo eun tammig hardisegez da vond eneb aliou o beleien. Ha lod hanter-vezo, merhed divezet ha paotred yaouank libertin, a yee hag a deue dre an iliz en eur youhal soniou louz ha divergont.

Unan deuz ar re a oa deuet da voti a roas d'ar Prezidant eul lizer skrivet gand an aotrou de La Marche, eskob Leon. Meur a hini a houlennas ma vije lennet al lizer-ze, a-raog kregi er votadeg. Mez sevel a reas eur hri spontuz ma oa red gortoz beteg ar fin.

Ar henta a deuas da voti 'oa eur Protestant. 'Gozig sur, ne oa d'ar mare-ze, er Finistère, protestant all ebed nemetañ.

Doue a ziskouezas ne oa ket kontant. An amzer a deuas da gohenna. Eur gurun spontuz a zirollas. Kêr Gemper a dregerne gand an talmou. Hag al luhed a venne devi an daoulagad.

Teir gwech 'oa bet red voti. Er wech kenta, ar moueziou a oa bet fuillet war hemañ, war henez. En eil tro, Expilly en-doa daouzeg mouez ha nao-ugent.

Div eur goude an hanternoz pa oa digoret ar pod evid ar wech diweza. Ki ar skolaj en-doa diou vouez. Diou zeurez o-doa, ivez, moueziou. Mêr Kemper hag e grevier o-devoa, zoken, meur a hini. Mez daou hant tri ha tri-ugent o-doa votet evid Expilly.

Raktal, oad pignet en tour. Ar hleier 'oa lakaet e brall. Ha pa deuas an deiz, 'oa kanet, goude ofis an anaon, an Overenn hag an Te Deum.

D'an devez war-lerh, koñsaill an Departamant a skrive da Expilly : « Hasta 'reom kemenn deoh ez oh anvet da eskob er Finistère...Mall on-deus d'ho kweled o tond da jom e-touez ar veleien hag an dud fidel deuz an Departamant a gar kement Jezuz-Krist hag an Asemblée nationale. »

¹⁵ dalahao : ?

Pemp devez goude e tegoueze respont Expilly. Lavared a ree : « Aotrounez, ma ne zelaoufen nemed va zempladurez hag ar joa em-eus deuz eur beva kuzet, e refuzfen ar choaz ho-peus greet ahanon evid hoh eskob...

Mez senti a ran gand doujañs deuz mouez ar bobl. Anaoudegez vad am-eus deuz ar fiziañs ho-peus diskouezet kaoud ennon ha diouz an enor ho-peus greet din... A-rag pell e vezin en ho touez. »

*

En devez ma tegouez al lizer-ze, person Sant-Louis Brest, an aotrou Laligne, a lakae kana eun Te Deum, en e barrez, evid renta bennoz da Zoue abalamour ma oa choazet Expilly evid eskob ar Finistère.

En Kemperle an *Te Deum* ne oa kanet nemed d'an eiz warn-ugent a viz Du. Mez greet 'oa gand eur zolennite vraz. Beleien iliz Sant-Mikeal o-doa dija touet oll, senti deuz al lezennou nevez. Ind-i a ganas an Te Deum. Koñsaill an ti-kêr, soudarded kêr hag oll ar re 'oa a-du gand ar houarnamant a deuas d'ar gousperou. Ha goude an Te Deum an oll a strakas o daouarn en eur grial : « Ra vevo ar Vro ! ra vevo al Lezenn ! ra vevo ar Roue ! »

*

Louis-Alexandre Expilly 'oa ganet e Brest. Er skol 'oa bet e Pariz.

Pa zaillas ar Revolusion 'oa person e Sant-Martin Montroulez. Eñ en-deus savet, eno, an iliz a weler c'hoaz hirio.

Mez abaoe eun tachadig amzer, e tarempe de tud ha n'o-doa ket a feiz. Mignoned en-doa e kostez Pariz ha ne dalvent ket muioh. Kaset 'oa bet gand beleien Leon d'an Assemblée nationale e miz Eost 1790. Eun tammig 'oa boufonig. Pa oa votet al lezenn eneb an Iliz e prenas dillad eskob hag e tiskoueze anezo en eur en em bompadi. Sur 'oa, emezañ, da veza eskob er Finistère.

Eskob 'oa, hervez Lezenn an Assemblée nationale. D'an devez goude ma oa anvet, ar veleien karget da ouarn eskopti Kemper, a skrivas dezañ : « Aotrou, a lavarent, ar galloud war an eneo, en eskopti Kemper, a jomo etre on daouarn beteg ma teuio, amañ, eun eskob a-berz ar Pab. Beleg ebed ne vo a-du ganeoh ma teuit en or bro, a-hend-all. Ne vezo ken nemed an dud fall laouen ouz ho kweled o tond amañ.

Diêz braz e kavom lavared kement-se deoh. E Sant-Martin, gwechall, ho-peus roet skwer vad. Ne hellom ket c'hoaz kompren penaoz oh kouezet izel a-walh evid senti deuz lezennou fall ar gouarnamant.

Mar kirit, avad, goulenn ma vo miret lezenn an Iliz evid envel an Eskibien, mar kirit dond beteg ennom a-berz ar Pab, ni lakaio, gand plijadur, etre ho taouarn, gouarnamant eskopti Kemper. »

Expilly ne respontas ket d'al lizer-ze.

Mez d'an unneg a viz Genver 1791 ez eas da gaoud an aotrou de Girat, eskob Roazon. Eskob Roazon 'oa lakaet gand an Assemblée nationale da arheskob e Breiz-Izel. Hervez al lezenn, Expilly a ranke beza sakret gantañ. Mez an aotrou de Girat a lavaras nann : « An Assemblée nationale ne hell, emezañ, na va lakaad da veza arheskob, na c'hwi da veza eskob. » Hag e pede anezañ da zoñjal er malloz taolet, atao, gand Doue, war ar re a ya evel eur bleiz, heb beza galvet da ouarn deñved Jezuz-Krist.

Distranet evel-se, gand eskob Roazon, Expilly a yeas da fludenna da di an aotrou Talleyrand.

Hemañ 'oa eskob Autun. Kaset 'oa bet ivez gand eskibien e vro d'an Assemblée nationale. Ne oa tamm, en e greiz, kalon eur beleg. Morse, ne oa bet galvet gand Doue da vond er stad-

ze. Mez eur harr gamm en-doa. Ne gave ket dezañ en-dije en em denn koulz hag an dud all er bed. Hag abalamour da ze ez eas da veleg. Troet en-doa diohtu gand ar Revolusion. Ha d'ar re a gave brao gweled anezañ oh enebi ouz Doue hag ouz an Iliz e lavare, diwezatoh : « Petra 'fell deoh ? Me ne dleen ket beza beleg. Morse ne don bet galvet da vond er stad-ze, nemed gand va garr. »

An eskob divezet-se a zakras Expilly e chapel Sant-Honore, e Pariz.

Kerkent ha ma oa sakret ez eas d'an Assemblée nationale, daou dabouliner en e raog, ha d'e heul ar muzikou ha kalz soudarded.

Tri devez goude ez eas beteg ar Roue hag e reas dezañ an tamm orogell-mañ : « Aotrou Roue, ar garantez ho-peus evid al lezennou nevez, ar re wella 'zo war an douar, a ra eun dever evid peb den, e Bro-Hall, da zond da doui deoh mignonij ha lealded.

Dija on-deus greet al le-ze evel sitoyan. Her greet on-deus c'hoaz evel eskob hag adober a reom anezañ deoh, adarre, gand or gwella garantez. Or galloud a eskob hag a deu deom digand Doue, dre vouez ar bobl ha dre an Iliz, a lakafom evid deski plega da hourhemennou ar relijion ha da lezennou ar Houarnamant.

Ar Roue a respontas : bennoz Doue deoh ! hag a droas e gein.

*

D'an daouzeg a viz Meurz, Expilly a deue da Gemper. Degemeret mad 'oa gand an dud fall ha dizoue¹⁶. Dre ma tremene e veze lezet tennou.

Mez Doue, c'hoaz eur wech, a ziskouezas e goler¹⁷.

An amzer a deuas da veza ken teñval war dro teir eur, ma ne weled ken zoken liou palv an dorn. An eskob hag an dud a oa eet da zegemer anezañ, a zeue war-zu kêr, mesk-ha-mesk heb gouzoud kalz peleh e oant.

Mez Expilly ne reas van. Degouezoud a reas en e balez. Eno 'oa fardet eul lein deuz ar re wella. Ar horaiz a oa. Mez war an daol 'oa pesked ha kig.

E-pad lein 'oa sonet ar muzik. Ar "Ça ira" 'oa neuze son ar Revolusionerien, eur zon divergont¹⁸ mar deuz unan ! Mez da heul ar muzik, Expilly koulz hag ar re 'oa o leina gantañ, a gane anezi.

Eun nebeud goude ez eas da Zouarnenez. Eno 'oa greet gouel braz en e enor. Da echui ar gouel 'oa greet eun tantad. E n-dro dezañ e tleed kana an Te Deum. Mez Expilly, en eur lakaad an tan ennañ, a zistagas leiz e gornailenn ar "Ça ira".

A-raog fin ar horaiz ez eas da Vrest. En eur vond e tremenas dre Ar Faou. War an daol, na petra 'ta, 'oa adarre kig ha pesked. Hag en-dro d'an daol, evel ma vije dre-oll, edo ar gristenien falla¹⁹ deuz kêr.

En deiz war-lerh, tud Landerne a reas dezañ forz prezegennoù, a ganas an Te Deum hag a reas eun tantad en e enor.

Mez e Brest on-devoa an degemer kaerra. Soudarded, martoloded hag ar garde nationale a deuas d'hen diambroug, lark war an hent. Dre ma tremene e vije lezet tennou. E-kreiz an trouz-se, Expilly 'oa lorchuz. Al laouenidigez a bare war e dal. Daoust ha beza edo ivez en e galon ?

Deuz Brest Expilly a yeas da Vontroulez. En eur dremen e Landerne, evid an eil gwech, Expilly a vadezias en iliz Saint-Julian, eur bugel da jardiner an ospital.

¹⁶ an dud fall ha dizoue : **notenn gand Embann an Hirwaz** : Neuze, hervez Jezegou, e vefe tud fall ar re zizoue !

¹⁷ Mez Doue, c'hoaz eur wech, a ziskouezas e goler : **notenn gand Embann an Hirwaz** : ha ne vefe ket koler Jezegou ?

¹⁸ eur zon divergont : **notenn gand Embann an Hirwaz** : Mennoz eur beleg a oa a-eneb an Dipah !

¹⁹ ar gristenien falla : **notenn gand Embann an Hirwaz** : an dud fall. Ne oant ket kristenien ken.

*

C'hoant brasa Expilly a oa en em lakaad mad gand tud e eskopti. Abalamour da ze, kerkent ha ma oa sakret, e skrivas dezo : « Or breudeur ger, galvet dre ho moueziou da ouarn Iliz ar Finistère, on-deus greet kerkent ha ma on-deus gellet, oll ar pezh a zo goulennet gand gourhemennou Doue ha lezennou an dud evid kaoud ar galloud ma on-deus ezomm anezañ. »

Ouspenn-ze, d'an oll e lavare n'oa ket bet eet da houlen beza sakret eskob nemed war ali kannad ar Pab e Pariz : ar pezh a oa eur gaou mad.

Gwechou all, e konte 'oa eur paour-kêz hag en-doa lavaret dezañ, e-pad ma oa person e Montroulez, e teuje, eun devez, da veza eskob. Kement-se 'oa evid rei da anaoud 'oa bet choazet gand Doue.

Aliez a-walh, ivez ez ee d'ar foariou, d'ar marhajoù. Rei a ree an dorn en tu-mañ, en tu-hont, d'ar merhed, d'ar gwazed ; kaozeal a ree brezoneg hag e lavare dezo, eur mousc'hoarz war e vuzellou : « C'hwi 'oar, pa ho-pezo ezomm eun dra bennag deuz an eskopti, evel eun dispañs pe evel-se, e vezo, hiviziken, oll evid netra. »

D'ar veleien, ivez, Expilly a ree flourig, da genta. Kinnig a ree ar parrezioù gwella d'ar re a garje toui sentidigez d'al lezennou. Hag o toui, emezañ, ne oa pehed ebed.

War a gontar, en dro genta ma'z eas da Vontroulez, e tegouezas gand e gure koz, an aotrou Guerlesquin. Kinnig a reas dezañ, ma karje plega da lezennou ar Houarnamant, unan euz gwella parrezioù eskopti Kemper. – Salokras, aotrou Expilly, a respontas an aotrou Guerlesquin, n'ho-peus galloud ebed da rei din ar barrez-se. – Alo, denig paour, petra 'ri evid beva ma ne zentez ket deuz lezennou an Assemblée nationale ? – Ha c'hwi, aotrou person, eme gure Montroulez, petra 'reot-c'hwi, evid mervel ?

VII

Ar veleien gwallgaset. – An Assemblée nationale a laka e ranko ar veleien plega d'al lezennou. – A veleien hag al lezenn nevez.

Al lezenn eneb an Iliz n'oa forz ebed c'hoaz da blega dezi. Eun artikul deuz al lezenn-ze a lakae e ranke ar veleien toui sentidigez d'al lezennou. Mez ar re a doue hag ar re na douent ket a vije lezet, beteg neuze, en o farrezioù. Evelkent, abaoe ar bevar warn-ugent a viz Gouere, 'oa greet eul lezenn evid tenna o fae digand ar re na blegent ket.

Mar deus kalz kêriou, deuz Kemper, ivez, koulz ha deuz meur a leh all, e teue klemmou eneb ar veleien na douent ket. Breuriezou mignoned ar Houarnamant, hag a zave stank neuze, dre ar hêriou braz, a houlenne o hastiza en eur feson gwasoh.

Ha pelloh, d'ar zeiz warn-ugent a viz Du, eun alvokad, Voidel e ano, a lakaas dougen al lezenn-mañ : « An eskibien, ar bersoned, ar gureed, ar veleien a zo oh ober skol er helenndiou, a ranko toui sentidigez d'al lezennou pe dilezel o harg. Ar veleien a ranko toui, en iliz, dirag an oll d'ar zul, en eiz devez kenta, ma vo embannet al lezenn-mañ. Ma nahont hen ober ha ma'h enebont, e vezint tamallet da veza lakaet freuz da zavel ha kaset dirag ar barner. »

Hogen, ar feson da doui 'oa evel-henn : « Me 'dou beilla gand aket war an oll dud fiziet ennon ; me 'dou fidelite d'al lezenn, d'am bro ha d'ar Roue ; toui a ran, ivez, derhel atao d'al lezennou greet gand an Assemblée nationale. »

Ar Roue a roas e ano evid embann al lezenn-ze d'ar c'hweh warn-ugent a viz Kerzu.

Kerkent 'oe digoret ar roll evid kemered anioù ar veleien a oa en Assemblée nationale hag a deuje da doui. Al lezenn a leze ganto eiz devez evid ober kement-se.

D'ar seiz warn-ugent, diohtu, daou veleg ha tri-ugent a reas al le a houlenned diganto. D'an eiz warn-ugent, Talleyrand, eskob Autun, a reas ar memez tra. Goude, beteg fin ar miz,

pevarzeg beleg all a douas, c'hoaz. D'an daou a viz Genver, eun eskob, Gobel, a reas evelto. D'e heul e teuas tri all. D'an tri a viz Genver 'oa, adarre, daou warn-ugent beleg o toui. Kalzig 'oa. Mez edod pell c'hoaz deuz an niver war an hini²⁰ 'oa kontet. Abalamour da ze, evid an devez diweza, ar bevar a viz Genver, 'oa lakaet da zond en-dro d'ar gambr, hag 'oa enni an Assemblée nationale, an dud falla deuz kêr Bariz. C'hoant 'oa da sponta ar veleien : ne glevant nemed an hu greet warno : « d'ar groug, ar veleien na douint ket ! »

Mez ar re aonig 'oa dija kouezet. Ne jome mui nemed ar veleien dispont hag a galon. Pevar hepken a blegas. Ha Mirabeau, souezet e-unan o weled ouspenn an diou drederenn deuz ar veleien o chom heb ober le, a lavare : « Mad ! gwazed int : o arhant on-deus lamet diganto, mez dalhet o-deus d'o enor ! »

*

Dre Vro-Hall a-bez 'oa evel-se. Ha koulskoude n'oa espernet netra evid lakaad, dre oll, ar veleien da blega. Kaset e vije dre ar presbitaliou a bep seurt skridou leun a hevier. War lod, e lakaed en-doa ar Pab kavet mad al lezenn nevez : war lod all 'oa beleien vad ha santel hag o-doa touet.

D'ar mare-ze, ne oa na kazetenour, nag hentchou-houarn, na telegraf evel a zo hirio²¹. Ar helachou a vije pell o vond. An darn-vuia deuz ar veleien ne helljont ket anaoud, diohtu, pe gwir pe gaou 'oa ar pezh a verked dezo.

Ouspenn-ze, kalz beleien n'o-doa gwenneg espernet ebed ; n'o-doa nemed o farrez evid beva. Ma vijent dibarrezet e vijent lakaet war an noaz. Meur a hini, c'hoaz, o-doa ganto o zad hag o mamm. Ma nahent rei sentidigez d'al lezenn-ze, ar re goz kêz n'o-dije repu en neb leh.

En despet da gement-se, ne oa bet o toui nebeud a-walh a veleien. Ha c'hoaz, meur a hini bet lakaet da fazia, da genta, en em zislavaras goude-ze.

Setu amañ, kerkoulz, penaoz e tremenas an traou er Finistère, d'ar mare-ze. Merket int war ar rollou a rankas peb district kas da Gemper e derou ar bloaz 1791.

*

District Brest

Ano ar veleien o-deus touet senti deuz al lezennou :

Notenn gand “Embann an Hirwaz“ : amañ ez eus anoioù ar veleien o-deus sentet deuz al lezennou. Ne room ket o anoioù, nag o harg, med o niver :

Sant-Louis, Brest : 28.

Rekourañs : 6.

Lambezelleg : 5.

Gwipavaz : 1.

Ar Forest : 2.

Plougin : 1.

Plourin : 2.

Treouergad : 2.

Ploumoger : 1.

Kouent Sant-Vaze : 8.

²⁰ war an hini : war behini, er skrid orin.

²¹ evel a zo hirio : evel ez eus hirio.

*

Anoioù ar veleien deuz district Brest ha n'o-deus ket pleget d'al lezenn deuz ar 27 a viz Du.

Sant-Louis, Brest : 5.

Rekourańs : 2.

Sant-Mark : 1.

Lambezelleg : 1.

Gwiler : 3 .

Boharz : 1.

Kerber : 2.

Gwipavaz : 1.

Kerzent : 2.

Plabenneg : 5.

Gouenou : 2.

Loc-Brévélair : 1.

Lanniliz : 3.

Ploivhan : 2.

Bourh-Wenn : 2.

Landeda : 2.

Brouennou : 1.

Gwitalmeze : 4.

Lambaol-Gwitalmeze : 1.

Sant-Pabu : 1.

Landunvez : 2.

Plougin : 2.

Treglonou : 1.

Plourin : 1.

Lanildud : 2.

Porzpoder : 3.

Lared : 1.

Plouarzel : 2.

Lambaol-Plouarzel : 1.

Lokrist : 3.

Sant-Vaze : 1.

Plougonvelin : 1.

Trebabu : 1.

Molenez : 1.

Eusa : 2.

Lokournan : 2.

Milizag : 3.

Gwiprońvel : 1.

Lanrivoare : 2.

Koadmeal : 1.

Plouzane : 3.

Lomaria : 1.

Ploumoger : 2.

Lampert : 1.

Evel a weler, e District Brest e zo lakaet unan hag hanter-kant hag o-deus pleget d'al lezenn. E-touez ar re-ze e zo meur a hini ha na zelle ket al lezenn outo : beleien bet dibarrezet, aluzennerien ar vartoloded pe zoudarded, 'gozig oll deuz ar broiou all.

E-touez ar re n'o-deus ket touet ar houarnamant n'he-deus ken kontet ar bersoned hag ar gureed. Deuz ar re-ze e selle al lezenn. Mez evel ar re-ze, eur bern re all ne blegfont ket c'hoaz : kapusined, beleien Karmes ha beleien vad a oa dre ar parrezioù.

*

District Kerhaez

O-deus greet al le goulennet diganto :

Plouger : 6.

Plounevezel : 2.

Ar veleien all euz ar horn-ze deuz eskopti Kerne a nahas toui. Hag abalamour ma chomas fidel ar veleien, abalamour ivez ma teuas diwezatoù ar Chouanted da ober o zroioù dre eno, parrezioù district Kerhaez a hellas derhel o fersoned hag o hureed muioh eged ar hostezioù all.

*

District Kastellin

O-deus greet al le da blega d'al lezennou :

Kastellin : 3.

Kast : 1.

Dineol : 2.

Sant-Gouliz : 1. (a deuas war e her).

Argol : 2.

Tregarvan : 1.

Telgrug : 2.

Rozkañvel : 1.

Gouezeg : 1.

Lokronan : 1.

Plounevez-Porze : 2.

Kemeneven : 2.

Plomodiern : 2.

Kemeneven : 2.

Ploeven-Porze : 2.

Saint-Nic : 2.

*

O-deus nahet toui :

Kast : 1.

Brasparz : 3.

Lannedern : 2.

Lokefred : 1.

Kroazon : 2.
Kameled : 2.
Rozkañvel : 1.
Gouezeg : 1.
Edern : 4.
Lotei : 1.
Saint-Thois : 2.
Lokronan : 1.
Plounevez-Porze : 1.
Pleiben : 3.
Lennon : 2.
Sant-Segal : 1.
Lopereg : 2.

*

District Landerne

O-deus greet al le da blega d'al lezennou : 7.

Ar Faou : 5.
Sizun : 2.
Komana : 1.
Pont-Krist : 1.
Hañveg : 1.
Ospital-Kammfroud : 1.
Plougastell : 1.

Person Sant-Toman ha kureed Sant-Alar, Lanvog, ha Logonna-Kimerh o-deus touet ivez.
Mez n'o-deus ket evelkent greet al le e-giz ma oa dleet.

*

O-deus nahet toui :
Sant-Houardon : 2.
Sant-Thomas : 2.
Beuzid : 2.
Plouedern : 2.
Lanneufred : 1.
Landivizio : 1.
Gwikourvest : 1.
Gwimilio : 4.
Plougorn : 2.
Mezpaol : 1.
Santez-Katell : 1.
Sizun : 3.
Lomelar : 1.
Komanna : 2.
Plouziri : 2.
Ar Merzer : 1.
Log-Eginer : 1.
Ar Roh : 1.
Irvillag : 2.

Sabt-Alar : Capitaine, kure. An aotrou Capitaine en-doa touet, evelkent, beza fidel d'ar Roue ha d'ar vro. Mez evid al lezennoù e lavaras : « Kalz artikloù a welan, eno, war ar re²² va houstiañs ne bermet ket din sermenti. »

Dirinon : 2.
Lanurban : 1.
Logonna : 1.
Plougastell : 2.
Loperhed : 2.
Daoulaz : 2.
Hañveg : 3.
Rumengol : 1.
Le Tréhou : 2.
Trelevenez : 1.
Treveur : 1.
Roznoen : 2.
Kimerh : 2.
Logonna-Kimerh : 1.

*

District lezneven

O-deus touet :

Kernouez : 1. Person (daou-ugent vloaz).
Kerniliz : 1 Person (pemp bloaz hag hanter-kant)
Gwinevez : 1. Kure (daou-ugent vloaz).
Sant-Fregant 1. Kure (hanter-kant vloaz).

An oll veleien deuz an district-se a nahas toui plega d'al lezennoù. Mez evid lavared ar wirionez, ar re a oa e penn an district, daoust dezo da veza troet gand ar houarnamant, ne glaskjont nemeur a drabas ouz ar veleien vad²³. Er hostez-se, eo bet, gand kostez Kerhaez, lezet ar veleien vad ar muia e peoh.

*

District Montroulez

N'o-deus ket touet :

Kloastr-Plourin : 1. Kure.
Sant-Malani : 1. Person.
Sant-Vaze : 2. Person. Kure.
Sant-Martin : 2. Kureed.
Sant-Sève : 1. Kure.
Santeg : 1. Kure.
Kastell : 3. Person ; Kureed.
Roskov : 1. Kure.
Taole : 3. Person ; Kureed.
Heñvig : 1. Kure.
Karanteg : 1. Kure.
Gwimaeg : 2. Person ; Kure.

²² ar re : warbere, er skrid orin.

²³ ar veleien vad : Ar re a oa a-eneb "Constitution Civile du Clergé", hervez Jezedou.

Plougoñven : 3. Person. Kureed.
Garlan : 2. Person. Kure.
Plougasnou : 2. Person. Kure.
Sant-Yann ar Biz : 1. Kure.
Lanneur : 2. Person ; Kure.
Lokireg : 2. Person. Kure.
Plouegad-Moysan : 1. Person.
Plouenan : 2. Person. Kure.
Borsorhell : 2. Person. Kure.

Le Ponthou : 1. Evelkent e touas senti ouz al lezennou, e kement ha ne zellent ket ouz ar Relijion.

Gwerleskin : 2. Person. Kure.
Plouian : 2. Person. Kure.
Plouezoh : 2. Person. Kure.
Lokenole : 1. Kure.
Plouigno : 3. Person. Kureed.
Plouneour-Menez : 2. Person. Kure.
Plouegad-Gwerann : 2. Person. Kure.
Gwiklan : 2. Person. Kure.
Plougoulm : 2. Person. Kure.
Sant Tegonneg : 2. Person. Kure.
Pleber-Krist : 2. Person. Kure.
Enez Vaz : 2. Person. Kure.

*

O-deus greet al le da zenti deuz al lezennou :

Plourin : 2. Person. Kure.
Sant-Malani : 2. Kureed.
Plouegad-Moysan : 1. Kure. :

Aluzenner ospital Sant-Fiakr, e Plourin, 2 Tadou a Urz Sant-Frañsez, e Plourin ; 1. beleg e Plounaour-Menez.

En eur gas an anoiou-ze d'ar departamant, procureur-syndic Montroulez en-doa evel mez. Da heul e skrive en-doa klevet lavared 'oa beleien all kontant da doui, ma vije roet eur barrez dezo. Evel-se, emezañ, ema : 1, deuz Lanneur ; 1, beleg euz Plouyann ; 1, beleg e Lanneanou ; 1, beleg euz Plouyann ; 1, beleg e Lanneanou ; 1, beleg e Sant-Martin ; 1, chaloni Itron Varia ar Vur ; 1 a vez o lavared an overenn e Leskifiou ; 2, a Urz Sant Frañsez.

*

District Pont-e-Kroaz

a zo chomet heb ober al le a zo bet goulennet diganto :

Pont-e-Kroaz : 1. Kure ;
Beuzeg : 3. Kureed ; beleg.
Meylars : 2. Person. Kure.
Gwiler : 1. Kure.
Pouldergad : 2. Person. Kure.
Poullan : 2. Person. Kure.
Ploare : 2. Person. Kure.

Douarnenez : 2. Beleien.
Plogastell :1.
Landudeg : 2. Person. Kure.
Ploneour :1. Kure.
Sant-Honoré :1. Kure.
Treogad : 1. Kure.
Lanvern : 1. Person.
Peumeurid : 1. Person.
Tregenneg : 1. Person.
Plovan : 2. Person. Kure.
Pouldreuzig :2. Person. Kure.
Lababan : 1. Person.
Plozeved : 3. Person ; Beleien.
Plohineg : 2. Person ; Beleg.
Aodiern : 1. Beleg.
Primelin : 2. Person. Kure.
Gourlizon : 1. Kure.
Le Juch : 1. Beleg

*

O-deus touet :
Pont-e-Kroaz : 3. Person. Beleg ; aluzenner an Ursulined.
Poullan : 1. Beleg, deut kerkent war e her.
Douarnenez : 1. Beleg.
Ploneiz : 2. Person. Kure.
Plou,eoru-Lanvern : 1. Person.
Peumeurid : 1. Kure.
Aodiern : 1. Kure.
Eskibien :3. Person. Kureed.
Kleden : 4. Person. Beleien.
Plogoñ : 2. Person. Kure.
Goulien : 2. Person. Kure.
Enez Sizun :2. Kureed.

E-touez ar veleien o-deus touet plega, eo lakaet 1, person Plouneour. N'en-doa touet, koulskoude, beza fidel da lezennou ar houarnamant nemed e kement ma ne vijent ket eneb lezennou an Iliz.

*

District Kemper

O-deus touet :
Sant-Evarzeg : 2. Person. Kure.
Kuzon : 1. Person.
Kombrud : 1. Person.
Penmarh :2. Person. Kure. Mez an aotrou-mañ 'oa deuet war e her, n'oa ket pell.
Plomelin : 1. Person.
Tremeog : 1. Person.

Fouenan : 1. Person.
Ar Forest : 1. Kure.
Goueznah : 4. Peroned. Kureed.
Beuzeg-Konk : 1. Person.
Konkerne : 1. Kure.
Tregon : 2. Person. Kure.
Lokamant : 1. Person.
Brieg : 2. Person. Kure.
Plogonneg : 1. Kure, deuet war e her a-benn nebeud.
Gwengad : 2. Person. Kure.
Elliant : 1. Person.
Erge-Gaberig : 2. Person. Kure.
Kemper : 3. oh ober skol er hloerdi. 4. Oh ober skol er helenndi.

*

N'o-deus ket greet al le goulennet :
Lomaria-Kemper : 2. Person. Kure.
Erge Vihan : 2. Person. Kure.
Pennharz : 1. Person.
Kemper : 1. Rejant ar helenndi.
Kerfeunteun : 1. Kure.
Kombrid : 1. Kure.
Plobannaleg : 2. Person. Kure.
Loktudi : 2. Person. Kure.
Trefiagad : 1. Person.
Enez Tudi : 1. Kure.
Lambour : 1. Kure.
Plomeur : 2. Person. Kure.
Beuzeg kap-Kaval : 2. Person. Kure.
Plonivel : 1. Person.
Bodivid : 1. Person.
Pluguen : 2. Person. Kure.
Perged : 2. Person. Kure.
Beuzeg-Konk : 1. Kure.
Brieg : 1. Kure.
Langolenn : 1 Kure.
Landudal : 1. Kure.
Kilinenn : 1. Kure.
Landrevarzeg : 2. Person. Kure.
Elliant : 1. Kure.
Rosporden ÷ 1. Kure.
Saint-Yvi : 1. Kure.
Tourh : 1. Person.

*

District Kemperle

O-deus touet :

Sant-Mikaël Kemperle : 2. Person. Kure. 2. Meneh a Urz Sant Benead. 1. Priol e kouent
Sant Moris. 1. manah a Urz Sant Frañsez.

Kloharz-Karnoet : 1. Person 1. Kure. 1. beleg da zikour koves.

Moelan : 5. Person. Kureed. Beleien da zikour koves.

Rieg : 2. Person. Manah.

Nizon :1. Person.

Skaer : 2. Person. Kure : an aotrou-mañ 'oa deuet war e her a-barz pell.

Sant-Turien :2. Person. Kure.

Arzano :2. Person. Kure.

*

N'eo ket falvezet ganto toui :

Sant-Mikêl : 2. Aluzenner an ospital. Jezuist, aluzenner an Ursulinezed.

Sant Kolomban : 4. Person. Kure. Beleg da zikour koves. Jezuist.

Redene : 1. Person.

Saint-David : 2. Kureed.

Gwillgomarh : 1. Kure.

Tremeven : 2. Person. Kure.

Kerrien : 4. Kure. Beleien evid sikour koves.

Mellag : 2. Person. Kure.

Baye : 1. Person.

Lotea : 1. Person.

Kloharz-Karnoed : 1. Beleg da zikour koves.

Rieg : 3. Person ; Kure. Beleg da zikour koves.

Trevoux :2. Person. Kure.

Bannaleg : 1. Person.

Trebalay : 4. Kureed. Beleien kovesored.

Skaer : 3. Kure. Beleien da zikour koves.

Kernevel : 2. Kure. Beleg kovesour.

Melgven : 4. Person. Kure. Kovesour. Kure e Cadol.

Nizon : 2. Kure. Beleg kovesour.

Nevez : 3. Person. Kureed.

VIII

Lezenn ar seiz warn-ugent a viz Du hag ar gristenien

Bihan 'oa, hervez m'on-deus gwelet, an niver deuz ar veleien a doue sentidigez d'al lezennou nevez. C'hoant em-eus da lavared 'oa bihannoh c'hoaz niver an dud a droe ganto.

Rag d'ar mare-ze, ar feiz a oa kreñv en or bro. Ar gristenien a gave braz gweled beleien o plega hag o nah gwirioneziou hag o-doa prezeget, beteg neuze.

Pa'z eent d'an overenn, d'ar zul, m'oa galvet ar veleien da doui sentidigez, o halonou a veze enkrezet. N'eus douet ebed ez ee, en devez-se, pedennou birvidig war-zu ar baradoz evid goulenn digand Doue rei nerz ha kalon d'e veleien.

Deuet ar mare da vond er gador, an oll a jome sioul : klevet e vije eur gelienenn o voudal dre an iliz. An aon a vehje ar halonou. Mez ken aliez gwech ma lavare ar beleg na blege ket, na helle ket plega da lezennou fall ar gouarnamant, e torre war an enkreiz. An dud a zirolle da leñva, hag a-dreuz o daelou, gwech e strakent o daouarn, gwech all e savent en o zav hag e lavarent a vouez uhel : mad ! mad-tre ! er giz-se 'oa ober.

Ne deom ket da gaozeal diwar-benn ar pezh a zegoueze, 'gozig en oll parrezioù deuz on eskopti, d'ar mare-ze.

Mez e Plabenneg, e Ploueskad, e Plougerne e tremenas ker kaer an traou ma n'om ket evid mired da verka amañ ar pezh a zo skrivet e kaierou koz an teir barrez-se.

*

« Hirio, tregont a Henver 1791, a gemenne da zistrict Brest koñsaillerien munisipal Plabenneg, hirio, or person karet, an aotrou Jestin, a zo bet er gador. Eiz devez a zo, on-doa lavaret dezañ diwar-benn al lezenn a houlenn digand ar veleien toui sentidigez da lezennou ar houarnamant. Hag e pron an overenn-bred, en-deus lavaret 'oa deuet evitañ ar mare da rei da entent ar pezh a zoñje diwar-benn an traou a dremen en on amzer : ar veleien lakaet gand ar gouarnamant da choaz beza beleg paour pe beza beleg fall.

Or person fur en-deus greet, da genta, meuleudi kement tra a zo el lezenn hag a zo talvoudeg evid an dud diwar ar mêz. Kement tra, emezañ, a raio vad deoh, a raio, sur, plijadur din-me. Rei a rafen ar pezh am-eus evid mad ar vro. Mez ne hellan ket toui da zenti e-giz ma her goulenner diganen ha setu perag :

1° Eur wirionez a feiz eo, e tle ar Pab hag an eskibien gouarn an Iliz.

2° Eur wirionez a feiz eo en-deus Jezuz-Krist lavaret d'an Iliz ha nann da eur gouarnamant : ar pezh a liammfot war an douar a vo liammet en Neñv ;

3° Eur wirionez a feiz eo, ne hell beleg ebed kaoud e halloud nemed digand an Iliz ;

4° Eur wirionez a feiz, ivez, eo ez eo karget an eskibien hepken da varn petra 'zo mad ha petra 'zo fall evid gouarnamant an Iliz.

An oll draou-ze n'he-deus dalhet kont ebed anezo al lezenn greet gand an Assemblée nationale. Mond a rafen, eta, eneb va houstiañs, eneb va feiz, en eur doui teuler d'an traoñ ar gwirioneziou-ze. Nann. Nag ar sehed nag an naon, nag ar prizon ; nag ar baourentez, nag an dañjerou on war var da goueza enno, na hellint va lakaaf ober eul le hag a zo divennet ouzin. Oll va hureed a zoñje evel don war gement-se. »

« Or pastor a lavaras kement-se, ken frêz, ken sklêr ha deuz eur vouez ker birvidig, ma en-deus eur hoñsailler munisipal kredet lavared dezañ, a vouez uhel, n'oa hini ebed en on touez ha ne zoñje ket eveltañ. Ar goñsaillerien all o-deus lavaret ar memez tra. Ha raktal, e-touez an dud 'oa en overenn, meur a hini a zave en o zav evid lavared edo ar wirionez gand an Aotrou person.

« Neuze eo bet digoret an doriou hag eo bet pedet ar re a zoñje a hend-all da zevel da vond er-mêz. Ouspenn tri mil 'oam eno. Den ebed ne yeas kuit. An oll, amañ, a zoñj ne dleer ket plega d'al lezenn greet evid ar veleien ken na vo kavet mad gand ar Pab hag an Eskibien.

Goude an overenn, pa'z eo bet eet ar person d'ar sakreteri, eo bet niveruz an dud a zo eet da bokad dezañ abalamour e kave gweloh senti deuz mouez e goustiañs eged dastum e dammig pae en eur doui sentidigez d'eul lezenn fall. »

*

E Ploueskad e tremnas ker kaer all an traou. Ar mêt a skrive da zistrict Lezneven d'ar seiz a viz C'hwevrer 1791 : « Hirio an aotrou Puyferré a zo bet, er gador, ha goude beza diskouezet eo al lezenn diwar-benn an Iliz eul lezenn eneb ar feiz, en-deus lavaret : « Nann, biken morse ne rin al le da blega dezi. Al le-ze a ve eneb ar Relijion.

Gouzoud a ran, pa nahan toui e hellan beza kaset kuit. Mez gouezit ervad, an hini a deuio war va lerh n'en-devezo galloud ebed war hoh enenou. Rag-se, ma ve lamet va iliz diganen, me a yelo d'ho tiez, me a govesaio hag a overenno enno... »

Hag ouz e glevet, ar merhed oll a leñve. Meur a waz, ivez, a leñve forz hag a hirvoude.

*

Mez kaerra ma'z oa bet e neb leh d'ar mare-ze, 'oa e Plougerne.

Eno 'oa person an aotrou de Poulpiquet. Galvet da doui sentidigez d'al lezenn, ez eas d'an ti-kêr gand e dri gure. Lenn a reas eur paper war an hini²⁴ 'oa skrivet gantañ ar homzou-mañ : « Aotrounez, ar pez on-deus da lavared, hirio, dirazoh, n'eo ket eur froudenn, savet en or penn evel eun taol avel. Mez eun dra eo pouezet mad gand peb unan ahanom : ennañ on-deus soñjet pell 'zo.

Ne vevom mui nemed e-kreiz an anken. Bemdez e teu beteg ennom keleier fall. Gouarnamant or bro a garfe, siwaz ! lakaad an dorn war an Aotrou Doue ha war e veleien.

Evet on-deus e kuz, beteg henn, an dour a skuille bemdez on daoulagad. Mez, hirio e leñvom dirazoh. Euruz-braz e vefem o weled ho taelou oh en em veska gand on re. Rag kement-se a ziskouezfe e talhit atao, stard, da feiz on tadou-koz.

Ar gouarnamant en-deus greet eul lezenn evid distaga Iliz Bro-Hall deuz Iliz Rom, beleien or bro deuz an Tad santel ar Pab. Goulenn a ra ma toufem sentidigez d'al lezenn-ze, a-zindan boan da goll or parrez.

« C'hwi, Aotrounez, a vezo an testou, deuz al le a room amañ, hirio. Toui a reom senti, bepred, ouz lezenn an Iliz, ouz bolontez on Tad santel ar Pab. Ne blegfom morse e-barz ar pri, da zastum peadra da veva. Kentoh mervel eged saotri on ene en eur zenti deuz eul lezenn fall.

« Kerkoulz, ma vije bet deuet an ebestel, gwechall, da blega da lezennou fall an Impalaered, petra 'vije bet deuet, a gav deoh, ar relijion da veza ? Evel an Ebestel, biken morse, ne blegfom d'eul lezenn fall. Kaset e vezom kuit deuz Plougerne. Mez dalhit soñj mad mar deu ar gouarnamant, en e ano, da zegas deoh eur beleg bennag en on leh, ar beleg-se a vo eur beleg fall. Arabad e vo deoh, morse, selaou anezañ. »

O klevet o ferson, koñsaillerien Plougerne a deue bihan o halon.

An aotrou de Poulpiquet a lezas etre o daouarn ar paper en-doa lennet. Ha, raktal, foug enno, gand o beleien, e skrivont d'ar re 'oa e penn an district e Lezneven ar homzou-mañ : « Klevet on-deus or beleien. Kas a reom deoh ar paper o-deus lennet dirazom en ti-kêr. E Bro-Hall, hervez o-deus lavaret, diagent, ar re a zo deuz or gouarn, e heller heuill ar relijion a garer. Abalamour da ze, e kavom dizoare, forsi or beleien da blega d'al lezenn greet gand ar

²⁴ war an hini : war behini, er skrid orin.

gouarnamant evid distaga anezo deuz ar Pab. Frankiz da beb den d'ober evel a garo. Evidom, ni a gar or beleien hag a zalho dezo. »

*

D'ar zul war-lerh 'oa lennet e pron an overenn-bred lizer ar goñsailerien hag ar paper edo warnañ ar homzou lavaret dirag ar goñsailerien gand an Aotrou person.

An oll a leñve o kleved : strakal a reent o daouarn hag e lavarent a-dreuz o daelou : mad ! mad-tre ! Er giz-se e oa ober.

IX

Al lezenn evid lemel o farrez digand ar veleien ha n'o-doa ket touet. Ar henta eleksion evid choaz beleien iñtru. Eskob Kastell o tehed da Vro-Zaoz.

*

Koulskoude, an Assemblée nationale a gendalhe da lakaad an traou da vond, atao, war ar memez tu. Gweled ar gristenien dre-oll, o sevel gand ar veleien na blegent ket, na ziarbennas tamm anezi.

D'ar c'hweh warn-ugent a viz Genver, eur hannad, Chasset a reed anezañ, a houlenas eul lezenn evid dibarrez ar re na douent ket. Al lezenn-ze 'oa greet diohtu.

Evelkent, al lezenn-ze a lavare e helle ar veleien n'o-doa ket touet chom en o farreziou beteg ma vije anvet en o leh beleien all. Mez goude, avad, o farrez 'oa d'ar veleien-ze. Hag ar veleien vad, ma felle dezo chom er barrez, ne hellent mui na koves an dud, nag ober badiziant ne netra all, nemed overenna.

Red 'oa, eta, eñvel beleien touerien er parreziou. Departamant ar Finistère ne ouie ket kalz dre beseurt penn staga d'al labour-ze. Aon en-doa, da genta.

Pelloh, koulskoude, elektourien district Landerne 'oa pedet d'en em voda evid rei eur person da barrez Sizun hag eun all da barrez Loperhed. Eun êsa n'oa ken. Edod war-hed deuz trouz. Hag abalamour da ze, 'oa degaset evid an devez-se daou-hant soudard deuz Brest da Landerne.

Mez, brao a-walh e tremenas an traou. Ha goude ar votadeg, ar Procureur syndic a skrivas d'an Departamant :

« D'ar seiz warn-ugent a viz C'hwevrer on-deus choazet ar bersoned evid parrez Sizun hag hini Loperhed. An aotrou Le Roux, kure Lambezelleg, a zo anvet e Sizun, hag an Tad Aelxis Rannou, manah a urz Sant-Frañsez, a zo anvet e Loperhed. An aotrou Le Roux, kure Lambezelleg, a ya da Zizun da zerhel leh an Aotrou Floc'h hag en-doa her haset kuit ahann, gwechall. Hag an hini a zo lakaet da berson e Loperhed a zo bet beteg-henn eur manah paour. Ra vo, eta, benniget Doue deuz al lezennou mad en-deus lakaet ober evid or bro. »

Goude ar votadeg-se, ne oa anvet beleg ebed mui er parreziou beteg ma oa deuet Expilly da Gemper.

Mez diwar neuze, avad, e reer eleksionou dre an oll distrigou. Kerkoulz brao 'oa, red 'oa zoken d'an eskob, kaoud beleien deuz ar memez danvez gantañ.

*

Da fin miz Meurz, district Brest a skrive da Gemper : « An enor am-eus da gas deoh ano ar veleien a zo bet anvet er parreziou d'an drizeg, pevarzeg ha pemzeg deuz ar miz-mañ. N'eus bet trouz na freuz ebed. Mez e-touez ar re 'zo anvet, pemp n'o-deus lavaret na ya na nann, daou a zo bet anvet, dija, gand district Landerne ha tri o-deus lavaret nann. Kerkoulz setu amañ o anoiou :

Notenn gand "Embann an Hirwaz" : Ne dalv ket ar boan lakaad an anoiou-ze. Lakaet on-eus eun X en o flas.

Canton Brest : - Sant-Louis : X ; Rekourañs : an aotrou X ; Lambezelleg : X ; Gwiler : X ; Kerber : X.

Canton Gipavaz : - Gwipavaz : X ; ar Forest : X ; Kerzent-Plabenneg : eno n'eus anvet den : hounnez a zo eur barrez da staga deuz eur barrez all.

Canton Lanniliz : - Lanniliz, X, anvet ivez e Landerne ; di ez a ; Plouvian : X, n'en-deus lavaret na ya na nann ; Landeda : X, n'en-deus lavaret na ya na nann ; X, da staga deuz eur barrez all.

Canton Gwitalmeze : - Gwitalmeze : X ; Lambaol-Gwitalmeze : da staga deuz eur barrez all ; Landunvez : X ; Plougin : X ; Treglonou : da staga deuz eur barrez all.

Canton Brelez : Plourin : X ; Lanildud : X : n'en-deus lavaret na ya na nann. Porposder : X : n'en-deus lavaret na ya na nann. Larret : da staga deuz eur barrez all. Plouarzel : X ; Lambaol-Plouarzel : da staga deuz eur barrez all.

Canton Konk : Plougonvelin : X, anvet ivez e Plouvorn : di ez a. Sant-Vaze : da staga deuz eur barrez all. Molenez : X, eñ, en-deus lavaret "nann". Trébabu : X : eñ en-deus lavaret "nann". Eusa : X : n'en-deus lavaret na ya na nann.

Canton Lokournan : X. Milizag : X (an niz) ; Lanrivoare : X : n'en-deus lavaret na ya na nann ; Koadmeal : da staga deuz eur barrez all ; Treouergad : X : eñ en-deus lavaret nann.

Canton Plouzane : X ; Ploumoger : X.

*

Prouteur-syndic Landerne a skrive deuz e gostez d'an Departamant : « Lakaet am-eus ober an eleksionou, d'ar bemp warn-ugent deuz ar miz-mañ. N'oa ket ar zul. Mez an elektourien 'oa o tond euz Brest. Al lezenn a verk ober an eleksionou, da zul goude an overenn-bred, en iliz. Mez da houel Maria Veurz 'oa overenn ivez, ha kalz tud enni. Ha neuze, ma 'm-bije gortozet beteg ar zul, ne vije deuet den da voti. Rag ar beizanted a zo skuiz o tond, evid netra, da rei o mouez er votadeg. Dija e vanke an drederenn. Setu amañ evelkent al labour on-deus greet.

Landerne : X, kure e Sant-Julian, bet anvet ivez person e Lanniliz.

Gwikourvest : An Tad X, bet anvet dija e Loperhed.

Roznoen : X, kure Ar Faou.

Plouziri : X, kure Pon-Krist.

Hañveg : Eno e zo²⁵ bet anvet tri : da genta X, kure en Ospital-Kamfroud : da houde : X, kure Logonna-Kimerh, hag evid echui an Tad X, manah deuz a urz Sant-Frañsez e Lezneven.

Plougastell\ X, kure Fouenan.

Irvillag : X, person Kermeneven.

Kommanna : X, kure Sant-Tonan.

Gwimilio : X, kure Sizun.

Plouvorn : X, aluzenner an ospital e Landerne., bet anvet diaraog person e Plougonvelen.

Loperhed : X, kure Leuhan.

*

E Kemper, an eleksionou 'oa greet d'ar seiz warn-ugent a Veurz. An elektourien, tregont hag unan anezo, a oa en em vodet er gatedral, e chapel Itron Varia ar Viktoriou. Bep tro ma teuent a-benn da envel eur person e lakaent bralla ar hleier.

Heñvel e reont

en Erge-Gebrig : X, kure Kerfeunteun.

en Tregon : X, manah a urz Sant Bernard.

en Brieg : X beleg deuz Fouenan.

en Kombrid : X.

²⁵ e zo : ez eus

en Beuzeg-Kap-Sizun : e-leh an aotrou Y, en-doa touetda genta, mez 'oa abaoe war e her, X, kure Evarzeg.

en Pluguenn :X, person Pennharz.

Mez ar hleier 'oa c'hoaz o son pa zegouezas gand an elektourien daou lizer, digand an aotrou Ollivier hag egile digand an aotrou Harscoet. O-daou e nahent mond d'ar parrezioù ma oant anvet.

Eun nebeud devezioù goude, an aotrou Guilleroux a skrive ivez : « Dirag va farrezioniz em-eus lavaret ar heuz 'm-oa da veza touet sentidigez da lezennou ar gouarnamant. E koustiañs, ne heller tamm plega d'al lezennou-ze. »

*

D'an eunneg a viz Kerdu 'oa eleksionou adarre.

Le Breton, person Tregon 'oa anvet e Pont 'n Abad. En e leh 'oa lakaet an aotrou Denmad, person Tremeog. X, manah a urz Sabt Frañsez 'oa kaset da Blomeur ; Y, kure Fouenan, da Blobannaleg ; Z da Erge-Armel ; A da vanah a urz Sant Brenard, da Bennharz ; B, kure Kerfeunteun, 'oa anvet e Gwengad ha C, kure Douarnenez, e Plogonneg.

Eur miz bennag goude 'oa red komañs en-dro. Auffret ha Bouguillo a ro o dilez. Daou a oa maro. Trevidig, kure Gouliou, 'oa anvet e Pennhorz. Saouzanet, rejant²⁶ er helenndi, 'oa anvet person e Fouenan. Hag an aotrou Bigeon, manah a urz Sant Nenead, 'oa anvet en Erge-Gaberig.

Mez an aotrounez Bigeon ha Trevidig ne gemerfont ket ar parrezioù 'oa kinniget dezo. An aotrou Laouelle a roas e zilez deuz Plomeur. Ha da viz Mae 'oa anvet en Erge-Gaberig : Doatmen, kure Kemeneven ; e Plomeur : Nicolas Loedou hag en-doa touet a-nevez goude beza bet en em zislavaret ; e Pennharz : an aotrou Lagadeg, kure Plomelin.

*

E Kemperle, an eleksionou 'oa greet d'an dri, pevar, pemp a viz Ebrel 1791. Anvet 'oa : E Kemperle : Sant-Kolomban : an aotrou Thomas Bizien, kure e Sant-Mikeal, Rieg ; an aotrou Thomas-Marie Divalan, kure Moelan ; e Bannaleg, an aotrou Poyet, rejant e kelenndi Kemper ; e Melgven, an aotrou Etienn Perrot, kure e Moelan.

Deuz ar pevar-ze, unan hepken, a gemeras e barrez.

D'ar bemp a viz Ebrel 'oa red ober eleksionou en-dro. An aotrou Guillou, beleg e Kloharz_Karnoed, a oa anvet e Rieg hag a lavaras ya. An aotrou Vistorte, kure Plogonneg, 'oa anvet e Bannaleg. Mez hemañ, goude beza bet touet, 'oa deuet war e her hag a lavaras nann, na petra 'ta ! Conan, kure Sant Thurien, a oa anvet e Melgven. Mez lavared a reas ne daje ket d'ar barrez-se, keit ha ma vije beo ar person a oa eno. En e leh, 'oa anvet an aotrou Cloarec, kure Skaer. Mez hemañ, goude beza touet, a deuas war e her.

*

E Montroulez, ar henta eleksionou evdi choaz personed 'oa greet d'an driweh a viz Ebrel. E Montroulez, eh en em gave evel el leh all. Ouspenn eur wech 'oa red staga ganti a-raog dond a-benn da gas eur person en eur barrez.

E miz Du 'oa bet goulennet lakaad personed e Gwimaeg, Roskov, Enez-Vaz, Plougoulm ha Gwiklan. Mez n'oa kavet beleg touer ebed hag 'oa red lezel e peoh ar veleien vad 'oa er parrezioù-ze.

²⁶ rejant : régeant, e galleg.

Ar re 'oa bet anvet e miz Ebrel n'oant ket eet d'ar parrezioù 'oa kinniget dezo.

E komañsamant miz Kerdu 'pa anvet e Gwiklan : an Aotrou A ; e Plouneour-Menez : an aotrou B ; e Plougoulm, an aotrou C ; e Roskov, an aotrou D ; en Enez-Vaz, an aotrou E ; e Gwerliskin, an aotrou F.

Deuz ar pemp-se, an aotrou B hepken, a gemeras e barrez.

*

E district Lezneven 'oa startoh an traou. Daoust 'oa miz Ebrel 1792 ha ne oa c'hoaz gelllet nemed lakaad daou veleg touer er horn-douar-ze : Kerniliz ha Plougerne.

D'ar bevar warn-ugent a viz Ebrel 1792 district Lezneven a skrivas d'an Departamant : « An elektourien, evid envel personed, a zo bet en em vodet en iliz Sant-Mikeal, e Lezneven. Anvet o-deus da berson :

E Lezneven : e-leh an aotrou Coat, Bizien, person Kernouez. Mez an aotrou Bizien, goude beza touet, a zo deuet war e her ; e Plougerne : an aotrou Gall ; e Kerniliz : an aotrou Rosiliau ; e Plouneour-Trêz : eo bet kinniget ar barrez d'an aotrou Perrot, person, mez n'eo ket falvezet gantañ toui ; gand an aotrou Picard, person Plouider, eo c'hoarvezet ar memez tro ; an aotrou Mevel, kure Bodiliz, a zo bet anvet e Plounevez, mez n'eo ket falvezet gantañ mond d'ar barrez-se, na toui ; Kleder a zo bet lezet gand an aotrou Laurent, ar person koz. Hennez kennebeud hag e gureed, n'o-deus ket touet. Mez red eo o lezel en o farrez, n'eus ket a veleien all. An aotrou Abgrall, manah a urz Sant-Frañsez, a zo bet anvet e Gwiniventer. Mez n'eo ket falvezet gantañ mond di... N'on-deus ket, amañ, a veleien deuz on dorn, ha rag-se eo red deom lezel en o farrezioù ar veleien goz. »

Mez an Departamant en-doa disfiziañs deuz konsaillerien Lezneven. Abalamour da ze e tegasas unan deuz konsaillerien an Departamant, an aotrou Henri Kermenguy, da ober an eleksionou.

Goude poania a-walh, e oa anvet e Lezneven : X, kure Sizun ; e Plouider, Y, kure Plougerne ; e Plounevez : Z, kure Milizag ; en Dreñeg : A, kure Kemperle ; e Gwiseni : B, kure Sant-Mark ; e Sant-Fregan : C, kure Plourin, e Plouneor-Trêz : D, kure Lambezellig, e Kleder, E, kure Boharz ; e Plouzevede : F, manah a urz Sant-Frañsez ; e Lanhouarne, G, aluzenner an ospital e Brest ; e Gwiniventer, H, kure Kastell ; e Plougar, I, kure Landerne.

Mez hini ebed deuz ar re-ze n'en-doa ket ouspenn pemp mouez war bemp ha tregont. An departamant a dorras an eleksionou. Ha d'an dregont a viz Kerdu an elektourien a en em vodas, c'hoaz, en iliz Sant-Mikeal, e Lezneven. En dro-ze 'oa anvet :

En Dreñeg : X, kure Kemperle ; e Plougar : Y, kure Treflez ; e Plounerour-Trêz : Z, kure Goulhen ; e Plounevez : A, person Plougerne ; e Gwineventenn : B kure Lambaol-Gwimilio ; e Gwiteverde : C, kure Lanniliz ; e Sant-Fregant, D, kure Plougin ; e Plougerne, E, kure an Dreñeg.

Ar veleien vad a veze dibarrezet dre ma veze kavet beleien touerien da gemered o leh.

*

Da heul ar veleien vad 'oa soñjet kas kuit ivez an aotrou de la Marche, eskob Kastell.

Da viz C'hwevrer 1791, procureur syndic jeneral an Departamant en-doa skrivet da Bariz evid lavared e lakae eskob Kastell freuz er Finistère.

Lavaret en-deus, dija, peseurt bazad a bokas district Montroulez, pa gasas dezañ al lezenn eneb an Iliz.

District Brest, 'oa karget, neuze, da rei dezañ da anaoud al lezenn-ze. Ha tra iskiz da zoñjal, an aotrou Laligne, kure Sant-Louis Brest, a yeas da Gastell asamblez gand eun nebeud re all, evid kement-se. Pebez kevridi evid eur mab !

An aotrou de la Marche 'oa ganet e maner Lerzerge en Erge-Gaberig. Da genta 'oa bet soudard. Kabiten 'oa. Mez en eur gwall grogad, e Plaisance, e oa lazet e oll zoudarded. Neuze e taolas e zabrenn hag ez eas d'ar seminer. Eskob 'oa, pa zaillas ar Revolusion. Kaloneg e tivenne, atao, gwiriou an Iliz.

Da fin miz C'hwevrer, archerien a deuas, deuz Montroulez da Gastell evid kerhed anezañ.

Mez, dre hras Doue, an aotrou de la Fruglaie deuz Plouyan, en-doa klevet ano deuz ar gevridi o-doa an archerien da ober. Kemenn a reas da eskob Kastell evid lavared dezañ beza war evez.

Kastelliz, pa glevjont 'oa ano da lamad o eskob diganto, a yeas nêt diwar o zreid. Mond a reont da gaoud an aotrou de la Marche hag e lavaront dezañ arabad kemer aon : ni, emezo, a stourmo beteg ar maro evid divenn ahanoh.

Euruz-braz 'oa an eskob o weled kemend a garantez. Mez aon en-doa da weled skuill gwad e vignoned. E-pad an noz e tehas deuz e balez hag ez eas da guzad da di an itron du Laz, ha goude-ze da vaner ar Gernevez hag 'oa ennañ o chom d'ar mare-ze an aotrou de Coat-Lez.

Eiz devez goude, an aotrounez de Kermenguy ha de Kertanguy a skoe, e-pad an noz, war dor maner ar Gernevez. Lavared a rejont d'an aotrou de la Marche o-doa kavet eur vag evid hen dougen da Vro-Zaoz.

An Eskob ne jomas ket da varhata. Gweled a ree ar gorventenn o sevel hag o c'hweza gwasoh-gwaz. Abred pe ziwezad e vije bet diskuliet moarvad ; aon en-doa, dreist-oll, da nozoud d'e vadoberourien. Abalamour da ze, e tehas kuit, en nozvez-se, dre zor ar jardin hag e tiskennas war an aod. Mond a reas beteg chapel Santez-Barba. Eno, dirag ar chapel, war ar mor, 'oa eur vag stignet he goueliou o vond da werza eau-de-vie da Vro-Zaoz. Eskob Kastell a en em lakaas e-touez ar barrikennou. Doue a vleinas ar vag. D'an deiz war-lerh, en despet d'an avel, e stokas ouz douar Bro-Zaoz.

*

X

Expilly, oh êsa kaoud beleien da lakaad e pep parrez. – Penaoz « oa degemeret ar veleien o-doa touet gand an dud fidel. – O zrubuillou er parreziou.

Hervez ar pez on-deus gwelet, al lezenn greet evid envel ar bersoned dre eleksionou, ne dee koulz lavared da zen.

Ne dee ket d'an elektourien. Ar re-ze 'oa peizanted, labourerien-douar, peurliesas, ha n'o-doa ket amzer da goll evid mond ken aliez da voti ; ne dee ket d'an dud fidel, rag e meur a barrez e ranked chom pell, a-wechou, hep kaoud beleg ebed. Ne dee ket, atao, d'ar veleien touerien o-unan ; gwelet on-deus, lod anezo ne falveze ganto, tamm, mond d'ar barrez hag e vezent lakaet da berson enni.

Kerkoulz, aliez a-walh e vanke beleien. En eskopti Leon n'oa bet nemed seiteg o toui deuz ar veleien 'oa er parreziou. Penaoz, gand an dra-ze, kaoud beleien da lakaad e peb leh ?

Gwir 'oa, Expilly a halvas da vond war e zikour kement beleg a hellfe da gaoud. Dre an eskopti ez oa hiniennou bet dibarrezet gwechall ; beza ez oa ivez eur manah bennag bet taolet kuit deuz e gouent. Expilly a zastumas anezo oll, pisa ma helle, hag o lakaas da gure pe da berson dre ar parreziou.

A-hend-all, eh en em lakaas da ober beleien. Hag e hellit kredi n'oa ket figuz war an danvez. Abalamour da ze n'oa ket souez ma tegoueze dre an eskopti a bep seurt skweriou fall. Beleien Expilly a deue eun tammig muioh, bemdez, da gaillara o zoutanenn. D'o heul dre ar parreziou, ne veze morse, nemed an dud a nebeuta kristen, an dud a vuhez fall.

Kerkoulz, ar veleien vad o-doa kelennet o farrezioniz. Lavaret o-doa dezo ne hellent mond da heul ar beleg touer heb nah o feiz ha paouez da veza katolik. Hag evid lakaad ar wirionez-

se da vond, gwelloc'h, en o fenn, o-doa greet soniou ha gwerziou hag a veze kanet, deuz an eil tu d'egile en Eskopti.

Setu amañ unan deuz ar gwerziou-ze. Kavet eo bet e ti eur plah yaouank, anvet Marie Coublanc, deuz Douarnenez. Ar plah yaouank-se a yee d'he hana, a-wechou, e kêr hag er parreziou tro-war-dro.

Ma breudeur ger, ar Frañsizien
Setu c'hwi oll da virviken
Prizet euz a bep seurt avantaj
Evid beza en esklavaj.

Tud temerer hag imprudent,
Servicherien d'an êrouant
A werz, hirio, an ilizou
Hag a zispenn an aoteriou.

Pevar eskob touerien
Ha ganto meur a veleien²⁷
Heb feiz, nag enor, na rezon,
A drahis²⁸ ar relijion.

An darn-vrasa euz ar veleien
Eeun en o relijion gristen
E-leh ober al le kriminel
A zo bet d'an Iliz fidel.

Klevet hoh-eus, heb mar ebed
O-deus tregont eskob skrivet
Da goñsulti an Tad Santel,
Ar Pab, deuz a Jezuz vikel.

Ar Pab, gand or Zalver lakaet
Ar henta euz ar bastored,
Euz an Iliz ar penn vizibl
Deuz or maleuriou sañsibl.

E Rom, ugent deuz ar Gardinaled
O veza ganto asamblet
O-deus egzaminet piz
Koñstition an Iliz.

N'o-deus remerket enni
Nemed traou kontrol d'ar feiz,
Nemed pep seurt er roliou
Gouest da goll an eneou.

Gourdrouz a zo sur punisa
Ar re a refuz en em renta

²⁷ meur a veleien : fazi : meur a veleg.

²⁸ A drahis : galleg. a drubard.

Da zislavared o zermant
Hag, hebdale, publikamant.

Daou-ugent deiz eo an termen
Akordet d'an oll touerien
Ha goude-ze heb gras ebed
E vezint oll ekskomuniet.

Resevet o-deus o fartaj,
Kollet o-deus o heritaj.
Gwechall, ministred Jezuz-Krist
Hirio ez int d'an Antekrist.

Iliz Doue n'o anav mui
Evid pastored, mez bleizi
Pere²⁹ dre ardou kriminel
A fell daoni ar bobl fidel.

Laket evez, ma breudeur kêz,
Mar kirit ho silvidigez.
Diwallit eta piz oute.
Pe sur e kollint hoh Ene.

Maleur deoh mar heuillfet
Ar veleien milliget,
Mar asistet en ofisou
Ha memez an overennou.

Chomet kentoh heb overenn,
Heb koñfesi gand touerien,
Rag koñvers gand tud kriminel
A ve, serten, pehed marvel³⁰.

*

Goude kement-se oll, n'eo ket diêz kompren, ne felle tamm d'ar gristenien kaoud beleien touerien. Enebi a reent ar pezh a hellfent evid na vije tronet beleg fall ebed en o iliz parrez. Ha pa ne hellent ket mired euz ar seurt beleien-ze da zond en o zouez, ne deent morse war e dro. Aliez a-walh, zoken, e reent brezel dezañ.

Kerkoulz, setu amañ e-keñver kement-se, penaoz e tremenas an traou etre parrezioù Leon ha Kerne.

E Plabenneg, evel on-deus lavaret, 'oa person an aotrou Jestin. Mez d'ar zeiteg a viz C'hwevrer 1791, 'oa bet kaset d'ar prizon war digarez ma en-doa lavaret traou eneb al lezenn greet gand ar houarnamant, evid ar pezh a zell euz an Iliz.

En e leh 'oa lakaet eur beleg touer.

Koñsaillerien ar barrez ne falvezas ganto biken rei degemer dezañ. – « Da ober petra ?, emezo. An aotrou Jestin a garom. Ne fell deom kaoud person all ebed. »

²⁹ Pere : Ar re.

³⁰ A ve, serten, pehed marvel : iskiz-kenañ eo brezoneg ar skrid-se.

Koulskoude, district Brest a lavare e vije tronet, kousto pe gousto, person iñtru Plabenneg d'ar zul kenta a viz C'hwevrer.

Setu d'an deiz-se, tri-ugent soudard o tegouezoud er bourk, gand ar beleg fall. Den ne yeas d'o diambroug, na koñsaillerien an ti-kêr, na re all.

En eur zegouezoud ez eont war-eeun d'an iliz. Eno eur beleg 'oa o lavared an overenn. En iliz 'oa tud e-leiz. Hag en-dro d'an aoter tregont gwaz euz ar re greñva, e tafont da zivenn ma vije red, ar beleg oh overenna.

O weled kement-se ar zoudarded hag o beleg en em dennas ker lostog ha tra.

Evelkent, a-raog kuitaad ar bourk, e torrjont koñsaillerien an ti-kêr deuz o harg. En o leh e lakajont re all hag a reas ar bromesa da droni ar person nevez, d'ar zul war-lerh. Mez sevel a reas buan keuz ganto, ha pell a-raog ar zul, ar hoñsaill nevez a roas an dilez euz ar garg endoa kemeret.

Paotred district Brest a deuas neuze war-zu Plabenneg gand daou bez kanol ha pemp-kant soudard. Plabennegiz a oa oll er bourk. Kalz 'oa fuzillou ganto hag a venne staga da zoudarded ar Republik. Mez ar re-mañ a lezas, a-ziabell, daou denn kanol. O weled hag o kleved kement-se, tud kaloneg Plabenneg a ententas ne vijent morse treh ma vije emgann. Plega a rajont. Hag en devez-se, e Plabenneg 'oa tronet ar person iñtru.

Mez siwaz dezañ ! Mezaon n'oa ket e vuhez eun ebat. Rag d'ar c'hwezeg a viz Mae e skrive da Vrest evid lavared dond war e zikour. War digarez ober prosesionou, e barrezioniz, a lavare, 'oa en em revoltet hag o-doa lakaet da zével ganto tud Plouvian, Gwipavaz, Lomaze hag an Drenerg.

*

Ar Gall, kure Gwinevez, 'oa d'an deg a viz Ebrel anvet da berson e Plougerne.

Skriva 'reas d'ar mêr evid merka dezañ e vije tronet d'an unneg a viz Mae. Hag evid an dra-ze her pede da gaoud ar vadelez da zond gand ar hoñsaill munisipal, d'an overenn, en deiz-se.

Koñsaillerien Plougerne a ziskrivas dezañ diohtu ne dajent morse da overenn eur beleg touer. « Kerkoulz, e lavarent, troni eur person en e barrez n'ema tamm ebed en or harg. »

O kaoud ar respont-se, ar Gall 'oa lakaet nehet maro. Mond a reas da gaoud ar re a oa e penn an district e Lezneven.

An district a hourhemennas d'ar goñsaillerien troni ar person, d'ar zul war-lerh. Ha d'an devez merket, ar Gall a ya gand e gamaraded deuz Lezneven da Blougerne.

Pa zegouezjont er bourk, 'oa eno tud e-leiz. An oll a gomañsas ober hu war ar beleg fall. Mez ar mestr hag e goñsaillerien a reas chom peoh.

Ar Gall hag ar re 'oa gantañ a ziskennas en ostaliri. Kerkoulz ti all ebed, moarvad, ne vije bet digoret dezo. War-dro deg eur, ez eont d'an iliz. N'oa den enni. Ar Gall e-unan a grogas e kordenn ar hloh evid ober son-galv. Kaer en-doa, den ne deue war e dro. Ha goude beza gortozet eur pennad mad, e teuas, heb beza lavaret e overenn, da leina d'an ostaliri. Hag an oll a lavare : « Ar Gall, daoust dezañ da veza beleg, n'en-deus ket overenn ebed, hirio, hag ar zul anezi. »

An traou, evelkent, ne hellent chom er stad-ze. Pennou braz district Lezneven a gasas da Blougerne daou deuz o ferz da lakaad voti evid choaz eur person. Oll "sitoayaned actifs" ar barrez a zegouezas e chapel Itron Varia ar Vali, d'ar yaou, naonteg a viz Mae. Votet e oa. Hag an aotrou de Poulpiquet, ar person koz, en-doa an oll voueziou nemed unan.

O weled kement-se, ar Gall a gemeras aon. Skriva 'reas da zistrict Brest. E Plougerne, e zo³¹, emezañ, c'hweh mil den en em zavet a-eneb din. Ne glaskont nemed va laza.

³¹ e zo : ez eus.

District Brest a gemennas da Gemper. Ha raktal, 'oa degaset da Blougerne daouzeg-kant soudard hag eur pezh kanol.

Ar zoudarded-ze 'oa eur rivin hag eur skwer fall evid oll tiegeziou ar barrez. Kement a reent da zebri ha da eva heb goulenn an diskenn. Laza 'reent d'ober friko an anevaled a blije dezo. Skei a reent gand ar gwazed ha gwella 'reent gand ar merhed. Pa deuas ar zul, e treinjont, en despet dezo, ar goñsaillerien ha tud all d'an iliz. Hag er giz-se, goude poan a-walh, 'oa, pelloh, lakaet ar Gall da berson e Plougerne.

Mez ar goñsaillerien ne fellas dezo, morse, lakaad e ano war gaiserou an iliz, evid kaoud mad ar pezh a oa greet.

District Lezneven a reas o dastum oll hag o zeuler er prizon. Eiz devez 'oant dalhet ennañ. Bemdez, ar Gall a yee da houlen diganto sina evid anaoud anezañ da berson e Plougerne. « Morse, a lavarent, bep tro, gwelloc'h e ve ganeom mervel. »

Ar Gall kêz n'en-doa morse kalz a blijadur en e barrez nevez. Rag eur bloaz bennag, goude, e skrive d'ar re a oa e penn an district e Brest al lizer-mañ : « Gouzañvet em-eus beteg-henn, gand pasianted, an traou a zo bet greet a-eneb din hag eneb va herent. Va zad hag en-deus pemzeg vloaz ha tri-ugent, en-deus bet bahadou. Va hoar ha va mitizien a zo bet heskinet, meur a wech. Ouzin-me 'zo³² bet taolet mein. Eur wech, zoken, pa oan ouz an aoter, oh overenna, ar re a deue d'an iliz da glevet an overenn o-deus paket taoliou. D'an oll draouze, ne respontis ket. Aon em-oa ma vijen deuet d'en em goleri, ne vijen ket bet treh d'am imor.

Mez abalamour ma'z on bet habask evel-se, ar veleien all a zo deuet d'en em hardisaad. Koves, badezi ha prezeg zoken a reont heb goulenn. tamm va aotre. N'eo ket gerne³³. Ne hellan ober badiziant nag eured ebed. Ar gwraez evid gelloud lakaad badezi o bugale gand beleien all a ya da Dremenah pa vezont war ar mare da lakaad eur hrouadur er bed... »

*

E Lanrivoare, ar Prigent 'oa anvet da berson. D'an driweh a viz Mae, e teuas en e barrez. Mez ar goñsaillerien munisipal ne dajent, morse, war e dro. Hag e oa red degas, d'ar zul war-lerh, prokureur district Lokronan evid troni anezañ.

E Gwipavaz, an aotrou Perrot 'oa bet anvet, da genta. Mez buan e teuas war e her goude beza touet. Mond a reas kuit. War e lerh 'oa deuet unan hag a reed Launay anezañ. Deuet d'ar c'hweh a viz Even 1792, eh en em glemme d'an district en eur lavared ne vije ket roet dezañ dillad da overenna ha, pa vije prosesion, ne gave den da zougen ar hroaziou.

E Plougin ar person iñtru 'oa Bazil. Skriva'reas da Vrest evid lavared ar brezel a vije greet dezañ ha d'ar re a yee d'e heul. Mein a vije taolet outo hag ar chas a vije iset war o lerh.

*

E Plouzane, an iñtru, Morvan, en-doa, eur zulvez, divennet ouz beleien vad ar barrez ober labour ebed, na koves, na rei ar gomunion, na gweled ar re glañv.

Raktal, goude an overenn-bred, en deiz-se, diohtu, d'an tregont a viz Here, ar mêr a halvas an dud en-dro d'eur groaz 'oa e-kreiz ar vered. Eno e lavaras : « Ar re a fell dezo e kendalhfe da ober amañ, an aotrounez Jezequel, kure Lomaria, L'Abbé, kure Plouzane, Le Hir ha Gouchet, beleien, ar pezh a reent a-raog, da lavared eo e kendalfent da goves, da rei argomunion, da weled ar re glañv ha da zarmon, n'o-deus ken nemed mond aze, e kostez an iliz. » Kerkent an oll a yeas er hostez-se.

³² 'zo : ez eus

³³ gerne : ?

Ar mêt a lavaras goude : « Mar deus unan bennag hag a fell dezañ, ne rafent, amañ, mui netra deuz ar pezh a reent diagent, n'en-deus ken nemed mond e kostez moger ar vered. » Den ne yeas.

Ha raktal, 'oa kaset eul lizer da zistrict Brest evid lavared dezañ ar pezh 'oa degouezet. Al lizer-ze a zo warnañ c'hweh kant ano.

An aotrou Morvan a jomas e Plouzane. Ne helle, zoken, ober interamant ebed. Bugale Herve Ernot deuz Lomaria a gavas gwelloc'h lakaad korv o zad en douar heb beleg ebed, kentoh eged goulenn sikour an iñtru.

Ha gand an amzer, mezaon, an traou ne wellaent tamm. Rag d'ar bevar a viz Even 1793, Laurent L'Abbé, mêt Plouzane, a skrive da zistrict Brest : « Ma ne lakit ket eur hloher er barrez-mañ ha ma ne baeit ket anezañ, e rankom lavared d'ar paour-kêz touer a zo amañ, soni ar hleier e-unan, kempenn al lamp ha nêtaad roudou an orolaj, skuba an iliz, gwalhi an dillad overenna, respont d'an overenn dezañ e-unan, dougen al letern pa gaso ar gomunion, ar relegou hag imaj ar Werhez pa vo prosesion.

E Milizag 'oa evel e Plouzane. Ar person iñtru n'en-doa da ober na badeziant nag interamant. Ar gwraez, pa vijent war ar mare da henel eur bugel, a yee da dremen eur pennad da eur barrez hag 'oant sur da gaoud enni eur beleg mad evid rei ar vadeziant. D'an ugent a viz Ebrel 1792 e skrive da zistrict Brest evid lavared dezañ « ne helle kaoud gwenneg ebed digand fabrik an anaon. Eñ a roe an arhant d'ar veleien vad evid lavared overennou. » Ne vije galvet, morse nag evid ar beo nag evid ar maro.

E Brelez, deiz ar pardon braz, 12 a viz Mae 1792, eun toullad merhed a en em lakaas da youhal ha da skei war dor an iliz a daoliou mein hag a daoliou boutou, e-pad ma oa ar beleg o sarmon. Pelloh 'oa ranket serri an iliz, er barrez-se, kement a freuz a vije greet bep sul, d'ar beleg fall.

E Ploumoger, deiz ar pardon braz ivez, an aotrou Morel en-doa bet bahadou. Hennez, an aotrou Morel-ze, 'oa diagent chaloni e Sant-Charlez e Plourin. A-raog e bardon e skrive d'an archerien : « Deuit, du-mañ, d'ar pardon, d'an nao warn-ugent a viz Even ; anez e vezo freuz. »

Ha freuz a oa en despet d'an archerien. Evid an dra-ze 'oa lakaet war goulenn ar beleg iñtru, soudarded da Bloumoger. Hag ar re a oa bet e penn an abadenñ 'oa taolet er prizon.

Mez kaer e oa ober, den ne yee d'an overenn.

O weled kement-se, an iñtru paour a êseas mond da glask peuri war ar parrezioù all 'oa endro dezañ ha n'o-doa ket a veleien touerien. Eun devez, e miz Gwengolo 1792, e klaskas ober eur vadiziant e Plouarzel. Mez n'oa ket digoret dezañ na dor ar sakreteuri na dor ar mên-font ken 'oa deuet an aotrou Morel, juge-de-peace Brelez, war e zikour.

Pelloh ez eas da Lanildud. Eno 'mezaon d'ar mare-ze, 'oa tud diskramailh hag o-doa hen pedet da zond en o zouez. – « O ! ya, a respontas, mond a ran rag kaer em-eus, abaoe tri bloaz 'zo emañ, ne hellan lakaad den e parrez Ploumoger da veza a-du ganen. »

Person touer Plougonvelen 'oa an aotrou Corre. O chom edo e Lokrist ha goude-ze, ne deue morse di nemed d'ar gouelioù braz. Eno ar zervij a vije greet gand ar hure.

E-pad pell amzer – beteg ar c'hweh a viz Gouere 1792 – an aotrou Le Querré, ar hure koz, 'oa chomet e Plougonvelen. Di eh en em denne an oll evid an ofisou hag evid ar zakramantchou.

Abalamour da ze, an aotrou Corre a houlenne digand an district serri iliz Plougonvelen. « Eno, a lavare, eh em denn oll mignoned an noblañsou hag ar veleien n'o-deus ket touet. Ha pa'z an di, ne gavan den da respont din an overenn. »

*

E kosterioù Kerhaez 'oa beh ivez war ar veleien o-doa touet.

Kerkoulz, setu amañ eul lizer skrivet gand district Kerhaez d'an Departamant hag a ziskouez deom pegen amjestr 'oa an amzer evito.

« Degaset eo bet deom, a lavare district Kerhaez, degaset eo bet deom al lezenn ho-peus greet d'an nao warn-ugent a viz Mae hag a zell deuz ar re na baeont ket ar rollou.

« Kuzad a reom muia ma hellom ouz koñsaillerien an district, ar feson ma'z a an traou. Diskouez a reom, zoken, kaoud fiziañs en amzer da zond. Mez war or spered e zo³⁴ spont hag enkrez. Al labourerien-douar n'int ket troet mad tamm ebed. Deoh-c'hwi e tiskuillom on anken hag e pedom ahanoh da lavared deom penaoz en em gemer.

Ar Hastell-Nevez eo al lodenn euz an district hag a ro deom ar muia nehamant. Ar re a zo eneb ar Revolution a zo eno niveruz hag abalamour da ze gwall hardiz. Ar person nevez a vez iñsultet, bemdez, dirag an oll. Ar mêt a lavar deom ema ar paour-kêz beleg war var da goll e vuhez.

Uhelgoad hag ar harteriou tro-war-dro, a zo prest d'en em zével. Goulenn a reom eur gompagnunez soudarded war varh da ingala etre ar Hastell-Nevez hag Uhelgoad.

Ar bersoned nevez a zo bet degemeret en o farreziou. Mez degemeret int bet gand kement a yenien ma oe gwasoh an dra-ze eged ma ve bet lavaret nann dezo, diohtu. O ilizou a jom goulo.

An dud a ya a-vern d'ar chapeliou e leh ma kavont beleien ha n'o-deus ket touet.

Ar veleien-ze ne brezegont mui. Mez er gador-koves, el leh all, e reont an neuz da gaoud truez ouz ar veleien o-deus touet, e leñvont war o stad. Hag er giz-se, o-deus an êr d'ober anezo tud vil, tud da zisprijoud... N'ouzom ket penaoz ober evid diwall deuz ar barr arne a welom o sevel. »

*

E district Kastellin n'oa trouz ebed er parreziou nemed e Brasparz hag e Kraozon. 'Gozig dre oll el leh all 'oa chomet ar veleien vad, rag ne gaved ket a veleien touerien.

E Brasparz avad, ar veleien fall n'edont, bemdez, e-kreiz ar blijadur. Ne hellent, zoken, beza sur deuz o buhez evid mond deuz o fresbital d'an iliz.

Ar person 'oa an aotrou Guillou. E gure a reed Chanzy anezañ. Ha setu amañ an abadenn a gonte diwar o fenn, da zistrict Kastellin, ar sitoianed Predour, Cariou ha Lesnevel.

Galvet da vond d'an ti-kêr, ez om eet. Goude beza goulennet digand ar mêt, Le Goyat, evid petra en-doa or galvet, e lavaras deom 'oa evid diambroug deuz ar presbital d'an iliz ha deuz an iliz d'ar presbital, ar veleien a zo amañ, hag o-deus touet senti ouz ar gouarnamant.

Mez a-veh ma en-doa, evel-se, komzet ouzom, ma on-deus gwelet eur bern tud o tond beteg dor an ti-kêr, en eur grial a-bouez-penn, n'o-doa nemed eur vuhez da goll, mez e kolljent anezi a volonteze vad kentoh eged mond da gleved overenn eur beleg evel an aotrou Chanzy.

Koulskoude, niver an dud a greske e toull an nor. Pelloh o-deus prenet warnom. Neuze, on-deus bet aon. Or buhez a helle chom eno. Hag on-deus pedet ar mêt da vond da gerhad an aotrou Le Page, eur beleg ha n'en-deus ket touet, evid mond da lavared an overenn vintin.

Unan ahanom a zo eet, dre ar preneustr, er-mêz, evid mond da gaoud an aotrou Le Page.

Kerkent ha ma eo gwelet o tond, an dud o-deus kuitaet an ti-kêr evid redeg oll war e lerh, d'an iliz. Ar mêt, ivez, ha kalz deuz ar goñsaillerien, a zo eet d'an overenn vintin.

Da zeg eur, om eet da gerhad d'ar presbital ar beleg a dlee kana an overenn-bred. Mez a-veh ma om bet gwelet o kerzed war-zu an iliz, eur bern tud, merhed ha gwazed, a ra hu warnom. Lavared a reont deom a bep seurt anoiou vil. Meur a hini, zoken, a daol mein ouzom. Ranket on-deus en em denna, en devez-se, hep kaoud overenn. N'eus nemedom, on-

³⁴ e zo : ez eus

tri, hag eun all pe daou a-du gand ar gouarnamant, e Brasparz. Abalamour da ze, ar hoñsaill munisipal en-deus or galvet, emichañs evid beza lazet gand e gamaraded.

Diwezatoh, Chanzy a skrive c'hoaz da zistrict Kastellin evid lavared 'oa miret outañ overenna hag en-doa zoken bet bahadou.

Neuze 'oa kaset an aotrounez Golias ha Fenigan deuz Kastellin da Vrasparz, gand daouhant soudard.

Dirag ar zoudarded, tud Brasparz a oa bet chentil-tre. Ar veleien touerien a overennas heb na lavaras den netra dezo. N'oa avad, en o overenn, nemed eun tri pe bevar.

*

E Krazon, e oa ker fall all an traou evid beleien ar houarnamant. D'ar bevar warn-ugent a viz Gwengolo, ar mêt a skrive : « Amañ, en eur barrez a nao pe zeg mil den, ne oe ket kavet hanter-kant siroyan mad. Diêz-braz eo kement-se evid ar re 'zo karget da lakaad plega d'al lezennou. »

An aotrou Fenigan, prezidant district Kastellin, a yeas di da glask ar veleien n'o-doa ket touet ha da êsa lakaad ar peoh. Goulenn a reas soudarded. Mez evel a hellit kredi, ne gavas beleg ebed. Hag e skrive d'an departamant : « Ne oa ket disul, 30 a genver 1791, hanter-kant den en overenn beleien ar houarnamant. Ar veleien gêz-se e vez lavaret dezo gwall draou, bemdez. Ne vo peoh ebed e Kroazon, beteg ma lakafoh eno soudarded.

*

E Landerne, ar hoñsaill munisipal en-doa pedet Gomaire da zond da brezeg ar horaiz evid ar bloaz 1791.

An aotrou-ze 'oa eur beleg deuz an Oriant hag a oa bet dibarrezet gand eskob Gwened. Edo o chom en eur maner e Leon, hag e ree ennañ skol d'ar vugale. Evel a weler ne helled ket kaoud gwelloc'h pastor evid prezeg ar Horaiz, d'ar mare-ze.

Mez e brezegennou ne zasfont ket kalz tud d'an iliz. Hag an aotrou Le Gall, prokureur syndik Landerne, a lavare d'an Departamant : « ne vije koulz den o selaou ar prezeger. An oll a rede, emezañ, da Gouent an Ursulinezed hag oa enni an aotrou La Rue, ar person koz hag e gureed. »

Evelkent, evid ar Pask, 18 Ebrel 1791, an aotrounez Joguet, Bodros ha Tréguier, ar gureed koz, 'oa deuet, war goulenn Pillet, ar person iñtru, ha Renaud ar mêt, da goves an dud da iliz Sant-Houardon.

Ar veleien vad, na petra 'ta ? a govesaas an oll gristenien diouz ar barrez. Pillet, pa ne deue den da goves gantañ, a êseas da vihanna ober eun dra bennag. Eun devez, ma oa dirag an daol fask, kalz tud o houlenn komunia, e lakaas e zurpilis hag e stol evid rei ar gomunion dezo. Mez kerkent, an oll, nemed tri, a dehas kuit. Ne felle ket dezo degemer Jezuz-Krist deuz dorn eur beleg touer.

*

E Gwirevede 'oa bet anvet, ivez, eur beleg iñtru. Charles 'oa e ano. D'an eiz a viz Du, da seiz eur dioh an noz, 'oa deuet d'ar barrez-se. Mez diohtu, eur vandenn verhed en em zastumas en-dro dezañ. Mond a rankas da guzad, en eun ostaliri. Ar mêt a zegouezas war an taol hag a êseas lakaad ar peoh. Mez ar merhed a lavare 'oa tri diaoul en ti hag e ranked o has kuit. Ar mêt a rankas en em denna pe, eñ e-unan, en-dije tapet e fall.

*

E district Montroulez 'oa ivez eun nebeud beleien touerien.

Hini Plouenan 'oa e ano Touboullic. Degouezet 'oa eno d'an drizeg a viz Ebrel 1791.

Mezaon, n'oa ket er baradoz. Da viz Even, e skrivo da Vontroulez : « N'on-doa badiziant ebed da ober ha den da rei dezañ e zakramantchou a-raog mervel. Ar vugale a vije kaset, oll, da vadezi da Heñvig.

E nizez 'oa eet,, eun devez da Vengleuz-Paol da zelled deuz an dañs a oa eno, evid eul leur nevez. Degaset 'oa bet d'ar gêr gand eur zaead bahadou. E vevel, zoken, ne helle mond er-mêz deuz e brespital hep kaoud e bistolenn. Eñ, e-unan, a vije tretet a laer, galeoner, jañfout³⁵, marhadour moh... »

E Gwerliskin 'oa ivez eur beleg touer. Den kennebeud n'hen darempred. An dud en em denne oll da Blougar ha da Zant-Dener 'oa ar veleien vad o chom enno.

E Roskov ne vije deuet, morse, a-benn da lakaad eur person iñtru, anez eur vandenn soudarded.

E Plounaour-Menez 'oa bet kaset an aotrou Park. D'ar bevar warn-ugent a viz Even e lavare da goñsail jeneral ar barrez n'en-doa den da goves : oll, emezañ, ez eont war-lerh an aotrou Briand hag an aotrou Floc'h, personed koz ar barrez.

Kastelliz 'oa kaset dezo, c'hoaz, eur person iñtru. Mez morse hini anezo he deas war e dro. Ar beleg paour a en em glemmas d'ar re a oa e penn an Departamant. « Kemerit pasianted, 'oa lavaret dezañ, dond a rafont, pelloh, war-zu ennoh. »

Deiz gouel ar Zakramant ,13 a viz Even 1791, Kastellad ebed ne yeas e prosesion. Ha war-lerh an Aotrou Doue, douget gand ar beleg treitour, ne oa nemed soudarded kêr.

Tadou Lazaristed Sant Visant a Baod a oa c'hoaz chomet e seminer Kreizkêr. Lavaret 'oa dezo son ar hleier pa vije ar prosesion o tremen. Mez ar hleier a jomas mud. Ar zoudarded a yeas en nez sacha warno. Mez pa errujent e welont trohet ar herdin.

*

E Sant-Tegonneg, ar beleg iñtru 'o anvet Alanet. An oll, er barrez, 'oa eneb dezañ. Ne gavas ket, zoken, eur hloher nag eur hurust, kaer en-doa kinnig arhant. Eul lastez kenderv dezañ a responte ouz e overenn. Mez beb mintin, pa'z ee da glask ober son galv, e kave kerdin ar hleier trohet.

E Kleder e padas pell ar peoh. An aotrou Bernard Laurent 'oa chomet er barrez-se, e-pad bloaz goude ma oa douget al lezenn. Daou deuz e gureed, an aotrou Marzin hag an aotrou Rouz, a roe skoazell dezañ, da gelenn mad e barrezioniz. Eun all c'hoaz, kure gantañ, Ar Gall a reed anezañ. Mez hennez 'oa eun den aonig hag a feiz laosk.

Unan bennag a yeas da Vontroulez da flatra an tri beleg mad. Klask a zavas dezo. An aotrou Laurent a yeas neuze da Vro-Zaoz. An aotrou Marzin a yeas da guzad da Vezlaou, hag an aotrou Rouz da Vespaol da di e gerent.

Ar hure all a deuas da blega hag a douas senti deuz lezennou ar Gouarnamant. Diohtu 'oa anvet person e Kleder. Mez, raktal, e kollas e vrud vad. Eun devez 'oa kavet maro, war oaled e di. Dorn Doue, emichañs, 'oa deut da gastiza ar peher. Ha Klederiz a zalhas, startoh, d'o feiz koz.

*

E district ar Pont an traou n'edont ket disheñvel deuz al leh all.

³⁵ jañfout : galleg.

Eun devez ma oa deuet Ollivier, ar person iñtru, da Bouldergad, n'oa den euz ar barrez o weled troni anezañ. Ha goude ma oa tronet, dirag koñsaillerien district ar Pont, Ploudergadiz a lavare n'o-divije, morse, anavezet evid person, nemed an aotrou Guenno, o ferson koz.

Diwezatoh, an aotrou Dumarnay, koñsailler an Departamant, o chom e Douarnenez, a skrive da Gemper : « Tud Pouldavid o-deus dilezet o iliz evid mond da ilizou all da gleved overenn ar veleien n'o-deus ket touet. An aotrou Ollivier a zo evito eul laer, eur bleiz. En deveziou-mañ e zo³⁶ gwelet bugale Pouldergad, Ploare ha re all, o vond da Boullan evid o fask. Eno e zo³⁷ c'hoaz eur beleg ha n'en-deus ket touet.

« An aotrou Ollivier ne hell kaoud na ti nag oz. Rag an aotrou Guenno en-deus lezet e vobilier e Pouldergad ha koñsaill an ti-kêr a zo a-du gantañ. D'ar zul, zoken, ar goñsaillerien en em laka er parkeier, demdost d'an iliz, evid mired ouz an dud da vond d'an overenn.

Ha d'ar memez mareou, eun den euz Ploare, anvet Guliers, a skrive d'an Departamant : « Pouldergad a jom atao er memez stad. Deh, an aotrou Ollivier a ganas an overenn. Ne oa den ouz e zelaou. Ne roer dezañ na dour, na gwin, na bara evid overenna. »

E Peumeurid, an aotrou Bihan, ar person koz, a overenne e chapel Penn-Kelenneg. An oll en em denne di. Er bourk edo ar beleg touer, Le Guellec. Den biskoaz ne yeas da houlenn digantañ petra ree.

An aotrou Hervian 'oa person e Preveil. Morse, ne blegas da lezennou ar Revolution. An oll e bro ar Hap 'anaveze anezañ hag her hare evel eun tad. Ar parreziou, tro-war-dro, o-doa beleien iñtru hag an dud deuz ar parreziou-ze a zerede, pa o-divije ezomm, da Breveil da gaoud an aotrou Hervian.

Tud parrez Preveil, d'ar mare-ze, 'oa tud a feiz kreñv, ivez. Eun iñtru 'oa bet anvet da berson dezo e miz Ebrel 1791. Mez goude beza klevet kelou deuz an aotrou Hervian ha deuz e barrezioniz, e lavaras ne deuje, biken, en eur barrez ha ne gavfe enni karantez ebed.

Pelloh, koulskoude, Expilly a gavas eur beleg touer evid dond da Breveil.

Paotred ar gouarnamant deuz Gwaien a deuas d'hen diambroug. Ar zul-bleuniou a oa. An aotrou Hervian 'oa o kana an overenn pa zegouezjont. Lezet e oa da beurachui. Mez kerkent ha ma oa lavaret an overenn, ar beleg iñtru a bignas er gador. Diohtu an oll a lammas er-mêz. N'en-doa ket, zoken, amzer da zigeri e henou evid lavared eur ger.

Neuze e teuas d'ar zakreteri. Eno e pakas eur zarmon : « Sitioyan, a lavaras dezañ an aotrou Hervian, mantret on e welfot amañ da glask person er barrez-mañ. An hini a zegas ahanoh n'en-deus galloud ebed evid kement-se. Amañ, sitoayan, c'hwi a overenno, ma vez ho faltazi, rag daoust ma'z oh fall, oh beleg. Mez ne helloh na koves nag eureuji den ebed, rag den ne deuiio war ho tro. »

O klevet kement-se, unan deuz ar re a oa deuz heul an druillenn fall, a grogas en aotrou Hervian. Mez n'oa ket pell e rankas diskregi. Dre ar prenestr ha dre an nor, tud Preveil a oa o solded. Lammad a reont er sakreteri evid divenn ar beleg mad. Eul lammig muioh tud Gwaien a vije bet greet bleud gand o eskern.

*

E Douarnenez ar person iñtru a oa e ano Aufret.

Eun devez, d'ar zul, iliz Santez-Helena a oa leun-chouk a dud deuet da glask overenn an aotrou Le Rufie, beleg mad. Mez ar beleg touer eo a deuas hag a lavaras an overenn. Raktal an oll a yeas er-mêz. Mez war e lerh, an aotrou Le Rufie a overennas hag an iliz 'oa karget adarre.

³⁶ e zo : ez eus

³⁷ e zo : ez eus

E Brieg ar feiz 'oa birvidig en oll galonou. Abalamour da ze, an dud, eno, ne houzañvent ket kleved kaozeal deuz eur beleg touer. Hag eun devez bennag, a-raog ma oa tronet ar person iñtru, district Kemper a skrive d'ar mêr : « Taolet evez, aotrou meur. Ma vez trouz e Briec pa vo tronet an aotrou Goraguer, ar person nevez, c'hwi hag ho koñsaill a responto. »

An aotrou Goraguer 'oa tronet. Mez prest goude eh en em glemme d'an district : « En deiz all, a lavare, on bet eet da Langolenn d'ober eun interamant. Pa oa gwelet 'oa me a lavare an overenn, an oll a zo eet er-mêz deuz an iliz, zoken he c'hoar d'an hini varo. »

*

D'ar c'hwezeg a viz Mae 1792, district Kemperle a skrive d'an aotrou Barz, hag a houlenne lavared an overenn e chapel Bosegrand : « Ne hellom ket rei ar bermision a houlennit. Rag izilou ar veleien touerien a zo 'gozig goullo hag eur skwer fall eo gweled an dud o vond a-gantchou d'an ilizou hag a zo enno beleien a-eneb ar gouarnamant. »

Bannaleg ha Melgven a zalhas pell o beleien vad. Mez o veza ma oa a-benn ar fin savet beh war o ferson, oll dud Bannaleg a gasas d'an Departamant eul lizer evid e houlenn da jom ganto. Eun den, Jean Evennou, a nahas lakaad e ano war al lizer-ze. An oll a reas, goude-ze, kement a vrezel dezañ, ma lavare d'an Departamant e houlenn an oll e lakaad d'ar maro.

Bannalegiz, neuze, a en em gemeras a-hend-all. Gouzoud a reent n'oa ket, en district, beleg touer ebed da gas dezo hag e houlennjont eur person.

An district 'oa da genta nehet a-walh. Ne oa, e gwirionez, beleg touer ebed, hep parrez. Mez pelloh e soñjont kemer eur hure deuz Kemperle evid e gas d'ober ar zervij da Vannaleg. Ar hure-ze 'oa anvet Bijeon.

Trist a-walh 'oa e zoare e-touez Bannalegiz. Lavared a ree d'an district, d'an 21 a viz Gouere 1792 : « Tud Bannaleg a zo bet estonet o weled ahanon o tegouezoud. Kaoud a ree dezo n'oa beleg touer ebed da gas d'o farrez. O zoñj 'oa kaoud beleien all en-dro. Ar presbital, amañ, 'zo goullo : mobilier ebed. Den ne felle dezañ rei eur gambr din er bourk hag em-eus ranket loja en ostaliri. Eet on er mintin-mañ da glask lavared an overenn. N'em-eus kavet tamm dillad overenna. »

E Rieg 'oa person an aotrou Floc'h. D'an unneg a viz Eost e skrive d'an Departamant ne veze den en e overenn. « Amañ, emezañ, ez eont da Vaye ha da Nevez hag a zo chomet enno ar veleien n'o-deus ket touet. »

Prokureur Kemperle a lavare e miz Here 1792 : « Eur vez eo evidom ! parrez vihan Mellag e-tal or hêr he-deus diarbennet beteg-henn. A dra zur, ma vije greet el leh all ar pez a zo bet greet e Mellag, on-dije ranket plega. »

E Moelan hag e Nizon 'oa bet lakaet ivez beleien iñtru. Mez o kleved, bemdez, rebechou o farrezioniz, ar re-mañ 'deuas d'en em gonvertisa. Hini Nizon 'oa eur beleg yaouank, anvet Le Bastrad de Kerguerfinec. Ober a reas pinijenn ha marvet eo evel eur sant, er Spagn.

*

XI

Expilly eskomuniet. En em veñji a ra en eur lakaad dougen gwall lezennou eneb ar veleien. District Brest hag hini Montroulez eneb al lezennou-ze. Al lezenn evid serra ar chapeliou. Al lezenn evid kas ar veleien da Vrest.

*

D'an drizeg a viz Ebrel 1791, ar Pab a daolas an ekskomunion war Expilly. Ar Pab a lavare :

« Tud e eskopti a ranko e gemered evid eul laer ha nann evid eur pastor. Ya, eul laer, peogwir en-deus serret e zaoulagad d'ar wirionez, peogwir en-deus kemeret eun ano ha n'eo ket dezañ. Gellet e ve lavared dioutañ ar pez a lavare sant Leon deuz eskibien an Ejipt : « Heñvel eo deuz an diaoul. Eet eo pell deuz ar wirionez ha kemeret en-deus eun ano hag eur garg ha n'int ket dezañ. »

Ar Pab a lavare goude-ze 'oa an eleksionou evid envel Expilly nul ha sakrilaj : dre ze ne helle ober netra deuz ar pez a zo e karg eun eskob.

Lizer ar Pab a deuas beteg an aotrou Larchantel.

Hemañ a bedas an aotrounez Coz, rener ar seminer, gwechall person Kastellin, ha Guillaume, rener ar helenndi, da zond da lenn d'e di. Mez an daou aotrou-ze a yeas da gaoud ar mêt da lavared dezañ petra 'oa degouezet. Ha raktal e Kemper e krogas aon en dud 'oa troet gand an eskob fall.

Neuze e penn Expilly e teuas eur zoñj ivern. Kerkoulz district Landerne hag hini ar Pont o-doa dija her poulzet war an tu-ze. Expilly a lakaas an departamant da ober eul lezenn eneb ar veleien vad.

Al lezenn 'oa greet d'an unan warn-ugent a viz Ebrel 1791. Setu amañ e pe hiz 'oad en em gemeret ganti.

Peogwir, e lavare an departamant, peogwir e teu beteg ennom klemmou eneb ar veleien n'o-deus ket touet ; peogwir ar veleien a zo kemeret o farrez a gendalh da rei da gredi int ar veleien wirion hag e chomont en o farreziou ; peogwir ar veleien-ze a lavar n'eo beleien ar houarnamant nemed beleien heb galloud ebed war an eneu.

Abalamour da ze, an Directoire deuz an departamant a ra eul lezenn evid ma teuio ar veleien n'o-deus ket touet hag a zo bet kemeret o farrez, d'en em denna deuz ar parreziou el leh ma oant personed pe gureed, hag a hourhemenn dezo mond, da vihanna, peder leo deuz ar parreziou-ze. Ma ne blegont d'al lezenn e vezo greet dezo prosez, evel ma o-dije miret euz an urz vad.

*

Al lezenn 'oa kaled. Evid heh ober an departamant a lavare 'oa ar veleien vad eun abeg a freuz An dra-ze 'oa gevier. N'oa freuz ebed er parreziou a-raog ma oa deuet ar re³⁸ da ren. »³⁹

Ar re-ze eo a lakaas freuz da zével dre ma'z eent. Ne oant tamm beleien wirion peogwir 'oant distag deuz ar Pab. Ma klasked ar peoh n'oa da ober nemed ar parreziou gand ar veleien goz. Mez nann. Expilly a felle dezañ beza mestr. Hag evel ne felle ket d'an dud plega e lakaas an departamant d'ober lezennou kriz.

Evelkent, ouspenn an dud vad a gavas fall lezenn an Departamant. District Brest 'oa da genta en he eneb. Ha district Montroulez, p'oa goulennet digantañ lakaad plega dezi, a respontas evel-henn : « O soñjal e rank beza greet al lezennou gand ar vro, pe da vihanna gand he hannaded ; o soñjal n'eo ket bet lezenn an departamant kavet mad c'hoaz gand ar re 'zo karget d'ober lezennou ; o soñjal den ne dle beza heskinet abalamour d'e relijion ; o soñjal ar garantez a dle ren e-touez ar gristenien a dle ober eun dever d'an oll veleien d'en em houzañv hag ez eo d'ar re a zo lakaet e penn ar parreziou dre ma o-deus pleget d'al lezennou, da lakaad dre o douster hag o buhez reglet mad, an dud fidel da ankounac'haad, a nebeud da nebeud, ar veleien a garent hag o helenne, gand karantez, beteg-henn ; o soñjal e vije beza digalon harlui tud ha n'o-deus gwenneg ebed hag o-deus kavet gweloh plega d'o houstiañs eged kaoud pae ; o soñjal ne deufed, morse, a-benn da lakaad ar gristenien, dre rankoud, da blega d'al lezennou nevez ; abalamour d'an traou-ze oll, an directoire deuz district

³⁸ ar re : skrivet evel-se el leor. ar re-ze. Merket el linenn da heul "ar veleien touerien"

³⁹

Montroulez a gavfe gwelloc'h ma hortozfed eur pennad a-raog ober an traou merket gand lezenn an Departamant. »

Mez Directoire an Departamant a zalhas yud d'ar pezh en-doa gourhemennet. Lavared a reas n'en-doa greet al lezenn-ze nemed abalamour ma oa red ober lezennou kaled.

Skrivet on-deus, emezañ, d'an Assemblée Nationale evid kemenn dezi : « guiem⁴⁰ ervad e reem a-walh eged na zelle ouzom. Mez lavaret on-deus dezi, ivez, ne ouie ket ar pezh a dremene amañ hag ar gwad en-dije pell 'zo redet a-raog ma ne divije ober an disterra tra. »

Koulskoude, an oll a zoñje evel district Montroulez. Beleg na kristen ebed ne zalhe kont deuz al lezenn-ze. Evelkent, ar veleien a lavare nebeutoc'h an overenn en ilizou parrez : en em denna 'reent er chapelioù diwar ar mêz.

O weled kement-se ar veleien touerien, hag en o fenn an aotrou Derrien, person iñtru Montroulez, a houlenn ma vezo serret an oll chapelioù.

War o zikour e teuas an emgleoioù savet er hêrioù hag a reed anezo mignoned al lezennou. En emgleoioù-ze edo ar re falla, al lamponed deuz peb leh. Kounnaret 'oant, dreist-oll, eneb ar veleien n'o-doa ket touet. Ar Revolutionerien, an dud deuz an Assemblée nationale, a glaske dispah, o-doa lavaret dezo e hellent ober n'eus forz petra eneb ar veleien-ze heb na gouezje warno droug ebed.

Ha poulzet ganto oll, an Departamant, d'an daou a viz Gouere, a reas al lezenn 'giz-mañ : « An oll ilizou ha chapelioù a vezo serret nemed an ilizou parrez ha chapelioù an ospitalajoù hag ar helenndioù. Mez evid ma vezent lezet digor, ar zervij a ranko beza greet enno gand beleien bet kavet mad, evid kement-se, gand eskob an Departamant.

Chapelioù ar houentchoù ha n'o-deus ket pleget d'al lezenn, greet da viz Here 1790, ne vezint ket, morse, digoret evid an dud diwar ar mêz. Abalamour da ze an dorjoù warno a vo serret da vare an ofisoù ha ne vo sonet kloh ebed evid merka an ofisoù-ze.

Karga 'ra an Directoire deuz peb district da hourhemenn d'ar veleien ha n'o-devezo pleget d'al lezenn greet d'an 21 a viz Ebrel, da vond da Vrest hag e vezint dalhet eno. Karga 'ra c'hoaz, an Distrigoù, da rei ditour dezañ deuz ar veleien a vo eun abeg a freuz evid ma vezint, ivez, kaset da Vrest. Ouspenn, gourhemenn a ra d'an oll, lakaad badezi o bugale dre ma teuint dezo, gand personed o farrez. »

*

XII

Klask war ar veleien. – E pe hiz en em guzont. – O anken hag o foan. – E pe hiz e tiwalled anezo. – Ar veleien genta taolet er prizon. – O stal druezuz. – Ar frankiz roet dezo. – Penaoz 'oant digollet deuz o foan.

Goude ma oa douget al lezennou didruez on-deus lavaret, e savas beh war ar veleien vad. Red 'oa dezo tehed kuit hag en em guzad.

Kenta 'rajont 'oa teuler o zoudanenn ha kemer dillad ar vro, ma o-doa c'hoant beva enni. Unanou a yeas da chom da di o herent, re all da di o mignoned. Eno, war o mennou, o-doa kemeret peb a vicher. Lod a dremene evid kigerien, lod all evid kilvizien, lod all evid milinerien, lod all c'hoaz a lavare ober micherou all. Ra vije ezomm deuzouto, ma tigouezed ganto dirag tud all, e lavarent dezo : « Deuz an abardaez-mañ, d'eul leh pe leh, eul loen a vo da laza ; deus warhoaz, du-mañ, eun arreal a vo da rei dit. »

Evid overenna ne gavent mui nag iliz na chapel, koulz lavared. Mez Jezuz, er wech kenta ma teuas er bed, 'oa en eur hraou. Hag aliez a-walh, diwar neuze, an overenn a vije lavaret en

eur hraou, pe en eur hrañj, en eur sanaill, zoken, en eur hoad a-zindan ar gwez. Eur zon 'oa bet savet war ar veleien deuz an amzer-ze hag a lavare :

Ar beleg a zo eul lapous, ervad,
Hirio ema el lanneg, warhoaz er hoad,
Er mintin en neiz pik, en noz en neiz bran,
El leh ma en-devezo bet er vern ne zebro ket e goan.

Hag ar pezh a lavare ar zon 'oa gwir, penn-da-benn.

Setu amañ, eul lizer skrivet d'ar Roue, gand eur beleg, Goulc'hen Appamoun, deuz Plougerne, hag a ro da anaoud pegen trist 'oa doare ar beleg en amzeriou-ze.

« Aotrou Roue,

Eur beleg ha n'en-deus ket touet, euz a barrez Plougerne, en em stou d'an daoulin dirazoh evid ho pedi da rei dezañ ar frankiz. E enebourien o-deus lamet digantañ e liberte abalamour n'en-deus ket touet senti deuz lezennou an Assemblée nationale. Ar re o-deus touet a zo oll tud fall, tud heb reiz... Pell 'zo, aotrou Roue, e vezen o kousked gand al lapined hag al loened gouez, a-wechou, en eur waremm, aliesoh en eur hoad... »

*

E meur a leh, koulskoude, ar veleien vad o-doa ar goñsolasion da veza diwallet a-eneb peb droug gand o farrezioniz.

E Plouenan, ar person iñtru a lavare da zistrict Montroulez ez ee, bemdez, ar veleien n'o-doa ket touet, da lavared an overenn da Vespaol. Hag evid o diambroug en hent e vije ugent den gand fuzillou karget.

E Plouzane, bep sul, e vije anvet daou-ugent gwaz da zivenn an iliz keit ha ma vije ar veleien o lavared o overenn.

E Kerrien 'oa chomet ar pevar beleg mad, an aotrou Bernetz hag e dri gure. Prokureur district Kemperle a skrive d'an Departamant : « E Kerrien ema ar veleien vad n'o-deus ket touet : beb noz, e vez tud familhou karget ganto, o tiwall anezo. »

E Kraozon 'oa ar memez tra. An daou gomiser kaset di gand an Departamant da glask ar veleien vad a skrive d'an 9 a viz C'hwevrer 1792 : « N'eus tu ebed da zond a-benn deuz tud Kraozon. Ne vo gallet, morse, kaoud o beleien diganto. Klasket a-walh on-deus, kinniget a arhant ivez : netra ne ra. Ar veleien gwisket evel tud ar vro, a ya deuz an eil ti d'egile, deuz an eil lodenn d'eben d'ar barrez. Ar mêr hag ar prokureur a guz warno. Gwelloh e ve ganto mervel eged lavared e peleh en em guzont. »

E meur a barrez, an dud gwisket e mod kêr ne hellent bale. Kemeret e vijent evid tud ar houarnarmant o klask beleien, ha bep tro, koulz lavared, e koueze beh warno.

Da viz Genver 1792, daou zen deuz Rekouvrañs, Daby ha Dessart, a yee da weled eur hamarad. En eur dremen e Plouzane 'oa noz dija, hag ez eont d'an ostaleri da loja.

Antronoz vintin, gwazed Plouzane 'oa leun an ti anezo. Daby ha Dessart, o kleved seni an overenn, a yeas d'an iliz. Ar gwazed en em dennas d'o heul hag en em lakaas en daou du dezo. Kroget aon enno, e teujont er-mêz. Kaset 'oant d'an ti-kêr. Eno, e lavarjont da behlezh ez eent. « Alo, mad, eme ar mêr, neuze n'ho-peus ket nemed paea peb a vanne d'ar gwazed-mañ. » Hag, a-raog mond kuit o-doa ranket paea ar banneou.

Er Vourh-Wenn e tegouezas ar memez tra. Tud deuz Brest o vond da Lanniliz a oa o tremen ar bourk, eur zulvez. Ar hloh 'oa sonet. Raktal, gwazed 'oa deredet, deuz peb leh. Brestiz 'oa gwall-lakaet.

*

Ha dre ma'z ee an amzer en-dro, an traou e-keñver ar poent-se ne wellajont ket evid tud ar Houarnamant.

Parrez Heñvig 'oa bet staget deuz hini Taole. Ellen, manah deuz Caburien ha person iñtru Taole a houlennas, na petra 'ta ? ma vije kaset kuit beleien Heñvig.

E miz Ebrel 1792, Claude Raoul, prokureur-syndic Montroulez, a deuas da Heñvig. D'e heul 'oa daou archer ha daou zen deuz Plouian hag o-doa greet marhad da ziskar oll kleier kondaonet an district. E zoñj 'oa tenna 'r hleier deuz an tour, kemer ar haliriou ha serra an iliz.

Tremen a rejont dre Daole. Ar person iñtru a deuas asamez ganto.

Da eiz eur edont en Heñvig. Kemenn a reont d'ar sakrist dond d'o haoud. Mez n'en-doa, a lavare, nemed alhwez an iliz. Alhwez ar sakreteri a oa gand ar mêt. Mond a rejont d'e di.

Eet 'oa da varhad Montroulez, war a lavare, da vihanna, e wreg. Hag e-keit ha ma oa bet oh ober an dro e ti ar mêt, ar sakrist a oa tehet. Evelkent paotred ar hleier 'oa pignet dre an diavez e-barz an tour hag o-doa, atao, diskennet eur hloh.

War ar mare e tegouezas prokureur ar barrez. Lakaad a reas e chelp⁴¹, ha krak ha berr, e tivennas ober an disterra tra ken a vije ar mêt war al leh.. « Koulz all, emezañ, ni 'fell deom er barrez-mañ, kaoud digor on iliz ha derhel d'or beleien. »

E-pad an amzer-ze, eun niver braz a wazed 'oa degouezet er vered. Ganto ar freier-houarn ha freillou. Youhal a reent a bouez-penn hag e lavarent : « Ma kemerit or beleien ha traou ar sakreteri, ne dafoh ket beo ahalenn. »

Daou c'hoaz a hellas pignad en tour. Gand morzol an orolaj e skoont war ar hloh braz evid ober son an tangwall. Merhed ha gwazed a zerede e bep korn.

Prokureur an district a lavaras da brokureur ar barrez lakaad an dud da jom sioul ha didrabas. « O ! 'oa respontet dezañ, ne dan ket da êsa, zoken. Goude oll, n'em-eus nemed eur vuhez da goll. Ne roan ; forz penaoz, e tremeno an traou. »

Pelloh an archerien a lammas war o hezeg evid en em denna. En o raog edo an daou ziskroger kleier, Raoul hag Elien 'oa e-kreiz etrezo.

N'oant ket fier o vond kuit evel ma oant o tond deuz ar mintin.

E Leuhan 'oa bet ken tomm all an abadenn d'an eiz a viz Gouere.

Daou archer a yeas d'ar barrez-se evid kas paper da zevel an taillou. Pa zegouezjont er bourk, an dud 'oa en overenn ar beleg mad. Mez kerkent ma oant gwelet, ar helou a redas. En eur mare 'oa ouspenn daou vil en-dro dezo. Lod 'oa fuzillou ganto hag an eil a lavaer d'egile : « Laza ! laza ! »

An daou archer a ziskouezas o faperiou. Ar mêt a yeas gand unan anezo d'an ostaliri evid rei dezañ eun diskarg. E-pad an amzer-ze an archer all hag ar hezeg a bake taoliou mein.

Buanna ma helljont ez ejont en o zro. An dud a yeas d'o diambroug beteg traoñ ar menez en eur grial ata : « Laza ! laza ! ». Hag evid kimiad e lavarjont dezo : « Ma teuit mui e vezoh lakaet d'ar maro. »

*

Koulskoude beleg ebed ne yee da Vrest e-giz ma oa gourhemennet gand al lezenn greet d'an daou a viz Gouere.

An departamant hag e dud a en em lakaas neuze da chaseal ar veleien 'o-doa ket touet evel ma ra ar chaseour ar gedon hag an anevaled gouez. Kerkoulz n'oa ket diêz dezañ ober e droiou. Bemdez, koulz lavared, ar veleien fall a skrive da Gemper evid lavared e pe du en em gave o hamaraded gwechall.

⁴¹ e chelp : ?

E meur a leh, zoken, gouarnourien an district n'o-doa ket gortozet lezenn an departamant evid teuler beleien er prizon.

Koñsaill an ti-kêr e Brest, kroget aon ennañ o kleved lavared 'oa tehet kuit Roue Bro-Hall, a lakaas kas, da gouent Carmes, an aotrounez Claude Laporte, kure Sant-Louis ; Per Kermarrec, kure ivez e Sant-Louis ; Jacques La Rue, person Rekouvrañx ; Henri Mocaer, person Lambezellig ; Scouarnec, kure Kerber ; Pentrez, jezuist ; Plessis, beleg ; Durand de Linois, manah ; Christophe Maillard, kapusin ; Kermorgant, aluzenner er gouent vihan ; Duchesne, aluzenner ar Seurezed griz ; Labous, beleg e Sant-Louis ; Drevez, kure Rekouvrañs ; Larreur, kure Kerber ; Quemeneur, kure San-Mark ; Perron, beleg e Kerber ; Goret, person e Gwitalmeze ; Liles, kure Lanrivoare ; Cariou, kure Gwiler ; Lapiere, aluzenner ; Gouchet, kure Plouzane.

Ar veleien-ze 'oa bet taolet er prizon, d'an eiz warn-ugent ha d'an nao warn-ugent a viz Even.

*

Pa oa fardet al lezenn, district Kerhaez ne ouie ket kalz penaoz en em gemer ganti. Diou wech, en-doa klozet beleien, ha diou wech e lezas anezo da vond kuit. Pelloh, e lavaras n'o-doa karg ebed an tri pe bevar beleg 'oa o chom e kêr. Rag-se, emezañ, al lezenn greet d'an daou a viz Gouere, ne zellfe ket outo.

Koñsaillerien an ti-kêr, e Montroulez, a argile ivez, a-raog lakaad an dorn war ar veleien : « Ne gredom ket, a lavarent d'an Departamant, e ve kement-se, hervez al lezenn. »

N'eus forz, en despet dezo, e weljont, gand glahar, teuler er prizon, d'an eiz a viz Gouere, an aotrounez : Le Noaznez, person Sant-Malami ; Nigeon, kure Plougonven ; Kerneau, person Plougonven ; Pétot, person Sant-Vaze ; Balc'h, person Plougonven ; Le Moine, kure Sant Merlani ; Breton, kure Sant Martin ; Penn, person Plouigno.

D'ar memez mareou, 'oa paket, e tu Kastellin, an aotrou Graveran, person Roskañvel, hag an aotrou Meylars, kure Kraozon.

En deveziou bennag, a-raog, 'oa kaset da Vrest an aotrounez : Perrot, person Ploumoger ; Jean Goachet, kure Gouenou ; Briant, person Plounaour-Menez ha Broustouler, kure Lanmeur.

Ar veleien on-deus lavaret 'oa bet kroget enno heb re a drouz. Mez, du-ze, e kosteziou Lezvenen, 'oa eur c'hoari all. Eul lastez aotrou hag a oa o chom e Treflez, An Treunc a reed anezañ, a yeas da houlenn digand koñsaill munisipal Kastell, rei dezañ soudarded evid kas d'ar prizon beleien deuz ar harteriou tro-war-dro. Ar veleien-ze, emezañ, a lakae freuza e-pad an noz ; al labour a rae e-pad an deiz evid gounid douar war an nor⁴².

Ken digompez ez ee an traou, dija, d'ar mare-ze, ma oa roet dezañ e houlenn. Hag ar zoudarded-se, dre ma'z eent, a rae skrap war gement a blije dezo, er presbitaliou hag e leh all. Paka 'rejont ha kas da Vrest, an aotrounez : Breton, person Sibiril ; Jacob, kure e Lokmellar-Gwineventer ; Bounemetz, person e Plounevez-Lokrist :Le Hir, chaloni ar Folgoad ; Cloarec, person Treflez.

An aotrou Cloarec 'oa er gador-goves, pa glevas 'oa deuet soudarded d'e gerhed. Mond a reas da guzad e lambrusk an iliz. Mez eur plankenn bennag a strakas a-zindan e dreid, ha raktal, ar zoudarded a zivarhas dor an tour hag a bignas. Neuze, an aotrou Cloarec, kentoh eged gweled anezo, o tond war al lambrusk 'oa fall, gand aon na zegouezje droug ganto, a en em roas dezo. – « Lazom anezañ », a lavaras lod. « Nann », a lavaras an darn-muia, peogwir eo en em lakaet, anezañ e-unan, etre on daouarn, lezom e vuhez gantañ. »

Kement-se a zegoueze d'an drizeg a viz Gouere.

⁴² war an nor :? Marteze ez eus eur fazi moulla el leor orin : war ar mor.

Mez district Lezvenen en em glemmas ha pemp devez goude, ar veleien 'oa bet paket, evel-se, 'oa lezet da vond kuit.

D'ar memez mareou 'oa lakaet an dorn war an aotrounez : Abjean, person Sant-Tegonneg ; Tangy, kure Sant-Tegonneg ; Tranouez, person Pleiben ; Appamon, kure Plougerne ; Pouliquen, person Sizun ; Gourmelon, beleg e Rekouvrañs ; Cossoul, chaloni e Kemper : Laot, person Eusa ; Sannier, beleg e Sant-Vaze, Montroulez.

District Kemper a yeas da houlenn digand vikeled an Eskob ha rejanted ar hloerdi piou 'oa ar veleien da gas d'ar prizon. War o lavar 'oa kroget, d'an 23 a viz Gouere, an aotrou Coroller hag e gure Jean Jacquer. D'ar c'hweh warn-ugent, oa kaset, d'o heul, an aotrou Le Borgne de Kermorvan, chaloni e Kemper, hag an Tad Le Corre, manah a urz sant Frañsez e Landerne.

*

Mez n'eo ket ar houarnamant hepken, eo a deue dre he soudarded hag heh archerien da gregi er veleien ha d'o has d'ar prizon. 'Mez aon, ar "sitoayaned" a ree o-unan, a hellfe ober ar memez tra.

Setu amañ, ar gont iskiz a ree deg lampon deuz Brest diwar-benn an dro jase, greet ganto d'ar seiz ha d'an eiz warn-ugent a viz Gouere, evid klask beleien e goueled Leon.

« En em glevet om deg den asamblez da vond da baka beleien. En em lakaad a rejom en hent da deir eur goude kreisteiz, hag om degouezet, oll kevred, en eur gêriadenn a anver ar Peder Milin.

En eur dremen e-biou Plouzane, om eet da nav eur hanter deuz an noz da vaner Kermorvan, e parrez Trebabu. Aotrou ar maner, Coataudon, 'oa o koania ouz taol, gand e ziou verh hag an aotrou de Beaumont. Degmeret mad om bet ganto. Goulennet on-deus an Tad Elizée. An aotrou de Coataudon en-deus touet da lavared, evid eno, ne oa ket. Neuze, om eet da di ar person. N'on-deus ket her havet, kennebeud.

Dre an noz, on-deus kerzet war-zu Lokrist. Eno, e kavom en e wele, ar Gall, kure. Gourhemennet on-deus dezañ dond ganeom. Hanternoz 'oa dija. Ha war-eeun om eet da vourk Sant-Vaze. E ti Carluer, ar person, on-deus kavet kousket-mort an Tad Elizée.

Div eur 'oa goude an hanternoz, pa on-deus kemeret hent Konk. E Konk on-deus lakaet etre daouarn ar mêr an Tad Elizée hag ar Gall hag om eet d'ober eur housk.

Kerkent ha nav eur, en devez war-lerh, edom war hent Ploumoger. Er bourk, e krogom en aotrou Le Moyne, kure, hag a ree, er vro-ze, kalz droug, dre e brezegennou.

Da unneg eur om eet war-zu Plouarzel. D'on heul e treinem Elizée, ar Gall hag ar Moyne. Daou ahanom a oa war varh. Ar re-ze a zo eet en or raog da di an aotrou Kermorgant, bet kure e Plougonvelen. Ni n'om degouezet er bourk nemed da eun eur. War-eeun, om eet d'ar presbital. N'oa den. Rag an aotrou Madec, kure ar Forest, anvet da berson, n'eo ket degouezet c'hoaz.

En eur zond ahanom, on-deus gwelet eur bern merhed hag a leñve hag a hirvoude ar pez a hellent. Eet om da di an aotrou Kermorgant ; « Ar beleg-se 'oa en e gambr. Pa en-deus or gwelet eo pignet d'ar hrignol. Eur vaouez 'oa eno hag a lavaras : n'heller ket digeri, rag an trap 'zo bet warnañ ».

Unan ahanom, neuze, a bignas en eur skeul hag en eur boulza gand e benn, e tibradas an trap.

« O ! a lavaras, ed warnañ ? O ! n'eus ket : mez eun tamm brao a gig 'zo 'vad ! » Hag e poulzas adarre. Ar beleg 'oa divarhet : ober a reas e bak hag e teuas ganeom.

En eur zond kuit on-deus ranket tremen dre eur vandenn verhed hag a leñve, hag a grie, hag a zave o daouarn war-zu an Neñv, en eur deuler malloz warnom. Kemeret on-deus hent Brest, ha degouezet e Pont an ospital on-deus evet beb a vanne.

Foar Lokournan a oa. War an hent on-deus kavet eun daou-hant den bennag hag a anaveze n aotrou Kermegant. Hemañ a lavare dezo : « ne ouzon ket da beleh e vezin kaset pe d'ar Hastell pe da Garmez : ar pezh a garo da Zoue ! » - An dud a leñve. Hag en eur gimada, Kermegant a lavare ober e hourhemennou d'e anaouderien.

« Degouezet, pelloh e Brest, war-dro eiz eur bennag deuz an noz, on-deus lakaet or habadenn etre daouarn koñsaill an ti-kêr. Ha diohtu, oll asamblez, eur bern tud en-dro deom, om eet da Garmez, da gas ar pevar enebour-ze d'on lezennou. »

*

Da Vrest 'oa kaset, c'hoaz, da fin miz Gouere, an aotrounez Gloguen, kure Ploare ; Sévère, beleg e Pleiben ; Raguenez, kure Landudeg ; Talarmin, kure Milizag ; Lamour, aluzenner Pont-ar-Veuzeun ; Gourmelon, beleg e Landerne ; de la Briochais, chaloni deuz Roazon ; Buzlot, person Plouye ; Quinquidec, kure Sant-Segal ; Lannurien, jezuist, deuz Montroulez ; Hardy, chaloni deuz Kastell.

Evel on-deus gwelet, dre ma teue beleien da Vrest, e vijent kaset da gouent Carmez. Eno 'oa soudarded karget d'o derhel.

Kement-se, evelkent, n'oa ket hervez al lezenn. Hag eun devez, prokureur an Departamant a skrivas da zistrict Brest. « Pa on-deus, a lavare, greet al lezenn evid kas d'ho kêr ar veleien na blegent ket, or zoñj ne oa gweled o zeuler er prizon. Lakaet on-deus o has da gêr Vrest abalamour ar gêr-ze a zo mogerious en-dro dezi, hag eur wech e-barz, ne heller mond kuit. N'on-deus klasket netra nemed o fellaad deuz o farrezious. Setu perag, ma ve unan bennag hag a hoantfe mond da jom e kêr, arabad, da vihanna, mired outañ.

D'al lizer-ze, district Brest a respontas n'en-doa taolet ar veleien er prizon nemed evid mired outo da ober droug. « Ma vije bet lezet ganto ar frankiz, a lavare, o-dije, sur, kaset d'o heul eur bern merhed ha tud kredig. Ha neuze, penaoz o derhel ma ne vijont ket prizonied ? Lakaet o-dije dillad all ; ne vijent ket bet anavezet hag e vijent tehet. Ouspenn-ze, bemdez, o buhez a vije bet war var, ma vijent bet lezet e kêr. Rag amañ an dud a zo eneb dezo. »

Hag evid gwir, d'ar mare-ze, Brest 'oa eur gêr deuz ar re falla. Nebeud a-walh a Vretoned 'oa o chom enni. Mez, avad, beza oa tud, koulz lavared deuz an oll broious, deuet di da heul or batimantchou a genwerz hag on listri a vrezel. Hag an dud-ze n'o-devoa koulz lavared, tamm relijion nemed hini ar blijadur. Kounnaret 'oant, dreist-oll, eneb ar veleien. Eur beleg a oa eur rebech evid o buhez fall. Hag abalamour da ze, pa vije kaset eur beleg d'ar prizon da Vrest, dre ma'z ee, an dud en em zastume en-dro dezañ, evid youhal war e lerh. Aliez a-walh, zoken, ez eent beteg ar prizon hag e vennent lammad e-barz, evid laza ar brizonerien.

D'ar bemp warn-urgent a viz Eost, district Brest a skrive da Gemper :

« An traou, amañ, a ya gwasoh-gwas. Ne hellom mui respont deuz buhez ar veleien a zo lakaet er prizon, e kouent Carmes. Pa zoñjer da nebeuta, kêriz a zaillo warno. Pedi a reom ahanoh, eta, da denna ar beh-se diwar or chouk. Kemerit anezo ganeoh, e Kemper, pe o hasit da eul leh bennag. Mez, en an' Doue, n'o lezit ket amañ, el leh ma eo ken tomm ar gwad hag e leh ma zo soudarded⁴³ ha ne heller ket da gomandi pa garer.

An departamant, nehet a-walh, a houlennas digand Expilly petra 'vije 'r gwella da ober. « Mad, ema ar veleien e Brest, a respontas an eskob iñtru, lezit anezo eno. »

*

⁴³ ma zo soudarded : ma'z eus

Koulskoude, ar veleien a gargas eun ofiser a vor da gas o hlemmou d'an Departamant. E ano 'oa Carnavalet. Skriva 'reas da Gemper. Hag e lizer a ro deom da anaoud pegen garo 'oa buhez ar veleien geiz, er prizon.

« Ar veleien a zo dalhet, e Brest, a lavare, o-deus soñjet e vije bet eur blijadur evidon dond da rei dezo skoazell en eur lakaad dirazoh ar poaniou o-deus da houzañv, bemdez.

Ar re 'zo karget d'o diwall a ve aliez, da genta, o lavared dezo traou diêz...

Eun den koz a zo deuet deuz a zeg leo, evid gweled e vab ha pokad dezañ, er prizon. Harluet eo bet kuit. Ar gardian n'eo ket falvezet gantañ hel lezel da weled e grouadur.

Eur vaouez, tost d'he fevar-ugent vloaz, a zo bet deuet evid gweled he breur. Lavaret e zo⁴⁴ bet dezi ne helle ket hen ober. Neuze eh en em daolas da leñva. Hag ar soudard 'oa e dro da ziwall ar veleien, d'ar mare-ze, 'oa evelato, beget e galon, hag a yeas da lavared d'ar breur en em lakaad en eur prenestr. Ar breur hag ar hoar en em wel, ha dre zin er tiskouezont o harantez an eil d'egile. War ar mare, dres, e tegouez eun ofiser. Gweled a ra ar breur hag ar hoar o selled an eil ouz egile hag e hourdrouz ar soudard da veza lezet ober traou evel-se.

Eur beleg hag en-deus ezomm da gemered êr, dre ma ema war-nez kaoud eun taol gwad, ne vez ket lezet da vond da bourmen d'ar jardin.

Eun all hag en-deus daouzeg vloaz ha tri-ugent, 'oa miret outañ da vond da interamant e hoar.

Erfin, ar veleien geiz-se, a garg ahanon da lavared deoh n'eo, c'hoaz, netra an trubuillouze. Gwasa a gavont eo gweled skeudenn ar maro, bepred, dirag o daoulagad. »

Al lizer-ze a zegouezas gand an departamant e derou miz Gwengolo.

D'ar memez mareou an Assemblée ntionale he-doa goulennet digand ar Roue lakaad, eur wech c'hoaz, e ano war al lezennou he-devoa greet evid diskouez e kave mad anezo.

D'an drizeg a Wengolo, ar Roue a roas e zinatur. Mez goulenn a ree ma vije ankounac'haet an amzer dremenet ha lezet da goueza an tamallou, greet abaoe komañsamant ar Revolution, dre abeg al lezennou nevez.

Kerkent, dre Vro-Hall a-bez, 'oa roet frankiz d'ar veleien, nemed er Finistère. Expilly a lakaas derhel er prizon e genvreudeur valeuruz, beteg ar seiz warn-ugent a viz Gwengolo. Ha pa oant lezet, pelloh, da vond kuit, an departamant, war goulenn an eskob inñtru, a zivennas outo mond d'o farrez koz, mond zoken tostoh eged peder leo d'ar barrez-se. Ouspenn, oa gourhemennet dezo kaoud eur paper-hent⁴⁵ ? Hag evid mond da gerhed ar paper-ze, e rankent treuzi kêr Vrest, war var da veza lazet gand al lamponidi, er ruiou.

Mez, kerkent, ha ma oant er-mêz deuz kêr, ar brizonerien baour 'oa digollet deuz o foan. Tud goueled Leon 'oa deredet a-vandennou, d'o diambroug. Lod a lamme d'o briata. Oll e leñvent. Oll en em strinkent d'an daoulin evid goulenn o bennoz. « Deuit d'am zi, aotrou, a vije lavaret dezo : an tamm kenta a vezo bepred deoh en dorz, ar plas uhella deuz an daol, ar gwele tomma da gousked. Sur om da gaoud bennoz evid beza roet lojeiz da eur beleg hag en-deus gouzañvet evid Doue. »

*

XIII

An Assemblée législative. Freuz ha dispah er parrezioù gwasoh eged biskoaz. Ar veleien touerien a o flata o hamaraded. Ar veleien vad taolet, en-dro, er prizon. O stad e Kastell-Paol. Lezenn an harlu.

⁴⁴ e zo : ez eus

⁴⁵ eur paper-hent : notenn el leor :passe-port.

An Assemblée nationale 'oa padet beteg an dregont a viz Gwengolo 1791. Nao miz warn-ugent 'oa bet oh ober he zro. E-pad an amzer-ze he-doa greet a bep seurt reuziou fall : lakaet beleien da drei eneb ar Pab, greet d'ar Roue horjella war e dron, kaset da netra al lezennou koz, lakaet brezel etre an dud, kemeret madou an Iliz, roet tro da ober ar revolusion ha rivinet ar vro.

Meur a zen a zoñje : an Assemblée nationale a zo bet fall. Ar gannaded a deuio, goude, a vo gwelloc'h. Ar gannaded a gemeras an ano a Asemblée législative. Ne oa tamm gwelloc'h. Ni a welo, kerkoulz, he labouriou. Ne oa enni nemed daou veleg iñtru, deuz Breiz : Le Coz, arheskob Roazon, ganet e Plounevez-Porze, hag Audrein, vikel eskob iñtru ar Morbihan.

*

Koulskoude, Expilly a gave diêz a-walh abaoe ma oa digoret ar prizon war ar veleien vad. Karet en-dije na vije bet en e eskopti, nemed beleien euz e zorn.

Mez ne oa ket pell, en-doa, adarre, tro da zastum ar re a zisplije dezañ. A-veh ma oant degouezet en o farreziou, an oll, evel diagent, a rede war o lerh. Hag ar veleien touerien, dre warizi, en em lakaas da flata, gwasoh eged biskoaz.

Ar henta 'oa Bazil, person Plougin. Skriva 'ree da zistrict Brest, d'ar seiz warn-ugent a viz Here 1791 : « Ar mêr a zo deuet da houlen diganen alhwez an armel a zo enni ar haliriu. Lavaret en-deus din n'em-bezo mui an alhwez-se. Lezet e vezo, bremañ, etre daouarn prokureur ar gomun. Ar pokureur en-devo ouspenn alhwez ar sakreteri hag unan deuz alhweziou an iliz. Abalamour da betra ? Abalamour d'ar veleien n'o-deus ket touet, difouchet⁴⁶ deuz o zoull kuz, abaoe disadorn. Bremañ e hellont, adarre, mond e leh ma karont ha kas d'o heul n'eus forz piou, lavared an overenn, konsakri, rei ar gomunion... Karoud a rafen gweled ar veleien n'o-deus ket touet o houlen diganen lavared an overenn ; karoud a rafen kaoud em dorn alhwez armel ar haliriu... Ma ne heller ket, en eur feson pe feson, teuler ar mêr d'an traoñ d'an eleksionou kenta, ne vezo, morse, amañ, urz na polis ebed. »

Thomas, iñtru Landunvez, a lavare ar memez tra da zistrict Brest, d'ar 24 a Henver. « C'hoant em-oa, emezañ, da veza mignon d'ar veleien ha n'o-deus ket touet. Mez ne hellan mui. Terri a reont, bemdez, lezennou ar vro, dizrei a reont an dud deuz ar veleien a zo pleget d'al lezennou-ze... Diskuill a ran deoh, ivez, Salaun, mêr Landunvez. Nahet am-eus d'an aotrou Le Hir, chaloni deuz Kerzent-Tremazan, badezi dezañ e grouadur. Rag beza ez eo enebour touet d'al lezennou : e wreg en-deus kaset da Borspoder da henel he bugel. En an' Doue, taolit mêr Landunvez e Kastell Brest. »

E Kerhaez 'oa eur beleg iñtru hag a ziskuille ivez. Hennez 'oa Blanchard. Hag e lavare 'oa deuet en-dro, er barrez, an aotrou Huitorel.

« Disadorn, emezañ, ar beleg-se, war-dro nao pe zeg eur, a zo deuet da iliz Sant-Tremeur evid lavared e overenn. Eur bobl tud 'oa deuz e heul. Kaset em-eus ganen d'am zi alhwez ar sakreteri hag eno, dirag ar gukêr⁴⁷ en-deus forset ahanon da rei an alhweziou d'ar beleg-se... Eet on d'ar sakreteri hag eno, dirag ar gurusted hag ar hloher, em-eus lavaret da Huitorel e tivennen outañ overenna. Mez ar pezh a zo ar gwas, hag a zo eur vez, koñsaill an ti-kêr en-deus galvet ahanon dirag an aotrou Quemar, prokureur ar barrez, war digarez em-oa roet skwer fall... »

E Sant-Tegonneg, d'ar c'hwezeg a viz Du, ar goñsaillerien o-unan a skrivas d'an district evid lavared dezañ en-doa an aotrou Alanet, person iñtru, divennet deuz an aotrou Drolac'h, en e ano hag en ano Expilly, lavared an overenn. Kalz tud 'oa d'ar mare-ze en iliz. Freuz a zavas. Anez ar mêr, Pierre Fichou, an aotrou Alanet en-defe tapet e stal.

⁴⁶ difouchet : ?

⁴⁷ gukêr : ?

Deuz e gostez, ar beleg iñtru en-doa skrivet da Vontroulez. Ha district Montroulez a zegasas evid ar zul 23 a viz Here daou archer da Zant-Tegonneg.

Er memez amzer, e kasas daou archer all da Bleiber-Krist. Eno edo ar person koz, an aotrou Le Gall, en em zavet eneb ar veleien o-doa touet. Ouspenn-ze, dalhet 'oa tri-ugent soudard prest da vale war ar parrezio-ze, ma vije red.

E Lokronan-ar-Fank, Georges-Louis Camarec, Nicolas Duval ha Jean-Marie Costiou, koñsaillerien an ti-kêr, hag Yves Mevel, prokureur ar barrez, a flate an aotrou Trevien, ar hure koz, deuet en-dro, hag ar mêt Le Hir a oa a-du gantañ.

D'ar henta a viz Mae, mêt Kameled, an Dall, a ziskuille e berson. « N'eo ket falvezet gantañ, a lavare, lenn mandamant an aotrou Expilly. Ne anavez ket an aotrou Expilly evid e eskob. »

E kant leh all e c'hoarveze ar memez tra. Dalhmad e teue klemmou da gaoud an Departamant.

Koñsaill jeneral ar Finistère en em gavas e Kemper, d'an driweh a viz Du. Diohtu eh en em lakaas, na petra 'ta, d'en em emell deuz ar veleien na douent ket. Hag e lakaas skriva eul lizer d'an Assemblée législative, evid goulenn diganti ma hellfe ar re 'zo o ouarn eun departamant kas d'ar broiou pell ar veleien n'o-deus ket touet. « Arabad kredi, a lavare al lizer-ze, e ve ar veleien a en em ziskouez eo a ve o lakaad freuz er parrezio. Nann. Enebourien wasa al lezennou eo ar re en em guz a-zindan mantell ar relijion, a ya er gador-goves, a ya er gador-zarmon, hag a lavar d'an dud aonig eo ar veleien o-deus touet enebourien ar feiz. Kredit ahanom, an droug greet, dija, a zo heb muzul.

Ar penn-abeg deuz an dizurziou a zo bremañ er vro eo bet al lezenn he-deus digoret ar prizoniou. Lakaet on-doa, enno, ar veleien n'o-doa ket touet, hag ar peoh a deue nebeud-ha-nebeud, hag an dud en em voaze, tammig-ha-tammig, deuz ar veleien o-doa pleget d'al lezennou.

Evid bremañ, ar pezh a ve gwella da ober, eo farda eul lezenn hag a lezfe gand an Departamant ar galloud da gas d'an harlu ar veleien n'o-devezo ket touet, ma lakaont freuz en eun tu bennag. »

*

Koulskoude, evid ar mare, 'oa ouspenn ar veleien vad oh ober enkrez da houarnamnt ar Finistère.

District Brest a skrive d'an departamant d'an drizeg a viz Du : « Emaom o kas paper ar hontribusionou. Aon on-deus na zavfe ravolt, pa welo an dud ar hemm a zo etre ar pezh o-deus da baea, bremañ, hag ar pezh a baeent a-raog. Evid ober mad, a gav deom, e ve red lakaad, e pep kanton, kant hanter-kant pe daou-hant soudard. »

Eun devez bennag goude, district Brest a skrive c'hoaz : « Eskob Leon en-deus degaset da veleien ar parrezio, ha zoken da goñsaill an ti-kêr deuz peb leh, eul lizer a lakaio an tan er vro... kalz parrezio, war digarez al liberte, a houlen kaoud en-dro ar veleien n'o-deus ket touet... E meur a leh beleien ar houarnamant o-deus ranket sina na en em emellint mui da ober netra. »

Êz, ma o-dije karet, 'oa bet da ouarnourien ar Finistère degas ar peoh en-dro. Ne oa da ober nemed rei d'ar parrezio o goulenn. Mez siwaz ! degouezoud a ra mareou, evel-se, hag e weler skrivet war peb moger, hag e vo hopet e peb leh : liberte, egalite, fraternite. Hag e neb leh ne ve frankiz nemed d'an dud fall. An departamant a ree eneb-beo d'ar pezh a houlenne tud ar vro.

D'an nao warn-ugent a viz Du 1791, touellet, e lavarent gand Expilly ha gand Gomaine, e vikel, koñsaill jeneral an Departamant a reas al lezenn-mañ eneb ar veleien vad :

1° Kement beleg a zo e nao district ar Finistère hag o-devezo dre skrid, dre zarmoniou pe hend-all, lakaet da ziskenn ar respet dleet d'al lezennou, pe c'hoaz, kaozet eneb ar veleien o-deus touet, pe erfin, lakaet freuz er parrezioù, a vezo kaset da Vrest ha dalhet eno ;

2° Ar veleien a zo bet dija e prizon Brest pe a zo bet lakaet o ano ha klasket evid mond di, a vezo, dre oll, kroget enno ha taolet er prizon ;

3° Karga 'reom ar prokureur syndik hag an directoire deuz peb district, da ober eur roll deuz an oll veleien a hellfe beza lakaet er prizon ha da ober ar henta 'r gwella, ar pezh a hellint evid o has da Vrest ;

4° Karga 'reom district Brest da glask eul leh da ober eur prizon.

District Brest a reas eun tammig kempez d'ar Hastell a weler c'hoaz war bord ar mor pa'z eer da Rekourañs. Eno, en-doa soñjet prizonia ar veleien. Rag e kouent Carmes 'oa bet, abaoe miz Du, lakaet soudarded.

*

Ar genta 'oa kaset, en taol-mañ, d'ar prizon, 'oa an aotrou Richant, deuz Brest. O chom edo e Porzig-Keri-gi, e parrez Poullan, e ti an itron Lesègues, intañvez Moreau de Rozanselin. Tud deuz Douarnenez a yeas da glask anezañ hag her havas, deuz an noz, o lenn, en e wele. An dra-ze 'oa d'ar 1^a a viz Kerdu.

D'ar memez devez 'oa kroget el lodenn vrasa deuz koñsaill an ti-kêr, e Plougin. Charles Le Guen, Michel L'Hostis, Michel Lort, Jean-François Tournellec, François Bolloré, Yves Le Bris ha François Lescop 'oa degaset d'ar prizon, rag m'o-doa goulennet o beleien vad, en-dro.

Klasket 'oa ivez, er memez devez, paka an aotrou Le Guen hag an aotrou La Briochais, beleien, o chom e parrez Plougin. Mez tehet 'oant kuit.

Kerkoulz, dre oll, eun tammig, ar veleien o-doa klevet diwar-benn al lezenn nevez hag a oa en em guzet. Abalamour da ze an troiou kenta greet evid o hlask a oa bet, aliez, troiou goullo.

Ha neuze, ivez, e meur a leh, 'oa kavet diêz kregi er veleien. « Amañ, a lavare an aotrou Dizez, prokureur district Montroulez, n'oa trouz ebed mui. Bremañ, avad, ne ouzon ket petra a zegouezo. »

Mez al lodenn vrasa deuz ar re a oa e penn an district-se, 'oa tud troet fall, abaoe an eleksionou diweza. Lakaad a reont kregi, d'an dri a viz Du, an aotrounez Noannez, person Sant-Melani, de Lannurien, jezuist, Breton, kure Sant-Martin. Tri devez goude e lakaont kregi e pevar beleg all : an aotrounez Pifot, Le Balc'h, Forestier ha Sannier.

War-dro fin miz Du, archerien ha soudarded deuz ar garde nationale, 'zo eet da Zant-Seo da glask beleien. Gwall-grogad 'oa bet. Al labourerien-douar 'oa deuet da zoudarded ar gouarnamant gand feier houarn, bizier, hag a reas dezo tehed. Mez, en deiz war-lerh, 'oa kaset war ar barrez-se seiz-ugent soudard ha daou bez kanol. Unneg den 'oa degaset d'ar prizon.

D'an drizeg a viz Genver 1792, district Montroulez a lakaas kregi en aotrou Guy Cras 'oa o chom e ti ar Bonnel, kloher e Sant-Tegonneg. Koñsaill munisipal ar barrez a yeas en egar hag a hoantaas kaoud, en-dro, ar beleg mad. Nann, a respontas district Montroulez, ar beleg-se a zach war e lerh an tri-hard euz ar barrez.

Eur miz bennag goude, d'an deg a viz C'hwevrer, pevar archer a ziskennas da hanternoz e ti ar person iñtru. Goulenn a reont digantañ penaoz en em gemer evid kregi en aotrounez Drolac'h ha Rolland. – Ne dalv ket ar boan deoh mond d'o hlask, a respontas ar beleg fall. N'o havot ket, rag, morse, ne gouskont diou nozvez er memez ti. Gwella 've eo gortoz anezo a-zindan an tour. Da hweh eur e lavaront an overenn, bemdez.

Da hweh eur, e gwirionez, 'oa tintet ar hloh. Tud e-leiz a zegouezas. An aotrou Rolland a lavaras an overenn. An archerien a yeas d'an iliz. En eur o gweled, eur vaouez a lammas gand kordenn ar hloh da ober son an tangwall. Eun archer a fellas dezañ mired outi da zeni. Mez

gwall laoniet 'oa ganti. Dija he-doa lakaet kordenn ar hloh endro d'e zivreh ha d'e zivesker, pa zegoueza, euruzamant evitañ, eun archer all d'hen diluzia.

Pelloh e tegouezas ar mêt, Bernrad Breton. – E peleh, a lavaras d'an archerien, ema ar paperiou hag a ziskouez ho-peus gwir da zond amañ da gerhad beleien ? – Or paperiou a zo ganeom, eme an archerien. – Alo, mad. Mez gweled a rit e zo⁴⁸ degouezet eur bern tud. Ne hellfeh, hirio, ober netra. Hag an archerien a rankas mond kuit.

En devez war-lerh, mêt Sant-Tegonneg a lavare da zistrict Montroulez en em garge e-unan da glask ar veleien n'o-doa ket touet : ar pezh sur, n'edo ket en e zoñj. Hag er memez amzer ar hoñsaill munisipal a ree d'an district ar gentel-mañ : « Ne ouzom ket abalamour da betra e virit ouz an dud da heul o houstiañs. Lezit 'ta e-keñver an dra-ze, frankiz gand pep hini. Ar parrezioù diwar ar mêt o-deus dienez d'ar veleien n'o-deus ket touet. Ma'z it eneb o bolontez e pakfot afer fall. Mez lezit liberte gand peb den hag an traou a jomo didrouz. E Sant-Tegonneg eo bet sioul an traou beteg-henn. Pennou foll o krial eneb ar veleien n'o-deus ket touet, o-deus lakaet an tan... Hirio ar veleien vad a zo tehet kuit hag amañ an oll a zo o keuziad dezo... »

*

District Lezneven a lavaras d'an departamant :

« Er harter-mañ n'eus trouz ebed. Den ne en em glemm deuz ar veleien. Mar deom da brizonia anezo, neuze avad, e vezo c'hoari. An dud, war-dro amañ, ne anavezont ket a veleien all nemed ar veleien n'o-deus ket touet. Marteze en em faziont. Mez petra 'fell deoh ? er giz-se ema an traou. Koulskoude, ma klevom eun trouz bennag lakaet gand eur beleg, ar beleg-se a vo kaset, diohtu, da Vrest. »

Ha district Lezneven ne glaskas afer ebed, deuz ar veleien.

Koulskoude, d'an dregont a viz Ebrel 1792, an Departamant a hourhemennas dezañ teuler er prizon an aotrounez Roudaut ha Bleunven, deuz Plougerne, pe 'vije kaset soudarded anevet d'ar barrez-se. Mez an daou veleg-mañ, o soñjal en droug 'oa bet greet d'o henvroiz gand ar zoudarded, daou vloaz a oa, a yeas anezo o-unan d'en em lakaad etre daouarn an archerien.

*

Prokureur district Landerne, ar Gall, a reas evel hini Lezneven, da vihanna da genta. A-raog e tiskuille beleien. Mez bremañ e kave dezañ e reed re dezo. D'an eiz a viz Kerdu, e skrive da Vrest hag e lavare : « Ar veleien am-eus kaset o ano deoh a zo hirio e prizon Brest, nemed an aotrou Julien, dalhet e prizon Landerne. An aotrou Pellen, kure Landivizio, an aotrou Roquimarc'h, person ar Merzer, a zo kaset da Vrest. Mez abaoe ne ouzon ket e piou eo kroget. N'em-eus ket a gouraj d'hen goulenn. Re a reer dezo ! An aotrou La Rue, en desped ma eo mahagnet, a zo ivez kaset da Vrest. Ne gav ket din e houlennfe al lezenn kement-se. »

Mez truez Prokureur Landerne ne badas ket pell.

E derou miz Genver, an aotrou Ouroual, beleg touer, a oa bet eet da Blougorn, en esper beza tronet. Mez ar barrez oll a zavas eneb dezañ. Ar paour-kêz loudig a rankas dond war e giz. Ha prokureur Landerne a lakaas e vije kaset, a-benn ar zul war-lerh, daou-hant soudard da Blougorn evid troni ar person iñtru ha kregi en Herve Kervian, Claoda Faujour, Herve Cadiou, Yves Larnicol hag ar Grall 'oa bet e penn ar freuz. Da heul, evel a heller kredi, 'oa lavaret tapoud, ivez, beleien vad Plougorn. Tri 'oant : an aotrou Bihan, person, Le Corre, kure Plougorn, ha Moal, kure Santez-Katell.

⁴⁸ e zo : ez eus.

D'ar 26 a viz Genver, tri archer ha soudarded a zegouezas e Plougorn. Kaoud a ree dezo o-dije gellet êz paka preiz. Evid eur wech, o-doa bet eur zouezenn.

An tri archer a yeas da Zantez-Katell. Noz 'oa. An aotrou Moal 'oa en e wele. Ober a rejont dezañ sevel hag e kasont anezañ ganto. Mez tud ar harter o-doa klevet ha gwelet. Buan eh en em vodont. Teuler a reont mein ouz an archerien. Ar re-mañ a denn gand pistolennou. Mez kaer o-deus ober, e rankont diskregi deuz an aotrou Moal. 'Hend-all o-dije lezet o buhez.

D'an noz, etre ar 6 hag ar 7 a Hwevrer, district Landerne a reas kemer an aotrou Nicolas, kure Plouedern, evid ma roe an nouenn da unan klañv.

*

E-doug an amzer-ze ez ee fall an traou ivez e district ar Pont. D'an nao a viz Kerdu 1791, an district-se a skrive d'an departamant en-doa taolet er prizon : an aotrou Le Gac, ganet e Plounevez-Porze ha rejant e kelenndi Kemper, abalamour n'en-doa ket touet hag abalamour ma edo o chom e-touez tud hag a zo eneb ar gouarnamant : an aotrou Plohinec ; kure ar Pont, rag ma sach d'e di tud hag a zo eneb ar vro ; an aotrou Gloaguen, kure Ploare, evid beza labouret e meur a barrez, eneb lezennou ar vro ; an aotrou Rochedreux, kure Gwiler, e parrez Mahalon, evid beza kaset eneb beleien ar houarnamant, dreist-oll eneb an aotrou Ollivier, ha beza greet heb goulenn na diskenn, labour eur person e Pouldergad, Landudeg ha Plozeved ; an aotrou Charlès, en-deus greet eun droug braz e Plozeved, d'an aotrou Quillivic, ha lakaet, e Kleden hag e Plogoñ, an dud da enebi ouz ar houarnamant ; Guezengar, kure Pleiben, evid beza dizroet oll parrezioù Kleden ha Plogoñ ; ouspenn-ze lakaet o-deus ar veleien n'o-deus ket touet da vond er-mêz deuz an ilizou e-pad ma vije beleien ar gouarnamant oh overenna ; lakaet en-deus, ivez, e oll gerent da drei eneb al lezennou ha da lavared na baeint foñcher na taill ebed.

Ar c'hweh beleg-se 'oa kaset, kevred, da Gemper. A-zindan an noz 'oa. Eur glao a ree ma'z oa spontuz. Pell a-raog ma oant degouezet, ne oa ket warno eun neudenn zeh. Deut 'oa unneg eur, en devez war-lerh, ha n'o-doa bet tamm. Unan anezo a gredas goulenn eun dra bennag da zebri. Neuze 'oa taolet dezañ eun tamm bara, gand fae ha dismegañs. Ar chas a vez greet gwelloc'h dezo.

E mare div eur 'oant kaset d'ar Seminer. O weled anezo chadennet o vond dre ar ruiou, Kemperiz 'oa beget o halonou : kalz, zoken, a leñve. Pemp devez goude, archerien a yeas d'o diambroug beteg prizon Brest.

Diwezatoh, d'an daouzeg a viz Even, district ar Pont a lakaas e grabanou war an aotrou Kerniliz 'oa o chom e maner an aotrou de Plœuc, ha war an aotrou Morvan, person Plouneour-Lanvern.

District Kerhaez en-doa lakaet kregi e tri beleg : an aotrou Hourmant, kure Tremeog, arretet d'ar seiz a viz Kerdu, an aotrou Kernaléguen, person Berrien, d'an unneg a viz Kerdu, hag an aotrou Séac'h, kure Sant-Tudeg, e parrez Poullaouen, e komañsamant miz Genver.

Diwezatoh, d'an daouzeg a viz Meurz 1792 e lakaas teuler er prizon an aotrou Bernard, person Skrignag, e gure an aotrou Brelivet hag an aotrou Hascoet, o chom er barrez.

E district Kastellin ne oa kemeret, da genta, nemed daou veleg : an aotrou Quinquidec, kure Sant-Segal hag an aotrou Yves Bozec, kure Gouezeg. Mez d'an nao warn-ugent a viz Mae 1792 'oa arretet c'hoaz an aotrou Jourden, kure Ar Faou e parrez Roznoen, ha d'an daou a viz Eost, an aotrounez Doare, person Kimerh, ha Salaun, e gure. E-kreiz an noz e oa. A-veh ma oa roet amzer dezo da wiska o dillad.

*

District Kemper a gasas da Vrest an aotrou Vistorte, kure Plogonneg, d'ar 15 a viz Kerdu. Diwezatoh, e reas kregi en aotrou Guyomarc'h, kure Beuzeg-Konk hag en aotrou Keruhel, sakrist ar chalonied e Kemper. Diwezatoh c'hoaz, d'ar bevar a viz Even, 'oad kroget en aotrou Denys, person Loktudi, ha d'an 12 en aotrou Le Clec'h, person Ploare. Er miz war-lerh (26 Gouere) 'oa kaset da Vrest an aotrou Treboul, kure Pluguen hag an aotrou Bollore, beleg euz Plomeur.

An aotrounez Boissière, sekretour an eskopti ha Penanros, priol Sant-Herbot, 'oa arretet en Elliant. D'ar memez mareou, 'oa kroget en aotrounez Guellec, kure Sant-Ivi, Rouzic, beleg er gatedral ; Bozec, kure Gourlizon.

Ar pemp beleg-se 'oa kaset da Vrest, d'ar bevar a viz Gouere. Da beder eur deuz an noz 'oant loheta deuz Kemper. Daouzeg "garde nationale" o diambrouge. Kemperiz 'oa en em lakaet, en daou du, war ar ru deuz ar Seminer beteg ma oant eet er-mêz euz kêr. Meur a hini a ouele doureg.

E miz Gouere, ivez, ar polis a gemere e Gwengamp an aotrou Guilleroux, person Penharz, hag an aotrou de Silguy, chaloni. O-daou 'oant gwisket e bourhiz : o-daou 'oant degaset da Vrest.

*

Stad ar veleien e Kastell Brest 'oa gwasoh c'hoaz eged na edo e kouent Carmes. Lakaet 'oant hanter-kant ha tri-ugent, zoken, er memez kambr. N'o-doa skabell ebed da azeza ha ne hellent chom nemed en o zav pe azezet war o gweleou. Morse ne vijent lezet da ziskenn er porz nag er jardin. Ha koulskoude an êr er gambr a deue da veza fall. Da zebri n'o-doa ket hanter leun o hov ha da eva n'o-doa nemed eur banne gwin hanter-vrein.

O-unan e skrivont d'ar Roue evid goulenn ar frankiz. « Aotrou Roue, a lavarent dezañ, beleien valeuruz a skriv deoh deuz goueled Kastell Brest. Sevel a reont o daoulagad war-zu ennoh evid ho pedi. N'o-deus esperañs ebed mui nemed en ho madelez.

Kalon o-deus c'hoaz dre ma n'en em gavont kabluze war netra. N'eo ket c'hoant a vank koulskoude da damall o buhez. Or hlemmou, zoken, a laka kasoni da goueza warnom. Lemel a reer diganeom ar peza a laka peurliesia eur begadig eurusted e kalon an den : gweled ar re all o truezi dezañ. » (12 genver 1792).

O kaoud al lizer-ze, ar Roue kêz 'oa beget e galon. D'ar bemp a viz Meurz e hourhemennas rei liberte d'ar veleien dalhet e prizon Brest. Mez dija ar Roue kêz n'oa mestr da netra e Bro-Hall.

*

Deuz e gostez, an aotrou de la Marche a skrive da ouarnerien ar Finistère, d'an ugent a viz Ebrel 1792 : « Aotrounez, en ano an druez a heller da gaoud ouz an dud valeuruz, e tegasan da zoñj deoh deuz ar brizonerien ho-peus dilezet e Kastell Brest. C'hwi ho-peus gourhemennet o zeuler eno. Pemp miz a zo, dija, emaint bern war vern er memez sal, e-kichenn diou zal all hag a vez enno prederiet ouz ar re o-deus paket kleñvejou louz o tarempredi lehiou fall. An êr bilimuz, ar goañv braz, ar boued dizantsun⁴⁹ o-deus dija gwall gastizet o yehed. Daou 'zo maro ; unan en-deus kollet eul lagad ; triweh a zo kaset d'an ospital klañv-braz ; ar re all a zo o langisa.

Koulskoude n'o-deus greet torfed ebed. Soñjet e zo⁵⁰, avad, e hellfent ober. Mez antronoz, teuler tud er prizon, abalamour ma ho-peus aon, e lakafent reuz da zével, mez kastiza tud a-

⁴⁹ dizantsun : ?

⁵⁰ e zo : ez eus

raog ma vint kabluz a zo – lezit ahanon d’hel lavared deoh – a zo beza didruez, beza heb lealded, a zo bresa, a-zindan an treid, gwir pep hini.

Touet ho-peus fidelite d’al lezenn, d’ar vro, d’ar Roue. Al lezenn ? Mez enebi a rit outi. Ar vro ? Mez an darn-vuia deuz ar rouantelez a gas o hlemmou eneb deoh. Ar Roue ? Mez lavaret en-deus deoh petra ‘houlen.

Perag eta, ne roit ket frankiz d’an dud keiz-se, d’ar veleien hag ho-poa, gwechall, istim evito, d’ar veleien hag a estimit c’hoaz, mar ho-peus eun tammig feiz. Ne gav ket deoh e ve deuet ar mare da derri o jadennoù ? A ! deuz ar jadennoù-ze e tougint ar merk pell ! beteg ar maro. Pegeid c’hoaz o lezo da gaoud poan ? Emichañs, n’ho-peus ket o hondaonet d’ar maro ? da eur maro hir ha didruez, da zond deuz ar prizon nemed evid mond d’ar vered pe d’an ospital.

Ma n’o-deus ket touet senti ouz al lezenn nevez, eo me a zo bet abeg dezo. O lezit eta da vond, pep hini en e frankiz, ha me ‘dreuzo laouen ar mor evid en em lakaad etre ho taouarn, ha mond en o leh d’ar prizon. »

D’ar mare-ze ivez, kalz parrezioù a skrive d’an Departamant pe d’an district evid goulenn rei dezo o beleien. Evel-se e reas Kemper, Plouzevede, Skrignag, Plogonneg, Bannaleg ha re all. Berniou liziri, warno ano kement hini a ouie sina er parrezioù, a zegoueze bemdez, e Kemper, evid an dra-ze. Gouarnourien ar Finistère n’o lennent ket zoken, peurlies. Koulz lavared, beleg ebed n’oa lezet da vond kuit.

Parrez Skrignag a en em zavas. Mez e-leh ar beleg e houlenne ‘oa kaset soudarded eneb dezi. Stourmadeg ‘oa bet el lenneier a zo etre Skrignag ha Berrien. Skrignagiz n’o-doa ket a fuzuilloù hag a oa trehet.

An oll draou-ze, kouskoulde, a lakaas meur a zoñj da dremen e penn ar re o kas an departamant en-dro. A-nebeudou e teujont eun tammig da habaskaad e-keñver ar veleien ‘oa dalhet e Brest. E miz C’hwevrer ‘oa permetet an overenn er prizon. D’an unneg a viz Ebrel ‘oa lavaret d’ar brizonerien e hellent diskenn er porz hag er jardinoù. Diwezatoh o-doa skrivet d’ar Roue evid kemenn dezañ e vije roet frankiz d’ar veleien. « Mez, e lavarent, lezit ahanom d’o derhel c’hoaz eun tammig, er prizon, beteg sul ar Hazimodo, abalamour d’ar veleien o-deus touet da helloud, didrouz, ober ar Pask en o farrezioù. »

*

Koulskoude an Asemblée législative a oa, en em emellas deuz al lizer skrivet dezi e miz Du 1791, gand departamant ar Finistère evid goulenn kas ar veleien d’an harlu. Kalz tabut ‘oa etre ar Gannaded diwar lenn kement-se. Hag evid lakaad dougen ar veleien, al lezennou ar skrijusa e vije kontet gevier e-leiz diwar o fenn.

E Taole ‘oa bet degouezet eun darvoud braz. Eun den ha ne dee ket e gwirionez da overenn ar veleien iñtru ‘oa bet skoet gand eur barrad terzienn fall. Dre e derzienn e lazas e wreg hag e vugale. Galvet dirag al lezvarn, n’oa ket kondaonet da netra, evel just. Ar varnerien a zisklêrias ne helle ket beza kabluz evid eun dra greet gantañ dre e derzienn, heb gouzoud, ervad, petra ‘rae.

Mad, en Assemblée législative ez oa eur medisin deuz Montroulez, anvet Bouestard, hag a lavaras ‘oa tremen mall kas kuit ar veleien n’o-doa ket touet. « An darvoud, emezañ, a zo bet degouezet e Taole a zo bet c’hwezet ganto ober anezañ. »

Neuze, Benoisten, eun alvokad deuz Naoned, a lakaas dougen eul lezenn da gas d’ar broiou pell, eur beleg hag a vije bet flatet gand ugent den. (27 Mae 1792).

Ar Roue a nahas lakaad e ano evid embann al lezenn. Abalamour da ze ‘oa bet iset lamponed ha tud fall Pariz da vond warnañ d’e balez, evid ober aon dezañ. Eun tammig muioh e kollas e vuhez, en devez-se. Evelkent e chomas stad en e volontez.

Kement-se, avad, ne viras ket deuz koñsaillerien departamant ar Finistère da vond, war a-raog. Ind-i 'oa bet da genta, e Bro-Hall, o lavared lezenn an harlu : da genta 'oant, ivez, o lakaad plega dezi. D'an unan a viz Gouere, eh en em vodont e Kemper. Ha, goude beza soñjet, emezo, en torfed braz diskuillet gand Bouestard en Assemblée législative, e lakaont e vo ar veleien a zo e Kastell Brest kondaonet d'an harlu, nemed gwelloc'h e kavfent chom, atao, er prizon.

D'an unneg deuz ar memez miz, m'êr Brest hag e goñsaill a deuas da lenn d'ar brizonerien lezenn an departamant. « Eun devez ho-peus da ober ho soñj », a lavaras : « red e vo deoh ober ho choaz, pe mond d'ar broiou all pe chom er prizon, atao. »

*

Mez a-raog ma oa sevenet d'al lezenn 'oa bet war ar mare da veza dizammet deuz ar veleien en eur feson all.

D'ar bevarzeg deuz a viz Gouere 'oa greet e Brest eur gouel anvet ar "Fédération". Teir eur 'oa goude kreisteiz. Sada ma oa klevet eun dourni spontuz e-tal ar prizon. Eur bern soudarded a deu e porz ar hastell. Youhal a reont evel eur vandenn tud ouez. Mond a reont dirag ar prenestou evid lavared d'ar veleien a bep seurt traou divergont. En desped d'an diwallerien, eh êsaont mond, er zal, dre an nor. Pa welont e virer outo, eh en em lakaont an eil war egile evid pakoud ar prenest. Dija 'oant war ar mare da zond a-benn deuz o zaol pa zegouezas koñsaillerien an ti-kêr. Neuze, hepken, 'oa gallet o ameni hag o has kuit.

D'an deiz war-lerh, avad, labourerien ar porz a reas ar memez tra.

Koulskoude, ar veleien o-doa skrivet d'an departamant evid goulenn beza barnet. Al lezenn, emezo, ne houlenn ket lakaad er prizon nemed an dud o-deus lakaet freuz. Ne verk tamm e rankom a-zindan boan da vezo kondaonet, toui sentidigez d'al lezennou. Goulenn a reom eta beza selaouet gand ar varnerien.

Eun alvokad, hag o-doa karget da brezeg evito, a ziskouezas, ivez, d'an departamant pegement 'oa eneb al lezenn ar boan a raed d'ar veleien.

Mez gouarnourien ar Finistère, poulzet gand Expilly, ne rajont van. Kas a reont daou zen da Vrest da gaozeal ouz ar brizonerien ha da renka evito ar vuhez da zond.

An daou zen a oa Le Prédérec ha Daniel, koñsaillerien an district, e Kemper. Degouezet e Brest d'an dri a viz Eost, ez eont d'ar prizon en devez war-lerh.

Eno, en eur zal, lod deuz koñsaillerien an district ha koñsaillerien gêr en-dro dezo, e halvont, a unan da unan, ar veleien dirazo. Klask a reont, eur wech c'hoaz, o lakaad da doui sentidigez d'al lezennou. Mez an oll veleien a oa, eno, deuz eskoptiou Kemper hag hini Leon, a jomas stard en o feiz. Ha pa houlenned diganto, goude-ze, petra 'joazent pe an harlu pe ar prizon, an darn-vuia a houlennas mond d'an harlu.

Kerkoulz n'oa dalhet kont ebed deuz o goulenn.

D'an eiz a viz Eost an Departamant a lakaas e vije kaset an oll veleien d'ar Spagn nemed ar re o-doa ouspenn deg vloaz ha tri-ugent. « Ne hellom ket, a lavare, o derhel mad e Kastell Brest : sur e vijent lakaet d'ar maro gand Brestiz. »

Pevar devez goude, 'oant ambarket war eul lestr a reed ar "Jean-Jacques" anezañ. Evid mond el lestr 'oa greet dezo diskenn, deuz an tu d'ar hastell a ro war ar mor. Dre ma tremement, an dud war o hent 'oa ankeniet. Lod anezo, ha zoken soudarded, a leñve.

War an diwezadou, e tegouezas an aotrou de Silguy, chaloni, hag an aotrou Bazile Kerboull, frer-Carmes, e Kastell. O-daou 'oant harluet da heul ar re all.

Divennet 'oa dezo kas ganto aour nag arhant : an dra-ze a vije bet kas aour er-mêz deuz Bro-Hall. Mez roet 'oa dezo arhant paper : an arhant-se en-doa kour er Spagn, 'oa lavaret dezo. Siwaz ! arhant paper or bro n'en-doa, d'ar mare-ze, kour e neb leh. Hag ar pez a lavare dezo paotred an departamant 'oa evid ober goap anezo ha laerez o moneiz.

Eun devez a-raog c’hwezeg beleg koz pe mahagnet ‘oa lakaet war eul lestr evid mond da Waien. Ha Le Predour ha Daniel a skrive da houarnerien ar Finistère : « Pebez samm, tenned diwar chouk ar re a zo o ouarn ar gêr-mañ : pegement a neh tennet diwar spered ar re a jom enni. Eun dañjer eo lezel, en eur porz-mor evel hemañ, tud hag a vije bet kaoz d’ar freuz da zavel. » Ne zoñjent ket, sur, en eur skriva kemend-all, e vijent bet deuet a-raog daou vloaz da gemered leh ar veleien o-doa bet kaset kuit, e prizon Brest.

*

XIV

Ar veleien d a gas da Waien ‘oa taolet war eul lestr a reed an “Alexandre “ anezañ. Eet deuz Brest d’ar zul, eh errujont e penn o beaj, d’al lun, da unneg eur deuz an noz. C’hwezeg ‘oant.

Setu amañ o anoioù :

Louis de Lannurien ;

Etienne Bernard, person Skrignag.

Charles-César Le Clerc, person Ploare.

Yves Le Rouzic, kure ar chalonied e Kemper.

Mathias Mevel, aluzenner ar Halver, Montroulez.

Joseph-Marie Le Corvaisier, person Irvillag.

Pierre Quemeneur, person Sant-Mark.

Yves Le Roux, kure Plouziri.

Jean Michel, beleg deuz Gwimaeg.

Ollivier Hourmant, kure Tremog.

François-Marie Bazhere, de Lanley.

Joseph-Marie de la Rue, person Sant-Houardon, Landerne.

Pierre-Jozeph Rodenez, person-priol Sant-Thomas, Landerne.

Yves Kerniliz, aluzenner an aotrou de Pleuc, e Landudag.

Guillaume Gullou, person Mellag.

Jacques La Rue, kure Rekourañs.

Pa zegouezjont e Gwaien, kouent ar Gapusined, n’oa c’hoaz e par d’o degemer. Da hed al ‘oant bet kaset da di an dud ‘oa ar muia troet gand ar houarnamant, e kêr. Ne hellent ober pourmenadenn ebed nemed beza e vije deuz o heul an hini a roe lojeiz dezo pe unan deuz ar goñsaillerien munisipal. Divenn o-doa da lavared an overenn.

Pelloh, d’an nao warn-ugent a viz Eost, ‘oant klozet. Mez an ti n’oa ket c’hoaz prest a-walh. Ar speurinier ‘oa ranket da zavel evid ober eur prizon deuz ar gouent, ‘oa c’hoaz gleb, hag a lakaas meur a hini da veza klañv.

Evelkent, ar pezh o-doa kavet an diêsa ‘oa an urz striz lakaet warno. – Ne hellent kas na kaoud lizer ebed a-zindan boan da veza harluet. – Ne hellent, morse, gweled den ebed. – Ar re o-devoa ganto mitizien, ne hellent ket o has er-mêz da ober kevridi ebed. – Pourmen a hellent er jardinou. – lavared a hellent an overenn, mez, morse, er chapel.

Koulskoude, ar goañv a deuas. Ar veleien baour n’o-doa ket a zillad gwele. Dre drez outo, kêriz o-doa roet ar pezh a hellent. Mez n’oa ket a-walh, pell deuz eno. Ha d’ar bevar a viz Du, an aotrou Lanlay a skrive, en e ano hag en ano e oll genvreudeur, da goñsaillerien Waien : « Aotrounez, emezañ, an enor am-beus da lavared deoh e teu ar yenienn da lakaad da boueza warnom muioh-mui, pouez ar bloaveziou. Kalz en on touez ne hellont en em domma en eur vale, rag n’int ket gouest d’en em ambreg. Kerkoulz ar yenienn a vir ouz meur a hini diouzom, da vond er-mêz. Daou a zo klañv ha ne hellont dond deuz o gwele abalamour n’eus ket a dan. »

Koñsaill an ti-kêr e Gwaien a roas al lizer-ze da zistrict ar Pont. Ha district ar Pont a houlennas ma vije kaset ar brizonerien da gouent ar Retred da Gemper.

An departamant a gavas mad ar gouenn-ze. Ha d'an drizeg a viz Genver oa klasket, war ar mêz, kirri evid o dougen d'o frizon nevez.

An aotrounez Bernard, Penn ha Poho ne oant mui.

An aotrounez Barazer, Bricchet Keramec, Jacopin ha Joly 'oa maro. Mez en o leh 'oa bet degaset an aotrounez Le Masson, beleg deuz Brest ; Le Sénéchal de Penanguer, person Gouenou ; Antheil, person Gwiklañ ; Yves Lanrivinec, kapusin deuz Kemper ; Guerdon ha Lenormand, chalonied vikeled-vraz ; Levenez, kure Roznoen ha Frogerai, beleg a urz Sant-Sulpis.

Degouezet e Kemper 'oant kaset da gouent ar Retred. Eno 'oa kamaraded all : an aotrounez Kerdanet, kure Gwelvain, en Ederm ; Sez nec ; Heliou, person Sant- Kouliz ; Grégoire Hervé Le Guillou, manah ; René Le Borgne, person Goulhen ; Salomon Kermarrec.

Er prizon-ze, ar veleien 'oa brao a-walh. Mez e kouent ar Retred edo, ivez, an ospital. Soudarded klañv a deue di evid beza prederiet. Koueza 'reent jalouz deuz ar veleien. Teuler a reent dismegañs war o stad ha war o bleo gwenn. Pelloh e houlenont beza lojet el leh ma loje ar veleien.

An departamant a gargas tri den da vond da weled penaoz edo an traou. An tri-ze 'oa Douein, Expilly ha Dandin. Setu amañ petra 'gavjont da lavared d'ar c'hwezeg a viz Genver 1793 : « Eet om d'an ospital. Gwelet on-deus gand poan, eo lojet fall ar zoudarded. – Mad e ve, a gav deom, kas ar veleien da gouent Sant Frañsez, evel ma lavar an eskob. Mall e ve, ivez, rei ar gweleou gwella d'ar zoudarded klañv. Arabad lezel anezo da gaozeal gand den ebed. »

Ar homzou-ze a zo ganto blaz an eskob iñtru. Mez deuz o hostez ar veleien 'oa kontant a-walh da vond da eul leh all. Hag e oant kaset da gouent Kerlod.

*

XV

Labourou diweza al Législative eneb ar Relijion.- Ar houentchou lakaet e gwerz ; ar Roue taolet er prizon ; ar veleien lazet e Pariz ; Ar Goñvañsion.

Dre ma'z ee an amzer en-dro, ar gasoni deuz ar veleien vad ne dee tamm da vihannaad. Pell dioh eno. Gwasaad a ree, bemdez. Beteg ar bloavez 1792 n'oa ket bet, morse, ano da ziskar ar relijion. Mez goude, kannaded al Législative ne gaozeent ken, nemed diwar an dra-ze. En-dro d'ar gambr hag a reent o labourou enni, ar Revolutionerien a lakaas da zond ar falla tud deuz kêr Bariz. Ha pa ree unan bennag da êsa kaozeal evid ar relijion hag an urz vad, e vije youhet warnañ ha lavaret dezañ a bep seurt komzou hudur.

D'ar c'hweh a viz Ebrel, e lakaont dougen eul lezenn evid diskar ar houentchou a ree skol pe a brederie deuz ar re glañv hag a oa bet dalhet dezo beteg neuze. Er memez devez eun eskob iñtru, anvet Torne, a lakaas ober eul lezenn all evid lemel o gwiskamant digand ar seurezed, digand ar veneh hag ar veleien.

Beteg neuze c'hoaz, ar seurezed hag ar veneh n'oant ket taolet er-mêz deuz o ziez. Mez eun alvokad, anvet Charlier, a lakaas ober eul lezenn evid goullonderi ar houentchou ha gwerza anezo. Hanter-kant mil maouez, heb konta ar veneh, 'oa taolet evel-se, war an dispalur⁵¹.

Ar merhed-se, o konta mervel en o houent, o-doa staget outañ an oll danvez o-devoa. Mez an danvez-se 'oa dija bet kemeret gand ar gouarnamant. Gwir eo, prometet 'oa dezo, beb ploaz, eun nebeud pae. Mez ar bae-ze a vije roet en arhant paper ha ne dalveze netra, koulz

⁵¹ dispalur : ?

lavared. Evid e gaoud e vije red mond d'an ti-kêr da ober le da zenti deuz al lezennou. Koulz lavared hini deuz al leanezed na blegas da ober kement-se.

E-touez al leanezed ha seurezed, lod oa koz : n'oant mui gouest da labourad. Lod all 'oa klañv. N'eus forz. Tud ar gouarnamant 'oa digalon. O zeuler a reent dreist treuziou o houent, a-wechou, koulz lavared heb tamm dillad.

E-pad ma tremene an traou evel-se, an Aotrich hag ar Prus 'oa en emglevet da zond war Bro-Hall. An noblañsou, ar re 'oa tehet kuit abaoe tri bloaz, a en em lakaas a-du ganto. Ha c'hoant 'oa moug ar revolusion ha lakaad an urz vad da ren adarre en or bro.

Tud fall Pariz a en em zav a-eneb ar Roue, ha war digarez savetei dezañ e vuhez, ar Roue paour a zo taolet er prizon.

Tri den 'oa neuze o kas en-dro aferiou Bro-Hall : Danton, Robespierre ha Marat. Lakaad a reont an Assemblée législative d'ober lezennou kriz : 1° Ma ranko an oll veleien 'oa e karg ha n'o-deus ket touet, mond er-mêz deuz ar vro a-zindan pemzeg devez. A-hend-all e vo kroget enno hag e vezint kaset d'ar Guyane. Ar veleien n'o-do karg ebed, evel ar chalonied hag ar veneh, a ranko plega ivez d'al lezenn-ze ma lakont freuz en eun tu bennag. 2° Ma vo dastumet kleier an ilizou ha kaset d'an teuz d'ober kanoliou. 3° ma vo kaset d'an teuz, ivez, arrebeuri aour hag arhant an ilizou. evid ober moneiz ; ma vo greet an iñvañtor , en oll ilizou ha chapeliou.

Er memez amzer, paotred yaouank ar vro a zo savet da vond d'ar brezel eneb ar Brusianed. Mez goulenn a reont, ma ne vo ket lezet war o lerh ar veleien er prizoniou. Sevenet 'oa d'o goulenn. Hag e derou miz Genver 'oa lazeta en eur feson iskiz kement beleg 'oa e prizoniou Pariz.

Ar Finistère en-doa pevar euz e vugale e-touez ar verzerien-ze : Claude Laporte, person Sant-Louis Brest ; Le Livec de Tresperec, deuz Kemper ; Le Rousseau de Rosencoat, deuz ar Hastell-Nevez ; Nicolas-Marie Vernou, deuz Kemperle. An tri diweza 'oa jezuisted.

Ar re o-doa gourhemennet laza ar veleien e Pariz a gasas dihtu tud deuz o dorn dre gement korn 'oa dre ar vro, evid teuler spouron e kalonou an oll ha mired ma ne deufent da grial eneb ar lazerez-se.

D'ar Finistère 'oa bet degaset Royou Ha Jézégabel. Mez ar re a ouarne an Departamant a lakaas kregi e Royou hag a viras outañ d'ober netra.

Pemzeg devez goude 'oa echu he zro gand an Assemblée législative. Beuzi a ree er gwad.

D'ar c'hweh warn-ugent a Wengolo 'oa dibabet ar Gannaded nevez. Falloh 'oant c'hoaz eged ar re 'oa bet 'n o raog. Kemered a rejont an ano a "Convention nationale". Deuz ar Finistère n'oa beleg ebed en Assemblée-ze, nemed Gomaire, vikel-vraz Expilly.

XVI

Kouentchou ar Finistère da vare ar Revolusion.

Pemzeg oa bet diskaret.

Dre eskopti Kemper hag hini Leon 'oa pemp kouent warn-ugent bennag evid ar merhed. Unanou anezo a droas gand ar houarnamant evid ar pez a zelle diwar choaz ar zupierez hag an hini en em emelle deuz madou ar gouent. Mez a-hend-all, hini ne blegas. Ha koñsaill jeneral an Departamant a skrive d'ar bemp warn-ugent a viz Du 1791 : « An directoire en-deus kavet e-touez an merhed-se, ken bresk ha ken dister da weled, kemend a hardiegez hag a volonteiz da stourm hag e-touez ar gwazed ar muia troet eneb al lezennou nevez. »

Kerkoulz, setu amañ, e berr gomzou, ar pez a dremenas e pep kouent.

Kouent Kerfot 'oa er barrez a anver, hirio, Lokmaria-Kemper. Enni 'oa seurezed deuz a urz Sant-Bernard. Abadez pe superiorez ar Gouent a vije anvet gand ar Roue hag ar Pab.

Pa deuas ar Revolution, an abadez 'oa an itron de Kergu, eur vaouez leun a feiz hag a galon. D'an eiz a viz C'hwevrer 1791, koñsaillerien district Kemper a yeas da Gerfot. Lavared a reont d'ar seurezed e rankont, hervez al lezenn, eñvel en eur ober eleksionou o zuperiorez hag an hini he-devezo da en em emell deuz madou ar gouent. A-hend-all e rankint mond kuit.

« Ne fell ket deom mond kuit, a lavaront. Ne fell ket deom, kennebeud, eñvel or superiorez hervez lezenn ar houarnamant. » Hag an abadez a respontas : « Beza on superiorez keit ha ma chomin beo, hag hervez reolennoù ar gouent e hellan choaz evel ma kirin an hini, amañ, he-devezo d'en em emell euz madou ar gouent. »

D'an daouzeg a viz C'hwevrer 'oa kaset dezo, gand gouarnourien ar Finistère, eul lizer hag a lavare e vijent taolet kuit da fin ar miz ma ne deujent ket da blega.

D'al lizer, ar seurezed a respontas : « Nag an harlu nag ar maro ne hell on lakaad da nah senti deuz ar Pab. Hag abalamour da ze, on-deus lakaet en or penn derhel d'ar veuiou on-deus greet beteg ma plijo gand an Iliz terri anezo. Ha mar deu, d'ar re o-deus kemeret or madou da nah ouzom or bara, e fiziom e madelez Doue hag e brovidañs, hag e pedfom evid ar re a fello dezo on lakaad da vervel gand an naon. »

Koulskoude, prest goude, Expilly a zegouezas e Kemper. Gouarnerien ar Finistère o-doa an esperañs da weled anezañ o tond a-benn euz al leanezed. Mond a reas eta da Gerfot. Al leanezed a yeas oll d'e zegemer. Mez lavared a reont dezañ : « Aotrou, n'oh ket eskob. Beleg oh, netra ken. Ni 'fell deom mervel, on dorn e dorn ar Pab. » An eskob iñtru a en em dennas, mezeg ! Ne deas mui, biken, war-dro ar gouent.

Neuze 'oa klasket plega leanezed Kerfot dre an naon. D'an unneg a viz Ebrel, an hini 'oa karget da beurvei da ezommou ar gouent, a skrive d'an departamant : « Ouspenn ugent gwech on-deus goulennet diganeoh peadra da veva, ha ne deu netra. » Da viz Even, ar memez leanez a skrive c'hoaz : « Goude beza kemeret or madou, ne helloh ket, evelkent, on lezel da vervel gand an naon. Ne fell ket deom, evid gwir, tui sentidigez da lezennou ar gouarnamant. Mez n'eus lezenn ebed hag a lavar on lakaad d'ar maro evid kement-se. »

Diwar ar mare-ze e vije roet dezo eur gwennegig bennag. Deuz an nebeudig-se e vevent.

Koulskoude, seurezed an ospital 'oa bet kaset kuit deuz kouent Santez Katell, d'an unan warn-ugent a viz C'hwevrer 1791. Seurezed Kerfot a reas dezo degemer. Mez tri devez goude, ar beh a gouezas warno.

E-pad eun devez penn-da-benn, abaoe nav eur deuz ar mintin, beteg c'hweh eur deuz an noz, gouarnerien Kemper a êsaas lakaad digeri dorjou ar gouent. Pelloh e lakaont o brevi a daoliou bouhal, hag e taolfont, da hweh eur deuz an noz, e-kreiz ar goañv, en despet d'ar glao ha d'ar yenienn, ar seurezed er-mêz.

E kouent Santez Katell, e kêr Kemper, e chome seurezed, anvet seurezed ar re glañv. Beza 'oant deuz urz Sant Aogustin.

D'an deg a viz C'hwevrer 1791, e teuer d'o fedi da joaz eur zuperiorez. Oll e respontont : « Lezennou or houent ne lezont ket ober evel-se. »

Diwezatoh, Expilly a deuas, ivez, beteg o zi. Deuz ar mintin en-doa kaset d'ar seurezed eur billet skrivet, er mod-se : « Expilly en-devezo an enor, hirio, da zaludi seurezed ar re glañv, evel sitoayan. » Ar seurezed a ziskrivas dezañ : « Seurezed ar re glañv a zegemero Expilly evel sitoayan ». Dond a reas. Êsa 'reas kaozeal d'ar seurezed diwar-benn plega d'al lezennou. Mez distranet⁵² 'oa, diohtu, hag ez eas, lostog, en e dro.

An departamant en-doa roet da goñsail munisipal Kemper ar bermision d'o has kuit ha da glask merhed all evid prederia euz ar re glañv. Koulskoude, d'an 19 a viz C'hwevrer, Directoire an departamant a lavaras ne verke ket al lezenn mond beteg eno. « Mez avad, red

⁵² distranet : ?

‘oa o lezel da vervel gand an naon, rag, emezañ, ne hellom rei arhant dezo nemed kuitañs on-defe digand eur zupiorez anvet hervez al lezenn. »

Ar seurezed n’o-doa tamm dienez evid an dra-ze, rag tud ker o magas.

Pelloh, d’an 21 e viz Genver 1792, koñsaill munisipal Kemper o lakaas er-mêz. Eur mor a dud ‘oa deuet en devez-se, da en em voda en-dro d’ar gouent. An oll a veule ar seurezed hag a ziskoueze beza droug-kontant. N’eus forz, war-dro pemp eur, eur zoudard a lakaas an dorn war skoaz an itron de Kervazégant, ar Zupiorez, evid he zaoler er-mêz. Ar seurezed all ‘oa greet dezo ar memez tra. Unan anezo ‘oa koz ha mahagnet oll. Pedi a ree d’he lezel da vervel en he houent. Pevar soudard a grogas enni hag he zaolas war ar ru.

Neuze ez ajont da gouent Kerfot.

Taolet, a-nevez, er-mêz, tri devez goude, ez ajont da houenn digor digand leanezed all.

E miz Gouere, diwezatoh, ‘oa freuzet mogeriou kouent Santez Katell⁵³, deuz kostez ar blasenn. Vikeled vraz Expilly, rejanted ar Seminer hag oll revolusionerien Kemper a deuas da ober pep hini e damm deuz al labour-ze.

*

Kouent Sant Benead e Lokmaria Kemper.

Ar gouent-se, savet e Lokmaria, en naved kantved, a zelle deuz kouent Sant Sulpis deuz Roazon. Ar zupiorez a zouge an ano a Vamm-priol deuz kouent dukaal ha royal Lokmaria ha Quillou.

D’ar 16 a viz C’hwevrer 1791, konnsaill munisipal Lokmaria a deue da lavared d’an 22 zeurez ‘oa eno, choaz eur zupiorez hervez al lezenn. Oll e nahont hen ober. Hag an Departamant en em gemer ganto evel ma en-devoa greet gand ar seurezed all, a grennas dezo o bevañs.

Bloaz a dremenjont o veva diwar aluzennou a roe dezo an dud vad ‘oa e kêr. Pelloh, gand ar veleien o-doa da weled war ar gouent, e reont evel o-doa greet Benediknezed ar Halvar, e soublont, da eñvel, dre votadeg, o zupiorez hag ar zeurez he-doa d’en em emell deuz aferiou ar gouent. Neuze ‘oa roet o fae da bep hini anezo, hag e helljont mond beteg miz Gwengolo 1792 ma oant taolet er-mêz deuz o zi.

*

E kouent ar Halvar ‘oa leanezed a urz Sant Benead. Degaset ‘oant bet gand an itron de Kerc’haro, priolez e kouent Roazon, er bloavez 1634, da vaner ar Palud, e-kichenn Kemper. Deuz ar maner he-doa greet eur gouent.

Er bloavez 1790, pa deuas al lezenn evid an eleksionou da ober er houentchou, ‘oa deuet ivez ar mare da jeñch zupiorez. En em gemer a rejont evel ma oa merket gand ar houarnamant. Dre gement-se ‘oant bet didrouz, e-pad daou vloaz.

Degemer o-doa roet da leanezed Kerfot ha re ar Retred. Mez o-unan ‘oant taolet kuit, e miz Gwengolo 1792.

En em dennet neuze, lod e tiez o mignonezed war-dro Kemper, lod e ti o herent, n’o-doa peoh ebed digand Gouarnourien ar Finistère.

*

⁵³ kouent Santez Katell : Notenn el leor : Ar gouent-se a zo bet beteg a-nevez ‘zo ar “préfecture“.

Kouent ar Retred. Leanezed kouent ar Retred a reas evel ar re all. Koñsaill munisipal Kemper a deuas aliez d'o egasi⁵⁴ ; Expilly zoken a glaskas o gounid. Mez netra ne hellas trehi warno.

Eun devez, d'an daou a viz Gouere 1791, 'oad deuet da lavared dezo en em reiza evel ma lavare al lezennou nevez pe e rankfent mond kuit.

D'ar mare-ze, unan anezo, an dimezell de Saint-Luc, a oa klañv.

Ar homiser a houlennas digand an eil hag eben ha plega a rafe. –Plega ! biken ! a lavarjont oll.

Neuze ez eer da gaoud an dimezell de Saint-Luc, d'he hambr. – « Ne fell din, tamm, senti ouz lezennou fall ar houarnamant, a lavaras, ha pa rankfen mervel. »

En devez war-lerh 'oant taolet er-mêz deuz o houent.

*

Seurezed Sant Thomas, karget deuz an ospital braz hag ar seurezed gwenn pe seurezed ar Spered Santel, a zervije ar re glañv aour euz kêr Gemper, a oa kaset kuit er memez deveziou. Oll, ivez, o-doa nahet trei gand ar houarnamant.

*

Kouent Kerhaez. Er gouent-se 'oa Ursulinezed. Eun devez ma oad o lakaad anezo da zina evid lavared e nahent mond kuit, eun ofiser munisipal a lavaras da eur zeurez n'oa mui a liou. – « O ! mad, emezi, me a zino ar memez tra ; me 'm-eus gwad em gwazied ! me a zino gand va gwad ! »

Al leanezed-se 'oa karet kalz e Kerhaez. Soagna ha maga 'reent ar beorien. Ha pa deue komiser an district d'ar gouent, e ranke, beb gwech, treuzi dre eur vandenn beorien ha labourerien hag a venne lammad warnezañ.

Pelloh, ar homiser a deuas d'ar gouent, gand pevar-hant soudard hag a houlennas ar zupiorez.

Kaset 'oa d'ar gambr e-leh ma vije ar seurezed, o kaozeal gand ar re a deue d'o gweled. Pa zegouezas, e welas en tu all d'eur hrill⁵⁵ houarn, oll seurezed ar gouent.

Rok an tamm anezañ, e lavaras dezo raktal :

« Pell a-walh 'zo, sitoyanezed, ma heder ahanoh da doui ha da zenti ouz ar houarnamant. Peogwir ne fell ket deoh plega, al lezenn a hourhemenn mond kuit. »

- « Eul lezenn nul, aotrou ; ni on-deus greet veu da jom, amañ, da vervel, » a respontas ar zupiorez.

- « En ano lezenn ar vro, eme ar mêr, digorit an nor-ze ». Hag e tiskoueze an nor gand e viz.

- « Doue, aotrou mêr, a zo uhelloh eged ar vro, hag en ano Doue eo serret an nor-ze, ha serret e chomo. »

- « Mad, neuze e vo torret. »

- « C'hwi 'rey evel a garfoh. »

Ar zoudarded a gomañs distaga taoliou bouhal.

Ar seurezed a yeas war o daoulin da gana : ar miserere.

An nor 'oa freuzet. Ar zoudarded a lammas er gouent.

- « Seurezed, emezo, hastit lavared deom ar pez a zo da bep hini ahanoh : an traou all a zo d'ar houarnamant. »

- « O ! amañ, emezo, an oll draou a zo da Zoue ha d'ar beorien. »

⁵⁴ egasi : hegi.

⁵⁵ d'eur hrill : eur gael.

- « Mez, hoh arrebeuri ? »
- « N'on-deus nemed or hroaz hag or chapeled. »
- « Ho kweleou ? »
- « Kastit i ganeoh. Ni 'gousko, laouen, war an douar. »
- « Ho leor pedennou ? »
- « Gouzoud a reom anezo a-zindan eñvor. Skrivet int en or spered hag en or halon. »
- « Alo, a-walh, eme ar mêr, kasit ganeoh ar pez a zo, « a lavaras d'ar zoudarded.

Ar re-mañ a lammas er hambrjou. Kement o-doa gellet da zastum a oa taolet e kirri. Pa oa karget oll, 'oa lavaret d'ar seurezed sevel war ar hirri, ivez. Neuze, en eur zelled, ar wech diweza, deuz al leh ma o-doa bevet ennañ ken didrouz, meur a hini en em daolas da leñva. Ar mobilier 'oa lezet en ti-kêr. Mez ind-i 'oa kaset d'ar prizon da Gemper.

*

Kouent an Urzulinezed e Kemperle. – Kouent an Urzulinezed, e Kemperle, a oa 'uz kêr, en eul leh deuz ar re gaerra. Nao seurez warn-ugent 'oa o chom enni. Ar superiozez 'oa he ano Pelage Le Malvye. Ober a reent skol d'ar merhed bihan deuz kêr.

D'an deg a viz Mae 1790 'oa goulennet diganto petra rajent, pe chom en o houent, pe mond er-mêz, hag e vijent paeet. Oll a respontas ne felle ket dezo, a briz ebed, dilezel o veuiou.

Diwezatoh 'oa goulennet outo tui sentidigez d'al lezennou. Oll, ivez, e nahont hen ober.

D'ar mare-ze, o-doa evid aluzenner an aotrou Latour, jezuist. Eñ, kennebeud, n'en-doa ket touet. Klask a zavas warnañ. Hag eh en em guzas er gouent. An overenn a lavare, bemdez, en eun toull kuz.

Ar brud o veza eet, dre gêr, 'oa tehet kuit ; ar hoñsaill munisipal a anvas eur beleg touer, an aotrou Fougerolle, da aluzenner d'an Urzulinezed. An overenn a lavare, bemdez, er gouent. Mez biskoaz, morse, seurez ebed ne yeas war e dro. Hag a-benn ti miz, inouet-marzo da veza aluzenner en eur gouent ha n'en-doa netra da ober enni, e roas e zilez.

Koulskoude goulou 'oa bet gwelet, en noz, e kouent an Urzulinezed. Eun teod bennag, ivez, 'oa bet eet en-dro. Lavared a reed edo an aotrou Latour eno, atao. Ar garde nationale a yeas da ober eun enklask. Euruzamant ne gavjont netra. Mez, spontet oll, an aotrou Latour a dehas evid mond da Vontroulez.

Da viz Gwengolo 1791, e torras eur pennad koulskoude, an avel fall a hweze eneb ar veleien. An urzulinezed a gemeras an aotrou Capitaine du Bois Daniel evid aluzenner. Mez tri miz goude e ranke tehed kuit d'e dro. (Kerdu 1791).

Seurezed Kemperle n'o-devoa aluzenner ebed mui. Mez, er vro, 'oa chomet kalz beleien vad, hag unan pe unan anezo, a yee, beb ar mare, d'ar gouent da goves, da gomunia anezo ha, zoken, da lavared evito an overenn.

Pelloh, d'an eiz warn-ugent a viz Gwengolo, 'oant taolet er-mêz. Ha Cambry, prezidant district Kemperle d'ar mare-ze, n'oa ket evid mired da ober, goude-ze, meuleudi ar seurezed, dreist-oll meuleudi ar superiozez : « Morse, a lavare, n'am-eus kavet, war va hent, eur vaouez ken dous, ken habask hag ar seurez LeMalvye. »

Ar gouent 'oa, neuze, gwerzet. Euz ar chapel 'oa greet eur vagajenn foenn. Ar zal evid debri a deuas da veza eun "teatr". Hag al leh ma vije ar seurezed o kaozeal gand ar re a deue d'o gweled, 'oa lakaet ennañ dañsou, bemdez.

Er bloaz 1803, daou zen pinvidig ha kristenien vad, an aotrou hag an itron Mancel, a brenas ar gouent hag he douarou. He hinnig a rejont, en-dro, d'an Ursulinezed. Ar re-mañ 'oa unan amañ, unan a-hont. En em voda a reont, raktal. Ha d'an eiz a viz Here e skrivent war gaier ar gouent : « Nao warn-ugent om bet taolet kuit, pevarzeg om deuet en-dro ! Ar maro en-deus kemeret ar re all. »

*

Ospital Kemperle. – Pa deuas ar Revolusion, e oa, en ospital Kemperle, seurezed griz⁵⁶ pe evid lavared mad, seurezed an den euruz Grignon de Montfort, oh entent deuz ar re glañv.

Nah a rajont, oll, senti deuz lezennou fall ar houarnamant. Taolet ‘oant kuit, d’an unan warn-ugent a viz Genver.

En o leh ‘oa deut diou itron : unan deuz Kemperle hag eben deuz an Oriant. Mez hebdale, ar re glañv o-doa keuz d’ar seurezed hag ar mêt a wele gand aon dispignou an ospital o vond war gresk.

E berr, an ti-ze a deuas da veza eun ti a blijadur. Digor ‘oa d’an oll. Kalz a deue di da glask ebat, plahed yaouank, paotred yaouank, ha tud dimezet. E-pad ma vije ar re glañv o tiwaska poan hag o vervel, ar biniou a zone hag an dud a zañse.

Eun devez, ma oa evel-se, dañs, evel kustum, eun ofiser o weled eur grusif en eur zal, a dennas e gleze evid e vruzuna.

Mez a-barz pell, an oll ‘oa o keuzial d’ar seurezed. Ar mêt a skrivas d’ar zupérieurez evid lavared dezi dond en-dro. Degouezoud a reas e miz Ebrel 1797.

Ospital ar vartoloded e Brest. Ar seurezed ‘oa en ospital Brest ‘oa ivez seurezed Grignon de Montfort. C’hweh ha tregont ‘oa anezo. Mez pa oa bet devet o zi-meur, e Saint-Laurent-sur-Sèvres, ar seurezed ‘oa eno a deuas, ivez, da jom da Vrest. Etre oll, en ospital ‘oant neuze pevar-ugent.

N’eo ket tregas a vankas dezo.

D’an eiz warn-ugent a viz Even 1791, ‘oa taolet er prizon, e Carmes, an Tad Duchesne, o beleg. Euruzamant, mignoned dezañ a hellas kaoud ma vije lezet da vond e frankiz. Mez divennet, avad, ‘oa outañ chom mui war-dro Brest.

Heb den d’o hennerzi, ar seurezed ‘oa ankeniuz o doare. Pelloh e kredont skriva da houarnamant ar Finistère evid goulenn o aluzenner en-dro.

Ar re-mañ a reas, da genta, ar skouarn vouzar. Mez ar seurezed a skrivas evid an eil gwech. Hag en taol-mañ ‘oa roet dezo o beleg. Evelkent ‘oa lavaret dezo : « Ho peleg ne overenno nemed evidoh. » Merket ‘oa dezo, ouspenn, pe da vare e vije lavaret an overenn ha merket, ivez, derhel kloz an dorjoug evid na daje nikun, deuz kêr, d’an overenn-ze.

An Tad Duchesne ‘oa, neuze, e Pordic ar Hôtes-du-Nord. Dond a reas en-dro, hebdale pelloh. Mez a-veh degouezet, ‘oa klasket kement a afer outañ, ma rankas en em guzad. Chom a reas e-touez ar seurezed. Gwiska ‘reas dillad evelto. Anvet ‘oa ar seur Lazare. Mez an dud ‘oa o tarempredi an ospital a ziskredas eun dra bennag diwar-benn ar seur Lazare, ma oa ranket cheñch ano dezañ. Hag ‘oa anvet seur Sant Mean.

Eur beh all a gouezas war ar seurezed keiz. Ar re a houarne Brest, d’ar mare-ze, a gontas diwar o fenn a bep seurt traou euzuz. Ranket o-doa skriva d’ar ministr evid diskouez ne oant tamm kabluz war ar pezh a rebeched dezo.

E penn an ospital, d’ar mare-ze, edo an dimezell Sapinaud de Boishugel. Heh ano seurez ‘oa Térésa ar Spered Santel.

Beza deuz eul lignez nobl ‘oa eun dra fall e-pad ar Revolusion. Ha paotred Brest a lakaas en o fenn ober d’ar seurez kement a dregas ma rankas mond kuit.

En he leh, da Vrest, e teuas ar seurez Iphigénie.

D’an driweh a viz Eost 1792, an Assemblée Législative a gasas kuit an oll seurezed nemed ar re a entente deuz ar re glañv. Ar re-ze ‘oa dalhet eur pennadig c’hoaz nemed ‘oa lakaet dezo cheñch o ano ha kemer dillad all.

⁵⁶ griz : loued.

En despet da ze, seurezed ospital Brest a zalhas da genta d'o gwiskamant. Mez d'an nao warn-ugent a viz Gwengolo, an departamant a lavaras dezo e rankfent plega. Ne hellent chom en ospital nemed gwisket evel tud ar bed. Hag oll e kemeront dillad all. Evelkent, e talhont d'o chal gwenn.

Diwezatoh 'oa goulennet diganto toui sentidigez d'al lezennou. Nann, emezo. Ober a reom on dever evel on-deus greet beteg henn. Mez ne hellom permeti netra ebed mui.

Ar bloavez 1793 a zegouezas. Bloavez an torfejou ha bloavez ar gwad ! Krisaad a reas, c'hoaz, an urz war ar seurezed paour. Bemdez ha beb noz, aliez, o hrambjou a vije furchet. Eun devez an Tad Duchesne 'oa o paouez echui an overenn, pa oa skoet war dor ar gambr e-leh ma edo. Eur seurez 'oa o tastum ar halir hag an dillad overenna. Ober a reas, da genta, evel pa n'en-dije klevet netra. Mez an taoliou a goueze gwasoh-gwaz war an nor. « Gortozit, a lavaras neuze : bremaig em-eus echu. »

An Tad Duchesne en em daolas, buan, war eur gwele 'oa eno. Ar seurez a zachas warnañ ar ridojou. Staga 'reas diouto koef eur vaouez. Neuze e tigoras an nor. Ar sitoayaned o weled eur hoof deuz ar gwele a gredas 'oa e-barz eur vaouez klañv bennag hag a dehas kuit.

Eun devez all, da eiz eur diou ar mintin, tud karget gand an district a deuas da lavared d'ar zupierez en em zerhel prest, hi hag ar seurezed all, da vond d'ar prizon. Êz a-walh e plegont d'an urz-se. Mez gand an Tad Duchesne emaint nehet-mar. Petra e teuio da veza pe vezint kaset kuit !

Ar zupierez a skrivas da eur vaouez deuz kêr a reed Marharid Vraz anezi. He fedi a ree, en an' Doue, da zegemer en he zi eun den hag a gare.

Ha goude, buan, e wisk an Tad Duchesne dillad maouez. Lavared a ra dezañ pignad en eur harrad dillad fank o vond d'ar houez. Hag e tremenas, evel-se, dre zor an ospital, a-zindan fri ar zoudarded heb na zoñjas den ennañ.

Neuze ar seurezed a hortoz dienkreiz-tre, beza kaset d'ar prizon. Mez den, morse, ne deuas d'o herhed.

Kement-se a zegouez e fin 1793.

E derou ar bloaz war-lerh, koñsailerien district Brest a zoñjas gwiska dezo dillad galeounerien hag o has da Gayenne. Dibabet 'oa, evid derhel o leh e-keñver ar re glañv, dimezelled hag itronezed deuz kêr. Ar seurezed hep tamm gwarizi a ziskouezas d'an itronezed-se ar feson d'ober o micher.

Mez ar vedisined hag ar re glañv o-unan a en em zavas a-eneb tammou merhed hag a deue, en o hambrojou, eur manegou war o daouarn. – « Ma kasoh kuit ar seurezed, emezo, ni a daolo an dimezelled-se dre ar prenestr hag a lakaio an tan en ospital. »

Ar seurezed 'oa dalhet.

Mez evid o hegasi 'oa lakaet en ospital an tribunal "révolutionnaire". An tribunal-ze 'oa greet gand hini Rochefort, ar muia garo deuz Bro-Hall. Kalz deuz ar re a zeue dirazañ a vije kondaonet d'ar maro.

Hag oll, an dud reuzeudig-se, a dremene dirag ar seurezed en eur vond d'an tribunal ha dirazo, adarre, en eur vond d'ar maro. Pebez melkoni, evito ! Pebez poan, dreist-oll, o klevet komzou goapauz ar revolusierien !

E-pad ar bloaz 1794, eur hleñved speguz a stagas e-touez martoloded Brest. Kaer o-devoa ar seurezed, ne oant ket evid entent deuz an oll dud klañv. Jean Bon Saint-André a oa d'ar mare o houarn e Brest. Skriva 'reas e leh ma oa seurezed griz er prizon. –« Lezit anezo, a lavare, d'an dud o dalhe prizonerezed, lezit anezo da zond da Vrest ; amañ e ranker o haoud, evid savetei o buhez da zivennourien ar vro. »

Ar hleñved 'oa a-veh echu, pa deuas da Vrest beleien eskopti Nevers. Pemzeg ha tri-ugent 'oant pa o-doa kuitaet o bro. Ar gouarnamant o hase da Gayenne. Mez kemend a boan 'oa bet greet dezo ma n'oa ken nemed pemp warn-ugent pa zegouezjont e Brest. Ar re all 'oa maro.

Hag e-touez ar pemp warn-ugent a jome, war-nez pell, ken stard hag ar houentchou merhed, c’hwezeg ‘oa ker klañv ma lakaas ar vedisined o has, raktal, da ospital Brest.

Kement-se ‘oa bet – en despet d’ar houlmoul ‘oa war an amzer – evel eur bann heol, e buhez ar seurezed. Da vihanna, e-leh ar skouriou a roent da gorrvou ar veleien, e resevent diganto frealzidigez evid o eneo.

Mez siwaz ! pa oant pareet, meur a hini anezo a yeas dirag an tribunal “révolutionnaire“, hag oa kondaonet d’ar maro.

Pelloh, Robespierre a deuas da veza gillotinet hag e varo a zavetaas ar re all. Er bloavez 1795 ‘oant lezet da vond kuit. Ne jome mui diouto nemed eun deg bennag.

Koulskoude, an amzer a wellae bemdez. Ar seurezed a laoskeas, ivez, warno. An Tad Duchesne a deuas, adarre, da veza o aluzenner. Mez ne gemerfont o gwiskamant nemed er bloavez 1799.

*

Kouent ar seurezed griz ha kouent an Ursulinezed e Landerne. – E Landerne, ar seurezed griz o-doa eur gouent. O veza nahet toui sentidigez d’al lezennou fall e oant taolet er-mêz. – An Ursulinezed ‘oa roet dezo tri devez evid mond kuit. Tremenet an tri devez, edod o vond d’o zeuler war ar ru. Hag anezo o-unan e kimiadont deuz o houent, en eur leñva.

*

Kouent an Ursulinezed e Lezneven. – Koñsaillerien district Lezneven a falvezas ganto derhel al leanezed en o hêr.

Mez gouarnerien ar Finistère a hourhemennas o has kuit peogwir ne felle ket dezo toui.

E Montroulez ‘oa teir gouent leanezed pa deuas ar Revolusion : *Benedictezed ar Halvar*, en neh deuz ru Plouyan ; *an Ursulinezed* er penn uhella deuz ru ar Vivienn ; hag ar *Harmatezized* e ru ar Feunteun, evid eñvel o zuperioiezed, hrvez lezenn ar gouarnamant.

An teir gouent ‘oa en em glevet da ober eleksionou. Mez o-zeir e lavaront ne ententont ket, dre eno, nah nikun deuz lezennou o urziou, na deuz gourhemenne an Iliz.

Koñsaill munisipal Montroulez ha koñsaill an district’oa, da genta, a-du ganto. Mez e koñsaill an district ‘oa bet cheñchet e fin1791. Diwar neuze, e reer brezel dezo. Ha pelloh, d’an nao a viz Du 1792 e taoler anezo er-mêz. Mez an darn-muia a jomas e kêr Montroulez, oa neuze enni, tud vad ha leun a feiz.

En ospital e Montroulez ‘oa seurezed griz. Poan ne vankas ket dezo. Evelkent ne oant ket taolet kuit.Mez seurezed Trede Iurz Sant Dominig, hag a zeske krial hag empezi d’ar plahed yaouank, ‘oa taolet er prizon, e miz Gouere1794.

Ar houentchou meneh n’oant ket en or bro, war-hed pell, ken stard hag ar houentchou merhed.

Kerkoulz, setu amañ, e pe hiz, ‘oant taolet d’an traoñ.

*

Kouent Sant-Vaze penn ar Bed. Pa deuas al lezenn da gas kuit ar veneh, an aotrou de Robien ‘oa Tad abad ar gouent-se. Mez ne jome ket enni. Chom a ree en Auxerre, e leh ma oa, ivez, vikel-vraz an eskob. En e leh, e penn ar gouent, ‘oa eur priol. Tri manah all ‘oa c’hoaz, eur beleg evid sikour kana an ofisou, ‘oa person e Sant-Vaze, parrezig vihan ha n’he-doa, d’ar mare-ze, nemed daou-hant hanter-kant den o komunia, da Bask.

D’an daou warn-ugent a viz Mae 1791, koñsaill munisipal ar barrez a yeas d’ar gouent d’ober an iñvañtor ha da houlenn digand ar veneh plega d’al lezennou nevez. An Tad priol a

lavaras ne blegfe ket, morse. An hini 'oa karget deuz madou ar gouent, an Tad de Robien, a respontas ar memez tra. Mez ne jomas ket pell fidel d'e her, peogwir, hervez en-deus gwelet, 'oa bet anvet da berson e Lokournan-ar-Fank.

*

Abati ar Releg e Plounaour-Menez. – Ar gouent-se 'oa bet greet d'an unan warn-ugent a viz Gouere 1132 evid degemeret seiz manah. Mez ne oa mui nemed pevar pa deuas ar Revolusion. Priol diweza ar gouent 'oa dom François Verguet, ganet e Champville, er Franche-Comté. E dad 'oa medisin.

Kaset gand beleien Leon d'an Assemblée nationale, 'oa da genta din euz an enor greet dezañ.

Mez siwaz ! koueza 'reas meur a wech. Ha deuz an eil lamm en egile, e teuas da veza vikel-vraz e Langres, person en eur barrez, prefet e Lure. Eun devez, e 1814 'oa kavet maro en e gambr.

E Roskov 'oa kapusined. Eno 'oant chomet beteg ma oad deuet d'o herhad evid o harlui. N'oa ket, zoken, roet amzer dezo da jeñch dillad na da lamad o baro.

*

Kouent Sant-Dominig e Kemperle 'oa enni pemp manah.

D'an deg a viz Mae 1791, an Tad priol, Pierre-Julien Fissol, 'oa goulennet digantañ toui sentidigez d'al lezennou nevez. Goulenn a reas eur pennadig d'ober e zoñj. Ha d'an tri warn-ugent a viz Gwengolo ez eas er-mêz, eur manah all hag eñ. Mez miz bennag goude e teuas endro hag e lavaras chom manah beteg fin e vuhez. Taolet 'oa bet deuz e gouent e fin 1791.

E kouent Sant-Bened e Kemperle 'oa pemp manah. An Tad priol hepken, Dom Guillaume-Paul Yves Malherbe, a jomas fidel. Deuz ar re all, daou a douas sentidigez d'al lezennou ha daou a yeas en hent.

*

Kouent ar Gapusined e Kemperle 'oa enni, ivez, pemp manah. War ar pemp-se unan a 'oa deuet da veza sod. Tri a nahas senti deuz lezennou fall ar gouarnamant. Egile all, ezomm dezañ war e vennou da vaga e dad, en-doa pevar-ugent vloaz, a douas sentidigez hag a zistroas er bed.

*

E kouent Sant-Maurice e Kloarz-Karnoet n'oa nemed eur manah. Priol an abati a douas sentidigez d'al lezennou, en iliz Sant Mikêl, deus Kemperle, d'an nao a viz Genver 1791.

E Kemper hag e Gwaien 'oa kapusined. An oll veneh euz ar houentchou-ze a jomas fidel nemed unan.

*

Kouent ar Hordelier e Kemper a oa enni daou anezo. Oll 'oant chomet fidel.

E Landerne 'oa meneh deuz urz Sant-Frañsez. Daou anezo a douas. Mez deuz an daou-ze, unan, an Tad Cloarec, a deuas war e her.

*

E Kerhaez ‘oa meneh deuz urz *Carmez* ha deuz urz *Sant-Augustin*. N’on-deus ket gelllet gouzoud netra diwar o fenn. Evelkent, priol kouent *Carmes*, war a leverer, a nahas toui sentidigez d’al lezennou fall hag a oa bet lakaet er prizon e Brest.

*

E Pont ‘n abad ‘oa ivez meneh deuz urz *Carmes*. Pemp ‘oant. Unan anezo a droas gand ar houarnamant.

*

E Landevenneg ‘oa eur gouent hag a oa bet savet gand ar Roue Gralon hag e vignon Sant-Gwennnole. Da vare ar Revolution ne oa enni nemed pevar manah. An Tad priol a jomas fidel. Mez daou deuz e veneh a droas kein. Unan anezo a deuas da veza aluzenner ar vartoloded hag egile person iñtru en eur barrez. An Tad priol a deuas da jom da Veill-ar-Wern (Port Launay), goude ma oa bet kaset kuit deuz e houent. Eno war bord ar ster, e-touez ar bodennou, e tastume ar vugale hag e ree dezo katekiz. E blijadur ‘oa gweled martoloded Landevenneg o tond en o bagou, war an dour. Anaoud a ree pep hini anezo. Karet ‘oa ganto. Plijadur o-doa o tegouezoud, er giz-se, an eil gand egile. Hag e kaozent diwar-benn Landevenneg hag ar gouent dilezet.

XVII

Ar veleien e kouent Kerfot

Kouent Kerfot a oa bet prenet gand ar sitoayan anvet Boutibonne. Ar gouarnamant he havas mad da ober eur prizon hag a fermas anezi evid kement-se.

E kouent Kerfot ‘oa dastumet pevar beleg hag hanter-kant. Striz-meurbed ‘oa an urz warno. Ne hellent pourmen nemed er porz : ne hellent kennebeud kaozeal gand den estren, nemed dirag ar homiser.

Setu amañ ano⁵⁷ ar veleien ‘oa e Kerfot d’ar mare-ze :

? : person Irvillag ; beleg : Gwaimaeg ; ? beleg : Roznoenn ; ? kure, Lokournan ; ? beleg euz Brieg ; ? beleg ; ? ; kapusin deuz Kemper ; ? aluzenner e Kemperle ; ? jezuist ; ? person Sant-Kouliz ; ? vikel jeneral ; ? chaloni, e Kemper ; ? chaloni Leon, person Gwiklañ ; ? person Peurid ; ? manah *Carmes*, Brest ; ? person Skrignag ; ? superior ar misionou, Leon ; ? beleg, deuz Laz ; ? kure Plouziri ; ? ; person Gouenou ; ? kure Kameled ; ? kure Guelvain, en Edern ; ? deuz Poullou ; ? person Sant-Hoardon ; ? person Sant-Nouga ; ? kure Plouarzel ; ? beleg, deuz Melgven ; ? person Rekouraños ; ? beleg, deuz Kemperle ; ? chaloni, deuz Daoulaz ; ? person, Erge-Armel ; ? manah, deuz Lezneven ; ? person Plouider ; ? deuz Sant-Thomas, Landerne ; ? person Sant-Mark ; ? beleg katedral Gemper ; ? person Sibiril ; ? kure Kerlaz ; ? jezuist, Montroulez ; ? beleg, Plouneoru-Lanvern ; person Mellag ; ? beleg, deuz Kemperle ; ? person Kameled ; ? deuz Landudeg ; ? deuz Brest ; ? deuz Baye ; ? deuz Plouyann ; ? person Kilou ; ? kure Tremeog ; ? vikel-vraz.

*

⁵⁷ ano : Lakaet ez eus bet ? e-leh an anoiou (**Embann an Hirwaz**).

Mez an niver deuz ar brizonerien, e Kerfot, ne zaleas ket da greski. Rag, da viz Eost, ar gouarnamant hag an Departamant ivez, o-doa greet eul lezenn evid ma'z afe ar veleien ampart er-mêz deuz ar vro ha ma teufe, anezo o-unan, d'ar prizon, ar re goz hag ar re vahagnet. Hag e teuent, hini da hini.

An amzer, kerkoulz, a deue da veza muih-mui amjestr. Ar veleien vad, e lehennou, ne hellent mui beva.

Setu amañ eul lizer deuz ar re muia glaharuz, skrivet en amzeriou-mañ d'an Departamant gand an aotrou Philippe Jacob, person Laz : « Eul lezenn, a lavare, a bermete d'ar veleien, a hourhemenne dezo, zoken, chom en o farzeziou beteg ma teuje eun all en o leh. District Montroulez, hag a dlee ma faea pe lakaad eur beleg all em farrez, a zegase dalhmad soudarded da laerez va zi. An Departamant, ivez, a lavaras din chom em farrez, beteg ma vije degaset eur person all. Chomet on. Mez, morse, n'on bet paeet. N'em-oa mui griñsenn de veva. Eet on, neuze, da di va zud, eur hart-leo deuz va farrez. Eno, kennebeud, n'em-oa ket a vara. Va foaniou a greske, ivez, hag em-eus skrivet da eur hamarad deuz ar Hastell-Nevez, evid lavared dezañ degas an archerien d'am herhad. Hirio, emeon er prizon e Kemper, goulenn a ran beza kaset da Gerfot. »

An aotrou Jacob a oa lakaet e Kerfot d'ar bemp a viz Even 1793. Eno, en em gave, neuze, trizeg beleg ha tri-ugent. Ne oa da rei dezo, na gweleou na, zoken, dillad gwele.

Dre oll e c'hoarvezas ar memez tra. Ar prizoniou 'oa leun, e peb leh, er Finistère. Hag ar Gonvansion a zoñjas, tra iskiz ! a zoñjas berraad ar gont en eur laza ar brizonerien.. Unan, genidig deuz Pont-an-Abad, anvet Micherl-Claude Royou, 'oa degaset da Gemper evid an dra-ze.

An departamant ne gredas ket mond beteg eno. Mez, avad, lakaad a reas urz strisoh war ar brizonerien. Ar prenestou 'oa mañsonet ha goude 'oa divennet ouz ar veleien mond da bourmen er porz, zoken.

*

XVIII

Roue Bro-Hall lakaet d'ar maro. – Brest e kañv.

Louis XVI 'oa eun den deuz ar gwella. Mez pa deuas ar Revolution e chomas, re hir, da varhata. Ne ouezas ket en em gemer, gand nerz-kalon a-walh evid diarbenn an dizurziou.

Ha pa welas, diwezatoh, an traou o vond falla-oh-falla, pa welas ne helle ket, zoken, kaoud en e zervij, eur beleg ha n'en-doa ket touet, e lakaas en e benn tehed da eur vro all.

Siwaz ! ne hellas ket mond pell : ne deas nemed beteg Varennes. Anavezet 'oa bet ha degaset en-dro da Bariz (21 Even 1791)...

Evitañ e komañsas, neuze, eur vuhez a boaniou. Hag ar Roue-ze, bet en e vro ar falla deuz ar ouarnerien a deu d'en em lakaad er reñk kenta deuz ar gristenien. Roue dihalloud, kristen hep par, e ve lavaret e ve bet lakaet, a-ratoz, evid merka an hent d'an oll dud santel hag a hounezo o hurunenn, e-pad ar revolution, en eur vervel war eur chafot.

Taolet 'oa bet er prizon da viz Eost 1792.

E brizon a oa eun douribell. En douribell-ze 'oa peder gambr an eil a-zioh eben. Er gambr en traoñ 'oa lakaet e hoar hag ar plahezad. E-kreiz edo ar Rouanez hag he bugale. Ar Roue 'oa lakaet er gambr a-zindan an doenn.

Da genta, ne oa ket greet dezo kalz a boan. Ar Roue en-doa kavet, en eur horn, levr Imitasion Jezuz-Krist, levr an eneou glaharet. Lenn a ree, bemdez, ennañ. Bemdez, ivez, e ree skol d'e vugale. Lezet e vije da bourmen e-pad eun eurvez, bemdez, en eur vali, anvet bali ar

gwez kistin. Mez ne helle ket mond deuz ar vali-ze. E pep penn 'oa lakaet tud da ziwall anezañ.

D'an naonteg a viz Eost 1792, e teujed da lenn dezañ eul lizer a-berz an Assemblée Législative da lavared kas kuit, diohtu, e oll mitizien.

En o leh, 'oa lakaet da zervija ar Roue unan hag a reed Tizon anezañ. E wreg 'oa lakaet, ivez, asamez gantañ. O-daou 'oant gwall dud. Mez eun all 'oa lakaet, c'hoaz, hag a oa gwasoh. Atao e vije e kouch war ar Roue hag e famill. Henez 'oa eur hoz tamm kemener anvet Simon. Ober a reas muia ma helle a boan d'ar paour-kêz prizonerien. Skriva 'ree war o hambrou a bep seurt traou briz. Eun devez, e verkas war gambr ar vugale ar geriou-mañ : « Bleizi bihan, da grouga a-barz ma teuint da zebri ar bobl. »

*

Ar Roue en-devoa mall da weled an Assemblée nevez o tond. Esperañs en-doa da gaoud diganti muioh a frankiz. Mez siwaz, ar Goñvañsion, anvet d'ar seiz warn-ugent a viz Gwengolo, a lavaras, diohtu, en devez kenta, n'oa mui Roue. Hag e-kreiz an noz, a bep tud fall a deuas da grial kement-se dirag prenestou ar prizon. Ar Roue 'oa kousket. Mez e wreg he-devoa klevet. Konta 'reas d'he gwaz pa deuas deuz ar mintin : - « Mad, eme ar Roue, Doue en-doa roet din ar rouantelez. N'on ket bet euruz ganti. Va zujidi a lam diwar va fenn va hurunenn a roue. Ma welan Bro-Hall eüruz ne en em glemmin tamm. »

Prest goude 'oa lamet digantañ e gleze hag e gurunenn. Kaset 'oa da eun douribell all, pell diouz e wreg ha deuz e vugale. N'oa mui lezet gantañ, na levr, na liou, na paper.

Koulskoude, tud a galon a êseas tenna ar Roue deuz e brizon. Mez ne helljont ket dond a-benn deuz o zaol. Hag ar Roue 'oa muioh diwallet abalamour da ze.

Er memez mare, ar broiou all a reas brezel da Vro-Hall.

Ouspenn-ze, ar veleien vad, kuzet er vro, a zarmone, gwasoh-gwaz, eneb al lezennou fall. Arhant paper 'oa bet greet. Mez an dud n'o-doa tamm fiziañs er paper-ze hag a guze o hed kentoh e gas d'ar marhad. Ar beh deuz an traou-ze oll a goueze war Louis XVI.

Robespierre a houlennas ma vije lakaet d'ar maro, diohtu. « Ar roue, a lavare, a rank mervel, mar ho-peus c'hoant e chomfe beo or bro ! »

Evelkent, n'oa ket lakaet d'ar maro, en devez-se. Da genta 'oa greet, warnañ, eul lastez barnedigez. Mêr Pariz, Cambon, a yeas da gerhad anezañ d'ar Goñvañsion. En em zivenn a reas e-unan. Tamallet da veza lakaet gwad tud Vro-Hall da redeg, e lavaras : « Nann, kement-se n'eo ket gwir. »

Daou alvokad a gemeras ar garg d'hen divenn. Unan anezo a reed Malesherbe anezañ. Mond a reas d'ar prizon d'en em gleved gand ar Roue. En eur zegouezoud n'oa ket kredet e furcha. —« Tremenit, 'oa lavaret dezañ, rag c'hwi 'zo eun den onest. Ne gasfoh ket, sur, d'ar roue netra evid en em laza. » - « Ar Roue, eme Malesherbe, n'eo ket eur payan. Feiz en-deus hag e feiz a zivenn outañ en em laza. »

*

Pa deuas deiz ar varnedigez e kavas c'hoaz eun divennour war an hini⁵⁸ na helle ket konta. De Lanjuinais, hag on-deus komzet anezañ diaraog, a houlennas ma vije barnet ar Roue hervez lezennou ar vro. —« N'eo ket deoh-c'hwi d'e varn, a lavaras da dud ar Goñvañsion. C'hwi a zo bet hoh-unan o skuill ar gwad a rebechoh dezañ. Ne hellit ket beza tamallour ha barnerien asamez. »

⁵⁸ an hini :behini, er skrid orin.

Mez Robespierre 'oa ar mestr er Goñvañsion. D'an deiz merket evid voti maro ar Roue e reas lezel er-mêz deuz ar prizoniou kement lampon fall 'oa enno. An dud fall-ze'oa lakaet en-dro d'ar gambr ma oa enni ar Gannaded. Dre ma teue ha dre ma tremene ar Gannaded e krient : « Pe e varo pe da hini ! »

Robespierre a reas eur brezegenn evid goulenn maro ar Roue. Diohtu, goude, 'oa lakaet voti. Seiz-kant hanter-kant 'oa er Goñvañsion. Tri-hant unan ha tri-ugent a votas evid ar maro. An diweza a roas e vouez evid goulenn kement-se 'oa an duk d'Orélans, kenderv-kompez d'ar Roue. Eun all, deuz Breiz-Izel, a votas ivez evid maro ar Roue : hennez 'oa Audrein, vikel-vraz Gwened, deuet diwezatoh da veza eskob e Kemper.

Tri devez goude, d'an unan warn-ugent a Genver, ar Roue a dlee beza dibennet.

A-raog mervel e hellas gweled e wreg. An eil a en em strinkas etre divreh egile. Lezet e oant eur pennad asamez.

Pa deuas ar mintin, ar Roue a glevas an overenn hag a gomunias. An aotrou de Firmont eo a overennas, er prizon.

Santerre, an hini 'oa e penn soudarded Pariz, a deuas da gaoud ar Roue : « D'am herhad oh deuet, eme Louis XVI. Gortozit eun tammig, aze. Bremaig, emañ prest. »

Neuze e serras dor e gambr hag en em daolas dirag e govesour.-« Va zad, a lavaras, echu eo oll. Roit din, c'hoaz eur wech, ho pennoz, evid ma hellin kaoud kalon beteg ar maro. »

Treuzi 'reas kêr Bariz evid mond d'ar maro en eur lenn pedennou e brevier. Degouezet e-keñver ar hillotin, e pignas war ar chafot hag e lavaras gand eur vouez kreñv : « Mervel a ran heb beza tamm kabluze war ar pezh a damaller din. Pedi a ran Doue da jom heb kastiza Bro-Hall abalamour d'am maro. »

An dud a gomañse skrija. Santerre en-doa mil aon na deujent da houlenn buhez evid ar Roue. Lakaad a reas an taboulinou da roul. Ha mui, neuze, n'oa klevet mouez Louis XVI

Tri bourreo a dostaas, kerkent, evid diwiska ar Roue. Horta a reas anezo hag en em ziwiskas e-unan.

Ar vourrevien a fellas dezo liamma e zaouarn. – « Biken », a lavaras. –« A ! 'ta, gwir eo. » Hag en eur zevel e zaoulagad war-zu an Neñv, e roas e zaouarn evid ma vijent staget a-dreñv e gein.

Kerkent 'oa astennet war ar plankenn. Kontell ar hillotin a gouezas ; penn ar roue a ruillas, ha tud Pariz a grias 'leiz o hornaillenn : « Bevet ar Republik ! » (d'an 21 a viz Genver 1793).

Pa deuas da Vrest ar helou deuz maro Louis XVI, an dud oll 'oa sebezet. War kalz tier 'oa serret kloz ar stalafiou. Lavaret ho-pije greet 'oa ar gêr oll e glahar. Brestiz o-doa an esperañs, atao, da weled tenna e halloud digand ar Roue, mez oll e kavent 'oa kalz beza e lakaet d'ar maro !

*

XIX

Paotred ar Menez hag ar "Gironded" – Gouarnourien ar Finistère en em zav a-eneb ar Goñvañsion. – Oll int taolet er prizon. – Landerne kêrbenn an Departamant.

Lamponed Pariz, abaoe pell amzer, a gase an traou en-dro, e Bro-Hall. Lakaad a reent, hervez on-deus gwelet, kannaded al Législative d'ober al lezennou a garent. Dalhmad ar Gambr a vije kelhet ganto.

E meur a zepartamant, koulskoude, an dud a gave 'oa greet re, beteg neuze. Dibab e reont evid an assemblée nevez tud a urz vad, tud muioh leal, tud ha ne garjont ket skuill ar gwad.

Mez Pariz, hag eun tri-ugent departamant bennag, a gasas d'an Assemblée nevez tud dizakr ha digalon hag a felle dezo kerzed dre ar memez hent ma oa kerzet dreizañ, beteg neuze.

Er giz-se, en em gavas er Goñvañsion daou rumm tud.

Ar Revolusionerien 'oa anvet paotred ar Menez abalamour ma oant war an uhella bankou deuz ar gambr. Ar vistri ganto 'oa Danton, Robespierre ha Marat.

Ar re all e reed anezo ar "Girondined", abalamour an darn-vuia deuzouto 'oa deuz departamant ar Gironde. En o fenn 'oa Vergniaud ha Condorcet.

Bemdez, koulz lavared, e vije sinkan etrezo. An eil lodenn a glaske kabestra eben.

Kannaded departamant ar Finistère 'oa e-touez ar Gironded. Abalamour da ze, district Brest a houlennas kas eur vataillon da Bariz evid beza prest da zivenn ar Girondined ma vefe red. (9 Genver 1793).

Ar vataillon-ze a yeas deuz Kemper e fin miz Genver. En he fenn edo Le Hir ha Trouille, ofiserien ar garde nationale ; en o zouez daou goñsailler deuz an district, Mérienne ha Moulin.

E miz C'hwevrer, koulz lavared en eur zegouezoud, o-doa tro da zivenn ar Girondined. Marat en-doa lakaet revolusierien Pariz, d'ar c'hweh warn-ugent a viz Genver, da laerez ar magazinou evid kaoud leh da damall ar Girondined ha da goueza warno. Bataillon ar Finistère a daolas kuit al laeron.

Diwezatoh, d'an deg a viz Meurz, e savetaas d'ar Girondined o buhez. Oll e tleent beza lazet e-pad an noz. Hailloned Pariz, galvet gand Danton ha Robespierre, a dlee degouezoud da zeg eur hag ober dezo o stal. Mez ar ministr, Beurnonville, en-doa klevet eun dra bennag. En em lakaad a reas e penn bataillon ar Finistère hag e teuas êz a-benn deuz lamponed Pariz.

Ar Girondined, kaer he-doa ar gostezenn all ober, a jomas atao ar vistri. Danton hag e gamaraded a halvas pevar-ugent mil den deuz Pariz da zond e-pad an noz, d'an ti ma tlee ennañ en em voda kannaded ar Goñvañsion. O zoñj 'oa laza pe da vihanna teuler er prizon o oll enebourien. Mez ar Girondined a zantas c'hwez fall hag e-leh dond d'ar Goñvañsion a yeas da guzad da di o hannaded. O weled o-doa manket o zaol, lamponed Pariz a lakaas, en nozvez-se, ar Goñvañsion da zougen e vije taolet er prizon daou vistr hag unan ha tregont deuz ar Girondined.

E-touez ar re 'oa kondaonet, neuze, 'oa daou gannad deuz ar Finistère : Kervelegan ha Gommaire.

Ar gannaded 'oa da deuler er prizon a yeas dre gement korn Bro-Hall da gonta ar pez 'oa degouezet. Dre oll e saved a-eneb Pariz.

Departamant ar Finistère a gasas eneb dezi pevar mil den hag 'oa en o fenn Boutibone ha Danguy des Déserts, ofiserien ar garde nationale. Tremen a reont dre an Normandi. O zoñj 'oa en em gleved gand an Normanded evid mired deuz tamm bevañs da vond e kêr Bariz ha da gemered anezañ, dre an naon.

Hanter-kant departamant bennag a ree ar memez tra. Ar Goñvañsion a gemeras aon. Dougen a reas eul lezenn hag a lakae « e vije kemeret evid treitourien d'ar vro, kement hini a zo e karg hag a ro e zinatur evid lakaad eul lodenn deuz Bro-Hall d'en em zavel eneb eben. »

Den ne argilas evid se. Gouarnerien ar Finistère nebeutoh eged ar re all. Mez kaer o-devoa, ar Revolusion a deuas da veza ar vestrez. Soudarded ar Goñvañsion a deuas a-benn deuz an dud savet a-eneb dezi, e Parcy-sur-Eure, d'ar 15 a viz Gouere 1793.

Neuze, n'oa harz ebed mad. Dougen a reas lezennou deuz ar re falla. Ha d'an naonteg deuz miz Gouere, e hourhemennas teuler er prizon, oll gouarnourien ar Finistère, « abalamour ma o-doa taolet dismegañs war kannaded Bro-Hall. »

*

En o leh, evid kas an departamant en-dro, 'oa lakaet ar pez a anved "eur gomision administrative" hag a oa enni unan deuz koñsaill pep district. Ar ouarnourien nevez-se o-doa urz da vond da Landerne da ober o labour, rag Kemper 'oa bet « saotret gand gouarnourien goz ». N'oa ket lezet, zoken, he ano ganti. Hiviziken 'oa anvet Kêr-ar-Menez-war-Oded.

Ar ouarnourien goz a zoñjas da genta e helljent ameni ar Goñvañsion en eur houlen pardon. Skriva 'reont eta dezi, d'ar pevar warn-ugent a viz Gouere, evid lavared o-doa keuz d'ar pez o-devoa greet.

Mez siwaz ! Royou Guermeur ha Perrin a labouras eneb dezo. N'o-doa pardon ebed. Neuze gouarnourien ar Finistère a yeas, anezo o-unan, d'ar prizon, lod da Landerne, lod da Gerhaez, lod da Vontroulez, lod da Gemper ha lod da Vrest. Goude-ze, 'oant bet dastumet, asamez, ha kaset da Rozaon. Mez pelloh e oant klozet oll e Kastell Brest, d'an dri warn-ugent a viz C'hwevrer 1794.

*

XX

Freuz er Finistère. – Lanniliz, Plougerne ha Kastell war zao. – Emgann Kergidu.

E derou ar Revolusion, ar ouarnamant he-doa lakaet embann ar pez a anve Gwiriou an Dud : Les Droits de l'Homme. E-touez ar gwiriou-ze edo hemañ :

« An dever ar santella en-deus an den da ober, eo en em zevel a-eneb ar re a zo deuz her gwaska ».

Evid gwir, tud Breiz-Izel 'oa kalz gwasket d'ar mare-ze. Tennet 'oa diganto o beleien hag a garent, laeret 'oa madou an ilizou hag 'oa dezo evel ma on-deus lavaret ; kresket 'oa kalz an taillou. O ed, o anevaled a ranked koulz lavared rei evid netra. Mez ar pez a lakaas anezo da egari ar muia 'oa al lezenn greet evid sevel o zud yaouank da vond da zoudarded. N'o-doa ket, beteg neuze, kuitaet o harter, hag e houlened diganto mond a-bell, da zervij ar ouarnamant.

Bro-Leon a nahas a-grenn plega d'al lezenn-ze. En tri leh, dreist-oll, 'oa soñjet stourm deuz ar ouarnamant : Plabenneg, Lanniliz ha Kastell.

*

D'al lun, triweh a viz Meurz, person iñtru Plabenneg, Jacques Le Gall, ha Bergevin, an hini 'oa deuet da lakaad sevel an tenn, o-doa ranket tehed a-dreuz ar parkeier. Er parrezioù tro-war-dro, beteg Sant-Servez ha Landerne, 'oa bet sonet kloh an tangwall. An dud a deue leun an hentchou da Blabenneg. Gand lod 'oa fuzuillou, gand lod all freillou, freier houarn ha bizier.

District Brest a gasas eneb dezo tri-hant soudard hag eur pez kanol. Mez, Leoniz, ar re o-doa fuzuillou, en em lakaas a-dreñv ar hleuzioù, hag en eur redeg deuz an eil kleuz d'egile, e rajont eun droug spontuz d'ar zoudarded-se.

*

E Lanniliz, d'ar memez mare, 'oa ivez stourmad. Deuz Plougerne, Gwitalmeze, Tremeh, ar Vourh-Wenn, Plouvian ha parrezioù all, 'oa deredet tud.

District Lezneven a gasas kant hanter-kant soudard a-eneb dezo. Mez petra 'oa an dra-ze eneb tud e kounnar ?

Koulskoude, deuz an eil leh ha deuz egile, e teue da Vrest ar heleier ar falla. Koñsaillerien an district 'oa nehet-mar. Euruzamant evito, ar jeneral Canclaux a deuas war o zikour. Mond a reas gand daou-hant soudard ha tri bez kanol war an dud ravoltet. En eur redadenn o lakaas oll da blega. Tapoud a reas seiz-ugent prizonier. Ha goude beza lezet soudarded evid beilla war an tan a verve c'hoaz, dreist-oll e Plougerne, Gwineventer, Plouzeniel, Gwiseni,

Kerlaouan ha Gwitevede, e teuas gand pemp-kant soudard all da jom da Landerne evid gelloud, ahano, sailla êsoh war al lehiou ma vije red.

*

Dond a-benn deuz Kastellin 'oa bet eur c'hoari all.

An dennadeg d'ar sort 'oa deiziadet evid ar bevarzeg a viz Meurz 1793. Lakaet 'oa heh ober en iliz ar Franiskaned.

D'ar mare merket n'oa degouezet nemed eun nebeudig tud. An daboulin 'oa lakaet da vond en-dro dre ar ruiou, ha forzig deuz kêr a zeuas pelloh evid ober an tenn.

Mez al labourerien-douar, ar halz anezo, a oa chomet e-keñver kloued ar Gernevez. Mond a rajor beteg enno evid lavared dezo dond. – « Ya, emezo, ni yelo laouen da zoudarded, ma vezom lezet en or bro. »

A-nebeudou, meur a hini 'oa deut d'an iliz. Sioulig a-walh ez ee, zoken, an traou, pa zegouezas eur vandenn dud vezo. Ar re-mañ a en em lakaas da grial ha da skei kement, ma rankas an oll mond er-mêz.

An tenn 'oa, neuze, deiziadet evid ar c'hwezeg a viz Meurz, da eiz eur deuz ar mintin.

En aon na zavje freuz adarre 'oa galvet da Gastell soudarded deuz Montroulez. Degouezoud a reont d'ar bemzeg a viz Meurz da bemp eur deuz ar mintin.

E Kastell, d'ar mare-ze, an traou 'oa didrouz brao.

An aotrou Denmat, anvet evid ober an tenn e district Montroulez, asamez gand daou all : Pinchon hag Homon, a yeas dre ruiou kêr hag a gasas, er hêriadennou tosta, da weled penaoz 'oa troet an dud.

Hag evid ma kave dezo n'oa dañjer ebed, e skrivont da Vrest d'ar re 'oa o telher leh ar Goñvañsion, evid lavared dezo 'oa, e Kastell, pevar-hant soudard, hag 'oa a-walh anezo eno, peogwir d'ar mare n'oa freuz ebed.

En devez-se, tud koñsailh munisipal Plougoulm a deuas da lavared e vije diêz-braz ober an tenn en o farrez. Er memez amzer, ar sitoayan Le Bihan a gemennas na helled ket dond a-benn da lakaad Plougoulmiz da bleaga da lezenn ar sort.

Pevar archer 'oa roet dezañ evid e zikour.

Mez paotred yaouank Plouenan ne fellas dezo, morse, tenna d'ar billet.

D'an devez war-lerh, d'ar c'hwezeg a viz Meurz, e teuer da lavared e zo⁵⁹ labourerien-douar, a-vandenn, o tond war-zu Kastell deuz kostez Plouenan. Ar jeneral Canclaux a gas en o eneb tri-hant soudard. Ingala 'ra e dud war an hentchou dre ma teu, ha gand hanter-kant soudard ez a da iliz Plouenan. Eno e halv dirazañ ar mêr ha prokureur ar gomun. O-daou e permetont e vezo savet an tenn a-benn an deiz war-lerh, mar kar kerzed kuit gand e zoudarded.

En deiz-se, pa oant dizroet, Kastelliz o-doa tennet d'ar sort, dija.

Mez, deuz Plougoulm, kelou ebed. Homon ha daou archer a yeas beteg eno, d'ar zeiteg. Êsa a reont lakaad Plougoulmiz da bleaga. O hemeroud a reont dre gaer, dre ruster : gounid ebed war o halon. An oll dud yaouank a lavar, atao, nann. Ha d'an naonteg a viz Meurz, an aotrou Denmat a skrive : « O veza ne hellom ket dond a-benn deuz Plougoulm dre gaer, on-deus lakaet kas di, warhoaz, tri-hant soudard hag eur pezh kanol. Dre aon, marteze, e plego. »

Mez n'o-doa ket amzer da ober ar pezh a oa en o mennoz.

D'an naonteg, deuz an noz, tud ar houarnamant, e Kastell, 'oa ar mare da veza bet trehet gand labourerien-douar deredet deuz ar parrezioù tosta.

Setu amañ, ar pezh a gontas ar sitoayan Guillier, unan euz gouarnerien ar Finistère, da zirectoire an departamant diwar-benn an abadenn-ze : « 22 Meurz 1793. – E berr-gomzou e

⁵⁹ e zo : ez eus

lavarin deoh, e teuas dimeurz da noz, naonteg deuz ar miz, war-dro teir pe beder eur, eul labourer-douar da lavared d'an ti-kêr e oa e-keñver Kastell eur bern tud, armou ganto.

Diohtu, ar hoñsaill munisipal a reas taboulinad. Pep hini a grogas en e fuzuill. Mez dija ar vriganted 'oa deuet e ru *Kroaz-al-Lin*. An tri gomiser, Denmat, Pinchon hag Homon a redas eneb dezo e penn Grenadourien ar Halvados ha kanolerien Montroulez.

Ar vriganted a denne warno. Or pezh kanol a responte d'o zennou. E-pad eur pennad, ar poultr a strakas hag ar bolojou a fihas. Ar vriganted evid tenna dizañjerusoh a en em guze e pleg ar ruiou. Ha soudarded ar Halvados, strafuillet oll o weled o koueza daou gomandant hag eur hanolier, a en em dennas, en eur ru zall, e-kichenn an ti-kêr. Eno eh en em lakaont da denna adarre ha pelloh ar vriganted a rankas tehed... Mez pemp deuz on tud a zo bet lazeta ha tregont bennag pistiget.

Ar gomiserien a houlennas digand Montroulez soudarded, munisionou ha bevañs... Reded a reont dre gêr evid lakaad ar peoh. Kredi a reent beza deuet a-benn hen ober pa deuas pevar soudard da zacha ar mêr war al leurgêr en eur lavared 'oa ezomm anezañ, eno. Kerkent ha ma oa degouezet e roont dezañ taoliou sabrenn. Euruzamant, tud all a deuas war e zikour. Mez kaset 'oa leun-wad d'e di.

Kement-se a dremene d'ar meurzh da noz.

D'an deiz war-lerh, mêr Plougoulm ha daou ofiser munisipal 'oa deuet da lavared 'oa bet tennet d'ar sort en o farrez. Mez war-bouez ober dezo goulennoù, o-doa anzavet 'oa bet ar barreziou en emgann, en devez a-raog. Taolet int bet er prizon...

Ar merher 'oa bet didrouz a-walh hag ar yaou ivez, zoken, beteg peder eur. Er mareou-ze e tegouezas eun den hag a lavaras 'oa tud o tond, leiz an hent, deuz kostez Lezneven. Dond a reent war-zu kêr hag evid an doare, o mennoz 'oa troha ar pontchou, dreist-oll pont al lenn, tri hard leo ahano... Eneb dezo 'oa kaset daou-hant soudard hag eur pezh kanol. An dud-se a droas krenn, neuze, hag a yeas war-zu Berven, Sant Noug a ha Treflaouennan...

An noz a zo bet hep trouz. Mez ar mintin-mañ e zo⁶⁰ degouezet daou varhadour kezeg hag a lavaras beza gwelet, war hent Lezneven, demdost da Zant-Noug, labourerien-douar ganto fuzuillou ha traou all dañjerusoh c'hoaz. Beza 'oant eiz mil den bennag. O bandenn en em astenne war an hent, 'hed eul leo, da vihanna. O hoant, 'mezaon, a zo en em deuler war Lezneven, evid tenna deuz ar prizon mêr Plougoulm hag e gamaraded.

Neuze on-deus kaset da Vontroulez da houlenn pemp-kant soudard ha daou bez kanol. Kaset on-deus, ivez, eun all beteg ar jeneral Canclaux evid e bedi da zond war or zikour ha da gas da netra ar pemp pe c'hweh parrez ravoltet. E penn an dud-se ema, a leverer, an aotrou Bollere de Kerbannaleg.

*

Koulskoude, an traou a yee e Bro Gastell war falla, bemdez. Ha d'ar pemp warn-ugent a viz Meurzh, Guillier a skrive adarre da Gemper : « E-leh gwellaad, or stad a wasa. Ha ma ne hellit ket, an departamantchou tosta hag e kantonioù Kerne, dastum soudarded a-walh evid plega ar ravolt a zo dre amañ, on-deus aon na vo kollet evidom al lodenn-mañ deuz Bro-Leon.

« Ar jeneral Canclaux a dlee degouezoud, hirio. En em glevet mad 'oam gantañ, evid mond war barreziou Ploueskad, Sibiril ha Plougoulm. Mez o veza klevet e zo trizeg parrez o tond war Gastell, ar jeneral en-deus kemennet deom, e-leh dond da hortoz an enebourien e kêr, e kav gwelloc'h stourm outo, war ar mêz. Lavared a reas eta, mond gand pevar-hant soudard ha komandant ar Halvados, da hortoz anezañ da Bont Kergidu, kas ganeom eur pezh kanol, koad ha labourerien evid ober, a-nevez, ar pont-se hag a oa bet diskaret.

⁶⁰ e zo : ez eus.

Mond a rejem, ar sitoayan Pinchon, komiser e Montroulez ha me, war-dro nav eur hanter. Ganeom 'oa daou-hant soudard deuz rejimant ar Halvados, tri-ugent deuz garde nationale Montroulez, pevar harr leun a dreustou ha bevañs evid pevar devez. Kerzed a reom buan war-zu ar pont. Mez, a-veh on-deus greet eul leo, ma tegouezas warnom eun arme hag or golo a dennou. Stourm on-deus greet gand nerz-kalon. Kement a reom ar run edo on enebourien warni. D'on heul e sachom or pezh kanol. Gantañ e lezom tri denn. Daou anezo, a gav deom, o-deus greet kalz droug e-touez Kerbannaleg. Deuz on hostez i a denne gand fuzuillou.

Ar stourmad a bade abaoe eun eur pa deuas ahel ar pezh kanol da derri. Ha neuze, or hartouchennou 'oa devet oll, dija. Mall-braz on-doa da weled ar jeneral o tegouezoud.

Ar pont, a-veh dreset, ma welom e zoudarded o tond, war-zu ennañ, hag o seni argad.

Ar gwel deuz or breudeur a ro deom nerz-kalon. Lavared a reom dezo mond d'an dud ravoltet gand armou gwenn. Er giz-se e lazont kalz hag ar re all, pa weljont, a dehas.

Mez e-pad ma teue ar jeneral da veza treh, ni ne hellfem ket ober ar memez tra. En desped da nerz-kalon or zoudarded, niver an enebourien a greske atao, en-dro deom. Kemenn a reom d'ar jeneral dond en tu ma edom. Mez, da genta, ne grede ket tremen ar pont. Rag soñjal a ree mond da loja da Lezneven hag en-doa aon na vije trohet an hent outañ. Pelloh, koulskoude, e teuas d'or haoud. Neuze, ar stourmad 'oa stard e pep tu. Goude poan a-walh, or grenadourien hag or fuzullerien a hell mond er parkeier. Eno, e lazont kement den a bakont rag ne fell ket dezo ober prizonerien. Ar pezh kanol, ivez, a ra eun dismantr mantruz. Tennet e vije gantañ war an tier hag ar grañchou. An dud 'oa spouronet oll hag a dehe.

War-dro peder eur 'oa echu. Ar jeneral a roas urz da vond oll da Gastell. »

Ar parrezioù 'oa en em zavet ne glaskont ket enebi mui.

D'ar zeiz warn-ugent a viz Meurz, ar peoh 'oa sinet etre ar jeneral Canclaux ha Gwitevede.

Deg devez diwezatoh, Plougerne, Tremenah, Gwineventer, Plouzeniel, Gwiseni, Kerlouan, Kerniliz, Lanarvili, Sant-Fregan ha Sant-Servez a gasas kannaded da Lezneven da en em gleved gand ar jeneral evid kaoud ar peoh. An emgleo 'oa greet war-bouez kement-mañ : 1° Tud ar parrezioù a roio o fuzuillou ; 2° A-benn tri devez, an tenn a vo savet ; 3° ar parrezioù a baeo an oll dispignou greet evid kas soudarded a-eneb dezo ; 4° Pep parrez a roio da gomiserien ar houarnamant ano ar re a zo bet e penn ar freuz ; 5° ar hleier a vezo diskennet deuz an tourioù ; 6° pep parrez a roio pevar den, e gouestl.

Ar re 'oa bet e penn ar freuz hag a oa bet tapet, oa kastizet en eur feson skrijuz. Eul lezenn greet d'an naonteg a viz Meurz a lakae e vije kondaonet d'ar maro kement hini a vije kavet armet eneb ar vro. Hervez al lezenn-ze 'oant oll barnet.

D'an dregont a viz Meurz, komiserien ar houarnamant a skrive deuz Kastell da zirectoire an departamant : « N'on-deus gillotin ebed amañ, nag e Montroulez. Koulskoude e ve mad dibenna er harter unan bennag evid sponta ar re all. E Lezneven e zo eur hitollin. Ne goustfe ket ker degas anezi beteg amañ. »

An tribunal kriminel a yeas da Vrest, da Blabenneg, da Lezneven, da Gastell ha da Vontroulez. Eur hillotin 'oa deuz e heul ha soudarded ivez. Kerkent ha ma vije barnet an dud, ar pennou a vije trohet.

Er giz-se 'oa lakaet d'ar maro, d'ar bevar a viz Ebrel, Jean Pedel, ostiz er Releg, ha d'ar bemp, François Guiavarc'h, labourer-douar deuz Kerroz e Gwipavaz. D'an nao deuz ar memez miz, da hweh eur deuz an noz, 'oa barnet e Brest, an aotrou Barbier, mêt Gwitalmeze : diohtu 'oa dibennet. – Diwezatoh, d'an dri warn-ugent, 'oa lakaet d'ar maro, e Lezneven, Jean Prigent, mêt Gwitevede.

Ar parrezioù o-doa bet gwall sommou da baea. N'oa lezet ganto nemed peder eur warn-ugent evid rei o arhant. Setu amañ ar gont merket evid pep hini :

Plougerne ha Tremenah : unneg mil lur ;

Gwiniventer : nao mil lur :

Plouzeniel : seiz mil lur.
Gwiseni : seiz mil lur.
Kerlaouan : pemp mil lur.
Kerniliz ha Lanarvili : pemp-kant lur.
Sant-Fregan : daou-hant hanter-kant lur.
Sant-Servez : daou-hant hanter-kant lur.
Plouenan : daou vil lur.
Plouvorn : trizeg mil lur.
Plougoulm : trizeg mil pevar-hant hanter-kant lur.
Sibiril : nao mil lur.
Gwitevede ha Sant-Nouga : trizeg mil c’hweh-kant daou lur ha tregont.
Treflaouenan : c’hweh-kant lur.
Ploueskad : c’hweh mil lur.
Kleder : trizeg mil pevar-hant hanter-kant lur.

*

XXI

Pennou ar veleien lakaete gwerz. – Al lezenn eneb ar re a guz beleien. – Freuz dre ar parreziou. – Al lezenn evid diskuill mignoned ar veleien hag an noblañsou. – Ar veleien e Kastell an Taro.

Dirag al lezennou divarn⁶¹ ‘oa bet greet, eun niver braz a veleien o-doa kuitaet ar vro.

Evelkent, unanou bennag a jome, c’hoaz, dre ar parreziou. Kristenien vad, kerent aliez, mignoned ivez, a roe dezo degemer.

Mez an dud ‘oa e penn ar Finistère ‘oa adarre, hebdale, o verka d’ar houarnamant ar feson da zond a-benn deuz ar veleien-ze.

Kerkent hag an driweh a viz Eost, o-doa lakaet e vije roet daouzeg lur ha tri-ugent da gement hini a deuje da lakaad an dorn war eur beleg ha n’en-dije ket touet.

Diwezatoh, d’ar c’hweh a viz Genver 1793, e rejont al lezenn-mañ : « Koñsaill ar Finsitère a hourhemenn, ma ve kavet mad gand gouarnamant a vro : 1° e vo roet eur priz a gant lur da gement hini a bako eur beleg ha n’en-deus ket touet ; 2° ar veleien-ze a vo kaset da Gastell an Taro ha goude-ze d’ar Guyane ; 3° ar re o-devezo lojet beleien a vezo lakaet er prizon ha Koñsaill an Departamant a houlenn ma vezint dalhet, eno, e-pad deg vloaz ha ma vo lakaet da bep hini anezo nao-hant lur amand. »

D’ar mare-ze, e Plounevez-ar-Faou ‘oa beh dija war ar veleien. Eno ‘oa kuzet an aotrounez Le Guen, Keren, Guevel, Laffeter, person Plounevez ; Guyomarc’h, Auffret, Le Du, Mevel, Le Gall ha Lallouet, beleien deuz Kolloreg ; Plassart ha Joncourt, deuz ar Hloastr.

Archerien ‘oa deuet d’o hlask, mez ober a rejont tro wenn. Rag ouspenn ma oa diêz degouezoud war veleien hag a jeñche ti, bemdez ‘oant diwallet mad gand oll Blougerneviz hag o mêt, Le Page e ano.

Ha district Kerhaez, egaret nêt, o weled ‘oa, emezañ, kollet parrez Plounevez gand ar veleien n’o-doa ket touet, a lakaas ez aje soudarded d’ar barrez-se.

Kement-se a zegoueze d’an unneg a viz Genver.

Prest goude, d’an deg a viz C’hwevrer, pevar archer deuz ar Hastell-Nevez, o veza klevet e lavare an aotrou Lallouet an overenn e Kolloreg, a yeas di, eur zulvez. Degouezoud a reont war-dro deg eur. E-leiz a dud ‘oa er bourk o hortoz an overenn. Mez pa oa gwelet an archerien o tond ez ajed da gemenn d’an aotrou Lallouet. N’oa overenn ebed. Pell dioh eno,

⁶¹ divarn ? barna.

kloh an tangwall 'oa sonet. Tud a deuas, deuz a beb leh. Krial a reont : Lammom 'ta warno. Pelloh e tegouezas ar mêt, prokureur ar barrez hag eur hoñsailler munisipal bennag. Kas a reont ar pevar archer d'ar gêr.

E kostez Brieg ne dee ket gwelloc'h an traou. Er barrez-se, 'oa ivez daou veleg kuzet.

An aotrou Jacquer, kure Gourin, 'oa e karter Langolen e ti e gerent. Tapet e oa. Mez eur bern tud a zeredas da êsa hen difrma deuz a dre daouarn an archerien hag ar re-mañ ne helljont e gas ganto da Gemper, nemed en eur lezel tennou pistolenn. (13 Genver 1793).

Eur miz bennag, goude, douarnerien 'oa o tiwall bord ar mor, e Trefeunteg, e parrez Plounevez-Forze. Eno e welfont eun den o lenn. –Pe ano ho-peus ? a lavarjont dezañ.

Med eñ en em lakaas da zisplega dezo ar pez a lenne. Neuze e tapont krog ennañ evid e gas da gaoud Guillaume Petibon, mêt Plounevez. Hag eno e tisklêrias 'oa Yves Pennanneac'h, ganet e Kerneguen e Brieg. Ne anzavas ket, evelkent, 'oa person Meilar. Mez evid ober goap anezo e lavaras ne ouie ket a halleg, ne zouge ket kokardenn ar Republik ha ne oa bet, morse, o klevet overenn eur beleg touer.

Koñsaill district ar Pont a wallgase, evel kustum, ar veleien. Kerkoulz person iñtru Landudeg a vire outañ da gousked. « Karget oh, a skrive dezañ d'an daouzeg a viz Kerdu 1792, dond a-benn d'hen ober ma ne glozit oll ar veleien n'o-deus ket touet hag ar re a zo a-du ganto. Tud Gwiler ne fell ket dezo beza staget ouz Landudeg. Hag oll, bep sul, ez eont d'an iliz da gana an Introit, ar Gredo, hag ar Gloria, ha goude kreisteiz, ar gousperou penn-da-benn. Deoh-c'hwi eo da droha ar pleg fall-ze. »

Beleien Poulldreuzig a zo chomet er vro hag a ra eun droug spontuz. Bep sadorn e kouskont e Keralever.

Ar re a zo ar muia egaret e Gwiler eo : Le Brenn, mêt Lan Stephan hag e vab Jacques, Guillaume Stephan, deuz ar bourk, Jacques Lucas ha Jacques Stephan, ar haner hag ar hure. Ar re-ze ne fell ket dezo, a briz ebed, e ve staget Gwiler ouz Landudeg. Ha kalz a dud a dro ganto, zoken, deuz ar barrez-mañ. « Hastit buan 'ta kregi enno, pe dizale, e vezin va-unan o kana an overenn-bred em iliz parrez. »

Er miz-se, an aotrou Herpin, kuzet e ti e dud e Poull David, 'oa kemeret ha kaset da Gemper. Mez e leh all ne oa greet koulz lavared netra.

Ha d'ar zeiz a viz C'hwevrer 1793, Coroller a skrive, adarre, da zistrict ar Pont : « Beleien ha n'o-deus ket touet, deuz parreziou Poulldreuzig, Plozeved ha Lababan, a gendalh da brezeg a-eneb al lezenn hag ar houarnamant. Bep sul ha bemdez, e lavaront an overenn e chapel al Loc. Ha gweled a reer o vond euz an eil kerriadenn d'eben en despet da lezennou ar Republik.

Goulenn a ran ma lakafoh mêt Gwiler da zegas din alhweziou e iliz-parrez ; ma kasoh kuit ar veleien d'o-devo ket touet, ha goulenn a ran, ivez, ma vo savet eur voger da stanka an nor war chapel al Loc.

Mez district ar Pont ne hell netra.

Hag eñ da skriva d'an departaamnt (14 C'hwevrer 1793) : « Er horn-douar-mañ, emezañ, an noblañsou o-deus dilezet danvez da dalvoud ouspenn pevar milion. Amañ, en district-mañ, ivez, ez oa kant hanter-kant beleg ha n'o-deus ket touet. Gwir eo, unanou bennag a zo er prizon. Meur a hini, ivez, a zo tehet d'ar broiou all. Mez kalz a jom c'hoaz. Ne hellfom ober netra ma n'on-deus ket a zoudarded. Degasit, eta, eul lestr a vrezel da jom da Waien ha pevar-hant soudard, da ranna etre Douarnenez hag ar Pont. Ouspenn, roit daou vil fuzuill da lakaad etre daouarn ar garde nationale. »

Er memez amzer e skrivas da Expilly da lavared dezañ : « Roit beleien d'ar parreziou. Rag pa houlennom digand ar vêred lakaad ar veleien n'o-deus ket touet etre on daouarn e respontont bep taol : degasit deom re all. »

Expilly a respontas n'en-doa ket a veleien. « Mez, emezañ, lavaret em-eus d'ar gureed a zo er parreziou, mond da berson d'al lehiou ha n'eus beleg ebed. Ne zelaouont ket ahanon. C'hwi, marteze, a ve selaouet gwelloc'h. » (24 C'hwevrer 1793).

Pelloh district ar Pont en em dennas a-hend-all. Evid kaoud ar veleien eh en em gemeras deuz ar vêred hag ar goñsaillerien vunusipal. Er giz-se e reas evid Plogoñ, Preveil ha Kleden. D'an 29 a viz Ebrel e kasas da Gemper, Clet Normand, Pierre Cozic, Jean Breton, Nicolas Dagorn, Yves Guenzengar hag Hervé Moullec deuz Plogoñ ; Jean Arc'han, Jean Riou, Jean-Guillaume Poulhazan, Yves Velly deuz Preveil. N'oant ket lakaet er prizon. Mez e Kemper e rankent chom. Bemdez da nav eur ha da deir eur e rankent mond d'an ti ma chome ennañ sekretour an Departamant. Noel Bourdon, mêr Kleden ha Guillaume Guezengar 'oa lezet evid klask ar veleien. Pemzeg devez 'oa roet dezo evid ober o hevriddi. Mez goude ar pemzeg devez, ma ne vijent ket deuet a-benn deuz o zaol, e tleent beza lakaet er prizon ha barnet gand ar re all, kevred... Hag e vo kaset d'ar parreziou soudarded da veva enno, diwar-goust ar barrez beteg ma vo lakaet ar veleien n'o-deus ket touet, etre daouarn an departamant.

*

District ar Pont ne helle en em gemer gwelloh. Rag er giz-se, e ree d'ar veleien vad, mond da en em ziskuill o-unan kentoh eged gweled kastiza o mignoned. Ha d'an tri a viz Mae 1793, an aotrounez Klet Kerloc'h hag Herri Mevel deuz Plogoñ, Yves Goardon ha Jean Calvez deuz Preveil ; Gloaguen ha Kerizit deuz Kleden, beleien ha n'o-doa ket touet, a en em lakaas etre daouarn koñsaillerien o farreziou.

E Pont 'n Abad, prokureur ar barrez, o veza klevet d'ar bemp a viz Mae, ez oa beleien kuzet e maner Kernu, a yeas gand c'hewezeg "gard national". A-raog mond er maner, e laka e zoudarded, darn a-dreñv an ti, darn all da ziwall an nor-borz, ha pemp da ziwall dor an ti.

Eet er maner e kav daou zen gwisket e-giz labourerien-douar. Ne zoñj ket int beleien. Mez o veza gwelet daou leor hag eur moñtr, e kemeras anezo. Unan euz ar gwazed-se, o veza falvezet gantañ kemer ar moñtr, e houlenn digantañ piou 'oa. Deuz an eil goulenn d'egile a teuas a-benn da houzoud, edo dirazañ Yves Andro, kure Kombrid ha Jean Kerneau, kure ar Yeuh, ganet e Tringad. O-daou 'oant kaset d'ar prizon ha goude-ze, da Enez Aix.

D'ar bemp a viz Even 1793, archerien Vontroulez a dape Gwikrien, e ti Yvon ar Braz, unan anvet Yves Le Gall. O-daou, ar huzer hag an hini en em guze, 'oant kaset d'ar prizon da Gastell. Ha koulskoude, Yves Le Gall a lavare ne oa ket beleg, n'oa nemed avieler.

E Roudoualleg, da viz Eost 1793, edo c'hoaz ar veleien vad. Ar barrez-se a zo war ar meneziou. N'oa ket êz, tamm ebed, kas di beleien all. Kerkoulz ar barrez a oa eneb dezo.

*

D'an driweh a viz Eost, Nicolas Le Leap, kure iñtru Gourin, a falvezas gantañ mond da Roudoualleg, evid ar pardon braz. Ar bourk 'oa leun a dud hag a reas hu warnañ. Ha pa edo o tehel kuit, e welas o vond d'an iliz Loedon, person koz Gourin hag 'oa deuet war e her, goude beza touet, Fournier, kure Roudoualleg, Castrec ha Le Borgne, beleien.

Person iñtru Plovan, ar Guellec, ar ziskuille da zistrict ar Pont, d'an eiz a viz Gwengolo 1793, mêr Pouldreuzig. C'hoantaet en-doa lavared an overenn e chapel Pennhorz. Mez kaer en-doa bet ober, ar mêt a nahas an alhweziou outañ. « War a lavarar, emezañ, an abeg en-doa mêt Pouldreuzig da nah ouzin an alhweziou, 'oa ma edo, d'ar mare-ze, Dieuleveult ha Kerdreac'h o lavared an overenn, er chapel. »

Ar veleien vad a jome c'hoaz, er vro, 'oa peurliesad diwallet deuz o gwella. Diskuillet e vijent. Mez ral 'oa ma kaved anezo. War evez e vijed, atao, ha pa'z eed d'o hlask, al lapous a vije nijet deuz e neiz.

Er giz-se e tegouezas gand eur beleg 'oa kuzet e ti an dimezell Beaugendre deuz Kemperle. Da hweh eur deuz ar mintin edo an archerien en ti. En eul lochenn vihan, er porz, 'oa kavet eur gwele, c'hoaz tomm. Mez n'oa avad beleg ebed. Soudarded 'oa lakaet da ziwall an ti, en

esper e teuje c'hoaz en-dro. Goude tri devez, an dimezell Beaugendre a reas an neuz da leñva : « Va Doue ! a lavaras d'ar zoudarded, me 'laka eo maro pell 'zo ar beleg a glaskit. » - « Perag 'ta », 'oa lavaret dezi. « Perag ? Du-ze ema en eun arbel goz e traoñ ar jardin, hep tamm abaoe tri devez ha klozet warnañ ! ». Ar zoudarded a yeas da weled. Evel just ne gavfent beleg ebed hag ez ajent kuit.

Gand an Tad Noiro, deuz Montroulez, e tegouezas kaerroh. Edo, eun devez, en eur gambr, o kaozeal gand eun itron pa zaillas archerien en ti. – « Sur om ema amañ an Tad Noiro, emezo d'ar plah. Digorit deom ar hambrojou. »

An itron a glevas. Hag hi krial d'he flah deuz he hambr : « Ya, Mari, digorit ar hambrojou d'an archerien. »

An itron ne oa ket teo e-giz d'eur varrikenn. Dougen a ree, war he chouk, eur vantell hir ha ledan.

An Tad Noiro, en eneb, 'oa mistr ha bihan. Lavaret e vije greet n'oa ket eun dornad anezañ.

Hag an itron, diohtu, lavared d'an Tad azeza war eur gador ledan 'oa eno. Teuler a reas he mantell a-dreñv he hein, war bordou ar gador, hag eh azezas war barlenn ar manah.

Pa bignas an archerien e lavaras dezo : « Aotrounez, me 'zo koz. Seizet oll va izili ne hellan ket sevel diwar va hador evid diskouez deoh an ti. Mez ar plah a zo aze, hi 'ziskouezo ar hrambjou deoh. Klaskit mad enno. Furchit ivez, ma kirit en arbili. Rag an hini a glaskit, a gav din, 'zo bihan-bihan. Marteze ema kuzet en eun armel bennag. Ne gav ket din, koulskoude, ha chañsuz-braz e ve deoh e gaoud amañ. »

O kleved kaozeal evel-se, an archerien a daolas a-veh eur zell deuz an itron goz. Galoupad a rejont da glask e kement toull a gavjont deuz ar hao beteg ar halatrez.

P'o-doa furchet oll ha troet, kement tra 'oa war an tu a-eneb ; an hini a gomañde an archerien a deuas da houlen eskuz digand an itron goz. « Gweled a reom, emezañ, eo tud fall a zo bet o konta trao diwar ho penn. Sur om bremañ n'eus en ho ti nemed ho plah ha c'hwi. »

« Sur, avad, eme an itron. It eta e leh all da glask an Tad Noiro. Mez hennez 'zo fin. Bihan eo ivez hag êz da guzad. Nemed an diaoul a ve a-du ganeoh ne lakfoh morse ho krabanou warnañ. Hennez a heller da holo a-zindan diouaskell eur yar gluchet. »

Hag an archerien a yeas, er-mêz, en eur lavared : « Anad eo, n'ema ket an Tad Noiro aze. Anez an hini goz ne vije ket bet kement a farserez ganti. »

Mez n'eo ket hepken war ar veleien n'o-doa ket touet e koueze beh ha trubuil. Koueza 'reas, ivez, war ar gristenien vad hag an dud onest. Aliez a-walh ar vêred ha koñsaill munisipal, evel on-deus lavaret, a vije diskuillet ha taolet er prizon. Re all a yeas d'o heul.

Rag ar c'hoant 'oa da gaoud ar veleien a reas diskuill, ivez, ar re a zoñjed e oa douget dezo.

*

Ha d'ar seiz warn-ugent a viz Ebrel, kannaded ar gouarnamant er Finistère, Le Mailland ha Guermeur, a zougas al lezenn-mañ :

1° Oll an dud a vo da ziwall outo a vo taolet er prizon e kêrbenn an distrigou a oa bet choazet evid an dra-ze, gand gouarnerien ar Finistère hag ar Morbihan.

2° A vo da ziwall outo, tad, mamm, breudeur, c'hoarezed, bugale ar re 'zo tehet d'ar broiou all ; ar seurezed n'int ket bet eet, a-volontez vad, kuit deuz o houentchou, ha mitizien ar veleien a zo kaset d'an harlu.

Eur bern tud, neuze, a zo bet taolet er prizoniou.

Ar veleien 'oa bet kroget enno 'oa kaset da Gastell an Taro.

Kastell an Taro a zo war eur roh e-kreiz ar ster a gas da Vontroulez. Savet eo bet gand Montrouleziz, gwechall, evid mired deuz ar Zaozon da zailla war o hêr.

Ennañ, a-zindan al leurzi e zo toullou greet war vaout evel kerniel. En o hreiz, eun den a hell chom, peurzvad, en e zav. Mez en daou gostez, avad, e ranker beza daoubleget. En toullou-ze, war ar roh e oa taolet ar veleien, nao,deg asamez.

*

Setu amañ anioiu ar re 'oa bet kaset di, d'ar mareou-ze :
Guillaume Rochkongar, kure Trevarn, e parrez Dirinon.
Ollivier Marhic, kure Lanvoa, en Hañveg.
Frañsez-Augustin Falc'her, person Dineol hag e gure M Jomivet.
Pavec, person Plogonneg.
Thomas, beleg ha Menou, avieler, deuz Plistin.
Piere Goasduff, deuz Bobiliz, ha Carof, kure Pont-Krist.
J. Coat, person Lezneven. Mez an aotrou-ze a oa bet lezet da vond kuit, a-barz pell, pe marteze 'oa bet kaset da brizoniou Kemper.
Scouarnec, beleg, deuz Sant-Segal.
Jacques Le Corre, kure Sant-Gwazeg.
Julien Tremeur, deuz district Landerne.
Guillaume Hervé, kure ar Vouster e parrez Trebrivan.
Yves Gourmelon, kure Sant-Divi ha Causeur, beleg e Sant-Divi.
Fransoa-Marie Lazou, bet kure e Porspoder.
Jacques Corre, manah deuz kouent ar Gapusined, e Landerne.
Henri, kure Laz.
Quemeneur ha Tanguy deuz Kemperle. Ansquer, kure Kerien ha Vinoc Gouil, beleg deuz Plouhineg hag o chom e Kerien.
Ignace Lugern, sakrist e katedral Kastell.
Pierre Jaffry, deuz ar Pont, Le Goff deuz Montroulez.
Guillaume Le Jeune deuz Plougoulm. Guillaume Heliez deuz Landerne ha Le Gac, deuz Kastellin.
Jacques, kure Gourin, paket e Langolen.
Yves Cochart, deuz Plouzeniel ha Dantec deuz Montroulez, daou gloareg.
Oll ar veleien-ze 'oa bet kaset da gêr Breded d'an dregont a viz Meurz 1793.
Tri en o zouez, 'oa bet tapet, emichañs, gand hailloned deuz o bro ; rag, evid an aotrounez Guillaume Hervé, Henri, kure Laz ha Jacques Corre, kure Sant-Gwazeg, 'oa bet paeet daouzeg lur ha tri-ugent pa oant degaset d'ar prizon.

*

Gwelet on-deus pegen diêz 'oa bet kemered an aotrou Jacques e Langolen.
Evid an aotrounez Gourmelon ha Causeur 'oa bet ivez stard an abadenn, e Sant-Divi.
Ar zul e oa. Edod o kana gousperou pa zegouezas er bourk, soudarded. Mond a reont war-eeun d'an iliz. Unan anezo a lammas er heur dreist ar balustrou.
- -Sitoayaned, emezañ d'an daou veleg a oa eno, touet ho-peus senti deuz al lezennou ?
- -O ! nann, morse, a lavaront
- - Pe ano ho-peus ?
- - Me a zo Gourmelon, person ar barrez, eme unan.
- - Ha me Causeur, eme egile, o chom e ti va zad er bourk.
- - Mad, eme ar zoudarded, kement ha ma ho-peus komañset e hellit kana ar gousperou penn da-benn.

Pa oa kanet ar gousperou, - eur gousperou trist -, an aotrou Causeur a deuas er-mêz dre ar sakreteri hag an aotrou Gourmelon dre an nor-dal. Mez e pep korn deuz ar vered 'oa soudarded. Paket e oant o-daou. Staget 'oa dezo o daouarn etre o hein. – Ha bremañ, sitoayaned, a lavaras dezo mestr ar zoudarded, dihin⁶² hag en hent da Vrest.

Kaled e vije bet kalon an den n'en-dije gwelet, neuze. An daou veleg paour, o daouarn liammet, a gerze etre ar zoudarded. Mamm an aotrou Causeur a boke d'he mab hag a vriate anezañ.. –A-walh a jestrou, randonenn goz, eme eur soudard en eur zistaga ganti eur javedad.

Neuze e savas eur c'hoari all. Gwazed Sant-Divi a en em lakaas a-dreuz an hent evid mired deuz ar zoudarded da vond larkoh. Mez ar re-mañ a zistagas taoliou sabrenn a-gleiz hag a-zehou hag a dremenas. Droug enno, Sant-Diviiz a reas kaerroh. Lammad a rejont dreist ar hleuziou, hag 'hed an hent deuz an daou du e veinent ar zoudarded. Heuillet o-doa anezo, er giz-se, en tu all da Wipavaz. Mez kaer o-doa bet ober, o beleien 'oa bet treinet da brizon Brest. Goude-ze 'oant bet kaset da Gastell an Taro.

*

XXII

Lezennou divarn. Ar veleien vad kondaonet d'ar maro. Ar veleien fall dizenoret. Anoiou nevez roet d'ar miziou, d'ar hêriou. Goueliou an Dekad. Gouel ar Rezon vad. Daou gristen kaloneg.

Kaer 'oa ober, beleien vad a jome atao, kuzet dre ar mêziou.

Pelloh, 'oad kouezet war ar veleien fall o-unan. E meur a barrez e troed, atao, kein dezo. Mez, evelkent, overenna a reent. Tennet 'oa deuz o ilizou an arrebeuri aour hag arhant. Diskaret 'oa, ivez, ar hleier deuz an touriou. Lidou an Iliz n'oant mui na koant na brao. Mez re 'oa c'hoaz. Red 'oa o has da netra.

Dija, d'ar c'hwezeg a viz Du 1792, Cambon en-doa goulennet tenna o fae digand ar veleien n'o-doa ket touet. Neuze, emezañ, e rankint kemer eur stad all ha ne vo beleg ebed mui. –« Nann, a lavaras Robespierre, labourerien a zo ha tud all, ivez, hag a fell dezo kaoud beleien. Ma tennom o fae diganto, evid kaoud beleien e paeint anezo, o-unan, hag eh en em glemmint, rag prometet on-deus o faea. Gwella 've, eo o lakaad da zisprijoud, a nebeud da nebeud, ar veleien-ze hag o lakaad da goll o feiz. Rag den ne hell lamad ar veleien digand ar bobl beteg ma welo ar bobl, sklêr a-walh, eo bet faziet o vond d'o heul. » Diwar ar mare-ze 'oa poulzet war ar veleien touerien evid o lakaad da vond er fank hag er vouillenn.

Meur a hini deuz al louldigou paour-ze a rene buhez fall. Ar re o-doa o degemeret da genta a droe kein dezo. Neuze, ar Goñvañsion a reas al lezenn-mañ : « Ar veleien dimezet hag a vo greet poan dezo, en o farrez, en em denno e leh ma kirint gand o gwragez. Mez ar barrez, e leh ma vezint bet heskinet, a ranko rei dezo peadra da veva. » (27 Gwengolo).

E-touez ar veleien touerien, koulskoude, meur a hini a gave braz dimezi. Eskibien iñtru a zave o mouez evid lavared ne dlee ket ar veleien kemered merhed.

Mez al lezenn greet d'ar zeiteg a viz Gwengolo 1792 a lakaas kalz anezo da blega.. Al lezenn-ze a oa bet fardet evel-henn : « Ar re a vo da ziwall outo a vezo taolet er prizon, e peb leh dre ar vro, kerkent ha ma vo anavezet al lezenn-mañ. Hag e vo da ziwall outo, ar re dre o feson da veva, pe dre an dud a heuilont, pe dre o skridou, pe dre o homzou, a vo bet en em ziskouezet mignoned d'ar Girondined pe d'ar Roue ; a vo c'hoaz da ziwall outo ar re n'o-devezo ket eur paper digand mêr o farrez evid diskouez int sitoayaned vad. »

⁶² dihin :?

Al lezenn-ze a oa eun trap : an neb a gare a veze tapet ganti. Ar veleien troet gand ar houarnamant ‘oa gwaz, meur a wech, abalamour dezi.

D’an deg a viz Here 1793, ar Goñvañsion a lakaas kas, dre bevar horn Bro-Hall, tud euz he dorn hag a anvent : “komiserien“. D’o heul ‘oa eun tribunal hag a varne, koulz lavared atao, d’ar maro. Ar gomiserien-ze, dre ma’z eent, a lavare d’ar veleien touerien : « Kemerit eur vaouez : ma ne zimezit ket eo sklêr n’oh ket mignoned d’ar gouarnamant hag e vezoh e-touez an dud a vo da ziwall outo. »

Hag an darn-vuia deuz ar veleien iñtru, eskibien hag all, a zimeze. E Kemper, ar vikel-vraz, Gomaire, ‘oa bet dimezet teir gwech.

Ar gouarnamant a reas muioh c’hoaz. Gouzoud a ree en-doa peg ar pezh a gare war galon eur beleg fall. Divenn a reas ouz ar veleien iñtru derhel, en o iliz, roll ebed deuz ar re o-doa roet dezo ar zakramantchou. Ouspenn-ze ‘oa gourhemennet dezo eureuji an oll – ar re da vihanna o-doa c’hoant da veza eureujet ganto. – heb goulenn deuz peseurt relijion int, heb goulenn pe int badezet pe n’int ket, pe int divorset pe n’int ket.

Hag ar veleien iñtru a ranke plega, bep taol, pe koueza a-zindan al lezenn ‘oa greet war an dud ‘oa da ziwall outo.

Da heul al lezennou-ze ‘oa fardet, d’an nao a viz Here 1793, eul lezenn all hag a oa gwasoh c’hoaz. Al lezenn-ze a roe da Goñsaill an ti-kêr ar galloud da zerra an ilizou, deuz an iñtrued. Iliz Kastellin a deuas, neuze, da veza eul leh da zeha dillad. Iliz Sant-Louis Brest hag Iliz-Veur Kemper, templou ar rezon vad.

Dija, abaoe eur pennad, Chaumette, eur mestr-skol hag a oa prokureur ar gomun e Pariz ha kannad, en-doa lavaret er Goñvañsion : « Red eo kaoud eun devez ehan bennag evid an dud. Mez arabad e ve ar zul, bet kaillaret beteg-henn, gand superstisionou sod. Ober a reom goueliou laik. D’an deg a viz Eost eh en em vodom, evid ar wech kenta. Ar bobl a vezo on Doue. Ne dlefe, morse, beza Doue all ebed. »

Ar miziou, zoken, hag an deveziou, ‘oa cheñchet ano dezo. Peb miz ‘oa rannet e teir gwech deg devez. Ano an degved devez ‘oa an *dekad*. Henez ‘oa lakaet evid derhel leh ar zul. D’an devez-se, an oll a ranke ehana hag en em deuler d’ober c’hoariou gourhemennet gand ar houarnamant. E Moelan hag er parrezioù all ‘oa taolet plahed yaouank er prizon, abalamour ne felle ket dezo dañsal d’an dekad. Ar re a ehane da labourad d’ar zul, a vije, ivez, taolet er prizon.

*

Beteg neuze, ar relijion gristen he-doa lakaet peb devez a-zindan skoazell eur zant pe eur zantez. En o leh ar Goñvañsion a lakaas anioù plant pe legumaj, d’ar pemped devez ano eun aneval ha d’an degved devez, ano eur benveg. Setu amañ penaoz ‘oa merket an traou evid an dekad kenta deuz miz Gwengolo. An deveziou all, e-pad ar bloaz, ‘oa evel-se :

Primidi, rezin.

Duodi, safran.

Tridi, kistin.

Quartidi, karotez.

Quintidi, marh.

Sextidi, balzam.

Septidi, panez.

Octidi, sitrouillez.

Nonidi, gwiniz.

Dekadi, barrikenn.

Ano ar hêriou hag ar parrezioù 'oa menneg enno deuz eur zant pe eur zantez bennag a oa cheñchet.

« En eur barrez, e skrive prokureur district Montroulez da vêred Sant-Paol, Sant-Yann-ar-Biz ha Sant-Tegonneg, en eur barrez, ne dle mui beza netra hag a zegasfe soñj deuz an amzeriou-ze hag an dud a stoue o fenn pe dirag an noblañs pe dirag eun den, eur miñtr war e benn. - (eun eskob) – En emglev, eta gand da Goñsaill munisipal, evid rei d'ar barrez eun ano republikan. »

Ne ouzon ket pe ano 'oa roet da Gastell, da Zant-Yann-ar-Biz ha da Zant-Tegonneg. Mez Kastellin 'oa anvet Keraven pe Keraon.

Evel a weler, war ziskenn ez ee, atao, an traou evid ar relijion. Gwasoh, evelkent, 'oa c'hoaz da zegouezoud.

D'ar zeiz a viz Du 1793 Gobel, arheskob Pariz, a yeas er gador, er Goñvañsion. Eno, en e zav, e tennas e groaz aour diwar e stomok, hag en eur deuler anezi d'an traoñ, e lavaras e felle dezañ en em zivlegi.

Eur roll 'oa greet raktal, evid ar veleien a blije ganto ober ar memez tra. Hag evid o dougen da gement-se, 'oa prometet dezo kalz sommou arhant.

*

En touriou e chome c'hoaz dre ar vro, kleier, e meur a leh, da vihanna. Ar hleier eo mouez an Iliz. Ind-i a laka ar gouelioù da veza kaerroh. Eul lezenn 'oa greet evid gourhemenn o diskar oll, nemed unan, deuz pep tour.

Deuz ar Finistère ar hleier 'oa kaset da Vrest. Evelkent, mar deo gwir ar pezh a lavar, hirio c'hoaz, ar re goz, kalz parrezioù a guzas o re : Kleier Pont-Krist a zo war ar gont-se, kuzet abaoe, e lenn Brezel ; kleier Sant-Ivi 'oa, ivez, taolet en eul lenn, dizehet a-nevez 'zo.

War an ilizou e chome c'hoaz mein kizellet ; ouz ar mogerioù ar patromioù sent ha santezed, hag ivez skoejou an noblañs. Ar Goñvañsion, c'hoaz, a reas eul lezenn evid kas da netra an oll draou-ze. 'Gozig dre oll, siwaz ! 'oa pleget dezi. Kalz teñzorioù a zo bet, er giz-se, distrujet. E Kastellin 'oa draillet poltred Itron Varia Kerluan ; e Lanriod, e Moelan, paotred yaouank, d'an dekad, a hoarie boulou gand pennou ar zent ; hailloned Lezneven a yeas d'ar Follgoad, da vruzuna eno ar vein kaer 'oa en-dro d'an iliz.

Ne respeted mui netra. Kroazioù ar berejou ha re an hentchou a oa diskaret. Ar gwer a-liou war an ilizou a oa torret. A-wechou, zoken, ez eed, en tiez, da regi an taolennou ha da vruzuna ar hrusifisou.

Ha neuze, peurgaset ganti ar Relijion, ar Goñvañsion a reas pelloh, ar pezh a anve gouelioù laik. Unan deuz ar gouelioù-ze, ar brasa, 'oa gouel ar Rezon vad.

D'an deg a viz Du, e Pariz, gwreg Montmor, eur hannad deuz ar Goñvañsion, 'oa gwisket dezi ar pezh a anved dillad republikan. En he dorn 'oa lakaet eur goaf, war he fenn eur boned ruz, en he herhenn dillad gwenn, ha war he chouk eur vantell vleun. Douget 'oa, e prosesion, dre gêr. En-dro dezi 'oa tud oh ober farserez, gwisket ganto dillad Iliz.

Gouel ar Rezon vad 'oa bet greet dre ar hêriou braz oll. E Sant-Louis Brest, gouarnour kêr, Jean Bon Saint-André, a oa bet pignet er gador. Ober a reas eur brezegenn a-eneb ar veleien gatolik. N'o-doa greet, emezañ, nemed skigna dre ar bed kredennou sod hag ober goap deuz an dud. Alia 'reas ar re 'zelaoue, da drei kein d'ar relijion o-doa heuillet beteg neuze. A-veh ma oa lavaret gantañ, ma lammas an dud da regi an taolennou kaer 'oa 'uz an aoterioù ha da derri ar hrill houarn turniet deuz ar gwella 'oa en-dro d'ar Heur.

E Kemper, ar Gouel 'oa greet, d'an daouzeg a viz Du. Eun den, e ano Dagorn, 'oa bet lakaet e penn ar zoudarded a yee d'ar Gatedral evid an dra-ze. Mond a reas beteg an Aoter vraz hag e torras gand e zabrenn an nor war an Tabernakl. Goude, gand e zaouarn louz, e

kemeras ar halir hag ar siboar, ha war al leurgêr, dirag an oll, e saotras, divodest, al listri sakr-se.

Evelkent, en eun amzer spontuz evel hennez, e kaved c'hoaz tud a galon.

*

Da fin ar bloaz 1793, 'oad oh ober, e Brest, eur gouel en enor da Virabeau. Skeudenn an den fall-ze 'oa war eun aoter, savet e-kreiz al leurgêr. En-dro dezi edo pennou braz an district, ha bugale, ezañs ganto. A-barz pell eh en em lakaer da gana son ar Marseillaise. Hag an oll, kerkent, da stoui dirag ar skeudenn.

Eun den, unan hepken, a jomas sonn en e zav e-kreiz an dud diod-ze. Heugi a reen o weled renta, da eun den, eun enor ha na zere nemed ouz Doue. Hag e krias a-bouez-penn : « Idolatri ! idolatri ! »

E gamaraded, en e gichenn, a hoantee hen lakaad da zaoulina hag a zache war e zillad. Bepred e chome en e zav.

Ar zoudarded, souezet da genta, a en em lakaas da lavared : « Feburier⁶³ ! war da zaoulin ! » -« Nann, a respontas, n'on bet, morse, war va daoulin dirag Doue ! »

Ti an den kaloneg a oa war al leurgêr. E wreg, e-barz ar prenest, a oa o selled outañ. En devez war-lerh, e skrivas d'he ferson, tehet da Vro-Zaoz : « Euruz-braz on bet o kleved anezañ oh anzav e feiz. Fier 'oan da veza gwreg dezañ. Karet em-bije, n'ouzon pegement, beza en e gichenn, gand or bugale. Pa welis e save beh warnañ e lakis or re vihan war o daoulin ha kevred e pedem Doue da rei kouraj d'o zad. Dija ar sabrinier 'oa savet a-uz d'e benn. Ne oan ket evid tenna diwarnañ na va daoulagad na va halon. E zell a baras em hini. Gweled a reas 'oan kontant. Mez diohtu, e tistroas e benn. Aon en-doa, a lavare, goude-ze, ne vije deuet da fallgaloni en eur zelled diouzin... ».

Koulskoude, ar Gouel 'oa echu. An dud, droug enno, a youhe eneb Feburier. Ar zoudarded a rankas diambroug anezañ da vond d'e di ha chom, zoken, d'e ziwall, e-pad an noz. Mez d'an devez war-lerh, an oll a lavare : « N'eus nemed eun den a galon e kêr Vrest, hennez eo Feburier. »

E Kastellin, e tro ar memez mareou, eur vaouez a ziskouezas, ivez, kalz nerz-kalon.

En devez-se 'oa bet greet e kêr eur gouel bennag. Ar zoudarded, oll anezo, 'oa o pignad gand ar ru vraz, pa zegouezjont dirag kroaz ar Mision.

Sell, a lavaras unan, en eur ziskouez imaj an Aotrou Krist ; hennez, pelloh, a dle beza skuiz aze : diskennom anezañ. Kerkent, ar zoudarded a en em vodas en-dro d'ar groaz hag a bilas anezi. Imaj ar Hrist a oa distaget. Eur gordenn 'oa taolet en-dro d'e houzoug hag eh en em lakajont, er giz-se, d'e stleja dre ruiou kêr. Da fin an devez, skuiz dija, ez eont e porz an otel. En ti-ze, edo o ofiser. Dirag e brenestr, e reont eur bern keuneud, ha warnañ, e lakaont ar Hrist, gand ar zoñj d'e zevi.

Mez, sada, eur vaouez o tond a-benn herr. Lammad a ra, a-dro vriad, war an imaj benniget hag e toug anezañ d'he zi.

Ar zoudarded, mantret, da genta, a zelle an eil deuz egile. Pelloh, unan bennag en em lakaas da grial : « E ! sitoayaned, da beleh ? » - « Da beleh ? », eme an itron. « Deus 'ta ma vo gwelet ha kouraj az-pezo da denna digand eur vaouez imaj he Doue ! » Ar zoudarded a dehas oll, mezeg, deuz ar porz.

Ar vaouez kaloneg a oa an itron Binizonneau. Heh ano a verit beza skrivet e lizerennou aour.

*

⁶³ Feburier : ano an den.

XXIII

An “tribunal révolutionnaire“ e Brest. – Ar veleien hag an dud all barnet gantañ d’ar maro. – Maro gouarnourien ar Finistère.

Ar Goñvañsion, deuet da veza mestrez e Bro-Hall, he-devoa kaset, e kement korn deuz ar vro, er hêriou brasa, dreist-oll, tud he dorn da ober en he leh. Ar re ‘oa degaset da Vrest ‘oa Jean Bon-Saint-André, Prieur ha Bréard.

Ouspenn-ze, e kement parrez he-doa greet ar pezh a anve “Comité de Surveillance“, da lavared he-doa lakaet tud da deuler evez evid ma vije miret, penn-da-benn, he lezennou.

E Pariz, ar Goñvañsion he-doa greet eun tribunal anvet “tribunal révolutionnaire“. Henez ‘oa evid dileunia ar prizoniou. Atao, koulz lavared, e kondaone d’ar maro.

Kalz kêriou o-doa greet evel Pariz. Bréard a hoantae ober ar memez tra, e Brest. Mez diou wech e 1793, Jean Bon Saint-André a viras outañ. Pelloh, d’ar bemp a viz C’hwevrer 1794, e teuas a-benn deuz e daol. Setu amañ an “arrêté“ a oa kemeret evid kement-se.

« 1° Savet a zo⁶⁴ e kêr Vrest, eun “tribunal révolutionnaire“ heñvel deuz hini Pariz. Barn a raio an oll sitoayaned tamallet da veza greet eun dra bennag eneb al liberte, ar bobl, gouarnamant ar Republik. 2° An tribunal-ze a varno dirag an oll, en eul leh a frankiz ma vo gellet ; 3° Ar Spierien (“comité de surveillance“) deuz an oll parrezioù ha kement hini en-deus eun tamm galloud bennag digand ar houarnamant, a zegaso ar re a vo da veza barnet ; 4° An tribunal a vezo tronet d’an unan warn-ugent deuz ar miz. 5° An tribunal-ze a vezo ennañ pevar barner, eun tamaller, eur “substitut“, eur “greffier“ ha daouzeg “jure“.

Ar varnerien a vo Goarant, prezidant ; Lignères, Palis, Barz. An tamaller a vo Hugues, hag en e leh pa vanko, Granjean. A greffier a vo Dayot hag ar jureed : Despuyol, letanant a vor. Gautier, kabiten. Durand, koñsailler munisipal. Combaz, serjant-major. Desrues, kaporal. Fourier, letanant. Blot, kalafeter. Duclos, ofiser a vor. Brandin, marhadour. Allegol, amenuzer. Mazeaz ha Baroux.

Kerkent ha ma oa tronet an tribunal-ze, Hugues, an Tamaller, a skrivas d’ar Hoñsaill munisipal : « Gourhemenn a roan deoh, hervez al lezenn, lavared da galvez ar gomun lakaad war blasenn al Liberte, a-benn seiz eur, warhoaz, ar hillotin santel. »

Ar hillotin a oa savet d’ar mare merket.

Claude-Robert Rougemont, letanant a vor, c’hweh vloaz ha tregont ; Charles-Marie Le Dall de Kereon, deuz Kemper, naonteg vloaz ; hag Herri-Louis Monteclair, triweh vloaz. An daou diweza ‘oa martoloded. Deuz an tribunal, diohtu ‘oant kaset d’ar hillotin. Kêr Vrest ‘oa spontet oll. Dre ar ruiou ne vije gwelet, morse, e-pad eur pennad, nemed ar zoudarded ha lod merhed fall. Ar re all a jome en o zi.

E-pad eun nebeud amzer ne oa barnet den mui. Goarant ‘oa lakaet en e leh. Ragmey, eun den divar, mar doa unan, deuz tribunal Pariz. An tamaller ‘oa cheñchet, ivez, en e leh ‘oa lakaet Donze-Verteuil, eur manah fall. Fouquier-Tinville a deuas da veza greffier.

Ar henta beleg en-doa an enor da veza barnet gand an tribunal révolutionnaire ‘oa an aotrou Coz, person Poullaouen.

Eun nozvez ‘oa bet, e-pad an noz, o koves e parrez Leuhan. Pa deuas ar mintin, e lavaras e overenn. E-pad an overenn-ze, an dud a leñve ken a strake o halon. Soñj a deue dezo deuz ar goueliou kaer a vije greet en o iliz-parrez, bep sul, a-raog ar revolusion. Ha bremañ evid pedi ha degemeret o Doue e rankent en em guzad evel laeron. – « Aotrou Doue ! na pebez amzer ! », a lavarent d’an aotrou Coz a-raog kimiada. « Kenavo er baradoz, aotrou kêz ! Eur ral a ve deom en em weled mui er bed-mañ. »

⁶⁴ a zo : ez eus.

« A ! tudou keiz », eme ar beleg mad, a-raog ma vo degaset an traou war o zu, e vo redet gwad. ‘Gozig c’hoant em-eus da lavared da Zoue kemer va hini. Me ‘gav din, mar deufe, bremañ, an archerien d’am herhed da vond d’ar maro, ne rafen ket kalz a van. »

Eun devez bennag goude, an aotrou Coz ‘oa en eun ti deuz Poullaouen. Azezet ‘oa dibreder e-kichenn an tan, gwisket e giz tud ar vro.

Degouezoud a reas daou zen degaset gand ar houarnamant da vuzula an ed. An daou vuzuler a houlennas digand an aotrou Coz hag-eñ ‘oa ar mestr. —« N’on ket, sur, a respontas ; ar mestr a zo er park ; me ‘zo o vond da lavared dezañ ez oh degouezet. N’ho-peus nemed gortoz eun tammig. »

Hag eñ er-mêz.

Er porz ez oa tud all deuet da heul ar vuzulerien. En o zouez ez oa unan deuz ar barrez a anaveze mad an aotrou Coz. Raktal, e lakaas kregi er beleg paour.

Eiz devez war-lerh ‘oa kaset da Vrest. Eur marh ‘oa roet dezañ da ober an hent. Daou archer hen ambrouge. En eur bignad war varh eh en em lakaas da gana ar homzou-mañ deuz ofis an anaon : « Libera me, Domine. »

Eun devez goude ma oa degouezet e Brest ‘oa kondaonet d’ar maro. Deuz an tribunal ‘oa kaset d’ar hillotin. Kerzed a ree dispont, e zaoulagad savet war-zu an Neñvou. E-unan e hourvezas war blankenn ar maro. An dud iskiz ‘oa en-dro a youhas neuze a-bouez-penn : « Bevet ar Republik ! » An aotrou Coz a respontas : « Bevet ra vo Jezuz ha Mari ! » Hag ar gontell a drohas e houzoug. Kement-se a zegoueze d’an drizeg a viz Meurz.

Eun nebeud diwezatoh, d’ar bemp warn-ugent deuz ar memez miz, an aotrou Jean Drevez, kure Rekourañs, ‘oa galvet dirag al Lez-varn. Tri miz a oa evedo er prizon. Paket ‘oa bet oh ober eur vadiziant e ti e hoar, e Ploumoger. E afer ‘oa sklêr. Kondaonet ‘oa bet d’ar maro ha kaset diohtu d’ar hillotin.

D’an daou warn-ugent a viz Mae ‘oa bet tro gouarnerien ar Finistère.

Evel on-deus lavaret, edont oll e kastell Brest abaoe an daou warn-ugent a viz C’hwevrer. Êsa o-doa greet e peb feson tenna ar zamm diwarno. Mez enebourien o-doa hag a lakaas o derhel er prizon.

Pelloh e teuas evito deiz ar varnedigez. En devez a-raog, Riou-Kersalaun, Le Hir ha Chiron, alvokaded, a deuas d’ar prizon da en em gleved ganto war ar pez a oa da ober ha da lavared evid o divenn. En eur gimida e lavarjont an eil d’egile : « Kenavo, warhoaz, da eiz eur ! »

En devez-se, da hweh eur, oll zoudarded Brest a oa war zav. Pevar mil anezo ‘oa lakaet en daou du d’ar ru a ranke ar brizonerien da dreuzi evid dond d’an tribunal. En-dro dezo, dre ma kerzent, ‘oa eiz-kant soudard deuz an “armée révolutionnaire“.

Pa oant degouezet er zal, e leh ma oa an tribunal, e weljont dija ar varnerien, eur boned ruz war o fenn, azezet dirag eun daol karget a baperou. A-dreñv o hein edo ar jureed. Hag en daou benn d’an daol, Donze Verteuil ha Bonnet.

Ar ouarnourien ‘oa lakaet, pep hini anezo, pell deuz o alvokaded, e-kreiz etre daou archer, hag ‘oa ganto sabrinier e noaz.

En daou zevez kenta n’oa greet nemed lenn paperou hag a damalle d’ar ouarnerien traou ha n’o-doa ket biskoaz soñjet zoken enno.

Pa dostaas an testou, da lavared ar pez ‘oa ar wirionez evid divenn ar ouarnourien, eun archer gand e zorn a stankas dezo o genou.

An alvokad, Riou Kersalaun, a zavas, pelloh, en e zav : « Ma kave d’ar ouarnourien, a lavaras, e reent, en eur enebi deuz ar Goñvañsion, ar pez ‘oa ar gwella evid mad ar vro... »

Ne hellas ket lavared mui. Rag ar Prezidant, gand eur vouez spouronuz, a lavaras dezañ : « Kleo ‘ta, lavar deom, da genta, ar pez a zoñjez da-unan deuz ar pez o-deus greet ? Goude, ni welo ! »

An alvokaded ne lavarjont mui koulz lavared netra. Ar ouarnourien o-unan n'oant ket lezet da en em zivenn. Descombes, deuz Kemperle, Pruré, deuz Poullaouen ha Le Cornec, deuz Kerhaez. Tri all n'oa bet ano ebed anezo : Poullain Auguste, Bois Jaffray ha Le Goazre.

C'hweh warn-ugent 'oa kondaonet d'ar maro :

1° De Kergariou François-Louis, 66 vloaz, ganet e Plounevez-Moedeg. Gwechall 'oa ofiser en armeou ar Roue. Bet 'oa bet Prezidant district ar Finistère beteg ma oa lakaet er prizon.

2° Bricchet Mathieu-Michel, deuz Landerne, den a lezenn.

3° Agnes Jacques-Rémy, deuz Brest, marhadour gwin.

4° Morvan Olivier-Jean, genidig deuz Pont-e-Kroaz, hag o chom e Kemper, alvokad.

5° Guillier Jean-Louis-Marie, pemp bloaz ha daou-ugent, marhadour, ganet hag o chom e Douarnenez.

6° De Bergevin Pierre-Marie, tri bloaz ha daou-ugent, ganet e Brest hag o chom e Lanildud.

7° Dubois Joesph-Marie, 36 vloaz, barner e tribunal Landerne.

8° Doucin Thomas-Bernard, 38 vloaz, alvokad e Kemper.

9° Derrien Louis, 40 vloaz, o chom e Sant Turien.

10° Postic Yves, labourer-douar, 39 bloaz, o chom e Kerigel e Skaer.

11° Cuny Antoine, marhadour, 45 bloaz, ganet e Bourdel hag o chom e Kemperle.

12° Le Roux Guillaume, marhadour lien, 27 vloaz, ganet e Pleiber hag o chom e Landivizio.

13° Le Prédour Louis-Joseph, ganet e Pleiben, barner e tribunal Kastellin.

14° Daniel Kersaux, 45 bloaz, ganet hag o chom e Penmarh.

15° Expilly Louis-Alexandre, eskob Kemper.

16° Herpen Guillaume, barner e tribunal ar Pont, 46 vloaz.

17° Mérienne, 39 bloaz, o chom e Brest.

18° Malmanche Charles-François, ganet e Verteuil hag o chom e Lambezelleg, 46 vloaz.

19° Baneat, 43 bloaz, ganet hag o chom e Kerhaez.

20° Le Pennec Jean-Marie, alvokad 50 vloaz, ganet hag o chom e Kerhaez.

21° Le Thoux Julien, barner e tribunal Kemper, 72 vloaz.

22° Daniel François-Marie, 36 vloaz, marhadour, ganet e Landerne hag o chom e Laniliz.

23° Moulin Julien 42 vloaz, ganet e Konkerne hag o chom e Kemper.

24° Le Gac Yves, alvokad, 42 vloaz, ganet hag o chom e Plounevez-Porze.

25° Piclet Louis, 64 bloaz, ganet e Lokornan.

26° Le Denmat Kervern Yves-Louis, alvokad, ganet e Kallag hag o chom e Montroulez.

Notenn gand "Embann an Hirwaz" : Eur monumant a zo bet savet e bered Sant-Marzin, e Brest.

E-pad ma oa o lenn ar setañs, an dud 'oa sioul evel pa vije bet ar maro o para a-uz dezo. Mez, goude, de Bergevin, Guillier ha Moulin a grias a-bouez-penn ouz ar varnerien : « boued ar groug ma'z oh ! or gwad a gouezo warnoh ! »

Deuz ar mintin, a-raog ma oant kondaonet, ar bourreo, Ance, 'oa bet o klask kirri da gas anezo d'ar hillotin. –Mez 'oa lavaret dezañ, « ne vo ket roet dezo, zoken, eun devez evid en em anaoud hag en em lakaad e par da vervel !. » – « Nann, nann, kerkent ha ma vezint kondaonet e vezint din-me, » a respontas.

*

Donze-Verteuil n'oa ket ken kriz. En devez a-raog en-doa lavaret da Gamarec, gouarner district Brest, lakaad farda eul lein vad hag a hellfer da zebri hep kontell na fourchetez, ha klask e kêr tregont boutailad deuz ar gwin gwella. Camarec a lavaras dezañ ne zelle ket an dra-ze outañ, ha Donze-Verteuil a glaskas e leh all.

Mez an dud paour ne falveze ket ganto tañva deuz ar pred-se : « E verr, da noz, a lavare Expilly, ni goanio gand an Êlez. » - « Avañset kaer, a respontas dezañ Douein, or pennou a vo chomet e Brest. »

Ar bourreo a grogas enno, diohtu. Lakaad a reas troha o bleo ha staga o daouarn, etre o hein. Goude, e taolas anezo e daou garr, evid mond war-zu ar hillotin.

Expilly a roas an absolvenn d'e oll gamaraded hag a yeas da ziweza war ar chafod. Hervez lod e lavare e welo an Neñv digor. Hervez lod all e lavaras : « Kalz eo beza barnet gand an dud ha gand Doue, er memez devez ! »

War a gonter, dre ma koueze ar pennou, Ance a renke anezo, en o flomm, war bordou ar chafod, hag en-dro an dud a grie, bep taol : « Bevet ar Republik ! »

Prest goude, an tribunal "révolutionnaire" a gondaonas d'ar maro Thomas Raby, 20 vloaz, ganet e Brest. E benn 'oa trohet d'an nao warn-ugent a viz Mae. D'an naonteg a viz Even 'oa tro Guillier, prezidant komite "révolutionnaire" ar Pont.

D'an daou warn-ugent a viz Even 'oa bet kondaonet Louis Kerebel, deuz Kerdu e Plouvian, war digarez ma en-doa lakaet tud d'en em zavel a-eneb ar houarnamant e miz Meurz.

Pemp devez goude, diou hoar-gaer, an itron Anne-Marie-Françoise de Coatanscour, intañvez de l'Etang hag an itron Barbier de Lescoet, intañvez de Coatanscour, o chom e maner Kerian, 'oa kondaonet war an digarez-mañ ne welent nemed noblañsou ! !

An aotrou Augustin Cleac'h, kure e Plestin, a oa bet kavet, e Montroulez. Eno, teir maouez devot o-doa degemeret anezañ en o zi : Anna Levron, pemp bloaz warn-ugent, Anna Le Blanc, pevar-ugent vloaz hag Anastasie Le Blanc, eiz vloaz ha tregont. O fevar 'oant dibennet, asamez, d'an 31 a viz Even.

D'ar seiz a viz Gouere 'oa trohet e benn da vêr Kastell, Yves Michel-Hervé Du Penc'hoat, abalamour en-doa kaset arhant da dud eet d'ar broiou all. (Le Vot).

Beza e oa, e Landreger, eur gouent seurezed anvet Seurezed Sant Paol.

D'ar gouent-se 'oa bet eur plah yaouank deuz Pleiber-Krist, Julienne Gigant. Mez a-raog ma oa profezet, 'oa deut ar Revolusion. En em denna 'reas war parrez Taole. Eno e sachas warni, e berr amzer, droulañs ar beleg fall. Ar beleg-se 'oa eur manah anvet, en e gouent, an Tad Hippolyte.

E derou ar bloavezh 1794, eun dimezell vad deuz Taole, an dimezell de Kerlean, e teuas archerien da gerhed anezi. Diohtu e rankas bale ganto, da Vontroulez. N'he-doa ket amzer, zoken, da jeñch nag he dillad, nag he boutou.

En eur vond e tremenas e-biou ti ar seurez Gigant. Ar seurez kêz he-devoa truez deuz an dimezell hag a ginnigas dezi eur vaz, evid en em harpa, en hent, hag en em denna êsoh deuz an toullou lagenn. Ar beleg fall 'oa, war he lerh : - « Sellit, emezañ, d'an archerien, ar re-ze, an diou vaouez-se, a zo kamaraded. Ken sod ha ken sod int gand ar veleien all. Koulz tra deoh, kas anezo o-diou ganeoh. »

Dirag ar varnerien 'oa goulennet digand ar seurez Gilgant perag he-devoa truez deuz an dimezell de Kerleau.

-« Perag ?, emezi. Me 'm-eus truez deuz oll ar re a ve greet poan dezo. Deuz an dimezell de Kerleau em-oa muioc'h c'hoaz a druez, abalamour 'oa mignonez din. »

Goulennet 'oa diganti, c'hoaz, abalamour da betra 'oa ken troet gand ar veleien 'oa eneb ar Republik.

-« Me ne ouzon ket, emezi, a-eneb piou emaint. Mez gouzoud a ran emaint a-unan gand Doue hag abalamour da ze e karan anezo. »

Barnet 'oa d'ar maro ha dibennet d'an nao a viz Gouere 1794.

D'an unneg 'oa trohet e benn d'eur martolod.

D'an drizeg a viz Gouere 'oa galvet dirag an tribunal Florenton Le Bronsort, barner e district Brest, 51 bloaz, Pierre Bideau, 40 vloaz, beleg touer, gouarner e Departamant an

Indre, ha Pierre Toullec deuz Brest, unan euz gouarnerien an district. Tamallet 'oant o-zri da veza bet enebet deuz lezennou ar Goñvañsion.

Noz 'oa dija pa 'oant kaset d'ar gillotin. Ar re 'ziskoure Ance 'oa goulou ganto. Pa oa dibennet Le Bronsort hag ar beleg fall, lod deuz ar goulou a varvas. – « Ne welan mad », a lavaras Ance. Toullec, neuze, a gemeras eur houlaouenn, c'hoaz war elum, hag en eur lamad e daoulagad ar bourreo⁶⁵ e lavaras dezañ : « Den milliget. » Evid en em veñji, Ance a lezas teir gwech ar gontell da goueza war e houzoug, a-raog distaga e benn.

D'an naonteg a viz Gouere 'oa dibennet François Gérard, piker mên, pevar bloaz warn-ugent, war digarez en-doa lavaret da zoudarded trei kein.

An devez war-lerh 'oa lakaet d'ar maro François Beauregard, bet kaner e Montroulez, evid beza taolet eur gokardenn.

D'an nao warn-ugent e tegouezas tro eur miliner deuz an Drenneg, Jean Mingant, pemp bloaz ha tregont, evid beza roet bleud fall d'ar zoudarded.

D'an tregont a vie Gouere, an Tad Mevel, genidig deuz Roskov, a oa kondaonet d'ar maro. An Tad Mevel 'oa koz dija. Mez ne oa ket eet d'ar prizon p'oa deuet al lezenn da vond evid ar vevelien goz. Chom a reas e ti an intañvez Liz Saux ha Marie Coant he c'hoar.

Eno, beb mintin, an Tad Mevel a overenne. Eun nebeud merhed devot a vije, beb gwech, en e overenn. An archerien a gasas d'ar prizon trizeg anezo. Furcha 'rajont an ti, deuz an traoñ beteg al lein, hag o-doa kavet eur halir hag an dillad overenna.

Deuz ar re 'oa tapet da heul an aotrou Mevel, pemp a bignas, asamez gantañ, war ar chafod : an itron Ruvilly-Le Saux, 66 vloaz ; an dimezell Le Coant, 64 bloaz ; Julie Desmarets ; an dimezell de Forsans, 27 vloaz, ha Barba Jago, eur bloaz hag hanter-kant.

Pa deuas tro an dimezell yaouank da lakaad he fenn dindan ar gontell, ar re a oa en-dro a skrije. Rag Modeste Emilie de Forsans 'oa eur plah deuz ar re gaerra 'hellfed da weled. Ar vourrevien o-unan o-doa evel diegi o troha ar fleurenn-ze, diwar he garr, hag o teuler anezi er gwad.l

Notenn el leor orin : An dimezel de Forsans he-dije gellet savetei he buhez war briz heh enor. Pa oa dibennet 'oa kaset ar horv c'hoaz tomm d'an ospital, hag eno, eur barner anvet Balis a zaotras anezañ.

D'an unan ha tregont a viz Gouere 'oa kondaonet Gabriel-Louis Moreau, tad ar jeneral Moreau deuz Montroulez. Reseour 'oa evid ar markiz de Lescoet. War-dro gouel Mikêl, en-doa kaset dezañ an arhant en-doa bet digand e fermourien. Tamallet 'oa da veza kaset arhant e-mêz ar vro ha lakaet 'oa d'ar maro.

Asamez gantañ 'oa dibennet an dimezell de Kerlegu, abalamour en eul lizer he-doa lavaret e kave trist gweled, e kanton Lezneven, tud en em zavet eneb ar veleien vad.

Demdost d'ar Faou e chome, d'ar mare-ze, e ti eun eontr dezi, eun dimezell deuz Rekouvrañs. Heh ano 'oa Anna Pichot de Kerdizien. Pinvidig 'oa. Mez he danvez a lodenne gand ar beorien. Bemdez, koulz lavared, e vije, en tu pe du, o weled tud klañv. Rei a ree, pa helle, louzeier dezo evid netra. Atao, e kase da bep ti, eur gomz dous ha tener hag a gonsole pa ne helle para.

Eur zulvez, en iliz Kimerh, an dud 'oa bodet. Ne oa beleg ebed mui er barrez. Hi a yeas er heur hag a lennas eur zarmon he-doa bet digand eur beleg mad bennag, emichañs.

Eun den fallagr a ziskuillas anezi. Raktal, 'oa kaset soudarded beteg he zi. En eur furcha o-doa kavet eul levr devot hag ar zarmon. Kerkent 'oa kroget enni evid he has da Vrest. En eur dremen er Faou e welas eur gamaradez : « Kenavo, a lavaras dezi, prest me 'bedo evidout er baradoz ! »

Gwir a-walh e lavare. Derhel levriou devot en e gichenn 'oa, d'ar mare-ze, evel on-deus gwelet, eun torfed braz. Barnet 'oa d'ar maro ha dibennet eun nebeud deveziou goude. En traoñ ar chafod 'oa devet an traoù devot 'oa kavet en he zi.

⁶⁵ en eur lammad e daoulagad ar bourreo : ?

XXIV

Beleien gillotinet e Kemper hag e Lezvenen. Maro an dimezell de Saint Luc.

Ne hellom ket lavared pegement a dud 'oa dibennet e Kemper. Kalz 'oa. Ha war a leverer, e-pad eur pennad mad, ar gwad a rede, bemdez, dre ar ru, evid mond d'ar ster.

Mez setu amañ eur ger bennag diwar-benn ar veleien 'oa bet gillotinet eno.

Ha da genta an aotrou Riou.

An aotrou Riou 'oa ganet en Hellez, e parrez Dineol. Person 'oa e Lababan. Ne falveze tamm dezañ plaga da lezennou fall ar Revolution.

Kaset kuit deuz e brespital eh en em guzas e-touez e barrezioniz. Rag beza 'oa eur pastor mad. Ne falvezas ket gantañ lezel e zeñved da veza mahet gand beleg iñtru Landudeg.

Koulskoude, eun devez, ar beleg fall-mañ a deuas da ober eun dro da vourk Lababan. En hent e tegouezas gand eur bugel, deg pe unneg vloaz.

-« Paotrig, emezañ, te 'zo en oad d'ober da Bask ? »

-« Ya da, aotrou », a respontas ar bugel.

-« Mez ne devez ket d'ar hatekiz ? »

-« O ! eo, me 'vez er hatekiz bemdez e Kerbabu. Eno zo⁶⁶ eur beleg koz, mad ha chentil hag a ra katekiz bemdez d'ar vugale ? Ne vankan morse da zeski va hentel. »

Ar beleg fall a jeñchas liou : moustra 'reas war e vuzellou. Santed a ree 'oa ar beleg koz-se, person Lababan. Hag eñ, raktal, d'ar Pont evid diskuill e gavadenn.

Archerien ar Pont a deuas gantañ, diohtu. Degouezet e Kerbabu, e furchont an ti. Mez kaer o-devoa klask, ne gavjont beleg ebed.

Ar person iñtru 'oa chomet e-kichenn an nor. Egari a reas pa lavaras dezañ an archerien o-devoa greet tro wenn. Mond a reas e-unan, en ti, en eur hourdrouz hag en eur harlui ar mestr hag ar vestrez. Trei a reas kement e oa war an tu eneb. A-barz pell, e gwask eun arbel, e kavas an aotrou Riou. « Genaoueien, a lavaras d'an archerien, pa ne ve din-me ho-pije lezet al lapous da nijal kuit. »

An aotrou Riou 'oa kaset da Gemper.

Ar mestr, e lezvarn Kemper, 'oa d'ar mare-ze anvet Kerineuf : anaoud ha kared a ree aotrou person Lababan. Diêz-braz e kavas kleved lavared e rankje e varn.

Êsa a reas savetei dezañ e vuhez.

Al lezenn ne lavare kondaoni d'ar maro nemed ar veleien n'oa ket tri-ugent vloaz.

Ha Kerineuf a gemennas d'an aotrou Riou, a-raog e hervel d'al Lezvarn, dikslêria dirazañ en-doa ouspenn an oad-ze.

An aotrou Riou a zegouezas dirag ar varnerien.

-« Sitoyan, eme Kerineuf, te 'peus, sur, tri-ugent vloaz. »

-« N'em-eus ket », eme ar beleg santel.

-« En em fazia a rez, rag an êr ho-peus da gaoud ouspenn an dra-ze. »

-« Ar wirionez a lavaran », eme an den kaloneg. « Ma n'am hredit ket, roit din amzer da gerhad euz Dineol paper va badeziant. Beza em-eus nao bloaz hag hanter-kant ha seiz miz. Ne fell ket din savetei va buhez, war briz an disterra gaou. »

-« Mez ne ouiez ket, marteze, e tivenne ar Republik ober katekiz. Ne anavezez ket, sur on, al lezenn a hourhemenn da veleien Bro-Hall en em zistaga deuz ar Pab ? »

⁶⁶ zo : ez eus.

-« Eo, sur. Anaoud a reen kement-se. Anaoud a ran ivez e rankit va barn d'ar maro. N'eus forz a ze. E-pad va buhez em-eus labouret atao evid gounid an Neñvou. Poan a-walh em-eus bet war an douar. Ar henta mond bremañ 'vo ar gwella. »

Kerineuf a zante an daelou o vervi en e zaoulagad. Mez barn a rankas e vignon da veza dibennet, a-raog ar peder eur warn-ugent. Ne helle ober a-hend-all.

-« Doue ra vo meulet ! », a lavaras an aotrou Riou, o klevet ar varnedigez-se. « Pell zo 'oan o haloupad amañ hag a-hont. Ne ouien, aliez, e pe du harpa va fenn : n'em-oa na ti nag oz. Esper em-eus e roio Doue din lojeiz en e varadoz. »

Da hedall eur ar maro, person santel Lababan 'oa kaset en-dro d'e brizon. Evid e lein diweza e pedas an aotrou Coz, person Kastellin hag an aotrou Bourbriac, person Mesgloaguen, da zond da breja gantañ. An daou veleg-se o-doa touet sentidigez da lezennou fall ar Republik. Hag an aotrou Riou en-doa esperañs da lakaad anezo da zond war o ger. Mez hini ne deuas beteg ennañ.

-« O ! beleien valeuruz », a lavaras, « neuze, piou 'oar ma n'eo ket ar hras diweza a ginnige dezo an Aotrou Doue ! »

*

Gand an aotrou Riou edo, e prizon e Kemper, an dimezell de Saint-Luc, eur plah yaouank deuz gwad uhella Breiz-Izel. O klevet ez eo ar beleg santel da veza dibennet ne ree mui nemed gouela hag hirvoudi. -« Ba ! a lavaras dezi an aotrou Riou, bolontez Doue ! da genta. Pa vo trohet va fenn, va ene a nijo d'ar baradoz. E gwirionez, n'em-eus ket em buhez nemed tri devez eurusted : an deiz ma 'm-oa greet va fask kenta, an deiz ma oan beleget hag an deiz hirio. »

Kalz tud all, c'hoaz, 'oa dalhet er memez prizon. Oll o-doa keuz d'an aotrou Riou. Goulenn a rajont koves gantañ a-raog ma'z aje d'ar baradoz.

Ar beleg santel a en em lakaas en eur horn deuz ar prizon. An dimezell de Saint-Luc ha meur a hini all a deuas d'en em lakaad war o daoulin dirazañ, an eil goude egile, da anzañ o fehejou. Biskoaz, sur on, hini n'en-doa greet gwelloc'h kovesion.

Da ziv eur hanter e chome c'hoaz kalz tud da goves. « Va bugale, eme an aotrou Riou, da deir eur e vezin dibennet. N'am-eus mui nemed eun hanter eur da veva. N'eo ket re evid en em lakaad e stad da vervel. Abalamour da ze ne hellan koves mui. Goulennit digand Doue, evidon, eun degemer madelezuz. Deuz neh ar baradoz me ne ankounac'hain nikun ahanoh. »

Hag eh en em lakaas war e zaoulin da bedi.

Eur pennadig goude ar vourrevien a zegouezas evid e gas d'ar hillotin.

-« Lakaet e vo deoh, emedo, ar gordenn en-dro d'ho kouzoug ? »

-« Mar kirit », eme an aotrou Riou.

-« Liammet e vo ho taouarn a-dreñv ho kein ? »

-« Ne ran forz ; grit ar pezh a garfoh. »

Ne oa greet nag an eil nag egile. Kerzed a reas laouen d'ar maro. En eur vond e kane unan deuz himnou an Iliz : hini ar verzerien.

Degouezet gand ar chafod e welas ar barner o krena.

-« Mignon, a lavaras dezañ, na grenit ket. Ar boan a rafeho din ne bado ket pell. Me 'bardon deoh va maro. »

Neuze eh en em lakaas e-unan war ar hillotin. E benn 'oa distaget raktal. Kement-se a zegouezas d'ar c'hwezeg a viz Meurz.

E Kastellin, e-pad ar Revolusion, 'oa soudarded ha ne houlennt ket gwell eged lakaad bemdez eur beleg bennag er prizon. Mall e vije ganto atao ober al labour-ze.

Eun devez e teujer da lavared dezo 'oa kure Landudeg, an aotrou Raguenez, kuzet e ti Fañch Kerinec e Goandour, e parrez Kraozon.

Raktal ez ajont, en eur redadeg, beteg eno. Mez, goude beza klasket en ti hag er hlaouier n'o-doa kavet beleg ebed. Hag e tistrojont d'ar gêr, droug enno, da veza greet tro wenn.

War an hent, eur hard-eur bale deuz Goandour, e tegouezas ganto eun den, eur bal gantañ war e skoaz, evel pa vije o tond deuz e bark. Nebeud war-lerh e kavjont eul lastez bourhiz, deuz bourk Kraozon.

-« Deiz mad deoh, sitoayaned », eme hemañ. « Klaoustre emaoñ o klask preiz ? »

-« Ya da, emezo. Ni 'zo bet e Goandour o klask eur beleg. Mez n'on-eus ket kavet anezañ. »

-« Bandenn tud zod ! », eme al lakepod, « ne ouzoh ket ho micher. Ar beleg a glaskit eo an den a zo o paouez degouezoud ganeoh, war an hent. It war ho lerh ha lavarit dezañ diskouez deoh e ziskouarn. C'hwi 'welo n'int ket na du na kaled, evel daouarn eun troher buzug. »

An aotrou Raguenez 'oa tapet raktal, ha degaset d'ar prizon, da Gastellin. E vamm 'oa o chom e bourk Kraozon. Goulenn a reas mond da lavared kenavo dezi.

-« Alo ! alo ! stranerez », eme ar zoudarded. « Eun devez bennag, sitoan, ni 'dapo da vamm ivez, hag a gaso anezi d'az kaoud d'ar prizon. »

Deuz Kastellin, an aotrou Raguenez 'oa kaset da Gemper evid beza barnet.

Kerineuf, ar barner, 'oa bet e vugale er skol gantañ. Kemenn a reas dezañ dikslêria, dirazañ, pa vefe galvet, lavared ne oa ket kure e neb leh. Rag lezenn ar maro ne oa greet nemed evid ar veleien bet er parreziou.

Mez pa zegouezas dirag al Lezvarn e lavaras : « Ne dalv ket ar boan nah. Beza barnet d'ar maro, hirio, pe diwezatoh, a vo 'gozig ar memez tra. Ha neuze, ne fell ket din lavared gevier. Bet on kure e Landudeg e-pad meur a vloavez. »

Barnet 'oa da veza dibennet.

A-raog e varo, Kerineuf a deuas da houlenn pardon outañ. Hag e lammas da bokad dezañ : « O ! emezañ, me 'bardon dit, a-greiz kalon, ha pedi a ran Doue ma pardono dit, ivez. »

Mamm an aotrou Raguenez a deuas, war he zroad, deuz Kraozon da Gemper. E lein diweza a reas ganti.

Goude lein e pokas dezi : -« It, mamm, a lavaras, it bremañ en avañtur Doue. Pedit evid ho mab, ha kenavo er baradoz ! »

-« O ! mab, emezi, me 'jomo c'hoaz. Me 'fell din beza en da gichenn pa vezi o vervel. »

-« Nann, mamm, an dra-ze ne hell ket beza. »

-« Perag, o ! mab ! Pa oa Jeuz o vervel, ar Werhez, e vamm, 'oa e-tal ar groaz. »

-« O ! mamm, petra 'livirit ? N'ez eus heñveledigez ebed etre ar Werhez ha Jezuz ha ni, peherien baour. Nann, mamm, emezañ, en eur bokad dezi c'hoaz, it d'ar gêr. En eur zegouezoud e Kraozon, e klevfot an Angelus o son. Mouez ar hloh a zegaso soñj deoh deuz ho mab. Maro e vo a-benn neuze. Mez c'hwi a yelo d'an iliz rag-eeun, da lavared bennoz da Zoue. »

-« Ya, mab, emezi en eur voustra war he daelou. Ya, mond a rin a galon vad, rag eüruz e vezin da gaoud eur mab merzer. »

Da nav eur, an deiz war-lerh, 'oad deuet da gerhad an aotrou Raguenez d'ar prizon, evid e gas d'ar maro. Bale 'reas seder ha laouen. An oll 'oa mantret oh e weled ken seven.

Degouezet war ar chafod eh en em laka war e zaoulin evid ober eur bedennig. Goude e sav en e zav hag ez a e-unan d'en em leda war plankenn ar hillotin. Ar gontell 'oa lezet da goueza. Mez ne drohas nemed an hanter deuz e houzoug. Buan 'oa savet ha lezet da goueza, adarre. Ne reas nemed eun draill all.

An dud, tro-war-dro, a skrije. Ar beleg ne lezas ket eur glemmadenn.

Neuze, ar jeneral Canclaux, a oa eno, a deuas gand e zabrenn. En taol kenta, e tistagas penn an aotrou Raguenez.

-« A ! a lavare goude, ma vije bet an dra-ze a-du ganeom ! N'em-eus morse gwelet startoh den. » (13 Ebrel 1794).

*

An aotrou Habasque, kure Plourin, 'oa bet kroget ennañ e fin ar bloaz 1793. Kaset 'oa bet, e Kerlouan, e ti Fañch ar Gac.

D'ar memez mareou 'oa bet kaset d'ar prizon an aotrou Peton, beleg deuz Kerlouan, hag a en em guze e ti Guillaume Abautret, labourer-douar.

D'an drizeg a viz Ebrel 1794 'oant bet kondaonet d'ar maro. Hag ar re o-doa roet lojeiz dezo a oa bet harluet.

D'ar mare-ze, kêrig vihan Lezneven hag ar parreziou tro-war-dro 'oa brudet da guzad forzig beleien. Donze-Verteuil a houlennas ma vije degaset da zibenna di an daou veleg kondaonet. An den-ze a lavare e tigor o daoulagad d'an dud re droet gand ar superstisionou.

D'an devez merket 'oa kaset soudarded da gement parrez 'oa tro-war-dro da gemenn dond da Lezneven. N'oa ket brao enebi, ha kalz tud en em gavas war ar blasenn.

Hag 'oa gwelet o tond, dre hent ar Folgoad, e mare div eur goude kreisteiz, eur harr daou veleg e-barz, garotet dezo o zreid hag o daouarn.

En-dro d'ar harr 'oa tud diskramaill ha difeson : ar vourrevien o tiwall ar re ez eent da laza.

An dud 'oa spontet oll hag a leñve. Mez nikun negredas tehed. Nikun ne lavaras grik. Rag mad e ouie gwitibuan, an hini en-dije tentet eun dra bennag a vije ivez lakaet e benn dindan a-zindan ar gontell vraz. Ha dirag an oll spouronet, pennou ar veleien a gouzas. Kement-se 'oa d'ar 14 a viz Ebrel 1794.

An dimezell de Saint-Luc 'oa nizez da Eskob Kemper. E-pad ma oa yaouank 'oa hedro. Mez eun deskadurez kristen a lakaas plom en he fenn. Mond a reas da seurez da gouent ar Retred e Kemper.

Pa deuas ar Revolution ez eas da jom da di he zad, da vaner an Nivod, e parrez Kimerh.

Mez tapet 'oa er prizon asamez gand he zad, e miz Here 1793, ha kaset da gouent Kerhaez. Eno e oa lakaet e-touez merhed fall. He buhez 'oa tenn ha kaled. A-wechou e vije roet bazadou dezi. Mez hi a jome bepred laouen.

Deuz Kerhaez 'oa kaset da Bariz. Eno 'oa barnet da veza dibennet asamez gand he zad hag he mamm. Goulenn a reas mervel a-raog he herent. En eur bokad dezo, kent eged pignad war ar chafod, e lavare : « C'hwi 'peus desket din beva. Me 'zo o vond da zeski deoh mervel. » Hag e oa dibennet (17 Gouere 1794).

Er memez devez 'oa lakaet d'ar maro an aotrou de Tremaria hag e verh yaouank, deuz Kemper.

Ar verh-se he-doa kemeret leh he c'hoar, seurez deuz urz ar Halvar.

Pa oa deuet an archerien d'he herhed, ar seurez 'oa klañv. N'oa lavaret ger dezi na d'an archerien. Ar plah yaouank a yeas d'ar prizon dre garantez evid he c'hoar, dre garantez, ivez, e varvas eviti.

*

An aotrou Branellec 'oa ganet e Gwiseni, hag 'oa kure ar Minihi, eur barrez deuz Kastell. Tapet 'oa bet e ti intañvez ar Guen. O-daou 'oant taolet er prizon. Intañvez ar Guen 'oa bet harluet hag ar beleg paour 'oa bet dibennet e Montroulez da Wener ar Groaz

1794 (17 Ebrel). Da hedal e varo, an aotrou Branellec en-doa, en e brizon, greet eur werz war e amzeriou diweza.

*

An aotrou Le Gall, person Plouenan, hag an aotrou Coarigou, beleg an Ursulinezed e Kastell, 'oa tapet o-daou e ti intañvez ar Zant e Plouenan.

An aotrou Le Gall en-doa ezomm da gaoud eur boutou ler. Mond a reas da gaoud eur here deuz Pont-Eon.

-« Sell, a lavaras ar here, an aotrou person ! Petra, aotrou, c'hwi 'peus gellet chom er vro ? O ! pebez chañs ! N'emaom ket war var da vervel heb beleg ebed, e-keit ha ma viot ganeom. E peleh emaoñ o chom ? »

Touellet dre ar homzou flour-ze, an aotrou Le Gall a lavaras dezañ evedo o chom e Penn-an-neh e ti Anna ar Zant.

Ar here 'oa eul lardousenn... War-eeun, en devez-se, ez eas da Vontroulez da ziskuill ar beleg mad.

Da noz, soudarded Montroulez a deuas da Benn-an-neh. Hag eno, neuze, e tegouezas eun den ha na heller da gonta heb na deufe bihan ar galon.

Intañvez ar Zant he-devoa eur hoar hag a oa nevez degouezet en he zi.. Beteg neuze, 'oa bet seurez. Ar seurez Anna a reed anezi.

-« C'hoar », eme Anna, kerkent ha ma welas ar zoudarded o tond, 'me eo ar vestrez en ti-mañ. Me am-eus lojet ar veleien vad. »

-« C'hwi, c'hoar baour ! Mez emaoñ a-nevez o tegouezoud. Ha me a zo amañ abaoe ma oan dimezet. »

-« Evel-se eo. An hanter deuz an tiegez a deu din deuz lod va zad. Te 'peus komandet e-pad pell a-walh evid lezel an dro ganen, hirio. Ha neuze, sell, me 'yel kontant d'ar maro. Te n'eo ket echu da labour c'hoaz : te 'peus da vugale da zevel. »

Hag ez eas da gaoud ar zoudarded da lavared dezo n'he-doa keuz ebed da veza repuet beleien vad.

Dibennet e oa ar memez devez gand an aotrounez Le Gall ha Corrigou. (18 Gwengolo 1794).

*

XXV

Ar veleien e Landerne. Beleien prizon Landerne kaset da Rochefort. Stad ar veleien e Rochefort, er Guyenne, e Cayenne. Beleien maro e Rochefort pe war-dro.

Pa oa bet lakaet er prizon Gouarnerien ar Finistère, ar re 'deuas war o lerh o-doa, evel on-deus lavaret, urz da vond da jom e Landerne. Kemper 'oa bet dizenoret, a lavare ar Goñvañsion, gand Expilly hag e vandenn. Landerne a deuas da veza evel-se kerbenn an Departamant.

Hogen al lezenn a verke e ranke ar veleien beza dalhet er prizon e kerbenn an Departamant. Abalamour da ze ar veleien dalhet e Kerfot 'oa kaset da Landerne.

Diou vandenn 'oa greet anezo. Da genta n'oa kaset nemed ar re yaouank.

Mez, diwallerien Kemper a houlennas kas, ivez, ar re all. Ha d'an unneg a viz Du, ar re goz 'oa taolet bern war vern e kirri hag en hent war-zu Landerne. Tri ha tri-ugent 'oa deuz ar re-mañ.

E Kastellin o-doa lojet, da genta. Eno 'oant lezet da vond e kêr, gand ofiser ar zoudarded a gase anezo. Lojet o-doa en tiez a garent. Oll 'oant bet degemeret madig a-walh. Mez, da noz war-lerh, 'oant er Faou hag eno, prokureur ar barrez a reas o dastum oll er memez ostaliri.

Degouezet e Landerne, 'oant kaset da genta da gouent ar Gapusined.

Er prizon-ze 'oant bevet paour ha gwisket fall. Mez, da vihanna, o-doa pourmenadennou braz hag êr vad. N'oant ket, evid doare, re ziwallet kennebeud. Ha d'ar c'hweh warn-ugent a viz Du 1793, an aotrou Heliez, beleg deuz Sizun, 'oa tehet kuit dre eur wezenn fiez 'oa e-kichenn ar voger a ro war hent Lezneven.

Mez eun devez, unan anvet Perrin, o tremen dre an hent-se a skoas war an nor. En tu all eur vouez a lavaras : « Petra 'glaskit ? ». —« Koves », eme Perrin. —« Deuit da hweh eur hag e hellfoh dond er porz. » —« Diêz e vo ? » —« O ! ne vo ket. Meur a hini a zo bet dija. »

Raktal, Perrin a yeas d'an ti-kêr da gonta kement-se. Ha diwar neuze 'oa divennet pourmen er hoad hag er jardin.

Mez ar veleien n'o-doa ket a dri-ugent vloaz ne hellent ket chom e Landerne. Ar ministr e-unan a skrivas, d'ar 14 a viz C'hwevrer, da lavared o has da Vourdel pe da Rochefort evid beza, goude-ze, taolet war douar an Afrik.

Rochefort 'oa an tosta. Ha d'an nao a viz Gouere 1794, Gouarnourien ar Finistère a lakaas eur vandenn en hent evid mond di. Setu amañ o anoioù :

Guillaume Le Bris, person ar Fouillez, 58 vloaz.

François-Marie Bannalec, person Lennon, 58 vloaz.

Germain Plassart, deuz Kloastr-Pleiben, 51 bloaz.

François-Joseph Lallouet, Loktudi, 42 vloaz.

Yves Andro, kure Kombrid, 40 vloaz.

Jean Joncour, beleg er Hloastr, 36 vloaz.

Le gall, deuz Kemper, 34 bloaz.

Clet Kerloc'h, deuz Plogoñ, 30 vloaz.

Clet Kerizit, deuz Kleden-Kap-Sizun, 34 bloaz.

Alain Floc'h, 29 bloaz.

Antoine Moreau, kure e Kloastr-Pleiben, 37 vloaz.

Henri Mevel, kure e Plouneour-Lanvern, 36 vloaz.

Armand Carof, deuz Plouziri, 15 bloaz.

Mathieu Mevel, aluzenner e karmel Montroulez, 56 vloaz.

Louis Graveran, person Roskañvel, 49 bloaz.

Jean Merdy, kure e Plomeur, 48 vloaz.

Yves Kerniliz, aluzenner an aotrou Ploue e Landudeg, 57 vloaz.

Yves Houardon, kure Preveill, 56 vloaz.

Jean-Louis Traonouez, person Pleiben, 54 bloaz.

Jean Golaguen, beleg e Gwaien, 39 vloaz.

Simon Le Masson, beleg deuz Brest, 56 vloaz.

Jean Michel, beleg, deuz Gwimaeg.

Joachim Alexandre, fere koñvers, e Kapuisned, Montroulez, 41 bloaz.

Gilles-Baptiste Le Hars, chaloni e Daoulaz.

Charles-César Clec'h, person Ploare.

René Billec, kure Plouhineg.

Ignace Garrec, kure Kerlaz.

Jean-Marie Calvez, person Tregonneg.

Gatien Le Lièvre, manah deuz kouent Pont 'n Abad.

Philippe Jacob, person Laz.

Joseph-Marie Corvaisier, person Irvillag.

Urbain Le Clec'h, beleg, deuz Laz.

Jean Le Roux, manah kapusin.

Da bep hini 'oa roet eur skoed, dre zeg leo, evid ober e veaj. Ouspenn an arhant a helle pep hini anezo da gaoud, 'oa lezet ganto.

Setu amañ, penaoz, unan anezo, an aotrou Mevel, kure Plouneour, a gont diwar ar veaj a reas ar brizonerien, deuz Landerne da Rochefort : « Kaset om da Rochefort, diwallet mad gand soudarded. Eur miz e oam oh ober or beaj. Ne gomzin ket deoh deuz ar blasfomou hag al luhajou on-doa da houzañv 'hed an hent. E Varade, eskopti Naoned, 'oa lamet diganeom on leoriou, chapeliou ha kement tra devot a zougem. Evelkent, prest 'oant roet deom adarre. E Loudun, c'hweh diouzom, 'oa laeret dezo o moñtchou hag o arhant. E Poitiers 'oa kemeret on arhant diwar or houst, oll nemed tregont lur. On dillad 'oa kemeret, ivez, en eur lavared deom e kavjem e Rochefort ar pezh on-dije ezomm. Fouillet 'oam, en eur feson an divalova. Hag ar pezh a ree dreist-oll or poan 'oa ma'z oa, e-touez ar re on laere, eun nebeud beleien fall. E Rochefort 'oam fouillet, adarre, hag ar wech-se 'oa eet diwar or houst, oll ar pezh a jome. »

E Rochefort 'oant lakaet war daou lestr, ar "Washington" haga an "Deux Associés". War hemañ, dreist-oll, 'oa kaset ar Vretoned.

An "Deux Associés" 'oa rannet e diou lodenn, eul lodenn evid ar vartoloded, eul lodenn all evid ar veleien. Eur speurenn goad 'oa etrezo. War ar speurenn-ze 'oa diou zor. En o hichenn e vije, atao, martoloded, digor o daoulagad war ar veleien. A-zindan o dorn 'oa daou bez kanol. Evid an disterra trouz e vije bet, sur, tennet warno.

War ar vatimant-se 'oa pevar-hant beleg ha nao. E-pad an deiz e vijent war ar pont. Ranket 'oa dezo chom en o zav. Rag n'o-doa ket plas da azeza. Mez gwelloc'h 'oant, eno, c'hoaz eged en diabarz. Nemed dre ziegi ne deent morse, da gousked.

Oll e lojent er memez sal. En-dro d'ar zal, beb daou droatad, 'oa staliou greet gand plañch. War ar staliou-ze, e-pad an noz, ar veleien a ranke gourvez. Mez ken sarret 'oant, ma ranke an eil lakaad e dreid war penn egile. Brañsellou 'oa 'istribill ouz an neh d'ar gambr. E pep brañsell 'oa daou veleg. Hag evel ma oa berr ar vrañsell, o zreid ivez a oa an eil deuz penn egile. War leurenn ar zal edo ar re all ker stank ma oad ket evid bale, heb lammed warno. Ouspenn-ze, eur baill a oa e-kreiz ar zal. Er baill-ze e vije greet an ezommou. Eur flêr 'oa gantañ ma'z oa mantruz. Ha lod a gousked harp deuz ar baill.

A-barz pell ar poaniou-ze ne oa lezet ganto na leor na chapeliou. Hag e-pad an deiz, pa vijent war ar pont, e vijent gwelet o walhi o zammou truillou, pe oh en em zilaoua.

Eiz-kant seiz warn-ugent beleg mad taolet el listri-ze. Daou-hant pemp ha pevar-ugent, hepken, a hellas dond kuit. Ar Goñvañsion, dre ar prizoniou, a laze koulz ar veleien eged⁶⁷ dre ar hillotin.

*

Deuz Rochefort, lod beleien 'oa bet kaset d'ar Guyanne. An douar-ze a oa, neuze, eul leh gouez. Eur beleg a skrive ahano : « Da loja n'on-deus nemed tammou lojennou izel-izel. Beva 'reom e-touez morianed hag a zo laeron. Devet om gand an heol e-pad an deiz. An noz a zegas eun tammig freskadurez. Mez ganti e teu, ivez, eun dra deuz ar re boaniusa hag a zo anavezet mad gand an dud a zo bet o chom amañ. Deuz ar gwerniou louz a zo dre amañ e sao eur bern c'hwibu hag a beg, hag a zev. On lochenn a vez leun a dousigi braz. Hag e-touez on leoriou e zo anevaled hag a flemm bilimuz : anvet int skorpioned. Merien a zebr or bevañs hag a grog aliez ennom on-unan. On treid a zo kemeret gand eur huibenn all hag a reer anezi ar "chik". Bemdez e rankom he zenna deuz o hrohenn gand spillou. Da eva

⁶⁷ eged : ha

n'on-deus nemed dour fall, da zebri eun tamm pesked sall hag aliez breinet ha da ober soubenn n'on-deus nemed riz. »

Da Gayenne 'oa kaset ivez meur a hini deuz Rochefort. Cayenne a zo eun enezenn e-kreiz ar mor ha d'ar mare-ze 'oa gwasoh c'hoaz eged ar Guyanne.

Setu amañ anioiou ar veleien a zo maro e kosteziou Rochefort :

Alexandre Louis, frer kapusin, ganet e Montroulez, maro e miz Here 1794, interet en enezenn Madame ;

Cojan, Guillaume-Marie, ganet e Kemper e 1767, kapusin e Montroulez, seiz vloaz warn-ugent, interet en enez Aix, maro war al lestr "Les deux Associés".

Calvez Jean ganet e Plozeved e 1734, person Tregenneg, maro e Gwengolo 1794, interet en enezenn Madame.

Corvaisier Joseph-Marie, person Irvillag, ganet e Kemper e 1735, maro e Gwengolo 1794. E gorr 'oa taolet er mor da genta. Mez distaolet e oa bet hag 'oa, goude lakaet en douar.

Collobert Julien, ganet en Arzano, maro e miz Eost 1794, interet en enez Aix (maro war an "Deux Associés").

Fercoq Charles-Marie, ganet e Plougourvest e 1755, person Plufur, maro e miz Du, interet en enezenn Madame.

Julien Jean, kure Groñvel.

Kirlen Pierre-Joseph, ganet e Kemper e 1764, person ptiol Daoulaz, interet en enezenn Madame.

Le Clerc, person Ploare, maro war ar "Washington", e 1794.

Le Vris Guillaume, ganet e Beuzeg-Kan-Sizun e 1748, person ar Fouillez, interet e Fort Vaseur.

Le Coent Jean, ganet e Spezed e 1750, kure Burtulu, maro e Gouere 1794, interet en enezenn Aix.

Le Masson Simon, ganet e Brest e 1738, maro d'an nao a viz C'hwevrer 1795, interet e Saintes.

Plassard Germain, ganet e Kloastr-Pleiben, maro e miz Gouere 1794, hanter-kant vloaz, interet e Madame.

Lelièvre Gratien, manah deuz kouent Pont 'n Abad, ganet e Roazon, maro war ar "Washington" en Here 1794.

*

XXVI

Relijion ebed mui. Ar veleien iñtru kinniget e prov d'ar gouarnamant.. Divenn da verka ar zul dre zon ar hleier. Leh ar veleien vad roet d'ar vistri-skol, en ilizou.

C'hoant ar revolusierien 'oa lakaad Bro-Hall da veva heb Doue. E derou ar bloaz 1794 'oant deuet, koulz lavared, a-benn deuz o zaol. Ar veleien o-doa lakaet, da genta, e-leh ar veleien vad, o-doa a nebeud da nebeud taolet disprizañs warno. Ha pelloh, e-leh forsi an dud da vond d'o zelaou e vijent poulzet da bellaad diouto. District Montroulez a en em glemme d'an hini 'oa e Brest e talher leh ar Goñvañsion, abalamour koñsaill munisipal Plouezoh, hini Garlan hag hini Gwerliskin, a ree, c'hoaz, d'an dud mond da overenn an iñtruzed : « Mall eo, a lavare, troha pelloh da hiziou sod evel-se. »

Ha kalz parrezioù, o weled, emichañs, n'o-doa mui netra da ober gand beleien fall, a ginnige anezo d'ar houarnamant. Er giz-se, 'reas Gwinevez, Plouider, Kernez ha

Plabenneg. Koñsaill munisipal Plouider a lavare : « Dalhet on-deus en or parrez ar sitoayan Cariou, beleg iñtru ; dre respet evid al lezennou ‘oa, avad, kentoh eged dre garantez evitañ.

Mez bremañ, sklêrijennet dre liziri ar re ‘zo deuz or gouarn, e welom om bet dall, beteg henn. Hag o veza n’on-deus ket c’hoant e chomfe, en on touez, netra deuz ar pezh a zo bet abeg d’an darvoudou a zo kouezet war ar vro, e reom donezon d’ar Republik, deuz ar sitoayan Cariou, deuz e bae ha deuz kement a zervije dezañ evel beleg.

Ha pa gave dezo ne oa mui beleg ebed ken, na mad na fall, setu amañ penaoz ‘oa renket an traou er parrezioù. – Ar pezh a welom ‘zo skrivet war gaierou ti-kêr Milizag. Mez en oll parrezioù e tremene ‘gozig ar memez tra. – « O soñjal, an dekad eo an devez da ehana hag an devez ma tle an dud en em voda evid klevet al lezennou displeget gand ar mestr-skol ; o soñjal, beteg-henn, ar hloh o hervel an dud d’an iliz d’ar zul, he-deus miret na ve kemend a dud en dekad ; o soñjal an oll relijionou a zo kevatal dirag al lezenn.

Abalamour da ze, ar hoñsaill a zoug : 1° Ar hloh lezet en tour, goude al lezenn greet d’an 23 Even 1793, ne vo mui sonet da zul ; 2° Oll dud ar barrez a deuio d’an iliz, da eun eur goude kreisteiz, beb dekad ; 3° Deuz ar hroaziou a zo er hroazhentchou ne vo dalhet nemed an troad, ha war gorre, e vo lakaet eun daolenn gand ar homzou-mañ : Liberté ! Egalité ! Fraternité ! ; pe war an tour ar groaz houarn a vo tennet kuit hag en he leh e vo lakaet eur peul gand an “drapeau tricolore“.

E Lanneanou ‘oa lakaet d’an oll chefou familh ha pennou tiegez dond d’an iliz da glevet lenn al lezennou beb dekad. « Ar re na deuint ket a vo lakaet e renk an dud a vo da ziwall outo. »

Ar mestr-skol a zisplege al lezennou. Er giz-se e teuas da zerhel eur gador bennag ‘leh ar beleg. Beteg fin 1793, ar beleg a lenne hag a zisplege al lezennou, bep sul, dirag an dud a vije en overenn. Mez neuze, ar veleien ‘oa kaset kuit hag an ilizou ‘oa konsakret d’ar Rezon. Eul lezenn greet e fin 1793 a lakae ‘oa d’ar mêr lenn ha displega hiviziken lezennou ar houarnamant da dud ar parrezioù. Mez c’hoarvezet ‘oa, d’ar mare-ze, evel ma eo c’hoarvezet hirio, - hag evel ma c’hoarvez atao pa vez revolusion en eur vro, - an dud ar muia dizek ‘oa e penn ar parrezioù. Ar vistri-skol – hag a dro atao gand ar houarnamant a bae anezo, - a rankas ober labourioù ar vêred. Rag evel-se ‘oa deuet ar mestr-skol da gemer e halloud.

E kalz lehiou ‘oa roet d’ar vistri-skol ar presbitalioù ha, zoken, an ilizou.

D’an dregont a viz Gwengolo, district Montroulez en-doa douget al lezenn-mañ : « O soñjal en ilizou hag ar chapelioù ne dleont mui beza miret da relijion ebed, ar hoñsaill a zoug : 1° Presbitalioù an district a vezo goulonderet hag ar veleien a vezo kaset kuit anezo, dindan daou zekad, goude ma vo embannet al lezenn-mañ ; 2° An ilizou hag ar chapelioù ne vezint mui d’ar veleien : 3° Ar presbitalioù a vezo roet d’ar vistri-skol. 4° An iliz, e pep parrez, a vo roet d’ar mestr-skol d’ober ti-skol. 5° Koad ar heurioù ha re an aoterioù ne vo ezomm anezo mui, a vo lakaet da ober skiñvier ha taolioù evid bugale ar skolioù.

Ouspenn, o soñjal pegement e talv rei eur pleg all da spered an dud e pep parrez ; o soñjal eo red lakaad an dud da gaoud an deskadurez a zo mad evid kement-se ; o soñjal eo red kas da netra ar pezh a vage beteg-henn ar sorhennou er spered, an district a zoug : an dekad a vezo greet, e pep parrez deuz an district ; karga a ra ar mêr e pep parrez da lakaad, en devez-se, an dud da zond d’an iliz evid klevet lenn al lezennou, ha klevet ivez ar gelennadurez a dle beza greet ; ar re ‘zo e koñsaill ar barrez a roio skwer vad evid kement-se.

E-keit-se e vije gwasoh eged biskoaz, tregaset ar veleien vad. – « Ar gouarnamant, evel a lavare Coroller, iñtru Landudeg, n’ema ket evid relijion ebed mui. Mez, atao, ema, avad, evid derhel da gas eneb ar veleien n’o-deus ket touet. »

Hag ar hlask warno a gendalhe.

District Montroulez a skrive da gomite Taole d'an unneg a viz C'hwvvrer 1794 : « Lavaret a zo amañ, e zo c'hoarz dre Daole, beleien ha n'o-deus ket touet. Sitoayaned, deoh-c'hwi eo da deurel evez. Ar Prigent hag ar Penguilly a dlefe beza en ho parrez. Hastit buan dastum an dud-se hag a zo mez ar vro. Ma kav deoh ne helloh ket dond a-benn, lavarit deom-ni e peleh emaint o chom. Ha pa vijent a ouenn an diaoul e vezint, a-barz pell, lakaet d'ar maro. »

E Plouvian, Yann Mezon a flatas da zistrict Brest 'oa bet beleien o lavared an overenn e Sant-Yann-Balamant. Ha d'an daou, tri, pevar warn-ugent a Veurz, Jean-Marie Nedelec a deuas, gand archerien Lokournan, d'ober eun enklask d'ar barrez-se. « Klasket on-deus, a lavare, e ti Guillaume Le Roux. E-pad ma oam o furchal en traoñ e kav deom e zo tehet unan bennag dre brenest ar zolier. Soñjal a reom poulza pelloh on enklask. Mez an dud a deue da houzoud 'oam er barrez : on troiou a vije bet troiou goulo. Beza e zo e Plouvian meur a veleg ha n'o-deus ket touet. Mez evid gelloud lakaad an dorn warno e ve red kaoud kalz soudarded rag ar barrez a zo kollet ganto.

Plouian, en eneb, mar deo gwir ar pezh a lavare Cudennec ha Steun, renourien ar barrez, 'oa troet oll gand ar houarnamant. « Mignonned, d'al lezennou ha d'ar gouarnamant a deu, bemdez, d'on lemel deuz a dre skilfou an noblañs, ni labourerien-douar, ha tud komite Plouian ; atao skeduz da deuler evez deuz kostezenn ar Roue dija lakaet er bez ; re all, hervez al lezenn, a deu da gemenn deoh ar pezh a dremen en or parrez. An noblañsou, kaset kuit diwar-dro amañ, ne hellont mui teuler ar bilim war ar mêzou aonig. Pa houlen ar houarnamant eun dra e ve roet dezañ, diohtu. Mez ar beorien a zo kement anezo, ma on-deus aon ne varvfe tud gand an naon da hedall an eost.

*

E Landivizio hag e Bodiliz, ne oad ket ken tomm e-keñver lezennou ar Goñvañsion. Rag e Bodiliz, en despet da hourdrouzou ar gouarnamant, 'oa lezet en-dro d'an iliz eur ruban koad hag a oa warnañ merkou an noblañs ha re ar Roue.

E bro Montroulez, 'mez aon, 'oa ar memez tra.

D'an deg a viz Eost, komite Montroulez a skrive d'an oll parrezioù deuz an district : « Klevet on-deus, en despet d'an oll gourhemennou greet evid pilad ar hroazioù a zo war an hentchou, en ho parrez, n'ho-peus c'hoaz greet netra. Lavared a ran deoh ma vo ar reze, c'hoaz, en o zav, er wech kenta ma'z in d'ho kweled, hen rankin disklêria d'ar gouarnamant hag e vezoh lakaet e renk an dud a zo da ziwall outo. » Emichañs, ar gourdrouz a zougas frouez dre oll. En Enez-Vaz da vihanna 'oa bruzunet, diohtu, an oll kroazioù.

Revolusionerien Lezneven a skrive, d'ar bevarzeg a viz Here d'an "agent national" : « E Sant-Fregant e zo beleien ha n'o-deus ket touet. Beza e vezont peurliesha e Pennarhrec'h, Kerwezenn, Kerharo, Kerlobred, Kervolant ha Kerameal. »

*

XXVII

Gouel an hini 'zo dreist pep tra. Maro Robespierre.

Ar re a oa e penn ar houarnamant a lavare : pa vije diskaret e peb leh, ar gredenn e Doue, an dud a vije oll euruz.

Doue a oa diskaret, an ilizou, ‘gozig oll, ‘oa konsakret d’ar Rezon vad hag ar goueliou devot ‘oa taolet d’an traoñ. Mez siwaz ! e-leh dond da heul kement-se, an eurusted a oa pellaet.

Ar brasa dizurzou, avad, ‘oa dilammet e-touez an dud. Ar rezon vad, hag a gonte ar Revolusionerien warni, ne helle derhel leh gwirioneziou an Aviel. Kerkoulz, pa ne hortozed mui na baradoz nag ivern, pep hini en em lezas da vond da heul e youlou fall. An tadou hag ar mammou ne hellent mui dond a-benn deuz o bugale. Ar vreudeur hag ar c’hoarezed a ree brezel an eil d’egile. An dud a en em laze. War ar mêz, ma ho-poa eun enebour, ez ee gand eur fuzuill d’ho kortoz a-dreñv eur hleuz bennag, hag e roe deoh ar maro.

Kalz tud a yeas, e-leh labourad douar, da veva evel laeron. Dre an tiegeziou e veved, atao, en anken.

E Koad an Nivod, e Lopered, e oa bandennajou tud fall, abaoe 1793. Euz ahano e saillent war an dud pinvidig, tro-war-dro. E Kastellin ‘oa eur miliner e traoñ ar ru a gas da Veill-ar-Wern. Eun nozvez e teuas al laeron en ti. Ar mestr ‘oa krouget, ar vestrez taolet war he fenn er ster hag an ti a oa skuillet⁶⁸.

E Lanneanou, e ti Maledaad, ‘oa taolet an dud en eun arh. Eur bern keuneud ‘oa lakaet da vired na zigorje an arh. Ha goude ‘oa greet skrab war ar pezh ‘oa kavet.

Dre oll ar memez tra.

Doue, emichañs, hen lavared a vije, a leze ober an torfejou-ze, evid diskouez ne hell an den chom war an hent mad, heb kaoud relijion.

An oll en em glemme.

Neuz eun den, oll galloudeg d’ar mare-ze, a gredas adarre, kaozeal euz a Zoue. An den-ze ‘oa ar falla lampon, an den krisa a zo bet, morse, war an douar-mañ. E ano ‘oa Robespierre. Lakaet en-doa dibenna ar Roue, hag abalamour ma felle dezañ, abaoe bloaz, dija, ar gwad a rede deuz an eil tu d’egile d’ar vro. An dud ‘oa eneb dezañ er Goñvañsion en-doa kaset d’ar gillotin. Meur a hini, zoken, deuz e gamaraded, en-doa lakaet da laza. Mad, an den-ze, hag a venne beza Roue e Bro-Hall, a hoantaas sevel eur relijion. Ober a reas, er Goñvañsion, eur brezegenn evid lavared e rank an oll anaoud e zo eur Mestr, dreist pep tra, hag en-deus pep hini eun ene ha ne varv ket.

Ar re e zelaoue a ziskoueze beza kontant-braz. Penn-da-benn d’ar brezegenn e strakent o daouarn. Hag eun nebeud deveziou goude, deuz kement departamant a oa e Bro-Hall, e teue liziri evid e drugarekaad.

Ar Goñvañsion a lakaas e vije greet, dre oll barreziou Bro-Hall, e miz Even, gouel an Hini a zo dreist pep tra. Ha war an ilizou dismantret ‘oa lakaet merka : Tud Bro-Hall a anavez e zo Unan hag a zo dreist pep tra : anaoud a reont ivez, en-deus an den eun ene ha ne varv ket.

Setu amañ peger sod ‘oa greet e Ploueskad gouel an Hini ‘zo dreist pep tra. Pebez kemm etre ar goueliou-ze ha goueliou an Iliz !

Mez an oll a ranke, koulskoude, kemer perz enno. N’oa ket brao diskouez ne vije ket a-du gand ar houarnamant.

« Ni, koñsaillerien jeneral Ploueskad, a en em vodet da nav eur deuz ar mintin, en ti-kêr. Ahano om eet, or chelpou⁶⁹ en o herhenn, d’an iliz. Eno on-deus kavet divennourien ar vro, gand o fuzuillou. An dud oll, ‘oa eno, ivez. Ar mêr a zo, neuze, eet er gador-zarmon, hag en-deus greet eur brezegenn war giziou an dud. Roet en-deus, ivez, eur gentel bennag war al labour-douar. Goude-ze, en-deus pedet an oll da zond dirag gwezenn al liberte, an tadou gand o faotred vihan hag ar mammou gand o merhed bihan, krog en o dorn. Ar re a oa o vaga a zouge o magadennoù war o breh.

⁶⁸ skuillet : ? (bet skrivet “c’huillet“ er skrid orin)

⁶⁹ chelpou : ?

« Eet om 'ta war al leur-gêr, en-dro da wezenn al liberte⁷⁰, O veza n'on-doa ket gellet ober eun doare menez, evel e verke al lezenn, on-deus, er giz-se, rentet enor d'an Hini a zo dreist pep tra.

« Goude-ze on-eus oll en em lakaet e kelh en-dro d'ar mêt. Hemañ en-deus neuze lavaret d'ar zoudarded : « Divennourien ar vro, diskouezit deom, bremañ, penaoz e ouezoh divenn Bro-Hall, he zud hag ar pezh he-deus. » Raktal ar zoudarded a lez beb a denn.

Neuze ar mêt en-deus lavaret d'ar baotred vihan : « Paotred vihan, lezit dorn ho tud ha deuit er helh. » Hag ar re vihan a zo eet en eur grial : « Bevet ar Republik ! bevet al liberte ! bevet ar Menez ! »

Goude-ze on-deus kanet ar Marseillaise ha kanaouennou all, damheñvel. Da echui om c'hoaz eet d'an iliz, hag eno, eur serjant a yeas er gador, da gana eur zon heñvel ouz ar Marseillaise.

Dre ar parrezioù all, koulz lavared, an traou a dremene eun tammig evel-se. A-wechou, zoken, beleien touerien o-unan a vije e penn an abadenn. Er hiz-se, eh erruas e Goulhen. Beleg iñtru Treflez, Modir, hag hini Plouider, François Cariou, 'oa bet, ivez, e penn ar gouel. Mez, er brosesion o-doa lakaet dougen panniellou an iliz hag 'oant, abalamour da ze, taolet er prizon.

E Pariz evid gouel an Hini 'zo dreist pep tra, Robespierre a en em lakaas, gand lorch, da ober ar beleg braz. E gamaraded a reas goap outañ. Meur a hini, zoken, a lavaras dezañ traou diêz da glevet.

En eur zond d'an ti ma loje ennañ, deuz an noz en-deveze, e lavaras : « n'em-eus mui pell da veva. »

Hag e gwirionez beza 'oa er Goñvañsion kalzig tud ha, gand aon da veza dibennet, a labour e'neb dezañ.

En devez war-lerh e pignas er gador-brezeg ar Goñvañsion. Ne oa ket lezet da gaozeal. Ar gannaded a reas eun trouz spontuz evid mouga e gomzou. Kroget 'oa ennañ. Taolet e oa er prizon anvet prizon al Luxembourg. Mignoned dezañ hen tennas ahano a daoliou kanol. Neuze ez eas d'an ti-kêr. Eur hannad, anvet Barras, a lammas gand kalz tud all en ti, war e lerh. Eun archer, gand eun tenn pistolenn a dorr dezañ e javed. Lakaad a reer eur mouchouer en-dro d'e benn, hag e chomas er stad-se, harpet deuz eun daol, da dremen an noz. Pa deuas an deiz 'oa taolet, eñ hag unan warn-ugent deuz e gamaraded, en eur harr. Hag a-dreuz ruiou Pariz, leun a dud o krial gand laouenidigez, 'oa kaset da zibenna. (27 Gouere 1794).

*

XXVIII

Lezenn al Liberte o komañs c'hweza. – An ilizou, ar presbitaliou, feurmet pe gwerzet d'ar re a lakae ar priz hirra. – Ar prizoniou digoret. – An ilizou feurmet gand kristenien, roet d'ar veleien vad.- Ar vistri-skol droug-kontant. – Diou feson merket d'ar veleien evid toui.

Goude maro Rosbespierre, an dud 'oa bet kaset dre ar vro da zerhel leh ar houarnamant, a gendalhas da lakaad da blega d'al lezennou kriz. Beleien 'oa c'hoaz lakaet d'ar maro. Evel-se e tegouezas gand an aotroudez Le Gall ha Goarigou, hervez on-deus lavaret dija.

Ar hlask, ivez, war ar veleien, a gendalhas beteg fin ar bloaz. Mez meur a wech e vije atao c'hoari o klask lakaad anezo er prizoniou. An dud fidel o divenne ker kaloneg ha biskoaz.

⁷⁰ da wezenn al liberte : **notenn el leor** : E derou ar Revolusion 'oa gourhemennet d'an oll parrezioù planta, war al leur-gêr, eur wezenn anvet "gwezenn al liberte".

D'ar henta a viz Du, Guillaume Barvet ha Charles Cras, archerien deuz ar Hastell-Nevez, a yeas da Blounevez-ar-Faou. Unan bennag en-doa lavaret dezo e kavfent er barrez-se, e kêr Langouily, eur beleg kuzet e ti ar Grannec.

Hag e gwirionez, en eur zegouezoud er harter e welont eun den yaouank o vond d'ar haloup war-zu an ti m'oa lavaret dezo.

Mond a rajent d'e heul.

Edont dija e toull an nor ha sada ma welont eun den gwisket e-giz Pleiben o tehed dre al leur. Ne deas ket pell. Er verjez e-kichenn e lakaont an dorn warnañ.

-« Piou out ? », a lavarjont dezañ.

-« Me, emezañ, a zo deuz Pleiben hag a zo deuet amañ d'ober eur gwel d'am zonton. »

Hag ind-i en ti.

-« Te, a hourhemennjont d'ar Grannec, a rank dond ganeom d'an ti-kêr da Blonevez. »

-« O ! ya, mad, eme ar Grannec, me 'yel. Mez, kement ha ma'z oh deuet, evit da genta peb a vanne sistr. »

An archerien a azezas. Debri a rajent hag eva ivez beteg beza mezo, emezon.

Pa oa leun o hov, ar Grannec a lavaras : « Emichañs, aotrounez, ne vezo ket red din mond d'ar bourk. »

-« Eo 'vad », 'oa respontet dezañ. Hag an daou archer en em lakaas da urzia an hini o-doa tapet er verjez. Gantañ eo kavet eur voest leun a ostiou. Staga 'reont dezañ e zaouarn etre e gein. O-daou e savont war o hezeg hag e treinont anezañ d'o heul.

Mez e-pad an amzer-ze, ar Grannec en-doa e-unan pignet war eur marh. Mond a reas d'an daou lamm-ruz beteg Kernevez-Kergoulouarn. Eno e chomas.

Pa zegouezas an archerien, e lavaras dezo : « Mar deo ho polontez, ni 'jomo asamez ganeoh. »

Mez, war an hent, en e gichenn, 'oa eur bern bouteier. Ar Grannec en-doa lavaret 'oa eur beleg en dañjer ha perhennou ar bouteier 'oa redet d'e gemenn d'an dud tro-war-dro.

An archerien kerkoulz n'oa ket pell a-zindan zivin. Eun tammig larkoh, en eur vali a gase da Bont-an-Aour, e weljont eur bern tud.

-« O ! eme ar Barvet en eur grenn, amañ e lezim or buhez ! »

E gamarad ar Hras a ouie ar brezoneg hag a lavaras da Bloneveziz : « Lezit ahanom da dremen, ni ne reom droug da zen. »

-« Ni kennebeud, 'oa respontet dezañ, ne reom droug da zen nemed d'ar re a ra droug deom. »

Hag e kouezont warno a daoliou forh, a daoliou pal hag a bep seurt. Ar Barvet ne hellas en em zavetei nemed en eur grial : « Bevet ar Roue ». Egile, goude beza kollet e vantell ha kuiller⁷¹ e varh a bakas a-raog mond kuit eun taol forh en e gostez hag eun taol mên war e jod.

E-pad an abadenn, e hellit kredi, ar beleg, an aotrou Severe deuz Pleiben, 'oa tehet kuit.

*

Koulskoude, a nebeud da nebeud, an traou a gemere eun tu gwelloh. Dre ar vro a-bez an oll 'oa skuiz gand ar reuziou fall. Eun tammig êzenn a liberte hag a relijion a gomañsas c'hweza.

D'an unan warn-ugent a viz C'hwevrer, ar Goñvañsion a reas eul lezenn evid lavared ne bae relijion ebed mui. Mez, divenn a ree ober brezel da hini ebed. Hag an ilizou, ar presbitaliou, a vije gwerzet pe feurmet d'an hini a lakaje hirra. Ar gouarnamant n'en-doa mui netra da ober ganto.

⁷¹ kuiller : ?

Prest goude, d'ar bevar warn-ugent a viz C'hwevrer, Guesno ha Germeur, hag a oa e Kemper o terhel leh ar houarnamant, a reas eul lezenn evid ma vije lezet da vond euz ar prizon : 1° ar re a oa bet taolet e-barz abalamour 'oa da ziwall outo ; 2° al labourerien hag an artizaned ; 3° ar veleien o-doa touet hag a oa bet taolet er prizon abalamour n'oa ket falvezet ganto na dimezi nag en em zisvelegi ; 4° ar seurezed ; 5° an noblañs.

Evelkent 'oa dalhet eur pennad c'hoaz ar veleien n'o-doa ket touet. Mez, miz goude, d'ar c'hweh warn-ugent a viz Meurz, 'oant lezet da vond kuit gand ma teujent da doui chom didrouz ha poania da lakaad ar peoh e-touez an dud. Ouspenn e rankent lavared e peleh ez eent da chom.

E Landerne, d'ar mare-ze, ne oa mui er prizon, e kouent ar Gapusined, nemed beleien ekopti Leon. Ar re all 'oa bet war o goulenn kaset da Gemper d'ar 27 a viz Genver 1795.

Setu amañ ar roll greet deuz prizonerien Landerne pa oa roet frankiz dezo, d'an daou a viz Ebrel 1795.

François Babezre de Lanlay, a ya da jom da Blouyann.

Lannurien, Montroulez.

Labour, Montroulez.

Mathieu Le Court-Kergrist, Sant Yann ar Biz.

Mathias Mevel, Montroulez.

Jean Michel, Gwimaeg.

Jean Le Roux, Montroulez.

Kermarrec, Sant-Nouga.

François Picart, Plouider.

Tual, Lezneven.

Jean Breton, Sant Tegonneg.

Carré, Lezneven.

Jacques La Rue, Lezneven.

Le Sénéchal, Gouenou.

Quéméneur, Sant-Mark.

Joseph Lescalier, ne hell ket kaozeal.

Urbain Le Cleac'h, Laz.

Troniou, Kameled.

Yves Guillard, Lopereg.

Joseph La Rue, Landerne.

Bodenez, Landerne.

Levenez, Roznoenn.

Gilles Baptiste Le Harz, Daoulaz.

Jacques Le Roux, seizet, Plouziri.

Le Gac-Quistillic, Dirinon.

Penhoat, Brest.

Ar veleien a oa, e Kemper, o-doa ranket gedal pelloh evid kaoud ar frankiz. Abaoe miz Eost edont er helenndi. N'oa ket kalz anezo. Setu amañ an anoiou on-deus kavet en eur paper sinet ganto p'oant lezet da vond kuit, d'an nao a viz Mae 1795.

« Disklêria a reom, a lavarent ; neuze, chom e Kemper evid beva e peoh a-zindan lezennou ar Republik. Anzav a reom kement-se, gand seul-vui muih a blijadur, ma lezer ahanom da unani gand on aket evid mad ar vro, ar frankiz da heuill relijion on tadou koz.

Grégoire Le Guillou de Kerineut, 71 bloaz.

Normand du Pharadon, 71 bloaz.

Grégoire Le Guillou de Kerineuf, 72 vloaz.

Yves Lanrivinec, kapusin, 68 vloaz.

Augustin Piclet, peson Gwipavaz, 68 vloaz.
Louis François Cornu, 56 vloaz.
Raoulin, person Poullan, 85 bloaz.
Frogeray, deuz Kemperle, 83 bloaz.
Le Barz, chaloni Daoulaz, 68 vloaz.
Bulot, abostol.

*

Koulskoude an dud a brene pe a feurme an ilizou. D'ar bevarzeg a viz Ebrel, parrezioniz Plouzane a houlennas digand ar hoñsaill munisipal feurmi o iliz evid he rei d'ar veleien vad 'oa bet chomet kuzet, beteg neuze, hag 'oa deuet en-dro.

E Douarnenez, an itron Le Traon, intañvez La Planche, a houlenne feurmi iliz Santez Helena pe hini Ploare.

An aotrou Le Predour, d'ar henta a viz Mae, a brene iliz Santez Anna e Fouesnant ;

Hemañ ivez an aotrou Regnier, a houlenne lavared an overenn hag ober an ofisou e chapel Sant-Tegonneg, e Plogoneg.

E Brieg, an aotrou Suignard a glaske kaoud chapel ar Vadalen ; Yves Le Grand, hini Treflez ha Santez-Venneg ; Dareillon, Sant-Adrien ; Pierre Tinen, Saint-Egareg ha de Pennayeun, Killien.

Yann Le Boudin a houlenne chapel Santez-Berhed e Gwengad ; Guillaume Calvez, Saint-Quido, Sant-Ouar hag Itron Varia ar Porz bihan, e Loktudi.

An aotrou de Trédern a ginnige da zistrict Kastellin c'hweh lur ha tregont ar bloaz evid iliz Sant-Kouliz. Merhed Brest, eun niver braz anezo, a houlenne feurmi iliz Saint-Louis.

Evel a weler, aliez a-walh, dre ar parreziou, e veze goulennet da feurmi ar chapelioù kentoh eged an ilizou parrez. Hag an ilizou-ze 'oa adarre etre daouarn ar veleien iñtru hag ar vistri-skol. E meur a leh e savas freuz, e berr amzer.

D'an tri a viz Ebrel 1795 an aotrou Quemeneur en-doa feurmet iliz Rekourañs evid ar veleien vad. Ar hoñsaill munisipal a falvezas gantañ o-dije, ivez, ar veleien fall lod enni. Mez an aotrou Quemeneur a lavaras e ranke kaoud oll pe netra.

E Sizun ar mêr en-doa roet an iliz parrez d'an aotrounez Touboulic ha Le Roux. Ar prokureur syndic a houlennas digantañ rei chapel Sant-Vaodez d'an aotrou Floc'h, ar beleg mad. Mez ne bakas nemed komzou fall.

E Gwengad, an aotrou Louboutin a nahe lavared an overenn en iliz parrez e-leh ma overenne ar beleg iñtru, nemed savet e vije eur speurenn da ranna an iliz e diou lodenn. Da hedal e lavare an overenn en eur hrañj.

E Kerhaez n'oa permetet lavared an overenn en ilizou, nemed diveget e vije an touriou ! emichañs evid diskouez n'oant ket ilizou mui.

*

Mez ar vistri-skol a gavas fall kement-se : en ilizou e oant, ne felle tamm dezo mond er-mêz. Diskuill a reent ar parrezioù d'an District.

Mestr-skol Plouneour-Menez a skrive da Vontroulez : « D'an eiz a viz Meurz, da deir eur goude kreisteiz, e oa er bourk eun niver braz a dud deuet war digarez ober degemer d'ar beleg koz Charles. Ar Charles-ze a gavas digor dor templ ar Rezon vad. Mezaon, zoken, 'oa bet digoret, a-ratoz. Rag an aoter 'oa bet lakaet warni bleuniou. Mond a reas er gador hag e lakaas soni ar hloh. Mab ar hloher a oa eno hag a viras soni beteg ma vijed bet o kaoud ar mêr. Neuze, ar beleg a lavaras : « Deoh-c'hwi, tud yaouank, eo lakaad soni ».

An dud yaouank, a-stroll, a zo eet da gaoud ar mêt hag hemañ, spontet oll, a lavaras soni ar pez a garjed.

E Garlan, an iliz 'oa bet roet d'ar beleg mad en despet d'ar mestr-skol. Hemañ 'oa Tailen e ano. Diskuill a reas ar hoñsaill munisipal, da zistrict Montroulez. Hag ar mêt a bakas, d'an deg a viz Mae, al lizer-mañ : « Klevet on-deus, eo, e Garlan, nahet ouz ar mestr-skol, an iliz evid lenn ha displega al lezennou. Mantret om n'ho-peus ket lakaet urz en traou-ze. Ar relijion a heller da heul e peb frankiz. Poulza a dleer, zoken, an dud war-zu ar Relijion. Mez arabad evid an dra-ze mired ouz ar mestr-skol da rei e gelennadurez. Peogwir n'ho-peus ti braz a-walh ebed nemed an iliz, grit enni an ofisou, mez ivez lezit lenn enni al lezennou. Lakait ober an eil goude egile. Hag ouspenn ma rank lenn al lezennou deiz an dekadi, ar mestr-skol a dle ivez o lenn, pa vezer en em vodet evid an ofisou, d'ar zul. Bezit war evez, avad, ma vo echu gantañ, bep tro, a-raog an ofisou. »

Mez kristenien Garlan ne entenjont ket an traou evel-se. Mired a reent ouz ar mestr-skol da vond er gador a-raog an overenn-bred. Ha Louis Le Bras, an hini en-doa feurmet an iliz, a lavare en-doa he hemeret, nann evid kleved lenn lezennou ar houarnamant, med evid deski gourhemennou Doue.

Koulskoude ar veleien a deue niveruz d'o farrezion koz. Ar re 'oa kuzet er vro a zifouche deuz al lehiou kuz, hag ar re a oa bet eet d'ar broiou all a gomañse dond en-dro.

Neuze Lanjuinais, eur hannad deuz ar Goñvañsion, a houlennas lakaad ar veleien da doui unan pe unan euz an daou le-mañ :

1° - Ar sitoayan X... a zo deuet dirazon. Lavaret en-deus eo bet er prizon, pe ez eo bet kuzet abalamour ma oa beleg. Dond a ra da lava red e vevo, hiviziken, didrouz ha leun a zoujañs evid al lezennou hag ar Republik, evel ma o-deus goulennet Guermeur ha Guezno, kannaded ar Bobl. Lavared a ra ouspenn en-deus soñj mond da jom e parrez X... Hag en-deus lakaet e ano.

2° Ar sitoayan X... a zo deuet dirazom. Lavaret en-deus eo bet er prizon, pe eo bet kuzet abalamour ma oa beleg. Dond a ra hervez al lezenn douget gand Guezno ha Guermeur d'ar c'hweh warn-ugent a viz Meurz, hag a lavar e vevo didrouz hag e raio muia ma hello, dre e gomzou, dre e feson da veva, evid lakaad da vond war gresk ar peoh etouez an dud. E zoñj a zo en em denna e parrez X... Hag en-deus lakaet e ano.

Setu amañ evid district Montroulez ar veleien o-deus sinet an eil pe egile, deuz an daou le-ze :

O-deus sinet douja d'ar Republik ha d'he lezennou :

Guillaume Briant.

Jean Le Roux.

Mathieu Mével.

Michel Guillerm.

Joseph Marie-Pierre Pen.

Jean Guerlesquin.

Ollivier Le Lez.

François-Marie Lavier.

Y. Nigeon.

François Eflam Bourel.

Jean Pelleter.

T. -Y. Costiou.

Le Veyer.

François Penguilly.

Jean-Louis Kerien.

Hervé Martel.

René Kerhervé.

Jean-Baptiste Henri.

N'o-deus ket touet na beza fidel d'ar Republik na d'he lezennoù :

Etienne-Sébastien Latour.

Jean-Baptiste –Xavier Noirot.

Jean-Pierre Balay.

Yves Savidan.

Pierre Larhantec.

Pierre-Ignace Suillard.

Yves Morvan.

Louis-Marie Gourmelon.

François Le Corre.

Jean-Marie Le Pape.

Jean-Louis Le Moine.

Guillaume Guerrec.

Etienne Le Bihan.

Jean-Baptiste Le Jean.

Louis-Guillaume Sannier.

François Le Corvez.

Jean-Gilles Le Cam.

François Abgrall.

Hervé Le Lann.

Jean Le Lez.

Pierre-Louis Briant.

Jean Le Royou.

Alain Le Roux.

Hervé Le Guen.

Antoine Dafniet.

Jean Combot.

Jean-Marie Etien.

Jacques-Marie-Joseph Mathezou.

Elie-Joseph Le Corre.

Nicolas-Marie Le Mad.

Hervé Grall.

Jean-Marie-Jérôme Bourgonnière.

Alain Kerautret.

P. Mathieu Le Forestier.

François Périou.

Paul Le Saint.

Paul Mingant.

François Prigent.

Jospeh Le Roux.

Guillaume Cadiou.

Jean-François Le Dantec.

Alain Guénégan.

Yves Guilgars.

Jean-François Camus.

Evel a weler, e district Montroulez, al lodenn vrasa deuz ar veleien n'o-doa ket sinet plega da lezennoù ar Republik. Aon o-doa na vije bet kement-se ober eul le damheñvel deuz an hini o-doa gouzañvet kement abalamour dezañ.

Unanou bennag, zoken goude beza touet, a deuas war o ger. Mezh an Departamant o hase dirag an tribunal. Evel-se e tegouezas gand an aotrou Cosquer, person Bolazeg. Taolet 'oa er prizon abalamour 'oa deuet war e her, hag abalamour en-doa lavaret n'oa ket c'hoaz diazezet mad ar Republik.

Mez, e gwirionez, kalz beleien a reas unan deuz an daou le-ze. Beleien touerien a reas ivez, unan pe unan anezo evid en em lakaad adarre e renk ar veleien vad. Evel-se e reas René Grascœur, Jacques Riou, Michel Quillivic deuz Eskibien, evel-se c'hoaz ar Guellec deuz Plovan.

D'an daou warn-ugent a viz Mae, an aotrounez Moal ha Daerou a yeas dirag munisipalite Pont 'n Abad hag a lavaras : « N'on-deus, morse, nahet tui da blega da lezennou "politik" ar houarnamant. Hag e 1791, ma ne vije ket bet goulennet diganeom nemed an dra-ze, n'on-ije ket nahet tui. Chom a reom e Pont-'n-Abad, me, Visant Le Moal, oajet a dri bloaz hag hanter-kant, ha Christophe Daerou, oajet a zeiz vloaz ha tregont. Plega a reom da lezennou ar Republik gand na dint ket 'eneb ar relijion. Bremañ e reom an ofisou er Vadalenn. Mezh or zoñj a zo mond da Garmez, hag eno, e reom on ofisou deuz a hweh eur deuz ar mintin beteg kreisteiz. Ha goude kreisteiz deuz a ziv eur beteg pemp eur. »

*

XXIX

Klemmou a bep tu o tond d'ar houarnamant a-eneb ar veleien vad. – Lezenn ar c'hweh warn-ugent a viz Even greet gand Guezno, Guermeur ha Bruc.- Ar Goñvañsion, a-raog mond kuit, a deu da renevezi an oll lezennou fall 'eneb ar veleien vad.

En eur vro hag a zo enni dispah, an dud a vo re gounnaret, an traou re amjust, evid ma teufe en eun taol kont eur peoh paduz.

Rag-se, daoust d'or bro da veza skuiz o weled laherez, ar peoh ne deuas ket diohtu. Tud ar gouarnamant hag ar veleien iñtru, ivez, ne gavent tamm mad an tu nevez a gemere an traou.

Saillour, prokureur syndic district Montroulez, a skrive d'ar re 'oa e penn ar houarnamant : « Guezno ha Guermeur, kamaraded ar bobl, o-deus lakaet rei frankiz d'an oll veleien bet en em guzet pe dalhet er prizon evid beza chomet hep tui d'al lezenn greet e 1791. Mezh, e gwirionez, diwar ar mare, ma eo deuet ar re-ze en-dro, e zo er famillou neh ha troublen ha n'oa mui abaoe ma oant bet kaset kuit. Kalz a ra, a-nevez, an eureujou hag ar badiziantou greet gand ar veleien iñtru. Ar re 'oa troet gand beleien ar houarnamant a gav diêz kement-se. Kalz tud a zo lakaet nehet. Ar veleien n'o-doa ket touet n'int ket kaoz, marteze. Mezh evelkent, n'int na frank na leal. Rag nahet o-deus, 'gozig oll, senti ouz al lezennou ha plega d'ar Republik. »

Prokureur syndic Lezven, ar Gall, ha goude beza bet person e Plougerne hag e Ploueskad, en-doa, pelloh, taolet e zoudanenn, a skrive, d'ar henta a viz Even, da brokureur syndic an departamant : « An ilizou a zo oll feurmet hag ar re a feurm anezo o ro d'ar veleien ha n'o-deus ket touet. Evel-se e Plouider, Gwiseni, Sant-Fregant, beleien ar gouarnamant a lavar an overenn el leh ma karont, nemed en ilizou parrez. An ilizou parrez a zo lakaet etre daouarn ar veleien ha n'o-deus ket touet, deuet en-dro. »

Eusa⁷² a ree, ivez, eur hlemm damheñvel. An ti-kêr a skrive da zistrict Brest : « An Tual, deuet deuz e doull kuz, a laka freuz dre amañ. Komañset en-deus da zorna traou

⁷² Eusa : E galleg "Ouessant", e brezoneg "Enez Eusa". Gouzoud a ouie Jezegou gwelloc'h ar galleg eged ar brezoneg.

diwar-benn ar gouarnamant. Overenna en-deus greet da genta en e di. Mez goude en-deus savet eun telt el leh ma vod oll ar re a zo 'eneb ar houarnamant.

Kemperle a en em glemme c'hoaz. Ouspenn-ze ar Chouanted a dage e pep tu mignoned ar gouarnamant ha tud ar Roue a ziskenne e Kiberen d'ar c'hweh warn-ugent a viz Even.

Kerkent, d'an devez-se, zoken, kannaded ar bobl e-keñver arme moriou Brest a reas al lezenn-mañ : « Ra vo lakaet er prizon, diohtu, tadou, mammou, breudeur, c'hoarezed, gwraez ha bugale an dud a zo tehet d'ar broiou all. ; ra vezint kaset d'ar hêriou a vrezel evid beza dalhet e gouestl. – Ar veleien n'o-deus ket bet touet gwechall, hag a zo bremañ e frankiz, - hag a vo da ziskredi warno, n'o-defe ket greet a galon ar bromesa da blega da lezennou ar Republik, a vo a-nevez, kroget enno, ha lakaet er prizon. »

Koulskoude, d'ar mare-ze, lod parrezioù a gendalhe da houlenñ rei o ilizou d'ar veleien vad. « Diou iliz on-deus, a lavare koñsaillerien Milizag da zistrict Brest. (16 Even 1795), an iliz parrez hag iliz Santez Anna. Houmañ a zo bihan. Mez braz a-walh eo evid ar veleien touerien hag ar re 'zo a-du ganto. Abalamour da ze om aviz da rei an iliz-se dezo ha d'ar re a ya d'o heul. Mez an liz parrez, daoust ma'z eo braz, a vezo a-veh braz a-walh evid ar gristenien a zo a-du gand ar veleien n'o-deus ket touet. Ha peogwir al lezenn a laka rei leh d'ober ar relijion evel ma kerer, e lakaom rei an iliz parrez d'ar veleien n'o-deus ket touet. » D'ar goulenn-ze district Brest a respontas "nann".

Tud parrez Gwipavaz 'oa bet eurusoh. Skriva reent, ivez, da Vrest, 25 Even 1795 : « Ma zo bet skuillet gwad, a lavarent, eo abalamour n'oa mui a relijion. Ar gouarnamant, goude beza kaset 'eneb gwirioneziou ar Feiz, a zo deuet, pelloh, da rei liberte war gement-se. Ni 'houlenñ, abalamour da ze, diganeoh, rei frankiz d'an aotrou Louis Sibiril, bet gwechall kure en Trehou hag a zo bremañ er prizon, e Kastell Brest. Daou veleg all a zo er barrez : ar sitoayaned Mouden ha Segalen. Mez Segalen a zo koz ha kabah ; n'eus ket a-walh anezo o-daou. »

Mez e-pad ma teue tud ar parrezioù da houlenñ beleien hag ilizou, an iñtrued a en em daole da glemm gwasoh-gwaz. Coroller, iñtru Landudeg, a skrive d'an driweh a viz Eost 1795 da zistrict ar Pont : « Mall braz eo lakaad eun termen da zouliach ar veleien n'o-deus ket touet. Ne gavont netra mad deuz ar pezh a zo bet greet gand ar veleien a zo eet e tu ar houarnamant. Benniga a reont an ilizou hag ar berejou war digarez ma zo bet, enno, beleien all. Hirio, e zo bet reünion e Gwiler. Pedet 'oan gand ar mêr da vond da overenna. Pa erruis, migoned ar re n'o-deus ket touet a en em zavas hag a lavaras na vije overenn ebed. Ar mêr a bedas hag aspedas. Netra ne reas. Mond a rajen va-unan beteg an iliz. Mez taolet 'oan bet kuit gand Guillaume Le Gall ha Jean Brun deuz Kersperou, Jean Le Goff ha Corentin Talidec deuz Kermerben, Alain Periou deuz Tipicolot. Ar reuz-se 'oa bet preparet, a levere, gand ar Gellec, beleg deuz Mahalon, hag a oa bet oh ober eun interamant e Gwiler. »

Morvan, beleg iñtru Plouzane, ha Morel, beleg iñtru Ploumoger, o chom e Lanildud, a skrive d'an dri a Wengolo, 'eneb mignoned ar veleien vad, deuz Plouarzel ha Trezien : « Ind-i, emezo, a gase ganto ar halirioù hag a zerre an iliz evid mired deuz beleien ar gouarnamant da vond da lavared an overenn. »

E Kastell, eur beleg iñtru a vije oh overenna en eur japel vihan. Braz a-walh 'oa ar japel, avad, rag n'oa ket kement-se a dud euz e heul. Daoust da ze e falvezas gantañ kaoud an iliz-veur. Mez kristenien Kastell a en em zavas. Ha district Montroulez a houlenne serra an ilizou pe o gwerza, oll, evid kaoud peoh.

E bro Uhelgoad ar veleien vad 'oa c'hoaz hardisoh. N'oa ket êz mond er vro-ze. N'oa nag hent na gwenojenn hag ar veleien, heb aon, a grie dre oll, en ilizou, zoken, bevet ar Roue !

Ar hlemmou-ze hag ar re heñvel outo a deue deuz pep korn e Bro-Hall a lakaas ar Goñvañsion da waska war ar veleien adarre. Hag eul lezenn, greet ganti d'ar bemp warn-

ugent a Wengolo, a hourhemenne lakaad a-nevez er prizon, ha zoken kondaoni d'ar maro ar veleien na doujent ket da ober al le-mañ : « Anaoud a ran evid mestr, an oll sitoayaned deuz Bro-Hall, ha prometi a ran plega da oll lezennou ar Republik. »

Mez lezennou ar gouarnamant 'oa 'gozig oll fall. An aotrou Thiberge, vikel vraz deuz Kemper, a roas ali da jom da bleaga dezo. Hag ar veleien a rankas, a-nevez, mond a-zindan kuz.

*

XXX

Ar Horv "législatif". – an "Directoire". – Ar veleien vad lakaet d'ar maro dre eur hillotin seh hag a oa ker sur deuz he zaol, evel 'oa an hini all.

Ar Gonnvañsion a zante ar gasoni he-doa lakaet da zevel en-dro dezi. Gouzoud a ree ma vije lezet frankiz da voti, e vije degaset da ouarn ar vro tud hag 'oa 'eneb ar bersukusion. Abalamour da ze, a-raog mond kuit, e tivizas e vije an daou farz deuz ar gambr koz er hambr nevez.

Ar gouarnamant a deuas, neuze, a gomañsas, d'ar 26 a viz Here 1795. En e benn 'oa eun "directoire" : Larevière-Lépaux, Rewbel, Carnot, Letourneur, Barras 'oa e penn an "directoire"-ze. O-femp, gwechall, o-doa votet evid lakaad laza ar Roue.

Evel a heller kredi, an "directoire" a gendalhas da ober brezel d'ar feiz kristen.

Mez ar veleien, mezaon, a en em guzas mad : ne oa paket, koulz lavared, hini.

Hag e Plobalanneg, an "agent" munispal – ar pezh a vije anvet, hirio, "garde-champêtre" pe diwaller – ar Moign a reed anezañ, a roe an ali kriz-mañ d'ar re a zo e penn an departamant :

« Karget deuz an urz vad er barrez, e teuan da ziskuill deoh ar re a zo, amañ, e penn on enebourien : Hervé Floc'h, ar mêt koz, en-deus goulennet ma ve sarret ilizou Sant-Alor bihan ha Plonivel. Mez Jean Larnicol, deuz Keresper ha Christophe Gouzien deuz Kergwenn-Plonivel a zalh anezo digor, en despet d'al lezenn, hag a leze, enno, ar veleien-Chouanted da ober o ofisou beteg ma'h int eet kuit, anezo o-unan. Ouspenn-ze e lezent Jacques Le Pauber, kloher koz Plonivel, da zon ar hloh, bep sul, war digarez ober an ofisou. Henez, ar Pauber-ze, a zo eur gwall den. Kounnaret 'eneb ar sitoayaned vad. Bet eo dare dezañ, ne ouzon ket ped gwech, laza or person.

An oll sitoayaned a garfe gweled ar re 'zo deuz or gouarn o tond da ober eun dra bennag evid dichouanti ar chefou-ze.

Ar veleien amañ eo Besnier, Carval ha Querno. Besnier a zo en em lakaet person e Plonivel, daoust ha ma oa taolet ar barrez-se d'an traoñ. Besnier a zo eet, bremañ, da Gemper. An daou all a zo kuzet er barrez, pe war dro.

Eun nebeud sitoayaned all ha me, on-deus en em glevet da ginnig d'ar houarnourien eun dra hag a raio dizolei a-barz pell, ar veleien-ze.

N'eus nemed kemenn dezo, ma ne deuont ket d'en em lakaad er prizon, e vezo kemeret en o leh : c'hoar Besnier ; Anna Vigourous, keniterv Carval deuz ar bourk ; Jean Nedelec, leztad Querno, deuz Kerlen, ha Renan Struillou, an hini a ro lojeiz d'ar beleg-se e Kerfeunteunig. Fall a-walh ; kerkoulz int : ne vezint tamm dizenoret evid mond d'ar prizon. »

N'ouzon ket hag an Departamant a zalhas kont euz ar pezh a lavare dezañ diwaller Plobanneg. Mez e derou miz Ebrel 1796 e fardas al lezenn-mañ : « 1° Oll archerien an Departamant a yelo dre ar parrezioù klask ha gouzoud peleh e chom beleien n'o-deus ket touet ha kregi enno. –2° Peder eur warn-ugent goude ma vo degouezet al lezenn-mañ,

koñsaillerien an ti-kêr e pep parrez a dle en em voda.- Ar Hoñsaillou a dle disklêria ha beza e zo er harter beleien hag o-deus nahet toui evel m'oa gourhemennet gand al lezenn deuz ar 26 a viz Kerdu 1790, pe goude beza touet a zo deuet war o ger.-3° Ha bez ez eus beleien hag a ra eun dra bennag deuz karg eur beleg heb beza touet, hervez al lezenn deuz miz Gwengolo diweza. – 4° Kregi a raint er veleien a zo 'eneb al lezenn ha kas a raint anezo d'ar prizon da Gemper. – 5° Ar hoñsaill munisipal a vo kaset dirag al Lezvarn ma nah respont pe ma lavar gevier ha ma ve kavet er harter eur beleg ha n'en-deus ket touet.

An diskuillerien a gemeras a-nevez o fluenn. Ar vistri-skol, dreist-oll, a gase war ar veleien gwasoh eged biskoaz. Mestr-skol Plabenneg a skrive da Vrest, d'ar seiz a viz Ebrel 1796 : « Labourad a ran evid kaoud neziou ar veleien a goves *hag a ro o Aotrou Doue* er barrez-mañ. Kaoud a ra din ne gollin na va amzer na va foan. »

E Gwiseni, ar mêr 'oa tamallet da veza roet an iliz d'ar gristenien vad o-doa kempennet anezi.

D'an nao a viz Maer 1797, deuz Plouzane 'oa lavaret da zistrict Brest : « Goachet a ra bemdez, an traou deuz e urz, abaoe ma oa permetet dezañ dond da Blouzane en-dro. O chom ema e ti Tarsec, prezidant ar gomun. En ti-ze, deiz ar zul Fask ha d'ar zuliou ha goueliou, ivez, war dro teir eur deuz ar mintin, e zo bet hag a vez atao kalz tud, beteg daou, tri-hant, merhed ha gwazed, o vond d'an overenn. Ar Goachet en-deus galvet war e zikour ar Prevost deuz Gwiler ha Trebaol deuz Lamber. Koves a reont eur bern tud, en ti-forn hag er hrañj. »

*

An dud, koulskoude, 'oa peurvuia skuiz gand ar bersekusion.

Da viz Mae 1797 'oa bet greet eleksionou evid dibab kannaded nevez. Dre Vro-Hall oll, koulz lavared, e oa kaset d'ar Gambr tud a beoh hag urz vad.

Ganto, an "Directoire" a deuas a nebeud da nebeud da habaskaad. An ilizou 'oa a-nevez digoret d'ar veleien vad. Hag e Breiz-Izel, koulz hag e leh all, eun niver braz a veleien fall a deuas d'en em gonvertisa.

An Eskibien iñtru a gemeras aon. Mar kendalhfe an traou da vond war an tu-ze, prest a-walh n'o-dije beleg ebed mui. Ober a reont, e Pariz, ar pez a anver eur hoñsil. Tregont eskob a yeas d'ar hoñsil-ze.

Er Finistère n'oa eskob ebed mui. Eur beleg touer, anvet Serandour, a yeas da zerhel leh beleien fall eskopti Kemper ha Leon.

Mez kaer o-doa, an dud a deue da heugi diouto.

Gand kannaded ar vro e tegoueze, bemdez, eur bern liziri evid goulenn ar peoh. Unan anezo, an depute Dubruel, a houlennas, neuze, ma vije roet frankiz d'ar veleien vad da ober le ebed. Dond a reas a-benn deuz e daol. (24 Eost).

Mez, en Directoire 'oa chomet tri den hag a oa revolusierien aheurtet :Lareveillère-Lepeaux, Rewbel ha Barras. 'Eneb peb gwir e halvont da Bariz ar jenerel Angerenn hag e zoudarded. Harpet gand ar zoudarded-se, e lakaont terri deuz o harg kannaded eiz Departamant ha daou-ugent. Daou gannad, divennourien ar veleien vad, 'oa taolet er prizon hag hanter-kant all a oa kaset d'ar broiou pell : (4 a viz Du 1797). Al lezenn greet evid gervel er vro ar veleien vad a oa torret. Lakaet e oa en he leh eul lezenn ha ne leze beleg ebed da jom e Bro-Hall nemed toui a raje : « plega da oll lezennou ar Republik ha kaoud kasoni deuz ar roueed » Pemzeg devez 'oa lezet ganto da ober o zoñj. Ha goude ar pemzeg devez-se, ar re n'o-dije ket touet a vije lakaet d'ar maro.

Koulskoude ne oa ket kredet seveni d'al lezenn, penn-da-benn. E-leh lakaad d'ar maro ar re 'oa paket, 'oant taolet er prizon, e Rochefort.

Eno 'oa glaharuz o stad.

Evid kousked n'o-doa nemed eur baillasenn etre tri. Ar hambrou 'oa bihan. Deuz ar mogeriou an dour a zivere. Ar baillou evid ober an ezommou 'oa e pevar horn ar gambr hag a ampoezone anezi.

Da zebri n'o-doa nemed bara du ha kaled, ha c'hoaz, nebeud anezañ. N'o-doa nemed eur pred bemdez, da genta. Mez pelloh 'oa lezet an dud vad ha trugarezuz, deuz kêr, da zegas dezo o hoan.

Ne ouzom ket hag e ve bet kaset beleg ebed deuz ar Finistère da brizoniou Rochefort er bloavez 1797.

Mez er bloavez 1798 'oa tennoh war ar veleien eged n'oa bet morse. N'eo ket ma vije lakaet o gwad da redeg, evel diagent. Ar prizoniou, avad, hag e vijent taolet enno, en enezenn. Re, er Guyane hag e Cayenne, a deue a-benn anezo, kerkoulz ha ken sur hag ar gillotin.

E gwirionez, da hedall beza harluet er broiou pell, ar veleien 'vije taolet da genta e prizoniou Rochefort. Mez an niver anezo a deuas da veza ken braz ma ne helled degemer mui. Soñjet 'oa, neuze, kas da enez Re ar veleien goz, klañv pe mahagnet.

Muih a frankiz o-devoa eno. O stad, evelkent, 'oa truezuz meurbed. Da viz Gwengolo, an hini 'oa karget d'o diwall a lavare : « Amañ e zo nao-hant beleg. Kalz a varv. Mez bemdez e tegouez re all, ha leh ar re a zo kemeret gand ar maro ne jom ket pell goulo. » Hag evid gwir, beza 'oant gand an dienez a bep tra. Da zebri n'o-doa nemed fao hag hariko. Banne gwin ebed, morse. Kig a vije roet dezo eur wech bep sizun. Mez evid o egasi, ne vije roet ar hig nemed d'ar gwener.

Setu amañ ar roll deuz ar re 'oa bet kaset deuz ar Finistère da enezenn Re, e 1798 ha 1799. Unanou bennag anezo a zo maro eno.

Yves-Marie Berthou, beleg e Tremoezan, 45 bloaz.

Rolland Bizien, deuz Plougoulm, person Kernouez.

Sébastien Brusq, deuz Poullan, kure Treboul, 46 vloaz.

Bernard Carof, kure Plouziri, ha ganet eno er bloaz 1748, maro d'ar 29 e viz Du 1796.

Pierre Gorgat, person Landrevarzeg.

Jacques Talarbardon, deuz Kastell, person Landeda.

Jean-François Danielou, deuz ar Faoued, person Erge-Armel.

François Derrien, deuz Sant-Turien, kure e katedral Kemper.

Hippolyte-Alexandre du Laurent de la Barre, vikel vraz, maro e Rochefort, 1798 en eur vond da enez Re.

Pierre Goasduf, deuz an Dregeg, beleg e Bodilis.

De Villers, beleg.

Rolland Michel-Marie Le Bescond, de Koadpont, person Poullan.

François Lazou, ganet e Garlan ha kure eno, maro en enez Re, 27 Eost 1800.

Louis-Guillaume Sannier, kure Montroulez ha ganet eno, maro, 29 Here 1799.

François Efflam Bourel, ganet e Garlan ha kure e Lanveur, maro d'an deg a Wengolo 1801.

Michel Guillerm, ganet e Plouneour-Menez, kavet e parrez an Dre-Nevez, e Mae 1798 ; kaset 'oa da Enez Re d'an 29 a viz Even 1798 hag eo maro eno d'an 19 a viz Kerdu 1800.

Gabriel Jacob, deuz Plouzeniel, manah.

Jean Keruzore, kure Plouziri.

Toussaint Yves Le Floc'h, person Sizun.

Jean Le Joncour, deuz Pouldergad, beleg e Kloastr-Pleiben.

Jean Le Moal, deuz Spezed, kure Pont-'n-Abad.

Yves Le Saout, deuz Plouider, aluzenner seurezed ar Retred e Kastell, person Treflaouenan, kaset da Enez Re d'ar 26 a viz Eost 1798, eo maro eno, d'ar c'hwheh a viz Mae 1799.

Alan Levenez, kure Spezed.

Yves Ligeou, deuz Plouigno.

Jean Plelet, ganet e Sant-Nikolaz ar Pelem e 1741, person e Lokronan, ha maro d'an a viz c'hwevrer 1801.

Michel Talamant, deuz Eskibien.

Jerom Yvenat, ganet e Brasparz er bloaz 1750, rejant e kloerdi Kemper, maro d'an 21 a viz Meurz 1801.

*

Ar veleien 'oa chomet e Rochefort a vije,beb ar mare, a-vagadou, kaset d'ar broiou all. Ar re genta 'oa c'hoantaet da gas kuit 'oa bet lakaet, d'an daouzeg a viz Meurz, war eul lestr anvet *Charente*. Daou-hant e oant. Mez ar Zaozon a dagas al lestr hag en-doa ranket ober peñse war an trêz. Ar vartoloded a laeras, neuze, ar veleien baour. Ne oa lezet ganto na gweneg na tamm dillad ebed. E miz Ebrel, goude, 'oant ambarket adarre, ha douget d'ar Guyanne.

D'an daou a viz Eost, beleien all 'oa lakaet war an daou lestr a anved *ar Vaillante* hag *ar Bagonnaise*. *Ar Vaillante* a gouezas etre daouarn ar Zaozon. *Ar Bagonnaise* a gasas d'ar Guyanne an dud a oa warni.

Pa zegouezjont er vro-ze, kalz euz o henvreudeur bet douget di en o raog a oa dija maro. War o lerh 'oant kaset da Sinamary ha Conamana, lehiou hag a oa spontuz beva enno. Anvet 'oant bet *Dienez* ha *N'eus Netra*. Ne gaved da zebri nemed pesked hanter-vrein ha da eva dour leun a lehid.

Goude kement-se n'eo ket diêz entent pegement a gleñvejou a zilamme war ar brizonerien geiz. Buan e vijent diskaret er bez.

Setu amañ anoioù ar veleien 'oa bet deuz or bro kaset d'ar Guyanne. Tri anezo a zo maro eno.

Jean Carval, ganet e Plogoñ, kure Plobannaleg.

Jean-Louis Collenot, ganet e Gwened, beleg e Kemper.

Jean Combot, ganet e Kastell er bloaz 1754, kure e Sant-Martin Montroulez, maro e Cononama d'an nao a viz Here 1798.

Yves Pavec, kure Plogonneg.

Jean-Guillaume Prigent, kure Groñvel.

Guy-Marie Kericuf, ganet e Sant-Martin Montroulez e 1751, maro er Guyanne d'an 21 a viz Meurz 1799.

*

E-pad ma roe ar veleien o buhez er broiou pell evid o feiz, e Bro-Hall an traou a dremene gwasoh-gwaz, 'eneb ar re a grede e Doue.

Ar re a guze beleien a vefe o ziez kemeret gand ar houarnamant. Ma n'oa ket dezo an tiez ma kuzent enno beleien e vijent kondaonet da rei arhant.

Poulzet 'oa war an oll evid ober dezo dilezel muioh-mui ar zul. Malloz d'an hini a lavare droug deuz an dekadi. Ar ministr Letourneur, e fin ar bloaz, a gemenn d'ar re a zo e karg dindan ar houarnamant eo eun dever evito, hag evid o zud, ober goueliou an dekadi. Ouspenn-ze 'oa roet dezo da entent e tleent ober brezel d'ar re a vire ar zul.

Ar veleien iñtru a rankas ober ar zul deiz an dekadi, a-zindan poan da veza harluet. Divenn 'oa d'an oll ober taol labour ebed deiz an dekadi. E meur a leh e vije tennet war ar re a labourde deiz an dekadi ha war ar re a ehane da zul.

Divennet 'oa, ivez, gwerza pesked da wener.

Hag evid mired na vije greet eured ebed ken gand ar veleien vad, an oll eureujou deuz parreziou ar hanton a vije greet er gêrbenn, deiz an dekadi.

*

XXXI

Ruillou ar Chouanted er Finistère.

Abaoe ar bloaz 1793, soudarded ar Houarnamant o-devoa da stourm eneb eun arme nevez : arme ar Chouanted.

Diwar-benn ar Chouanted e vez aliez êsaet teuler pri war an dud vad en or bro.

Setu amañ, hed-a-hed, ar wirionez diwar o fenn.

Ar henta anezo 'oa Yann Cottereau. E dad-koz en-doa eur fri kamm hag atao e vije du e dal. Abalamour da ze 'oa bet lesanvet ar haz-noz, pe gentoh, ar Chouant, e-giz ma lavarar e bro Angers. E vugale hag e vugale vihan, o-doa heritet deuz e lesano ha Yann Cottereau 'oa bet lesanvet er giz-se Chouant.

Yann Cottereau pe Yann Chouant, a oa e vicher kerhed holen deuz Breiz-Izel da werza en e vro. Rag e Breiz-Izel n'oa taill ebed war an holen hag e gaved marhad-mad.

D'ar mare-ze, ar Roue 'oa paour evel ma'z eo, bremañ, or gouarnamant. Felloud a ree dezañ lakaad deveriou war an oll draou. War an holen 'oa lakaet daouzeg gweneg dre lur. Mez Breiziz en em zavas 'eneb an dever-ze. Ar Roue a gemeras aon. Hag e Breiz-Izel an holen 'oa lezet evid eur gweneg al lur e-pad ma werzed anezañ trizeg gweneg e leh all.

Yann Chouant a oa o chom e-kichenn bordou Breiz. Eur wech, diou ar zizun, e teue da gerhad holen da Hemene pe da Roazon evid e werza stok-varhad en e vro.

Ar vicher 'oa gwall-amjestr. Rag e-teid bordou Breiz-Izel 'oa maltouterien digor o daoulagad. Ouspenn-ze, al lezenn 'oa striz : ar re 'vije tapet o kerhad holen deuz Breiz da Vro-Hall a vije lakaet d'ar maro.

Yann Chouant 'oa bet tapet eun nozvez. Kondaonet 'oa da veza krouget.

Mez e vamm a redas da Versailles da gaoud ar Roue evid goulenn ma vije lezet he mab beo. – « Lakit anezañ er prizon, mar kirit, emezi ; mez en an' Doue, na lamit ket e vuhez digantañ ! » – « It d'ar gêr, eme ar Roue, ho mab ne vezo ket lazet. Mez lavarit dezañ beza fur, hiviziken. »

Yann Chouant ne oa ket evid e dech : kendelher a reas d'ober e droiou kamm.

Mez pa glevas 'oa dibennet Louis XVI e teuas soñj dezañ deuz ar vadelez en-doa bet evitañ hag evid e vamm. – « Arsa, gwazed, e lavaras da dud yaouank e garter, pred eo deom en em zavel a-eneb an dud fall a lam diganeom on Doue hag or Roue. Tud yaouank Breiz-Izel a roio deom sikour, me 'zo sur. Doue on zikouro ivez. Ha mar ve ma ne zegasom ar veleien vad en-dro hag an traou war o zu. »

Kalz mignoned en em vodas en-dro da Yann Chouant. En em dennas ganto en eur hoad anvet Koad ar Mêzdon hag a zo e bro ar Maine, sko deuz eun tu war douarou Breiz-Izel.

Ar brud deuz kement-se a redas buan dre bevar horn Breiz, h g a-benn nebeud goude, kement koad 'oa en or bro, koulz lavared, 'oa en em guzet enno gwazed hag a oa 'eneb ar houarnamant. Ha dre ma oa Yann Chouant en-doa roet tro dezo d'en em unani, evel-se, o-doa kemeret an ano a Chouanted.

Evid gwir, Breiziz o-doa ouspenn eun abeg d'en em zavel 'eneb gouarnamant ar Republik. Evel on-deus gwelet, deuz pep parrez 'oa kaset kuit ar veleien. Da heul 'oa eet, ivez, an urz wirion. Ar falla tud a gase, 'gozig dre oll, ar parreziou en-dro. Soudarded ar houarnamant a dremene dre beb leh. Mond a reent en tiez a gavent war o hent. An oll draou a vije mad evito : an anevaled, ar fourraj, an arhant ; an arbellou a vije torret a daoliou bouhal, ar merhed a vije gwallet. Malloz d'an hini a ziskoueze beza drougkontant. Raktal e vije lakaet d'ar maro.

Eur ganaouenn hag a oa savet d'ar mareou-ze a lavare : Daoust hag-eñ, paotred Kerne, e houzañvim da viken. E houzañvim ar vaherien a wask on labourerien ?

Gwallet ganto or merhed koant ; lazet unan ha mab he-doa,
Lazet zoken an dud klañv paour, abalamour d'o daouarn gwenn.
Tanet ganto ti ar beorien, diskaret ar maneriu.

Devet an ed, devet ar foenn, er parkou hag er prajou.

Laeret or zaout, on ounnered hag on ejenned, siwaz !

Ha kaset 'mesk gand o ferhenn d'ar higer d'ar hêriou braz⁷³.

Ar Chouanted a reas d'an traou cheñch eun tammig. Kerkent ha ma vije klevet ano deuz soudarded ar Republik o vond da zegouezoud en eun tu bennag, ar Chouanted, kant, daouhant anezo, a rede d'o diarbenn. En em guzad a reent a-dreñv ar hleuziou. Pa vije deuet an enebourien war-hed tenn, ar fuzuillou a strake. Pep tenn a bile e zen. Hag a-raog ma vije deuet ar zoudarded fall deuz o spontadenn, ar Chouanted a vije eet pell d'en em guzad adarre, a-dreñv eur hleuz all.

Ar Chouanted o-doa dalhet da zillad o bro. Ar chefou 'oa gwisket evel ar re all : kemm ebed etrezo. War o fenn 'oa eun tok ledan evel a zouged neuze ; o bleo hir a fuille war o diskoaz. O bragou a ziskenne beteg penn ar hlin. War o hov-garr 'oa bodreou lien, hag a helled ganto tremen dre al lann hag an drez. War o hein 'oa eur chupenn, greet peurliesia gand krohen gaor.

Soudarded ar houarnamant a vije oll gwisket gand mezer glaz. Abalamour da ze e reed anezo ar Re Hlaz pe ar Glazarded.

Ar Chouanted evid kousked e peoh a ree, er hoajou, toullou a-zindan an douar ; ar Re Hlaz, dre ma'z eent, a gouske peurvuia en ilizou.

D'an daouzeg a viz Mae 1795, ar jeneral Canclaux, en ano ar houarnamant, a reas ar peoh gand ar Chouanted. Prometi a reas dezo e vije, a-nevez, degaset ar Roue en-dro, ha roet frankiz da beb den da heuill e relijion.

Mez Canclaux a ree goap, emichañs. Evid sur, ar houarnamant ne zevenas tamm d'ar promesaou en-doa greet. Pell deuz eno. Kendelher a reas d'ober brezel d'ar feiz hag e zoudarded a yee hag a deue dre ar parrezioù en eur ober skrab war pep tra hag en eur deuler spouron e peb leh.

E miz Gouere 1795, eur zitoyanez deuz Fouesnant, Guillemette Deleissègues, gwreg Laurent Mazé, o chom e Logamant, a en em glemme d'an departamant hag a lavare 'oa laeret dezi gand ar zoudarded dillad gwele. Ouspenn-ze, emezi, c'hoaz, 'oa ravajet he hoad, he avalou hag he foenn.

Er memez mareou, deuz Kerhaez, er penn all d'ar Finistère, Le Cornec, prokureur syndic, a skrive da Gemper : « Amañ, hag er parrezioù tro-war-dro, an traou a ya fall-fall : ravaji, laerez a reer enno en noz hag en deiz. Soudarded Kerhaez a ra skrab war ar verjezou. Abaoe pemp devez, ar hêriou a zo bet kemeret enno kement a oa kavet. Merour Kergorveau, hini ar Stanger ha Miliner ar Veil-Veur a zo rivinet. Hervez ar pezh a zo lavaret deom, soudarded Kerhaez eo a ra ar reuzioù fall-ze... Ar zoudarded a vez mezo atao. Den ne hell dond a-benn anezo.... Mez, etrezom, e lavarinn deoh, an ofiserien a zo ker gwaz hag ar zoudarded ! (23 a viz Gwengolo 1815). »

Dre oll 'oa ar memez tra.

O weled kement-se, ar Chouanted en em zave, adarre. Dre gement korn 'oant degemeret deuz ar gwella gand al labourerien-douar. « War ar mêzioù, a lavare Cambry, prokureur Kemperle, d'an departamant, e troer gand ar vriganted. Ne 'z eer ket c'hoaz da en em lakaad en o zouez. Mez dre oll e vager hag e lojer anezo. Skaer, Arzano, Gilligomarh a zo kollet ganto. »

⁷³ d'ar hêriou braz : **Notenn el leor orin** : Barzaz Breiz, de La Villemarqué.

Ha d'ar memez mareou, ar re a ouarne Kastelliz a lavare, ivez, 'oa red ma vije al labourerien-douar a-du gand ar Chouanted peogwir o-doa kuzet ker mad warno pa oant bet oh ober o zro e Pont-ar-Veuzenn.

E penn ar Chouanted er Finistère, d'ar mare-ze, edo de Lantivy, de Poulpiquet, lesanvet ivez *Sans-Quartier*, D'Amphernet, deuz Kernevel, Durand ha Samson anvet c'hoaz *Sans-Souci*.

Deuz 'gozig oll parrezioù Kerne ez oa unan bennag Chouanted. Tud yaouank an tenn, dreist-oll a en em lakae bep bloaz, stank, en o zouez. Ha d'o heul 'oa meur a vaouez hag a ouie koulz ha peb den, diskarga o fuzuill war an enebourien.

Maner an aotrou de Treouret e Trohanet, e Brieg, ha maner Trevarez e Sant-Goazeg, d'an aotrou De Kersalaun, 'oa an tiez el leh ma'h en em vodent ar muia. E-kreiz koajou parrez Laz o-doa displeget o zeltou. Mez eno, soudarded ar houarnamant a zegouezas, eun devez, warno hag o-doa ranket en em denna en eul leh all (Mae 1796).

Imor ar Chouanted a goueze, dreist-oll, war tri rumm tud : ar veleien iñtru ; ar re o-doa prenet madou an ilizou hag oll an dud 'oa troet gand ar houarnamant pe o-doa eun tamm karg bennag.

Eur Chouantez, bet taolet e prizonioù Kastellin, da viz Even 1795, a gonte d'an aotrou Duboishardy, karget d'ober outi goulennou, lod deuz troioù ar Chouanted er Finistère... He ano 'oa Louise Garrek ; deuz Landevenneg 'oa genidig, emezi. Hag e lavare : « Eun devez ar Chouanted a yeas da Edern. Pa zegouezjont er bourk, ar mestr-skol, e ano Le Predour, a deuas war eeun dezo hag a houlennas o faper-tremen.

« Gortoz, e lavaront dezañ, bremaig e vezo roet dit ». Ha de Kersalaun a zistagas gantañ eun taol sabrenn war e voh. De Kerstrad, goude-ze, hen ledas maro-mik gand eun tenn fuzuill.

Ar Chouanted en em dennas, neuze, war-zu Brieg. En hent e kavont ar person iñtru, ar Gorger. —« Ni a zo 'vond du-ze », a lavaront dezañ. »

« Kerzed a reont d'e heul d'ar presbital ha degouezet en ti e pignont da gambr ar beleg iñtru. Goulenn a reont outañ an alhweziou.. — « Ro anezo, a lavaras d'e vatez : kemer va oll dillad evid da labour, rag me 'wel n'am-eus mui pell da veva. »

« Gwir a lavare. Diskenn a reas er porz. Eno, unan a roas dezañ eun tenn fuzuill hag eun all a fourras e zabrenn en e gov.

D'an devez war-lerh, ar Chouanted a gemeras hent Gouezeg. En eur zegouezoud, pemzeg pe c'hwezeg anezo a yeas e porz ar presbital. Ar person a oa o vond da overenna. O weled tud o tond, e kavas dezañ 'oa evid klask traou da eva, rag en devez a-raog en-doa lakaet eur varikennad win en e gao.

Ar Chouanted a lavaras dezañ sevel d'ar gambr. Eno e lezont warnañ eun tenn fuzill. Tapoud a reas eur grusifi hag e ruillas er skalierou o hervel e vatez war e zikour.

Goude an taol-ze, ar Chouanted a yeas war-zu Pont-ar-Veuzenn. En eur dremen e Sant-Segal, e kavont mestr-skol Kast hag ar person o kaozeal : « War ho taoulin, e lavaront dezo, ema deuet hoh amzer diweza. » Mez eur Chouant a houlennas buhez evid ar mestr-skol. Lezet 'oa da vond kuit. Ar person, avad, a dapas eun tenn fuzuill en e benn.

« Degouezet e Pont-ar-Veuzenn, ar Chouanted a en em guz, da genta, en eur hoad, war bord ar ster. Pa oa deuet ar mare e lammont war ar boulldroenn. Kemer a reont poultr ar pez a felle dezo : ar rest a daolont en dour. Forsi a reont daou zen, Louis Vigouroux, deuz an Drenit hag Yves Milin, deuz Pennhoadenn, da vond gand o hirri da gas dezo ar poultr beteg Plevin.

« En eur vond e tremenjont dre Blounevez-ar-Faou. Er barrez-se o-doa kalz mignoned. Ahano e tapjont Landelo. Eno e kemerjont ar person iñtru hag e vatez.

Ar person 'oa e ano Le Bris. Pa oant eet en e di, e houlennjont digantañ ha touet en-doa ? hag eur moñtr en-doa ? Goude 'oa lavaret dezañ sevel war ar marh 'oa bet da berson

Gouezeg. - : « Nann, a lavaras, lazit ahanon amañ, diohtu. » Mond a reas ganto ; e Plevin, koulskoude, ‘oa lezet da vond kuit. » (29 Genver 1796).

Ar Chouanted o-doa lazet c’hoaz Cabon, kure Arzano ; Gourlaouen, beleg iñtru Kerien ; Cavellat, person iñtru Kernevel ha Bernard, justepe⁷⁴ er barrez-se.

D’ar memez mareou, François Carrof, beleg iñtru Sant-Ivi ha Jacques Lavallot, person iñtru Sant-Evarzeg ‘oa bet ivez diskaret ganto.

Ne oa, koulz lavared, beleg fall ebed, e parreziou Kerne, heb na vije, eur wech pe eun all, ar Chouanted euz e glask.

Mez beleien ar houarnamant ne joment ket, peurliesia, d’o gortoz. Ne oant tamm deuz an danvez a vez greet ar verzerien ganto hag ar halz anezo a en em denne er hêriou.

Ar Chouanted a gare, ivez, evel on-deus lavaret, heskinad ar re o-doa prenet madou an ilizou pe madou an noblañsou. Laza ‘reent anezo, peurvuia. A-raog skei, koulskoude, e kasent, a-wechou, kemennadurez. Setu amañ eul lizer hag a oa bet douget, deuz o ferz, da Jean Kersody, deuz ar Hap : « Kemenn a reom dit, Kersody, e vezi lazet ma ne deuez ket d’en em entent gand gwir perhenn al Logan e-peus prenet digand ar Gouarnamant.

Setu te lakaet war evez. Bremañ, gra evel a gari. Oll ar re o-deus prenet madou laeret n’o-devezo ket ar memez eurvad ganez, da glevet ali a-raog beza skoet. Ma’h eent en em gunduoud evel tud onest, e vezo ankounac’haet ar pez a zo tremenet. »

Neme, jeneral Kemper,

Comte de Montfort, chef ar hanton

Arme ar Chouanted ne helle beva gand êr an amzer. Mond a ree da gerhed arhant da di ar “percepteur“ ha da diez an dud diwar ar mêz troet gand ar Gouarnamant.

Pa roe ar “percepteur“ e arhant heb marhata re, e veze lezet gantañ, a-wechou, diskargou hag ‘oa skrivet evel-henn :

« 12 Mae 1796 : Ni, ofiserien deuz arme ar Relijion hag ar Roue, e Breiz-Izel, a anzav on-deus bet digand “rescour“ an taillou war-dro pevar-hant mil lur en arhant paper ha daou-hant lur e peziou. Red eo bet dezañ o rei deom pe on-dije hen lazet a dennou fuzuill.

Hag on-deus lezet gantañ ar paper-mañ, evid en em zizamma dirag ar re o-defe c’hoant d’e damall.

En Eliant, d’an 12 a viz Mae, an eilved bloaz abaoe ema Roue Louis XVII. Buhez hir d’ar Roue. »

An dud diwar ar mêz a hine peurliesia evid rei o arhant. Mez ar Chouanted a ree neuze eun dra ha ne vanke, morse, d’o lakaad da zond a-benn deuz o zaol. Staga a reent ar mestr pe ar vestrez deuz an ti war eur bank. Goude, a-nebeudou, e tostaent ar bank-se deuz an tan hag e talhent da zevi treid an den kêz beteg ma lavare e peleh edo e yalh.

Oll mignoned ar houarnamant ‘oa o zro da grena. Goulenn a reent sikour ‘eneb ar Chouanted. Pelloh, e penn ar jeneral Rossignol, e teuas eur zoñj ivern. Lezel a reas da vond war barreziou Breiz-Izel soudarded hag a yee a vandennou bihan, gwisket evel Chouanted, deuz an eil kostez d’egile. Kement-se a oa evid lakaad da dreñka ‘eneb ar Chouanted kalonou an dud diwar ar mêz. Laza a reent netra nemed evid kaoud ar blijadur da laza. Oll e ravajont dre ma’z eent. Eur spont ‘oa beva en or bro. Ne ouied petra da ober nag e pe du trei evid pellaad deuz ar maro.

Ne heller ket a dra zur kaoud mad oll ar pez a ree ar Chouanted. Mez ma’z int bet ker kriz eo dre abeg ar gouarnamant. Perag ne roe ket dezo o goulenn, eur goulenn just : « Doue hag ar Roue ; perag beza greet goap anezo e Mabilais. »

Ar pez a zo sur, kement den mad ha leal ha gwir Vreizad ‘oa, en o amzer, a-du gand ar Chouanted. Hirio, c’hoaz, e kaver o anoïou. Beza int an anoïou kaerra hag enorapla deuz or bro.

⁷⁴ justepe : juge de paix.

Ar Chouantez diweza deuz Breiz-Izel a zo bet an dimezell de Mascle, deuz Kastellin. Napoléon a gargas prefet ar Finistère, an aotrou de Miollis d'he zeuler er prizon, er bloavez 1805. Eur vaouez 'oa leun a feiz hag a galon. E penn he soudarded he-doa gwall-gaset tud ar Revolution... Ne oa dalhet er prizon nemed eur miz bennag beteg-henn.

*

XXXII

Eun eskob nevez anvet e Kemper. – Petra 'oa Audrein. – Ar Chouanted. – Ar peoh o tond a-nebeudou. – Maro Audrein.

Abaoe ma oa trohet e benn da Expilly, n'oa eskob ebed e Kemper. Eur rummad beleien 'oa dibabet evid kas an traou en-dro. Ar veleien-ze a oa Gommaire, Serandour, Le Cos, bet person e Kastellin, Guino, Ollitraut, rejant e kelenndi Kemper, Le Gac, aluzenner an Ursulinezed. Mez Claude Le Coz, hag a oa neuze eskob iñtru Roazon, ne gare tamm gweled an traou o vond evel-se, en e vro. Skriva 'reas lizer war lizer d'e vignoned gwechall en eskopti Kemper, evid lavared dezo 'oa tremen mall kaoud eun eskob nevez.

Pelloh, e pep parrez, 'oa lavaret ober votadeg evid dibab ar re 'deuje da Gemper da lakaad eun eskob all. Mez en taol-mañ ne oa ket kalz a bres. Meur a barrez ne votas ket. Person iñtru Saint-Louis Brest ne gaozeas ket, zoken d'e barrezioniz diwar-benn kement-se.

Ar votadeg, e Kemper, 'oa greet d'an eiz warn-ugent a viz Gouere 1798. An traou a dremenas evel m'oant tremenet pa oa bet anvet Expilly : "eau de vie" 'oa roet n'eus forz pegement hag a-hend-all 'oa bet dizurziou e-leiz. Audrein, vikel jeneral, eskob iñtru Gwened, en-doa bet ar muia moueziou.

*

Yves-Marie Audrein a oa ganet e Gwareg, eur gêriadenn hag a oa, neuze, stag deuz Plougernevel en eskopti Kemper.

E gerent n'oant ket pinvidig. Mez e Plougernevel 'oa eur skol vraz. Bemdez ez ee war e droad d'ar skol-ze, hag e reas, evel-se, digoust, e studi.

P'oa beleget 'oa kaset da rejant da skol vraz Kemper. An aotrou Bérardier 'oa, neuze, e penn ar skol-ze. Mez, a-barz pell, 'oa galvet da vond da Bariz da skol-veur Louis Le Grand. Audrein a yeas d'e heul. Diwezatoh 'oa bet e-unan lakaet e penn skolaj Grasin. Eno edo pa deuas ar Revolution. Diohtu e troas ganti.

Anvet da vikel-vraz gand Le Masle, eskob iñtru Gwened, 'oa bet kaset gand tud ar Morbihan evel kannad d'al Législative ha d'ar Goñvañsion.

Eñ a ginnigas, da genta, en Assemblée Législative, lemel ar skoliou digand ar seurezed hag ar veneh. Eñ ivez a houlennas, unan deuz ar re genta, tenna o fae digand ar veleien vad, abalamour, emezañ, e lakaent freuz da zevel.

Beza 'oa bet, diwezatoh, kaset da brizoniu Pariz e leh ma lakaed e genvreudeur, d'an eiz a viz Gwengolo 1792. Ne zigoras ket e henou da lavared an disterra tra evid o divenn. Ha diwezatoh c'hoaz, p'oa greet prosez Louis XVI, e houlennas e varo.

Setu aze an den 'oa anvet da eskob e Kemper.

Skriva 'reas d'ar Pab : « Beleien ha katoliked ar Finistère o-deus va dibabet evid beza eskob e-leh ar beleg vertuzuz Expilly, bet lazet gand an diranted. »

Ar paour-kêz eskob a gomañsas fall. A-veh m'oa sakret 'oa bet dare dezañ mond d'ar prizon.

En amzer-ze 'oa divennet ober prosesionou. Mez, pa oa eet da Bleiben da rei ar Goñfirmasion, tud ar barrez-se a houlennas digantañ ober prosesion gand ar vugale. Hag ar prosesion 'oa greet diohtu.

Kerkent 'oa flatet hag 'oa bet galvet dirag al Lezvarn e Kemper. Evid en em zivenn e lavaras : « Ar pezh am-eus greet a zo bet evid gounid tud parrez Pleiben d'ar Republik. Mantret on da veza galvet da zond amañ evid seurt tra. Sur a-walh eo Chouanted jalouz eo o-deus va diskuillet. »

An afer 'oa klozet diohtu.

Koulskoude, an dud a deue da veza skuiz gand ar Republik hag he dizurziou. Goap a reed deuz ar gouarnamant, deuz e lezennoù, deuz ar gouelioù en-doa lakaet ober, ha deuz ar gwiskamantchou divodest en-doa greet dougen. Urz vad : setu pelloh ar pezh a glasked.

Dres, d'ar mare-ze, eun den a zeue da Vro-Hall deuz an Ejipt. Brudet dreist, e oa. Viktoriou en-doa gounezet e-leiz. Degemeret 'oa dre oll evid eun Doue. Ar hleier a vije sonet dre ma tremene, tantajou tan a joa a vije greet : oll e teuent d'e zaludi. Henez 'oa Napoléon Bonaparte. Bro-Hall a en em ginnige dezañ.

Evelkent, e-pad eur pennad, e chomas da argila. Mez pelloh, Sieyez, e-unan deuz an Directoire, a en em lakaas a-du gantañ. O-daou e hounezont kalz kamaraded. Hag eun devez, Napoléon gand e zoudarded e lammas e kambr ar gannaded hag o zaolas er-mêz. Eur gouarnamant nevez 'oa greet. Ar gouarnamant-se a zouge an ano a Consulat. Tri den, anvet koñsul, a gemere ar garg da gas ar Frañs en-dro. An tri den-ze a oa Bonaparte, Seyes ha Roger Ducos (18 brumaire, 9 Du, 1779).

*

Prest goude ar mareou-ze 'oa bet greet e kostez Kemper, eun torfed spontuz. Audrein, an eskob iñtru, a oa bet lakaet d'ar maro.

Mezaon 'oad o klask tro, warnañ, pell a oa. Eun devez, 'oa klevet ez ee da Vontroulez. Lakaet en-doa en e spered mond di, da brezeg an Azvent ha da gennerzi ar person koz, an iñtru Derrien, 'eneb ar veleien vad 'oa degouezet e kêr. « Meur a hini a gred, a lavare, e hellin, pa vezin eno, rei kouraj da dud ha da berson ar barrez : n'em-eus ket kalz a esperañs, mez mond a rin, atao en avañtur Doue. »

Mond a reas, d'an nao warn-ugent a viz Kerdu 1800. Etre nao ha deg eur deuz an noz, e reas kas d'ar wetur vraz, anvet Dilijañs, e zillad eskob hag ar pezh en-doa ezomm evid e veaj. Goude e pignas e-unan e-barz.

E mare hanternoz, ar wetur a zegoueze dija diou leo deuz Kemper, e traoñienn Sant-Herve, e parrez Brieg. Teñval sah 'oa. Hag 'oa klevet eun tenn fuzuill hag ar gomz-mañ : « A-zav, kokin ! »

Ar postillon, Jean Chartier deuz Kastellin, a zalhas war e gezeg. En eun taol e teu en-dro d'ar wetur eur bern tud, fuzuillou ganto. Lod 'oa gwisket e bourhiz, tud all e labourerien-douar.

Ar prosez 'oa bet greet war-lerh a ziskouezas 'oant, an darn-vuia, bet Chouanted. Mez abaoe bloaz o-devoa dilezet ar vicher. Ar penn anezo 'oa Le Cat.

Eun nebeud deveziou a-raog an torfed, 'oa bet gwelet, e Brieg hag e Landudal, o klask kamaraded. Arhant 'oa gantañ, leiz e hodellou. Mez piou en-doa roet an arhant ? Piou en-doa bet ar zoñj da laza an eskob ? Morse ne deus gellet hen gouzoud.

Charles François Le Cat n'en-doa ken nemed pevar bloaz warn-ugent. Asamez, gantañ, edo Louis Michel ; Hervé Benden, mab da eur boutaouer deuz Landudal ; Jean-Baptiste Lignaroux deuz Kraozon, ha Le Goff, portezet deuz ar Pont.

Dre bromesaou kaer ha dre hourdrouzou 'oant deuet a-benn da lakaad da vond d'o heul labourerien-douar deuz ar harter : Daniel Gouliou, François Le Grand, Jean Le Guilly, Charles Le Moine, Yves Jaouen ha Jean Ropars.

Lakaet 'oa dezo en em gaoud oll e ti Laurent Coatalem, o chom e maner Treflez, e Brieg. Eno 'oa roet dezo fuzuillou, pistolennou, sabrinier.

Da deir eur deuz ar pardaez ez ajont da Gerhôt. Daouzeg 'oant, hag eno ez eas c'hweh en eun tu, c'hweh en tu all. Ar re genta a yeas da di Pierre Tymen, hag ar re all da di Hervé Louboutin da houlenñ o hoan. En tiez-se 'oa debret, fumet hag evet kalz. Pelloh, e mareou eiz eur, ez ajont da gaoud an hent braz, e-kichenn sao chapel Sant Herve, e parrez Brieg. Eno eh en em lakaont adarre e diou vandenn hag ez eont war an hent, eur pevar-hant paz bennag an eil deuz eben.

E mare an hanternoz, Le Cat, o weled letern ar wetur a-ziabell, a lavaras : « Setu aze o tond ar re a hortozan ; ma'z eus archerien en-dro d'ar wetur, tennit warno ; ma zo soudarded, arabad tenna. »

Evel on-deus lavaret, eun tenn a oa lezet.

A-veh ma oa ar wetur chomet a-zav, 'oa kroget ar postillon. – « Arhant a zo ganez », 'oa lavaret dezañ : « ro deom da arhant »

Ar postillon a lavaras n'en-doa gwenneg ebed. – « Mad, eme Le Cat, ni a zo o vond da glask. Ma kavom arhant en da wetur e vezi lakaet d'ar maro. »

Neuze e lavarjont d'an dud 'oa er wetur diskenn. C'hweh 'oant. Oll e tiskennjont nemed Audrein. Le Cat a zavas war eur bladenn houarn a oa da bignad er wetur.

-« Ro din da baper tremen », a lavaras dezañ.

-« Er hased aze ema. »

-« Diskenn. »

-« Ne hellan ket ; klañv on. »

-« Diskenn ; ni da bareo. »

Neuze Le Cat a bignas er wetur, hag en eur lakaad e zorn war an eskob, e lavaras : « Me 'anavez ahanout, Audrein luch ! Pell 'zo 'oan ouz da glask. Teir gwech e-peus votet lakaad ar roue d'ar maro : bremañ, d'az tro, e rankez mervel. »

En despet dezañ, Audrein a zo tennet war an hent. Le Cat a ro dezañ eun taol gand kanol e fuzuill hag a glask lakaad anezañ da vond war e zaoulin evid en em erbedi deuz Doue. – « Lezit ganen va buhez, en an' Doue ! », a grie an eskob. Hag eh en em zifrete.

Le Cat a lavaras da Le Moine lakaad e zorn war e skoaz. D'ar mare-ze, an eskob a grogas gand e zent en o daouarn, dezo o-daou. Ar paour-kêz maleuruz a reas eur paz bennag evid tehed.

-« Tenn warnezañ », a lavaras Le Cat da Le Moine.

Le Moine a vizas diou wech, mez diou wech e fuzuill a reas ebat.

-« Tenn, te », a lavaras Le Cat da eun all, anvet Michel. Michel a dennas hag an eskob a goueza stok e gorv e-kichenn ar penn a-raog deuz ar wetur. Le Goff a roas dezañ eun tenn all hag hen peurechuas : an daou denn en-doa paket e-kreiz e stomok.

Greet an torfet, Le Cat a lavaras d'ar veajourien mond er wetur. – « Kiit en hent adarre, emezañ, ne vo greet droug ebed deoh. Kontantoh om da veza lazetaud Audrein, eged da veza kavet eur milion. »

Korv Audrein a oa douget da Gemper. E bered Sant-Mark, eno, e weler c'hoaz e vez. War ar mên a holo anezañ, e zo kizellet eur halir, eur miñtr hag eur vaz eskob, gand ar homzoumañ : « Amañ ema Audrein, eskob ar Finistère, maro d'an naonteg a viz Du 1800. Pedit evitañ ! »

E-pad pell amzer, ar miñtr a zo bet e tri liou, ruz, gwenn ha glaz. Hag e-pad pell amzer, ivez, a leverer, e vije degaset bugale vihan war ar bez. Mez, hirio, ema dilezet gand an oll.

Deuz muntrerien Audrein pemp a oa lakaet d'ar maro. Are re-ze 'oa Le Cat, Le Moine, Ropars, François Le Grand ha Benden. Guilly a varvas en ospital ha Le Goff, kavet pemp bloaz goude, en eun ti e Coray, a dapas e varo deuz ar goulou en-doa paket oh en em zivenn. Ar re all ne zo⁷⁵ bet gellet, morse, lakaad an dorn warno.

*

XXXIII

Ar veleien er broiou estren. – Bro-Hall digor pelloh. – Ar parrezioù o tegemer o beleien.

Evel on-deus lavaret diaraog, pa zavas beh war ar veleien, kalz a dehas : lod a yeas d'ar Spagn, lod all d'an Allemagn. Mez an darn-vuia deuz beleien Breiz-Izel a yeas da enezenn Jersey ha da Vro-Zaoz.

Enezenn Jersey, deuz douarou Roue Bro-Zaoz, mez eun enezenn hag a oa sko e Bro-Hall, 'oa da genta o tegemer ar veleien a ranke mond kuit deuz o bro. E miz Here 1792 'oa eno, dija, ouspenn mil beleg. War ar mil-ze, daouzeg 'oa deuz Eskopti Kemper ha deg ha tri-ugent deuz eskopti Leon.

Deuz ar veleien-ze 'oa pemp warn-ugent da dregont a en em lakaas da labourad douar. An aotrou de Saint-Ouen a forjas tiegez dezo. Dond a reent, braoig a-walh, da hounid arhant hag a ingalent etre o henvreudeur valeuruz.

An aotrou Le Minter, eskob Landreger, a yeas, ivez, da Jersey. Pelloh, en enezenn-ze 'oa ouspenn pevar mil beleg. An aotrou Le Minter a yee du-mañ du-ze, da glask sikour evito. Eñ 'oa eun tad evid ar veleien geiz. An aotrou Chantred, bet a-raog ar Revolution rejant e seminer Kastell, a laboure gantañ, kevred. Sevel a reas, e Jersey, eur vreuriezh itronezed gall da ober dillad overenna. Gouarnamant Bro-Zaoz a roas dezo, evid an dra-ze, pephini he femp lur warn-ugent.

Eskob Leon, an aotrou Lamarche, a yeas da Londrez. Eno, eun denjentil anvet Burke hen degemeraz deuz ar gwella, hag a reas eur vreuriezh evid rei skor d'ar veleien. Eskob Londrez, e-unan, a deuas da en em lakaad e penn an dud-se. Kenta gwech ma oant en em vodet 'oa savet, diohtu, eur million. Goude-ze, dre gêr, 'oa greet eur gest hag a roas eur million all.

N'oa ket pell, ar gouarnamant a roas dezo kastell Winchester. Seiz-kant 'oant eno. Beva 'reent evel en eur gouent. An Tad Martin, manah ha vikel vraz Lisieux, 'oa ar mestr ganto. Diwezatoh, Roue Bro-Zaoz a houlennas digand ar re a gase ar vro, en-dro, rei beb miz eur zomm arhant da beb beleg. Ar vinistred a zelaouas anezañ ha beteg ar bloavezh 1802, beleien Bro-Hall 'oa paeet gand gouarnamant Bro-Zaoz.

An aotrou de la Marche 'oa touchet e galon. Ober a reas eul lizer evid dougen e veleien da gaoud anaoudegez vad evid o madoberourien.

Koulskoude, Winchester a deuas da veza re vihan. Lod deuz ar veleien, ar Vretoned dreist-oll, 'oa kaset da Thames, eur hastell koz d'ar Roue. En o fenn, eno, edo an aotrou Desponts, bet e penn eur helenndi deuz Sant-Brieg, beteg lezenn *ar zement* (al le).

Ar veleien 'oa tost d'o houstiañs. Lod anezo, pe e oa kenteliou, pe oh ober eur vicher bennag all, a helle dastum gwenneien, a-wechou. Mez bep tro, e kasent da eskob Leon pe da eskob Landreger, an arhant a roe dezo gouarnamant Bro-Zaoz. Ar re o-divije arhant digand o herent a ree ar memez tra. An arhant bet kaset en-dro, evel-se, a ree, pa edo ar veleien o vond kuit, goude ar Revolution, ouspenn tri-hant mil lur.

⁷⁵ ne zo : n'eus.

E fin ar bloaz 1796, ar jeneral Hoche, o veza bet, war ar mare, da vond da Jersey, gand e zoudarded, gouarnamant Bro-Zaoz a reas d'an oll veleien dond da Londrez. Eun degemer deuz ar gwella 'oa greet dezo dre oll.

Beleien kastell Brest 'oa bet kaset d'ar Spagn evel on-deus lavaret. Meur a veleg all, ivez, a dehas d'ar vro-ze. E peb leh 'oant degemeret evel breudeur. Ar hardinal Lorenzo, eskob Tolède, eskibien Signenza, Oviedo, Cordoue ha Prese a oa en o heñver, karantezuz meurbed.

Beleien Landreger a skrivas d'o eskob evid lavared e pe stad edont er Spagn. An aotrou Le Mintier a ziskrivas dezo : « Abaoe m'eo deuet ar Revolution da va distaga deuz va deñved, n'em-eus bet dizoan ebed, ken braz ha ken c'hweg, hag ho lizer deuz an deg deuz ar miz. Ho poaniou, ho stourmajou, ho nerz-kalon hag ho feiz o-deus kresket ar gwir ho-poa da veza karet ganen, ma vije bet gellet kreski ar garantez am-eus evidoh. Rag atao oh bet va gloar, va hurunenn, va joa e Jezuz-Krist. »

Goude-ze, an aotrou 'n eskob a lavar d'ar veleien teuler atao, en-dro dezo, war an douar estren, c'hwez mad ar vertuziou.

*

Meur a wech, ivez, e yeas ar veleien vad d'ar Beljik, d'an Alemagn, d'ar Suis. Unan, zoken, a gerzas beteg ar Rusi. Henez 'oa an aotrou L'Haridon, a oa d'ar mare-ze, person e Kastell-Nevez-ar-Faou.

Daou pe dri bloaz a-raog ma saillas ar Revolution, 'oa person e Kastellin. Eno en-doa bet an enor da zegemer en e di Impalaer ar Rusi, deuet da ober eun dro da Vro-Hall. Kastellin 'oa bihan, d'ar mare-ze. N'oa "hôtel" ebed. Hag an Impalaer a houlennas loja er presbital. En eur vond kuit e lavaras : « Aotrou person, e Frañs an traou a zo war var. Ma saill, morse, ar revolution, deuit d'am falez : ho temegered a rafen gand anaoudegez vad ha karantez. »

An aotrou L'Haridon en-doa dalhet soñj deuz ar homzou-ze. Degemeret 'oa gand an Impalaer evid ar gwella. Bet 'oa da genta mestr-skol bugale an Impalaer. Goude-ze 'oa kinniget dezañ beza eskob al Lithuanie. Mez kaoud a reas gwelloc'h dond.

*

Koulskoude, goude maro Audrein n'oa anvet iñtru ebed evid kas en-dro eskopti Kemper. Ar peoh a zeue. Ar Hoñsulat a zigoras ar prizoniou hag a roas d'an oll, aotre da heul ar relijion a garent. « Mez, e lavare ar veleien gatolik dreist-oll, e hell lakaad buan ar peoh da zond en-dro. N'o-deus ezomm, evid an dra-ze, nemed da gaozeal evel ma tesk dezo Jezuz, o mestr. Ema digor dezo an oll ilizou. Ra deufent buan da ginnig sakrifisiou da Zoue evid ma ne zalho ket koun deuz an torfejou a zo bet greet, beteg henn, na deuz ar gwad a zo bet skuillet.

Mez ar veleien vad n'en em hastent ket da zond en o bro. An ilizou 'oa an darn-vuia anezo, etre daouarn ar veleien o-doa pleget d'ar Revolution ; ouspenn-ze, ar Hoñsulat ne zigore ket dor d'an Eskibien a oa bet tehet d'ar broiou all. Ha neuze, c'hoaz, ne gredent ket toud eh anavezent gouarnamant ar Republik evid gouarnamant ar vro.

Napoléon, koulskoude, a ouie n'oa par d'ar veleien vad evid kempenn an traou. Mez aon en-doa o vond re vuan ganti. Deuz pevar-horn Bro-Hall e teue paperou d'ar houarnamant da houlenn sevel ar relijion war he zroad. Ar gouarnamant a hortoze c'hoaz.

Pelloh, d'ar bevar warn-ugent a viz Kerdu 1800, e kasas eul lestr braz, anvet "Dédaigneuse", da gerhad ar veleien vad 'oa bet douget da G/Cayenne.

N'oa mui kavet nemed triweh anezo.

En eur zond ahano, al lestr 'oa bet kemeret gand ar Zaozon hag an triweh beleg 'oa kaset da Londrez. Mez prest goude, gouarnamant Bro-Zaoz a lakaas o dougen da Vontroulez. Ar Sous-Préfet, an aotrou Duquesne, a deuas d'o degemer war ar porz-mor. Montrouleziz a yeas oll d'e heul. An dud a leñve gand ar joa hag al laouenidigez. Degouezoud a ree, evel-se, eur beleg mad bennag beb ar mare. Dre gement leh e vije greet dezo an degemer ar gwella. Rag skuiz 'oa an oll gand ar veleien iñtru. Hag an dud fall o-unan en em zistage diouto evid mond war-zu ar veleien n'o-doa ket touet. Ar veleien vad, koulskoude, dre ma teuent en-dro, ne houlenent ket oll mond d'ar parrezioù. Ne hellent beza person pe kure nemed en eur ober le da anaoud ar Republik evid gouarnamant ar vro. Aon o-doa oh ober al le-ze. Mez e fin ar bloaz 1800 n'oa ken brud e Bro-Hall nemed deuz an emgleo etre an Tad Santel ar Pab hag ar Houarnamant, diwar-benn ar relijion. D'an oll 'oa anad, neuze, n'edo ket Napoléon o klask trompla an dud. E bro Leon, tregont beleg a reas le, diohtu. E bro Gerne n'oa ket bet, da genta, nemed an aotrou Thilberge ha pevar all o toui. Mez a-benn eun nebeud goude e teuas c'hoaz trizeg beleg da ober evelto.

*

Pelloh, d'an eiz a viz Ebrel 1801 'oa roet da anaoud an emgleo a oa bet greet etre an Tad Santel ar Pab ha gouarnamant Bro-Hall.

Setu amañ e berr gomzou petra 'oa an emgleo-ze.

« Ar relijion gatolik ha romen a zo relijion an darn-vuia deuz tud Bro-Hall. Abalamour da ze ar houarnamant a zalho frankiz, da bep hini, da veza kristen evel ma karo.

E Bro-Hall ne vo, hiviziken, nemed deg arheskob hag hanter-kant eskob. Ar Pab ha Napoléon a zivizo kevred ar parrezioù da staga deuz peb eskopti.

An oll eskibien goz a roio o dilez. Ar Pab ha Napoléon, kevred, a anvo an eskibien nevez.

Ar ouarnamant a baeo, beb bloaz, d'ar veleien arhant a-walh evid beva. Mez en dizro, madou an iliz, ar re 'zo bet gwerzet, a vo lezet, evid atao, gand ar re o-doa o frenet. »

An Tad Santel ar Pab en-devoa, da genta, mil ha mil poan da houzañv, abalamour d'an emgleo en-devoa greet. Pa skrivas evid goulenn o dilez digand an eskibien goz, nao ha tri-ugent anezo a enebas outañ. Lod, zoken, a skrivas dezañ liziri treñk ha c'hwero. Unan deuz al liziri-ze, hag a reas dezañ ar muia poan, 'oa an hini en-doa bet digand eskob Kastell, an aotrou de la Marche.

Mez en desped da ze, ar Pab ha Napoléon a anvas eskibien nevez. Kemeret a rajent e-touez an eskibien goz, seiteg deuz ar re vad ha daouzeg bet troet fall, hag a oa en em gonvertiset war o mennoz. E-touez ar re-ze edo an aotrou Le Coz. Kaset 'oa da arheskob Troyes. Pevar eskob all, c'hoaz, 'oa anvet e Breiz. Mez Kastell, Sant-Malo, Landreger ha Dol n'o-doa eskob ebed mui.

*

XXXIV

Ar parrezioù o-doa bet o beleien da genta. – Trubuillou an Eskob nevez.

Parrez Rieg 'oa bet ar genta, en eskopti Kemper, o weled he beleien o tond en-dro. E-pad oll amzer ar Revolusion, an aotrounez Gurudec, Le Roux ha Talarbardon 'oa chomet kuzet e tiez kristenien ar barrez-se. Pa oa, pelloh, deuet ar peoh, ar barrezioniz oll o hasas gand joa ha laouenidigez d'an iliz. Er wech kenta, ma oant gwelet o tond deuz ar sakreteri, dillad overenna en o herhenn, an oll a yeas war o daoulin, an dour a bike an daoulagad, hag a-

dreuz o daelou, an dud a lavare : « Bennoz da Zoue ! ema deuet, pelloh, al lezenn vad en-dro ! »

E derou ar bloavez 1802, beleien Nevez a deuas deuz ar Spagn. An aotrou Le Meur, kure Nevez, 'oa diskennet deuz e vag e Portemaneg, e parrez Rieg. Asamez gantañ 'oa pemzeg beleg all. En o zouez 'oa an aotrou Kerloc'h, kure Tregon, hag a deuas da veza person en e barrez koz.

An aotrou Guillou, person Mellag, a deuas ivez en-dro deuz ar Spagn, er memez mareou. Mond a reas gand hast da weled e barrezioniz koz. Mez ne hellas chom mui ganto da berson. Re vahagnet en em gave. Hag ez eas da chom da di e dud e-kichenn Lothea⁷⁶.

D'an daou a viz Even 1802, an aotrou Le Duc hag e gure, an aotrou Bergot, a zegoueze er vro, o tond deuz Cateriek, e Bro-Zaoz. Mond a rejont kerkent war-zu Lanniliz. Deiz ar marhad e oa. Mez p'oa klevet lavared edont erru, n'oa prenet na gwerzed netra ebed mui. An oll a yeas d'o diambroug war hent Lezneven. An dud a en em vode dre ma'h erruent ganto, en-dro dezo, a boke d'o daouarn, a houlenne o bennoz, a grie hag a leñve.

An aotrou Le Duc a jomas da berson e Lanniliz. An aotrou Bergot 'oa kinniget dezañ Gouenou ha Plouzeniel. Mez, chom a reas e Lanniliz, hag 'oa lakaet da berson goude an aotrou Ler Duc.

An aotrou Laurent, person Kleder, a zegouezas er memez mareou, deuz Bro-Zaoz. Deuet en-dro, eh echuas an iliz en-doa komañset a-raog mond kuit.

Mez, e meur a barrez all, 'oa bte diêsoh lakaad ar peoh. Enno 'oa chomet an iñtrued, hag oa konvertiset war o mennou. Diwar o fenn hag abalamour dezo, an aotrou Andre a bakas meur a dmm trubuill.

An aotrou Andre 'oa eun den deuz ar re wella. Ne oa ket gwall-hardiz.

D'an nao a viz Mae 1802 'oa sakret eskob en iliz Sant Roch, e Pariz, gand an aotrou Cambaserez, eskob Rouen.

D'an daou warn-ugent a viz Eost e teuas da Gemper. En eur zegouezoud ez eas da di Rudler, ar Prefet. Ar pennou braz deuz Kemper a oa oll eno pa zegouezas hag a reas dezañ an degemer ar gwella. Gwiska 'reas dirazo e zillad a eskob evid mond e prosesion d'an iliz katedral. Ar ru 'oa leun a dud. Kalz a leñve gand ar joa.

Ar Prefet a yeas, a-raog ar prosesion, da hortoz an aotrou Andre, war dreujou an iliz.

Pa zegouezas an aotrou 'n eskob, ar Prefet a roas dezañ alhweziou an iliz katedral en eur lavared : « Rei a ran deoh, aotrou, alhweziou an iliz-mañ. Ra defe, atao, an eurvad da gaoud, evid he gouarn, eskibien devot ha kaloneg eveldoh. Kristenien an eskopti a ve euruz deuz kement-se. »

E-barz an iliz, goude, an aotrou Larchantel a ouarne an eskopti, abaoe maro an aotrou de Saint-Luc, a bignas er gador : « Bremañ, a lavaras en eur leñva, Doue 'm galvo pa garo da 'vitañ. Mervel a rin laouen, peogwir e welan, hirio, troni, amañ, eun eskob hervez Doue. Lakaad a raio ar peoh da ren ha kas a raio kuit ar vougenn a oa war ar feiz. »

Mez pelloh, an aotrou Andre a gaozeas d'e dro. Ober a reas dreist-oll meuleudi Bonaparte en-doa savet e Bro-Hall ar relijion en he sav, ha meuleudi ar Prefet. Konta, emezañ, a ree war e zikour evid kas mad da benn, e labour en eskopti Kemper.

Kenta 'oa da ober 'oa gweled, en e eskopti, ar veleien hag an dud fidel evid lavared dezo 'oa echu ar barrad avel fall a hweze, abaoe daouzeg vloaz, war ar vro.

Hag an aotrou Andre, ivez, a entente ober er giz-se. Mez n'en em gemeras ket mad ganti, hag en dro genta, diohtu, e savas brouilleiz.

Eet 'oa da Vrest. Pedet en-doa an oll veleien a oa eno da zond d'an overenn a lavarje en eur zegouezoud.

⁷⁶ Lothea : bet skrivet evel-se el leor orin. Marteze "Lotei".

Iliz Sant-Louis 'oa an iliz veur e kêr. Evid ober mad e tlee mond d'an iliz-se da zegemer e veleien. Mez person Sant-Louis, d'ar mare-ze, 'oa unan deuz ar re 'oa bet deuz ar veleien iñtru. An eskob ne gredas ket, abalamour da ze, ober dezañ an enor da vond d'e barrez. Kemenn a reas d'an oll veleien euz Brest en em gaoud e chapel ospital ar vartoloded.

E Brest 'oa neuze kalz beleien hag o-doa bet touet. Ar pezh a dlee erruoud a zegouezas. Beleg ebed ne yeas war e dro.

Person Sant-Louis a skrivas, en e eneb, evid en em glemm. En eur redadenn edo ar Prefet e Brest. Ober a reas d'an eskob lavared an overenn en iliz Sant-Louis, an deiz war-lerh, ha gervel da vond d'an oll beleien kêr.

Deuz Brest ez eas da Landerne ha da Lezneven. Dre ar parrezioù-ze ar veleien hag an dud fidel a reas dezañ an degemer ar gwella.

Goude, e kemeras hent Montroulez. En eur erruoud er gêr-ze, e welas o tond d'e gaoud eun tad Jezuit hag a oa bet harluet abalamour d'e feiz. « Aotrou 'n Eskob, a lavaras dezañ ar manah-se, bezit war evez, pe ne dafot ket kuit deuz ar gêr-mañ. Beza zo aze, tud kounnaret hag a zoñj ho laza evid veñji warnoh maro Audrein, an eskob touer. »

An aotrou Andre a dehas kuit diohtu.

E Montroulez, evel e Brest, 'oa kalz beleien hag o-doa bet touet sentidigez da lezennou fall ar Republik. Mond a rejont en egar ouz an eskob abalamour e kave dezo en-doa greet fae warno. Tamall a rajont dezañ en-doa c'hoant da lemel madou an iliz deuz daouarn ar re o-doa prenet anezo. Flata 'rejont anezañ d'ar Prefet. Rudler a en em ivez, diwar neuze, da stourm dioutañ. Hag an eskob kêz, skuizet buan gand e veh, a yeas da Bariz da gaoud Napoléon hag a roas dezañ an dilez euz e garg. (1804).